

Mennozhioù politikel an Emsaver Per Bourdellez (1907-1989) Stad un enklask.

**Master 2 Brezhoneg 2024/25,
Kounskrid kinniget get Bruno Pierre
da Cédric Choplin,
Mestr-Prezegenner,
Skol-Veur Roazhon 2,
02 a viz Gwenholon 2025.**



Trugarekaat a ran :

Yvette Meurou, *ninez Per Bourdellez*,
Jean-Yves Marjou, *mirour levraoueg Skolaj Sant-Joseb Lannuon, bet skoliad Per Bourdellez*,
Jean-Yves Meuric, *bet skoliad Per Bourdellez*,
Michèle Le Bourg, *Presidantez « Association pour la Recherche et la Sauvegarde des Sites Archéologiques du Trégor (ARSATT) »*,
Fabrice Marzin, *kelenner àr an istor*.
Sébastien Lalinec, *diellour; Dielloù Departament Il ha Gwilun*,
Jean-Jacques Monnier, *istorour*,
Jean Ollivro, *douaroniour; kelenner Skol-Veur Roazhon 2*,
Isabelle Berthou-Bray, *levraouegourez, Levraoueg Abati Landevenneg*,
Catherine Calvary, *diellourez, Dielloù Ti-Kêr Lannuon*,
Tad Marc, *Archivio, Societa Missionari d'Africa, Roma, Italia*,
Maryline Ricaud, *diellourez, Dielloù Eskopti Sant-Brieg*,
Yann Celton, *levraouegour, Levraoueg eskopti Kemper*;
Jean-Louis Le Tacon, *realisatour; videour arz, stourmer; bet skoliad Per Bourdellez*,
Seurez Marie-Noëlle Le Piétec, *leandi an Eostinezed Gwareg*,
Brigitte Denis, *bet kelenner àr an italianeg e Gwareg, bet mignonez Per Bourdellez*,
Tepod Gwilhmod,
Levraoueg Niverel Breizek hag Europeat,
Cédric Choplin, *Mestr-Prezegenner Skol-Veur Roazhon 2*.
France Rioual,
Axel Pierre-Rioual.

Digoradur

"La politique est la forme supérieure de la charité"¹ a skrivas Per Bourdellez. "Ar politikerezh a zo ur vicher diaes ha luziet."² a skrivas ivez. Pelloc'h e komzo ag ar bed politikel èl d'ur "fankigell"³. Setu tri bomm ne ziskouezhont ket bout kempoell a-gentouez. Ha koulskoude int bet skrivet get ar memes den, Per Bourdellez. Peadra da lakaat unan da glask kompren petra e talvont.

Pal ar studiadenn-mañ a vo lakaat splann hentad kefredel ha politikel ur Breizhad, Pêr Bourdellez (1907-1989), bet beleg, kelenner, stourmer, ha skrivagner, bet gwelet getañ emdroadurioù bras àr an tachennoù politikel, ekonomikel, poblañsel, sokial, relijiel ha sevenadurel Breizh e-pad an XXvet kantved, en ur lakaat skoaz-doc'h-skoaz get an engouestloù politikel a oa bet e re. Klasket e vo gwelet peseurt liammoù e c'heller gober etre ar stummadur kefredel a oa bet e hani, pennadoù en deus skrivet hag oberioù en deus lakaet e pleustr pe ar re en deus kemeret perzh enne.

Klasket e vo gouiet hag ur broadelour brezhon ag an tu dehou e oa bet pe un den ag an tu kleiz pe c'hoazh ag an tu kleiz pellañ peotramant un den dishañval doc'h tout ar c'hostezennoù-se e vennozhioù.

D'ar gentañ, e weler Francis Favereau⁴ é lakaat Bourdellez e-touez rummad ar veleien aet da skrivagnerion, ur lennegezh a "spered broadel" getañ, "un den a brezeg dres, kentoc'h eget skrivagner"⁵, ha Favereau é oc'hpenniñ: " santet e veze en e brezeg donder ha koshentez ar sevenadurezh vrezhonek kristen eus a-bell; mes kement-se 'zo aet da goll, mui pe vui"⁶).

D'an eil e weler Tristan - Emmanuel Loarer (nevez'zo⁷) er lakaat doc'h an tu "Kleiz ha Breizh" "daoust-dezhañ". Soñjal a ra da Loarer e oa a-du Bourdellez get ar pevar foent-mañ a ya d'ober kalon mennozhioù ar luskad politikel-lennegel-se er blezadoù 1960 : "Accompagner par la littérature engagée (...) la re-construction d'une Bretagne viable (a), dans un contexte moderne (b), dans le cadre celtique (c), et solidaire (d) des autres peuples qui entreprennent une démarche décoloniale similaire [à la Bretagne]⁸" Ha Loarer da venegiñ galvadenn Bourdellez evit ma vo echu get an diasamantoù emañ Breizh kouezhet enne: "'Devant votre Bretagne sous-développée,

1 Skrivet get Bourdellez e derou ar blezadoù 1960 en un danvez-pennad dornskrivet adkavet e dielloù Yvette Meurou (danvez ur prezeg a oa é sell gober dirak izili « Breuriezh sant Erwann »).

2 E raksrid *Le Général Louis-Charles-René de Sol de Grisolles (1761-1836), frère d'armes et successeur de Georges Cadoudal*, get Erlannig Even (alias François Marquer), Les Presses Bretonnes, Saint-Brieuc, 1968, 410 p. .Raksrid get P. Bourdellès p. 9-11. Adembannet e 1994, Edition La Découverte, Collection L'Amateur Averti. ISBN 2-910452-21-2

3 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Kerzu 1962, n° 33, p. 9.

4 Francis Favereau *Lennegezh ar brezhoneg en XXvet kantved 1945/1968, levrenn 3*, Skol Vreizh 2008 p.214-216

5 *Ibid.*, p. 214.

6 *Ibid.*, p. 214.

7 "Une histoire de 'Kleiz ha Breizh': nommer pour dénoncer" p. 257-286 in *La littérature de langue bretonne des origines à nos jours*, Editions Montagnes Noires, Collectif sous la Direction de Cédric Choplin, 2024/05, 240 p. 9782494693111

8 *Ibid.*, p. 273.

exploitée, colonisée, (...) vous n'hésitez pas à vous engager dans l'action pour la défense et l'affirmation de l'Homme breton.»⁹.

D'an trede e weler eo bet degemeret Bourdellez èl un den aet doc'h an tu kleiz pellañ get Jean-Yves Marjou¹⁰ bet skoliad da vBourdellez, den a youl vat hiriv an deiz é taoliñ pled get levraoueg kozh skolaj Sant-Joseb Lannuon.

D'ar pevare e lenner er gazetenn *Le Télégramme* e 1989¹¹ poltred-mañ Bourdellez: "Figure marquante non seulement du clergé mais des milieux économiques et sociaux et mêlé de près aux évènements de la fin des années 1950 et du début des années 1960 (...) Homme de culture d'une forte sensibilité sous des apparences proche d'un flegme british, il apparut longtemps comme une personnalité promise à un rôle de premier plan. Ses **idées avant-gardistes sur le problème breton** lui valurent un éloignement du Trégor vers Gouarec."

A-feur eh imp get Bourdellez, get e vuhez, get e stummadur, e darempredoù, e oberoù hag e oberennoù e vo klasket tamm-ha tamm resisaat mennozhioù politikel Bourdellez àr ar gudenn-mañ-kudenn, a vare da vare, get ar c'hoant da dresiñ un daolenn hollek ar c'hlokañ-ar-gwellañ gete ha, marse, emdroadurioù ar re-se a-hed an amzer.

Evit gober kement-se vo studiet ur c'horpus pennadoù savet get Bourdellez (lies a-walc'h edan anvioù-pluenn arall¹²) pe e brezhoneg, pe e galleg a 1931 betek 1981 (àr-dro 240 etretout nemet al lizhiri - ur c'hant bennak-)¹³ a pa vehent bet istorel, politikel, ekonomikel, relijiel, lennegel

9 "La vague Kleiz ha Breizh propose d'accompagner par la littérature engagée (...) la re-construction d'une Bretagne viable (a), dans un contexte moderne (b), dans le cadre celtique (c), et solidaire (d) des autres peuples qui entreprennent une démarche décoloniale similaire [à la Bretagne]." Toute production mêlant les quatre démarches participent à l'expression des motifs de Kleiz ha Breizh et s'inscrit dans la construction de ce mouvement. Aussi cet idéal se voit-il porté par des esthétiques, rhétoriques, styles et genres littéraires bien différents. Il est difficile de considérer Kleiz ha Breizh en tant que collectif uni parce que les auteurs sont d'origines, de statuts, et de natures très disparates." (Loarer p.260). « le mouvement Kleiz ha Breizh désignait un ensemble (...) large composé d'auteurs qui ne se connaissaient pas nécessairement, de générations différentes et d'horizons (...) divers. C'est dans une certaine mesure un mouvement littéraire, bien qu'il influença bien d'autres domaines tel que le politique (le propos décolonial et l'envergure écologiste d'Anjela Duval, Piriou, Evenou), la religion (par l'accompagnement des positions égalitaristes relatives aux réformes catholiques de la décennie chez Klerg, **Pêr Bourdellez**, et Maodez Glanndour) ou encore dans la chanson (par la dimension engagée de Stivell Glennmor, Servat) ». « Il [Kleiz ha Breizh] ne semble pas unitaire : il existe une forte dimension générationnelle dans la qualité des productions compte-tenu de l'âge de la majorité des auteurs . Certains tels que **Pêr Bourdellez**, Klerg, Anjela Duval, Maodez Glanndour **procèdent bel et bien, parfois malgré eux, de Kleiz ha Breizh.** » (Loarer p. 273). "Izili" Kleiz ha Breizh a galv an dud en ur mod frank-tre a-wezhioù evit d'en em c'houestliñ evit ma vo echu get diaezamentoù Breizh emañ kouezhel enne, eme Loarer: "Tous les appels ne relèvent pas du domaine strictement littéraire (...) Les éditions périodiques de l'époque travaillée de langue française comme de langue bretonne , regorgent d'extraits plus ou moins explicites de ce concept d'appel, parfois prédictifs, souvent fortement argumentés . Ainsi, l'Abbé Bourdellez déclare-t-il : 'Devant votre Bretagne sous-développée, exploitée, colonisée, (...) vous n'hésitez pas à vous engager dans l'action pour la défense et l'affirmation de l'Homme breton. » (Loarer, *Ibid*, p. 273)

10 Jean-Yves Marjou aterset geniñ d'an 11 a viz Gwengolon 2024 : "s'il était mal vu par le directeur de Saint-Jo et par la hiérarchie catholique c'est parce qu'il était gauchiste, ça s'expliquait pas ses origines sociales modestes ».

11 *Le Télégramme* 25 07 1989."Nécrologie : l'Abbé Pierre Bourdellès".

12 Meur a anv-pluenn en deus bet Bourdellez : Pierre Bourdelles, Pêr Bourdellez, Per-Joseb-Mari Bourdellez, Maentan, L. Pempoul, Yannig Kerfoulet, ha neuze E.O.-P.B. evit ar pennadoù skrivet àr an dro getañ (PB) hag Edouard Ollivro (EO).

13 Pa oa marvet Bourdellez e 1989 ne oa ket bet interesset tamm ebet e familh get e baperoù. Ur pezh a oa e-tal e gambr e Gwareg koulskoude a oa leun get e levrioù hag e baperoù. Get e niz ne oa bet dastumet nemet ur strobod folennoù lakaet àr ar prim en ur c'hasedig on bet aotret e zigor hag o lenn. Peurrest a oa bet chomet er leandi an Aogustinezed e Gwareg e-lec'h e oa Bourdellez é chom e dibenn e vuhez. Hervez Seurez Marie-Noëlle Le Piétec (atersadenn bet graet geniñ e miz Gwengolo 2024 e Gwareg) e oa "arvarus d'al leanezed o virout", setu perak diàr

(barzhonegoù, kontennoù, kanennoù, pezhioù-c'hoari, romantoù), pe c'hoazh prezegennoù, sarmonioù, skridoù-arnod, studiadennoù, lizhiri, pennadoù liesseurt embannet pe pas, skrivet, troet pe azasaet getañ ha bet dastumet razh geniñ¹⁴ pa oant strewet a bep tu. Ur fokus a vo graet, anat, àr bennadoù 'zo politikel o danvez met studiet e vo kenkoulz pennadoù a-rall a bep seurt skrivet getañ (lizheroù skrivet d'e vignoned¹⁵ a vo talvoudus da skouer). Rak mennozhioù politikel a vez kavet alies e pennadoù n'eo ket politikel o neuz da gentañ penn. Filmoù graet getañ¹⁶. Atersadennoù anezhañ er skinwel hag er skingomz ma n'int ket niverus 'zo interesus ivez¹⁷. A-barzh fin ar gont tout ar pezh en deus laosket Bourdellez àr e lerc'h hag a zo daet betagomp, zo bet kavet genompt (a-benn bremañ), a vo studiet. Pennadoù skrivet pe c'hoazh filmoù graet diàr-benn Bourdellez a vo studiet ivez¹⁸. Ur c'horpus bras a-walc'h neuze nemet ne vo studiet nemet doareoù politikel a vez kavet a- barzh.

Ne bledin ket er labour-mañ eeun-hag-eeun get ar C'horpus lennegel Bourdellez¹⁹ naket get doareoù lennegel Bourdellez na bout e vehe ur bochad traoù da lâret àr ar poentoù-se²⁰. N'eus nemet

goulenn al leanez a oa e penn al leandi d'ar mare-se he doa-hi taolet tout an traoù en tan nemet levrioù'zo - n'int ket bet adkavet- (pa oa "c'hwez an "FLB [Front de Libération de la Bretagne]" e-barzh" a lâras din).

14 Taolenn ar pennadoù-se a vo kavet er stagadenn n° I.

15 Lizherioù eskemmet get Yves Briand a vo talvoudus-tre met ivez get tud arall en o zouez Jean-Louis le Tacon, ur lean ag abati Landevenneg... (Listenn anezhe a vo kavet er stagadenn n° V).

16 C'hwec'h anezhe 'zo moian o welet en linenn àr lec'hienn Gwarez Filmoù Breiz. Listennad filmoù bet graet get Bourdellez zo bet savet/ Gwelet er stagadenn n° III. <https://www.cinematheque-bretagne.bzh/>

17 Gwelet listenn anezhe er stagadenn n° VI (Mammenn : Dielloù "INA" "Institut Nationale l'Audiovisuel").

18 Gwelet listenn anezhe er stagadenn n° IV.

19 C'hoant en deus bet Bourdellez moarvat dont da vout ur barzh, un danevellour, un aozer-c'hoariva ha memes ur romantour marse. Lennet en deus ur bochad oberennoù lennegezh (e brezhoneg, e galleg, e saozneg, en italianeg, e latin). Troet hag azasaet e brezhoneg hag e galleg en deus graet kalzig a-walc'h : barzhoniezh (Dante da skouer), ur romant (Alessandro Manzoni), danevelloù (George Orwell, Augusta Gregory...), kontadennoù, ur pezh-c'hoari disanv *Ar Pevar Mab Emon* (neuze adal oberennoù ar Grenn-Amzer betek re an XX^{vet} kantved). Studiet en deus e-unan ar lennegezh, kani tud desket (Walter Scott, Gilbert Keith Chesterton, Alessandro Manzoni, Augusta Gregory, Edgar Alan Poe, William Wordsworth, Robert Southey, George Orwell, Edouard Ollivro, Dante Aligheri) kenkoulz a gani ar bobl (Marc'harid Fulup, Fañch an Uhel). Pledet en deus get lennegezh Breizh (Kervarker, Jakez Riou, Tanguy Malmanche, Maodez Glandour, Langleiz, Roparz Hemon... tem ar Pasion e lennegezh breizhek, gwerzhioù él kani ar Seizh Sant Plouared - *é kenlabourat get Louis Massignon islamoniour katolik, -E "La crypte-dolmen des VII Saints Dormants d'Ephèse au Stiffel en Plouaret, puis Vieux-Marché" Louis Massignon, Professeur au Collège de France, Extraits des Mémoires de la Société d'Emulation des Côtes-du Nord, Les Presses Bretonnes Saint-Brieuc 1958, 20 p., p.11 ha 12 : bommoù dilfennañ "guerz ar seiz sant en parouz Plouaret" get Per Bourdellez meneget get Louis Massignon (berradur burutelladenn testenn ar gwerz treuzkaset get Per Bourdellez da Louis Massignon, elfennou semantekel kinniget get Per Bourdellez da hennezh-; lennegezhioù Bro Iwerzhon, Bro Kembre ha Bro-Kerne-Veur (1943 *Gwalarn*, n° 156/157, p. 34 "Istor berr al lennegezh kembraek" , p. 75 "Lennegezh Bro Gernev Veur" (troidigezh diàr JP Vinay). Pledet en deus ivez get lennegezh kozh gallek (e *Al Liamm*, n°93,1962) eh eus anv ag ur prezeg get Bourdellez "Talvoudegezh lennegel ar Pevar Mab Emon", Prezeggennoù graet get Pêr Bourdelles e-pad staj Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerien dalc'het e Sant-Nicolaz-ar-Pelem e miz Eost 1962 (titouroù àr sujedoù ar prezegennoù ha àr deizhioù e oant bet graet kavet e *Al Liamm* n°93, 1962) "Talvoudegezh lennegel ar pevar mab Emon" n'eo ket bet adkavet. Met nebeud a oberennoù personel en deus skrivet (daou varzhoneg, ur pezh-c'hoari. A-du-arall en deus hentet skrivagnerien hag ur yezhadurour (Frañsez Kervella) hag, a-wezhioù en deus int ambrouget ha skoazellet (Maodez Glandour, Langleiz).*

20 Priz Langleiz a oa ber roet dezhañ e 1978 evit e droidigezh brezhonek *La Divina Commedia* get Dante. (« Mon vieux copain Dante » a skriv Bourdellez en ur lizher kaset d'ur lean ag abati Landevenneg da zeiz Sant Stefan 1973) .

lenn pennad Fañch Kerrain skrivet e *Pobl Vreizh* e 1990 evit dont da grediñ ennañ.²¹ Ne blediñ ket naketet get doareioù filmiñ pe kontiñ Bourdellez.²²

Lâret a ran a-benn n'eus get disoc'hoù ar labour-mañ nemet disoc'hoù da c'hortoz pand eh eus, sur-a-walc'h, dielloù pe n'em eus ket kavet, pe n'em ket daet d'o zizhout (re goarnet e Roma), pe c'hoazh re n'em eus ket studiet nemet un tamm anezhe ken fonnus emaint ar re-se (dielloù ar "CELIB" ha re ar "Bleun-Brug").

Da gentañ e vo klasket a-venn e ta Bourdellez, penaos eo bet desavet, stummet, get piv, get peseurt kelennadurezhioù eo bet maget, peseurt oberennoù lennegel, peseurt tud darempredet getañ o deus eñ levezonet,.

D'an eil e vo dielfennet penaos en deus-eñ kemeret perzh e stourmoù politikel, ekonomikel, sokial, sevenadurel, relijiel ha kefredel 'zo.

D'an trede e vo klasket kinnig un daolenn ar resisañ ar gwellañ mennozhioù politikel 'zo bet e re en ur glask àr un dro ha cheñchet int bet a vare da vare a-hed e vuhez.

I Identelezh vrezhon hag identelezh gristen / Hêrezh ha savaduriñ

A Hêrez : ur familh hag ur skolaj kristen.

Ganet eo Bourdellez e Serwel e-tal Lannuon, Bro Dreger e 1907. Kouerien a oa e zud a oa é chom en ur pennhêr anvet Krec'h ar Forn, Beg Leger, tostig-tre ag tornadoù, traezhennoù, ar mor

21 Ha Pêr Bourdellez eo ar brasañ skrivagner e brezhoneg ? a c'houlenne Fañch Kerrain e 1990; Setu ar respont a rae : "N'en deus ket bet aozet kalz a varzhonegoù, estreget ur Basion ha n'eo ket gwell anavezet gant ar vrezhonegerien. Un tammig skoemp eo ober un asez "Hit Parade" eus an danvez-mañ-danvez ha lavarout diwar-benn hen-mañ-hen penaos eo an hini gwellañ evit ar skrivañ. Kemer a ran anezhañ evit an donezonetañ skrivagner yezh-plaen a zo bet dichenaset din lenn. N'on ket ma unan o lavarout e oa eus an Aotrou Bourdellès ur mailh war ar brezhoneg. En diavez d'ar varzhoniezh n'avavezan netra a gement a fromfê va c'halon kement hag un nebeud pennadoù deuet diwar e bluenn. Ar pezh a gredan, pezh a gont araok pep tra eo an arvesterezh, an estlamm dirak an oberenn-arz, al levezon don degaset d'ar spered ha d'ar galon dre hanterouriezh ar skiantoù. Ar gened hervez ma mestr kozh Sant Tomaz Akiwino : "pezh a blij d'ar gweled". Pennadou get Per Bourdellez am fromet o deus ken o deus: ur studiadenn diwar-benn al lennegezh geltiek embannet e *Gwalarn* e-doug ar brezel, "An hunvreoù kaer" *al liamm* n° 24, marzhus em eus kavet ordinal ar pennad-se, idem "an Istor hag ar Vro", pennadoù embannet e *Studi hag Ober*: "Breizh e 1788" ha dreist-holl ar brezegenn en enor da "Yann V" ha distaget gantañ e-ser Bleun Brug Landreger(...) Ar pajennoù-se ma kaver enno skeudennoù boemus o lintrañ evel mein-sked hag e-lec'h ma santer donder an trivli ha birvidigezh ar galon, ar pajennoù-se, en o eeunded, a zo ken brav ma chomer estlamm ouzh o adlenn. Se ne ra ket ur bern skridoù. Koulskoude ez eus difluket diouzh beg e bluenn meur a bennad all a gavan dudius-tre. Dalc'mat e vezont skrivet en ur yezh gwevn ha nerzhus resis ha buhezek, dalc'hmat e vez don ar from enno ha gouest e vezont da entanañ al lenner (...). *Pobl Vreizh* 1990.

22 Filmoù 'zo bet savet get Bourdellez 'zo en linenn àr lec'hienn Gwarez Filmoù Breizh <https://www.cinematheque-bretagne.bzh/> ; enrolladennoù Bourdellez é lâret kontennoù 'zo en linenn ivez àr lec'hienn Dastum <https://www.dastum.bzh/>

hag ar Leger. Ar familh kostez e dad a oa ag ar vro-se pa oa kani e vamm a bPlouared. Tregeriz tout neuze. Tri bugel a voe en tiad : Alice an hennañ ganet e 1896, Pierre hag e eil c'hoar yaouankoc'h evitañ un tammig. Brezhoneg Bro Dreger oa en ti. Ur brezhoneger a-vihanik 'zo a vBourdellez²³.

Kourz e vo Bourdellez enevad²⁴ koulskoude (kollet e vamm getañ pa oa nemet 5 blez ha pemp miz e 1913, e zad pa oa 12 vlez e 1920). Ur familh gristen 'oa e hani, meur a veleg enni²⁵. *Buhez ar Sent*²⁶, ar *Barzaz Breiz*, ar *Pevar Mab Emon* a veze lennet er gêr²⁷. Kroaz ar Vretoned ivez hrevez Favereau²⁸. Er skol e tesko galleg.²⁹

E Skolaj Sant-Joseb Lannuon e oa bet lakaet e 1919 e-lec'h e chomo betek e vBachelouriezh (1926). Lojet e vo er skolaj a-benn miz Gwengolo 1919³⁰. Enskrivet e oa bet da gentañ er "Cours de français" e 1919 ur stummadur berr a gaved ennañ mibien kouerien pe artisaned.

Adal distro skol 1920 ha eñ daouzek vlez hag enevad a vamm hag a zad, e vo lakaet en un hentad arall (pa oa mat e zisoc'hoù)³¹. Lakaet emberr àr hent ar velegiaj³²-get tud 'zo : an Abad Mercier (penn-rener ar skolaj Saint-Joseb), marse ivez eotr Bourdellez, person Plagad, ha get personed parrouzioù tro-àr-dro da Serval³³. D'an 23 a viz C'hwevrer 1923, ha eñ nemet 15 vlez, e voe bet degemeret (goude bout heuliet dija getañ e 1922 e amzer "approbaniste") er "Congrégation de la Très Sainte-Vierge" a oa ur strollad skolajourion deol a veze lakaet a-barzh skolajourion a veze gwelet mat get pennoù-bras ar skolaj da vont da veleg. Ret e oa d'ar skolajourion-se lâred ingal litanioù ar Werc'hez (teir wezh bep sizhun d'ar Sul da 6e 30, d'ar Yaou goude pedenn ar beure ha d'ar Sadorn da 4 eur goude ar vesperoù), bout kengred etreze, anzav etreze o fec'hedoù ha kement-zo...

23 "An Tregeriek-se eo bet yezh ar gêr evidon" Bourdellez Kentskrid I, *Danvez-Priedoù*, Hor Yezh 1986 p. 8.

24 "Enevad" pe "emzivad". E levrig familh Bourdellez (kavet e dielloù Yvette Meurou, nizez Bourdellez) e lenner : "père : Jacques Marie Bourdellès né 16 07 1869 à Serval cultivateur, mère : Joséphine Marie Bourdellès née 22 01 1873 à Plouaret (décédée le 07 04 1913) , propriétaire à Plouaret."

25 "Un eotr dezhañ, person Louargad en deus lakaet àr benn Bourdellez tout e vadoù e 1937 (Testamant sinet get hennezh d'an 20 a viz Even 1937 kavet e dielloù Yvette Meurou).

26 «J'ai été élevé dans l'atmosphère spirituelle de *Buhez ar Sent* qui est en fait la véritable histoire de l'Eglise » a skriv Bourdellez d'ur lean ag Abati Landevenneg (lizher 14 02 1970, p.6).

27 *Dictionnaire du monde religieux dans la France contemporaine*. Renet get Jean-marie Mayeur, Editions Beauchesne 1997: ur pennad a-zivout Bourdellez sinet "Bourdelles". Komz a ra ag e vugaleaj : "Les chants et lectures bretonnes (Barzaz Breiz), Quatre Fils Aymon : Pevar Mab Emon, la Vie des Saints (Buhez ar Sent), les légendes de la mer, les récits des soldats de 14/18, entretenaient une vie intellectuelle active dans un cadre de vie rude et beau, devant la mer, parmi les rochers et les landes, tourné vers le vieux Castellum gallo-romain du Yaudet où "habite" la Vierge couchée".

28 Favereau, p. 214.

29 "J'ai donc appris mes premiers mots de français dans une école toute neuve où nous étions 52 petits bretonnants et petites bretonnantes. Elle en voyait de toutes les couleurs, la Skolaerezh! Celle qui tient maintenant sa place est bien tranquille avec nos 6 successeurs! Combien en restera-t-il l'an prochain ? (Bourdellez, "Le Bleun Brug, sa Doctrine, son Esprit, ses Combats" predegenn e galleg get an Abad P. Bourdelles, Gouel Bleun Brug 1957.

https://bibliotheque.idbe.bzh/data/cle_78/Le_Bleun_Brug_sa_Doctrine_son_Esprit_ses_Combats_.pdf

30 Dielloù Skolaj Sant Joseb.

31 *Ibid.*

32 "Les professeurs et directeurs de collèges et des séminaires, conseillers naturels de leurs élèves, guidaient parfois ceux-ci vers la congrégation qui avait leurs préférences." Joseph MICHEL *Missionnaires bretons d'outre-mer XIX et XX^{èmes} siècles*, chapitre XIII "L'éveil des vocations missionnaires", Presses Universitaires de Rennes, 2015, 302 p. (p. 209-225). ISBN numérique : 978-2-7535-2336-4 (embannet e stumm ur levr e 1997).

33 *Dictionnaire du monde religieux dans la France contemporaine, La Bretagne*, Editions Beauchene, Michel Lagrée (Dir.), 1990, 428 p., notice "Pierre Bourdellès": " L'exemple de ses camarades, de ses professeurs-prêtres [er skolaj Sant Joseb], et surtout l'admiration pour les Recteurs des paroisses voisines l'avaient décidé à se former à la prêtrise."

https://fr.wikipedia.org/wiki/Sp%C3%A9cial:Ouvrages_de_r%C3%A9f%C3%A9rence/9782701012025

B Stummet e "Kloerdiou" en Hennbont, Kartaga, Sant-Brieg hag e skol-veur Paris.

Goude bout tapet e vBachelouriezh getañ e kemeras hent kreizenn stummadur an "Tadoù Gwenn" e "Kerlois" en Hennbont e-lec'h ma studias e-pad daou vlez a-raok monet da gKartaga (Tunisia) e 1928 a-benn dont da vout Tad Gwenn (en Afrika). Penaos eo bet savet c'hoant ennañ d'ober kement-se?

Ha lennet en doa bet ar "Semaine religieuse" a weled enni galvadennoù evit monet d'ar misionoù? Peotramant an "Annales" (e galleg) pe "Liziri" troidigezh an "Annales" e brezhoneg?³⁴ Ha lennet en doa danevelloù Charles de Foucault o deus levezonet paot a zanvez-beleg evit monet en Afrika?³⁵ Hag eñ a oa tremenet er skolaj Sant-Joseb ur misioner bennak d'ober e brezeg evit broudañ ar re yaouank da vonet en Afrika? Dedennet e oa bet ur bochad tud yaouank get ar broioù pell en amzer-se³⁶. Setu marseadoù n'on ket daet a-benn da zilouiniñ³⁷.

E 1930 e tistroas e Breizh koulskoude (abalamour d'e zaoulagad ne oant ket evit gouzañv sklaerder heol Bro dTunizia) hag e kloerdi Sant-Brieg eo ec'h achuas e studioù relijiel a-raok monet da veleg ha kenderc'hel da studial un tammig pelloc'h er Sorbonne e Paris.

Setu amañ, berr-ha-berr e dreugad skol-veur, studioù lies (prederouriezh, doueoniezh, istor ha douaroniezh) bet graet getañ etre 1926 ha 1932 ha goude etre 1935 ha 1937: 1926 Bachelouriezh, 1926³⁸/27 ha 27/28 : daou vlez é studial prederouriezh ha doueoniezh hag e teskiñ penaos donet da vout ur visioner en Afrika e ti an Tadoù-Gwenn en Hennbont³⁹ (er greizenn stummañ "Kerlois" a oa bet savet du-se e 1920⁴⁰), 1929/30 bet graet e amzer "scolasticat" getañ e Kartada⁴¹ a viz Here 1929 da viz Mae 1930 a dra sur (marse e oa arru du-se koursoc'h), 1930/31 ha 31/32 distroet e Kloerdi Sant-Brieg e ra du-se e bevare hag e bempved blezad studi, beleget e miz An Azvent 1932⁴².

34 *Ibid.*, Michel Joseph chapitre 1 "L'oeuvre de propagation de la foi" (p.59).

35 *Pères Blancs les aventuriers de Dieu*. Sous la direction de Stéphane Bouzerand, La Toison d'Or Editions 2014, 240 p. (Testeni Tad François de Gaulle).

36 C'hoant en doa bet, da skouer, Yann-Ber Kalloc'h monet en Okeania.

37 Anavet 'meus eh eus dielloù a-zivout Bourdellez a 1926 da 1929 (pa oa danvez Tad Gwenn en Hennbont goude e Kartaga) e Roma e sez an "Tad Gwenn" pe "Societa Missionari d'Africa, Via Aurelia 269, 00165 Roma, Italia". Ret eo monet betek du-se evit o lenn neoazh, ar pezh n'em eus ket graet betek bremañ .

38 C'hoar henañ Bourdellez, Alice, he doa eñ oatreet, hag hi e dudorez pa ne oa Bourdellez nemet 18 vlez d'ar mare-se hag enevad, da vont er "Société des missionnaires d'Afrique (Pères Blancs)" an 01 a viz Here 1926 (Testeni kavet e dielloù ar " Societa Missionari d'Africa, Via Aurelia 269, 00165 Roma, Italia).

39 Doerioù kavet ar renabloù Kloerdi bras Sant Brieg ("Cotes ": 2H14 ha 2H18 / tud é labourat e servij dielloù ar c'hloerdi o deus lâret din, a-du-arall, tra souezhus, a gav din, emañ goulli teul personel Bourdellez).

40 *Ibid.*, Michel Joseph, chabistr VI : "L'ouverture d'établissements en Bretagne apparut, après la guerre de 1914-1918, comme la condition du maintien d'un abondant recrutement [au bénéfice des Pères Blancs] dans cette province. En 1920, le séminaire de philosophie de la province de France fut établi à Kerlois, près d'Hennebont."

41 Levrig soudard Bourdellez (kavet e dielloù Yvette Meurou, nizez Bourdellez) a veneg kement-mañ : testeniñ a ra an archerdi é oa Bourdellez ("matricule 1414, classe 1927") e chom : en Hennbont an 20 05 1927, e Kartaga (Tunisia) an 11 10 1929, e Sant-Brieg an 16 10 1930, e Lannuon (skolaj Sant-Joseb) an 10 04 1933. Meneget eo ivez e oa é chom e Tunisia adal an 24 04 1930 betek 23 05 1930.

42 Doerioù kavet ar renabloù kloerdi bras Sant-Brieg. Titouroù oc'hpenn: "a été exempté de service militaire"; "caractère : sérieux et bon"; "extérieur : grand et fluet"; "chant/voix : pas très juste"; prédication/composition : bien; prédication/diction : ton paternel, naturel". "Ordinations : tonsure 12 juillet 1931; ordres mineurs 19 décembre 1931 et mai 1932 dans la chapelle de l'Evêché; diaconat : octobre 1932; prêtrise : Noël 1932."

1932/35: kelenner er skolaj Sant-Joseb Lannuon, 1935/36 ha 36/37: studier àr an istor kozh ha neuze àr an douaroniezh er Skol-veur al lizhiri Paris⁴³ ⁴⁴.

E teskiñ ar brezhoneg dre skrid⁴⁵, ar saozneg hag an italianeg e-unan (latin, gregaj ha saozneg a oa kelennet er skolaj Sant-Joseb, latin e kloerdi Sant-Brieg).

C Levezonet e Breizh get Erwan ar Moal, an Abad Perrot ha get Skol Gwalarn.

1° Levezon Erwan ar Moal hag ar gazetenn *Breiz*.

E 1955 e skriv Bourdellez ur pennad meuleudius diàr-benn Erwan ar Moal (1874-1957), brezhoneger, kelaouenner (saver ha rener ar gazetenn *Breiz* 1927-1939)⁴⁶ ha labourer-douar : "d'ar c'houlz-se em eus-me graet anaoudegezh gantañ e aoze bep sizhun ar gelaouenn *Breizh* goude labour an Here pe an Eost, peder bajennad kelaouenn, bep sizhun e brezhoneg!"⁴⁷). Ha setu Bourdellez é krogiñ da skriv pennadoù er gazetenn *Breiz*. Ingal e rey e-pad ar prantad 1933/39⁴⁸. E derou 1933 eo bet savet get Erwan ar Moal ur barzhoneg en enor da vBourdellez⁴⁹. E 1936 e skriv Bourdellez e c'houlenn dibaouez Ar Moal pennadoù ha pennadoù e brezhoneg getañ evit leuniañ ar gazetenn⁵⁰. Kar-nes e oant bet o daou ur pennad ha sur a-walc'h e oa bet mennozhioù an eil hag egile tostig-tre. Peseurt mennozhioù? Re a leunie ar gazetenn moarvat: mennozhioù tomm d'ar brezhoneg, da Vreizh ha da zDoue. Mennozhioù tud ar gostezenn mirour dre vras, a-enep an nazied ivez. "Ma oa ar Moal un den bet renket buan e-touez ar "virourien" àr an dachenn bolitikel, a skriv an istorour Jean-Jacques Monnier⁵¹, eo dav merkiñ e oa a-enep an nazied en e skridoù ...: edan anv "Dir-na-Dor" e kaver pennadoù skrivet getañ a-enep an nazielezh, ar feulster, an ouennelouriezh, an droug a veze graet d'ar Yuzevien, hag an nevez-paganiezh, ken abred hag an 9 a viz Ebrel 1933 (niv. 298), pe ar 6 a viz Eost hag an 10 a viz Kerzu 1933, pelloc'h pennadoù embannet d'an 28 a viz Eost, d'an 11, d'ar 16 ha d'an 23 a viz Here, d'an 20 a viz Du ha d'ar 4 a viz Kerzu 38. Da lâret eo pa oa Bourdellez é kenlabourat getañ.

43 "Testeni studioù meur" sinet get Y. Martin, sekretour ar Skol-Veur d'an 11 a viz Du 1951 : testeni àr an istor daet get Bourdellez d'an 23 a viz Even 1936, ha kani àr an douaroniezh d'an 25 a viz Even 1937.

44 É chom e Chatillon-sous-Bagneux (Mamenn : testament e contr/ 26 06 1937).

45 "An droidigezh-mañ eo kentañ labour a ris evit deskiñ skrivañ brezhoneg" (Bourdellez, Kentskrid I, *Danvez-Priedoù*, Hor Yezh 1986, p. 8 (é komz ag un droidigezh bet graet getañ e 1933).

46 "N 'eo ket torret Dir-na-Dor", Per Bourdelles, *Al Liamm*, niv 52, Gwengolo-Here 1955, p 41-42.

47 *Ibid.* p.41.

48 83 fennad zo bet kavet.(Gwelet ar listenn anezhe e stagadenn I).

49 Kavet eo bet geniñ ur son (e dielloù Yvette Meurou, nizez Bourdellez) skrivet get Erwan ar Moal en enor da bPer Bourdellez pa oa aet hennezh da veleg (goude miz an Azvent 1932): "D'an OTRO PER BOURDELLES beleg ha barz Breizad", a brou ivez e oant tost.

50 Lizher Bourdellez da vBriand 24 miz Kalan-Gouiañv 1936.

51 "Erwan ar Moal, brezhoneger, kelaouenner, labourer-douar, enepnazi", Jean-Jacques Monnier, *Al Liamm*, niv 424, Gwengolo-Here 2017, brezhoneg get Herve Latimier, p. 79.

2° Levezon an Abad Perrot ha *Feiz ha Breizh*.

Ur lenner ag *Feiz ha Breiz*⁵² a oa bet Bourdellez⁵³ daet da vout ur gwir vleuñv-bruger a-adal 1934⁵⁴ (gwelet e vo penaos eo bet oberiant Bourdellez é prientiñ gouelioù ar Bleun-Brug⁵⁵ en eil lodenn ar labour-mañ). Ur pennad skrivet get Bourdellez hepken zo bet kavet e *Feiz ha Breiz* neoazh⁵⁶.

En ur pennad skrivet get Bourdellez, embannet e 1955, diàr-benn levr an Abad Poisson gouestlet d'an Abad Perrot⁵⁷ e weler pegen doujus eo Bourdellez e-keñver Perrot ha pegen tomm e oa Bourdellez doc'h palioù ar Bleun-Brug. Er prezeg bet graet getañ e Rostren e 1957 e veneg Bourdellez div wezh bommoù pennadoù skrivet get Perrot, bomm unan bet skrivet e 1907: "La Bretagne va mourir dans 100 ans traitée comme elle est". Ha Bourdellez da zispleg e oa daet da wir diougan Perrot hanter-kant blez goude. Ha bomm unan arall skrivet e 1923 : "la Bretagne un grain de la France, il y en a des petits, il y en a des grands, mais tous doivent rester vivants." Perrot : un den n'en doa ket "renié son peuple ni sa foi"⁵⁸.

Neuze evit Bourdellez Perrot 'zo ur ragweler, un den a feiz chomet feal d'e bobl. Ur "génie", an "héroïque fondateur du Bleun-Brug!"⁵⁹

52 *Feiz ha Breiz* a oa mennozhioù politikel troet d'an ober, blaz an Iliz gete, a skriv Michel Nicolas meneget get Christian Brunel. *L'essoufflement du Bleun-Brug ou le régionalisme dupé*, Mémoire de **Maîtrise** d'Histoire Université de Haute-Bretagne Rennes, Septembre 1982, p.37.

53 Er pennad "Stad ar C'hornog en amzer Sant German", Maen Tan [Per Bourdellez]. *Studi hag Ober*, Nedeleg 1941, n° 16, p. 24- 26, e skriv Bourdellez en deus studiet ur pennad embannet get *Feiz ha Breiz*.

54 Rentañ-kont un devezh tremenet getañ e Bleun-Brug bras Montroulez (d' ar 04 a viz Gwengolo) a ra Bourdellez er gazetenn *Breiz* d'an 16 a viz Gwengolo p. 3-4.

55 Krouet e oa bet ar Bleun-Brug e 1905 get an Abad Perrot. E statudoù ar gevredigezh-se, skrivet e 1912 ha kemmet e 1925 e lenner e oa pal honnezh : "promouvoir l'idéal breton dans le triple domaine intellectuel, politique et économique; contribuer, en tant que catholique, à rendre à la Bretagne le plein exercice de sa foi traditionnelle."

56 *Feiz ha Breiz*, Mae-Mezheven 1940, n° 5-6, p.141-144."Arz Breiz e servij Doue" get Per Bourdelles beleg.

57 *Al Liamm*, Gwengolo-Here 1955, n° 52 p. 61-62. "Lizher" barnskriv a-zivout oberenn an **Abad** Poisson *L'Abbé Jean-Marie Perrot* e ditl, get Per Bourdellez.

58 Ar pezh a oa bet graet get Renan pe ar politikour Gustave de Kerguézec a oc'hpenn Bourdellez (Joseph Ernest Renan -1823 1892- a oa ur skrivagner hag ur prederour breizhat ha gall. https://fr.wikipedia.org/wiki/Ernest_Renan. Gustave de Kerguézec, 1868-1955, "homme politique français. Conseiller général du canton de Tréguier en 1901, député des Côtes-du-Nord de 1906 à 1920 et sénateur de 1920 à 1939 ; Gauche Démocratique 1906-1910 Republicain Socialise 1919-1919." https://fr.wikipedia.org/wiki/Gustave_de_Kerguezec.

59 Bourdellez , "Le Bleun Brug, sa Doctrine, son Esprit, ses Combats" predegenn e galleg get an Abad P. Bourdelles, Gouel Bleun Brug 1957.

https://bibliotheque.idbe.bzh/data/cle_78/Le_Bleun_Brug_sa_Doctrine_son_Esprit_ses_Combats_.pdf

Un testeni arall ag levezon Perrot àr Bourdellez a gaver en ur pennad get Youenn Craff⁶⁰. Er pennad "Unvaniezh Koat Kev, points d'histoire"⁶¹ e tispieg Craff en deus Bourdellez kemeret perzh ha graet prezegennoù meur a wezh e lidoù koun Perrot

E gouelioù bras Bleun-Brug Perrot, kent ar brezel 1939/40, en em daremprede ingal pennoù-bras sevenadurel ha politikel an emsav breizhek an amzer-se hag èl-se moarvat en deus anavet Bourdellez ur bochad anezhe, en o zouez re wGwalarn.

3° Levezon Roparz Hemon ha *Gwalarn*.

Ur lenner ag *Gwalarn*⁶² eo bet Bourdellez ivez (na bout ma ne oa nemet 18 vlez pa voe bet embannet Manifesto Gwalarn e 1925). Ur pennad hepken skrivet get Bourdellez zo bet kavet er gealouenn-se.⁶³

Er gelaouenn *Al liamm* e 2009, er pennad "Penaos em eus skrivet IMRAM" e tispieg Maodez Glanndour⁶⁴, goude bout komzet a-zivout *Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh*⁶⁵ skrivet get Roparz Hemon⁶⁶ : " holl e oamp bet levezonet gant kentelioù al levr".

Moarvat e oa levezonet kemend-all Bourdellez get a levr-se. A-du-arall e weleher pelloc'h (eil lodenn al labour-mañ) en deus kejet ha labouret Bourdellez meur a wezh get Hemon .

60 "Youenn Kraff - Yvon Craff à l'état civil, était un militant catholique breton né en 1923. Il mourut le 6 décembre 2012. Il consacra son énergie à la mémoire de l'Abbé Perrot et créa Unvaniezh Koad Kev en 1951 ainsi que Mignoned Feiz Ha Breizh. Avec le mouvement "Iliz ha Breizh" des années 1970, il milita pour les messes en breton au Pays de Quimperle. Il a aussi participé activement au développement du théâtre en breton."
<https://bibliotheque.idbe.bzh/auteur.php?id=craff-yvon-3727&l=fr>

61 "Unvaniezh Koat Kev, points d'histoire" Youenn (Yvon) Craff, BEI miz Here 2002 20 p. en linenn [https://bibliotheque.idbe.bzh\(p.8\)](https://bibliotheque.idbe.bzh(p.8)) e tispieg Craff en deus Bourdellez kemeret perzh ha graet prezegennoù meur a wezh e lidoù koun Perrot oa bet savet ur groaz e 1959 àr ar c'hleuz ma oa bet lazhet Perrot àrnañ e 1943. Savet e oa bet ar groaz-se e 1959. Marv hennezh a veze bet lidet bep blez dirakti d'ar Lun Fask, e 1959 e oa ur c'hant bennak a dud hrevet Craff. Da gentañ e veze graet ur c'halv da re varv e-pad an eil brezel bed pe "rite de l'appel aux morts pour la Bretagne" (...) "à l'appel de chaque nom nous répondons "Maro evit Breizh", ar-lerc'h e veze graet ur c'halv arall : "une seconde liste suivait de Bretons décédés dans l'année écoulée, qui avaient souffert lors de la répression, pour lesquels nous répondions : "En deus gouzañvet evit Breizh." (...) "Un discours suivait : ce fut une fois au moins le Docteur Ezel mais le plus souvent c'était Marc le Berre qui prenait la parole, des prêtres aussi intervenaient. Je me souviens en particulier de l'**abbé Bourdellès** et de l'abbé Clerc, ente autres." Ha Craff (p.10) da zispieg e oa daet Raymond Jegaden da bPredisant an Unvaniezh e 1969. Adal ar blez-se e veze aozet al lid-koun get an "**abbés Bourdellès**, Clerc, Lec'hvien, Motreff, Ar C'halvez, Chardronnet, Dubourg, tous prêtres du mouvement breton" (pa oa bet difennet da velean eskopti Kemper ha Leon gober kement-se). (p.8)

62 *Gwalarn* : "revue littéraire fondée en 1925 par Roparz Hemon et Olier Mordrel, 166 numéros ont paru, jusqu'en mai 1944 (...) Il s'agissait pour Roparz Hemon et pour Olier Mordrel de créer une littérature nationale bretonne; base linguistique et culturelle d'un futur État national breton." Georges Cadiou *Emsav dictionnaire critique, historique et biographique*, COOP BREIZH, 2013, 435 p. (p.89).

63 Genver-C'hwevrer 1943, n° 156/157, p. 34-74 "Istor berr al lennegezh kembraek"; p. 75-77 "Lennegezh Bro Gernev Veur" (troidigezhioù get Per Bourdelles diàr Jean-Pierre Vinay).

64 *Al Liamm*, niv. 376 Gwengolo-Here, p. 46-51.

65 *Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh*, 1931 ("antérieurement paru par épisodes dans *Gwalarn*") Adembannet get Al Liamm, 2000, 252 p.

66 "Roparz Hemon (1900-1978) éminent linguiste et grammairien qui aura accompli un travail colossal pour (...) la langue bretonne" (...) "homme politique (...) nationaliste breton." Georges Cadiou *Emsav dictionnaire critique, historique et biographique*, COOP BREIZH, 2013, 435 p. (p.187).

Ur roud arall ag levezon Hemon àr Bourdellez a vez kavet er pennad "Hon Hunvreoù kaer"⁶⁷ get Bourdellez. Lenn a reer ennañ : "Mar deo un nerzh evit ur bobl trec'het mirout huñvre e frankiz daoust da bep tra, rak deiz pe zeiz e tihuno "Arzhur"- eo un dañjer luskellat er galon un huñvre karet hag ankounac'haat ar bed-diavaez, ankounac'haat evel ma lavar Roparz Hemon hon huñvreoù kaer da drec'hiñ war ar bed."⁶⁸. Diàrbenn frankiz Breizh emañ Bourdellez a-du get Hemon pa vez kont gober un dra bennak ha pas chom difich é huñvreal.

A-du arall e c'hellan lâret e plije ur bochad skrivagnerion *Gwalarn* da vBourdellez dreist-holl Jakez Riou.⁶⁹

Na bout ne oa ket bet ezel eus Skol Walarn⁷⁰ e krogas Bourdellez da droiñ pennoberenn lennegel Bro Italia *I promessi Sposi* get Alessandro Manzoni kentizh ha 1933-34, ar pezh a glote penn-da-benn get pal skrivagnerion Walarn a oa é klask lakaat pennoberennoù lennegel a bep seurt bro, a bep seurt yezh, e brezhoneg. Mennout a rae Hemon e vehe bet savet ur lennegezh vrezhoneg modern gwriziennet ha digor àr ar bed ha par da lennegezhioù broioù bihan arall. Ne oa ket bet embannet troidigezh romant Manzoni er gelaouenn *Gwalarn* met er gazetenn *Breiz* e stumm ur romant-feilheton.

Èl *Gwalarn* e tigoras Bourdellez prenestroù lennegezh Breizh àr ar bed. Liesyezhek e oa (brezhoneg, galleg, saozneg, italianeg ha latin a ouie)."Meur a wech eo bet displeget gant Hemon pegen pouezus e oa lakaat e brezhoneg oberennoù gwellañ al lennegezh etrevroadel. Nebeut a dra a zo bet troet betek-hen diwar an Italianeg. Setu perak hon eus kalz a blijadur o kinnig hiziv an droidigezh-mañ; ha seul vuioe'h a blijadur ma 'z eo bet graet gant ur mailh war ar brezhoneg, an Ao Per Bourdellez." a skrive Per Denez e 1986 (*Danvez-Priedoù* get Alessandro Manzoni, troet e brezhoneg get Bourdellez, 1986, kentskrid II, p. 9).

An holl sevenadurioù o deus afer a darempredoù. Maget eo ar sevenadurioù get eskemmoù dizehan⁷¹. A-du e oa Bourdellez get kement-se p'en deus lakaet pezhioù lennegezh Bro Italia (ha pelloc'h pezhioù lennegel Bro Saoz, Bro Iwerzhon, Bro C'hall hag Amerika) e-barzh lennegezh Breizh, en o zouez *I promessi Sposi* (met ivez evit ar pezh a sell doc'h lennegezh Bro Italia "An divina Comedia" get Dante⁷²).

67 *Al Liamm*, Genver-C'hwevrer 1951, n°24, p. 35-39. "Hon Huñvreoù Kaer", Per Bourdelles.

68 *Ibid.*, p. 36.

69 "Lan, embanner al ludu" tennet ag torkad danevell *Geotenn ar Werc'hez* get Jakez Riou (Skrid ha Skeudenn, Brest, 1934) em lakaas da studial evit deskiñ brezhoneg ha prientiñ ar vachelouriezh met ivez evit displeg din e oa ret bout kengred get kevredigezh emaoamp ganet enni.

70 Bourdellez ne gemero ket perzh e *Gwalarn* da vat, nemet ur pennad embannet e 1943 en n° 156, Genver-C'hwevrer (troidigezhioù pennadoù gallek Jean-Pierre Vinay "Istor berr al lennegezh kembraek ha Lennegezh Bro Gernev Veur").

71 Ha pinvidikaet eo yezhoù a-drugarez da zroidigezhioù oberennoù estren : "Dre « endreiñ » ("enbarzhañ + troiñ") levrioù estren e kresk ingal ment ha kalite hor c'horpus lennegel [korpus lennegel Breizh] a skriv Malo Bouëssel du Bourg (*Al Liamm*, 2020) é kemer en-dro formulenn Pascale Casanova.)

72 *Imbourc'h*, kelaouenn a studi, Roazhon, 15 Eost 1977, niv. 90-91/1, 197p.. *An divina commedia* get Dante Alighieri troet diàr an italianeg e brezhoneg get Per Bourdellez, skeudennoù get Annaig Coué, digoradur get Per Bourdellez (19 p. doc'hpenn).

Graet en deus Bourdellez e 1933-34 get brezhoneg a ouie mat kani desket er gêr (kani Bro Dreger neuze) pa yae Gwalarn get brezhoneg unanet stumm "KLT". E 1986 avat pa vo embannet an azasadenn e stumm ul levr get an embannadurioù Hor Yezh e vo lakaet e stumm ar "peurunvan"⁷³.

Troet eo bet *I Promessi Sposi* diàr an italianeg an hani eo get Per Bourdellez "⁷⁴.

4° Levezon (verrbad⁷⁵) temz-spered trec'h prantad goude ar brezel 14/18 é klask meulediñ nerzh-kalon an dud bet soudarded .

An Iliz he deus klasket goude ar brezel 1914/18 diskouez o doa Bretoned graet o lod, hag unan bras, e-pad ar brezel-se. Soñjal a reer ivez e barzhonegoù Yann-Ber Kalloc'h hag e dorkad barzhonegoù *Ar en deulin* pe er pezh-c'hoari *Sant Goneri* get Job ar Bayon 'zo a-du get an temz-spered-se.

Get ar barzhoneg "Er Road..."⁷⁶ e vo graet meuleudi da soudarded Breizh marv e-pad ar brezel 14/18 get Bourdellez ivez (mont a ra betek o c'heñveriañ doc'h soudarded Nevenoe!):

"Enor da re o deus hadet

O gwad war dachenn ar maro!

Enor d'a re bet diskaret

Dindan vec'h ar stourmad garo!"

Hag é veuleudi Breiz ivez :

"Breiz! Sav da benn gant lorc'h dirak an holl bobloù,

Rak doujañs ha grad vat a zleont d'az taeloù."

5° Levezon (hirbad) Tregeriz'zo, darempredet getañ, elbig etreze.

Tost da velean arall Bro-Dreger e vo Bourdellez é labourat gete hag elbig etreze: Loeiz ar Floc'h/Maodez Glandour (1909-1986, beleg ha barzh), bet er memes klas get Bourdellez e skolaj Sant-Joseb meur a vlezad, en deus difariet Bourdellez kentañ oberennoù lennegel bet graet get henezh; Marsel Klerg (1912-1984), beleg a vo rener ar gelaouenn *Barr-Heol war Feiz ha Breizh* a genlabouro ur bochad Bourdellez getañ (doc'hpenn tregont pennad get Bourdellez zo bet kavet enni), Armañs ar C'halvez (1921-1972), beleg ha kelenner, rener ar gelaouenn *Skol* a genlabouro

⁷³ *Danvez-Priedoù* Alessandro Manzoni, aozet diwar an italianeg gant Per Bourdellez (p.3), Mouladurioù Hor Yezh, 1986, 205 p.

⁷⁴ Brigitte Denis, bet kelenneret àr an italianeg, he deus hantet Bourdellez etre 1966 ha 1989 e Gwareg he deus kadarnaet e ouie lenn Bourdellez an italianeg na bout ne oe ket evit komz ar yezh-se (testeni bet degemeret geni e Miz C'hwevrer 2024).

⁷⁵ Rak e 1969 e skrivo Bourdellez kement-mañ: "Bremañ avat, p'emañ o ziez o kouezhañ en o foull, pa rankont distrujañ o eostoù, pa rank o bugale-vihan divroañ, pep bloaz da zeiz an "Armistis" e vez bodet ar "Poilued kozh" endro d'ar banniel triliv, unan anezhe a ra ur brezegenn e galleg plat, karget e vezont a zebraj hag a evaj - hani ruz- ha pa vezont leun a-walc'h e vezont lakaet da vlej al paour-kaezh Marseillaise." En *Al Liamm*, 1969, n°132, p. 44-51 "An Istor hag ar Vro" get Pêr Bourdellez.

⁷⁶ E *Bulletin Annuel 1933 de l'Union Régionaliste Bretonne, Congrès de Saint-Nazaire 1932*, p. 55-56 "Er Road", ur barzhoneg get an Abad Per Bourdelles, "Séminaire Cesson (Saint-Brieuc)". (Aet e oa getañ eil priz ar c'henstrivadeg barzhoniezh aozet get ar c'h/Kevredigezh Vroadel Breizh er blezad-se).

getañ ivez Bourdellez)⁷⁷(Ar C'halvez : bet skoliad Bourdellez), Gwilherm Dubourg (1928-1988 beleg ha skrivagner brezhonek) ha belean arall ar vro-se en deus labouret gete. Da skouer é treiñ ar bibl e brezhoneg.

Bourdellez en deus lâret din (e 1977) e oa bet plijet é kemer perzh get Loeiz ar Floc'h⁷⁸ é kenlabourat evit ar c'helaouennoù *Studi hag Ober*, pelloc'h *Kaieroù Kristen*.

D Levezon skrivagnerion estren 'zo : broadelourion pe/ha kristenion peotramant re romantel.

1° Levezon Alessandro Manzoni (1785-1873).

Manzoni a aozo Bourdellez romant nemetañ hennezh *I Promessi Sposi* e 1933/34⁷⁹. Perak en deus Bourdellez choazet plediñ get ar skrivagner hag ar romant-se?⁸⁰

Manzoni a oa addaet d'ar feiz katolik goude bout bet, da gentañ, "gounezet gant menozioù Voltaire en e yaouankiz"⁸¹. Danvez ar romant eh eus e-barzh un doare kentelius a-walc'h e-keñver kelennadurezh ar relijion-se: "santout a reas Manzoni e tlee ar Feiz kristen diskenn war ar bed-mañ ha bezañ oberiant, dougen dirak an dud, a-enep an droug, testeni a-du gant Komz Doue. Ar *Promessi Sposi* a voe frouezh ar menoz-se. "La Pentecoste" a oa bet ur bedenn d'ar Spered Santel; an 'Danvez-Priejou' a vo un daolenn eus labour ar Spered Santel er bed."⁸²

Un abeg arall eh eus: "O skrivañ ar PROMESSI SPOSI", e felle da Alessandro Manzoni sevel ul levr a garantez evit e vro."⁸³

Trede abeg: "Ul levr evit ar bobl (...), ul levr a Istor a felle dezhañ sevel war un dro (...) en doa soñjet ne oa netra gwelloc'h eget an Istor evit dedennañ ha kenteliañ ar bobl."⁸⁴. "(...) e studias Manzoni gant aked buhezioù tud ar XVII^{vet} kantved, dielloù ha lezennoù an amzervezh-se. Gwir bajennadoù Istor a zo er romant."⁸⁵

77 "Ur gwir veleg : an Aotrou Kalvez", Bourdellez, Al Liamm 1972, niv. 150 p. 25-30. Bet krouet ha renet get hennezh ur skol unyezh e brezhoneg "*Skol Sant-Erwan*" (1958-1961, e Plouezeg)

78 *Al Liamm* n° 376 Gwengolo-Here 2009 : "Penaos em eus skrivet IMRAM" Loeiz ar Floc'h, p. 46-51 : "Kroget em boa gant *Studi hag Ober*, diskar-amzer 1936 ha klask a raen gant an dastumadenn-se ur speredelezh kristen ha brezhon war un dro o klotañ gant ezhommoù tud desket ha digor o reiz." (p.46)

79 Per Bourdellez en deus embannet e 1933-34 er gelaouenn *Breiz* (adal an niverenn daet er-maez d'ar 05 a viz Meurzh 1933 betek kani an 11 a viz Meurzh 1934 - 53 fennad etretout) un azasadenn e brezhoneg (liv brezhoneg bro Dreger geti) a romant brudet *I Promessi Sposi*, skrivet en italianeg er blezadou 1820-1840 (pevar stumm da heul) get Alessandro Manzoni (1785-1873). .

80 É lenn kenstkrid *Danvez-Priedoù* Bourdellez (1986, p.6) e komprenner en doa lennet Bourdellez oberennoù-arall Manzoni : *La Pentecoste* ha dou bezh-c'hoari istorel *Il conte di Carmagnola, Adelchi*

81 Bourdellez , p.6, "Kentskrid I", *Danvez Priedoù*,1986.

82 *Ibid.*, p.7.

83 *Ibid.*, p.1.

84 *Ibid.*, p.1.

85 *Ibid.*, p.7.

An abeg doc'hpenn : "Dre ma skrive evit ar bobl, en doa dilezet Manzoni an doare fals-klasel a reas e-pad pell amzer muioc'h a reuz c'hoazh en Itali eget Bro-C'hall (...), evit skrivañ en ur yezh fresk ha poblek, tost-heñvel ouzh ar yezh pemdeziek."⁸⁶

Bourdellez en deus kavet (pe adkavet) get ar romant-mañ pemp tra a vo, e-pad e vuhez a-bezh, pouezus-tre evitañ: **Doe, ar vro, ar bobl, an istor hag ar yezh**. Ha get Manzoni skouer ur stourmer evit e vro hag e bobl.

Rak, oc'hpenn ur skrivagner eh eus bet a Manzoni un den engouestlet àr dachenn bolitikel e vro, er luskad politikel anvet "Risorgimento" a oa palioù hennezh : dieubiñ hag unaniñ Bro Italia⁸⁷ "Dieub biken ne vezimp, nemet unanet e vefemp"en dehe lâret Manzoni meneget get Bourdellez⁸⁸ Ni a welo pelloc'h e vo adkemeret ar formulenn-se get Bourdellez pa gomzo ag Breizh (*Gwelet pennad a-zivout ar "CELIB" da skouer*).

Bourdellez en deus sur a-walc'h lennet ur bochad. Pand eo bet taolet en tan e baperioù, e levrioù, pe strewet ha stlabezet du-mañ ha du-hont, n'on ket bet evit labourat àrne evit gouiet peseurt skrivagnerion a vourre o lenn.

Dre ma c'houlenne Erwan ar Moal pennadoù getañ evit e gazetenn Breiz neoazh e tesker en deus lennet (goude Manzoni), ha lennet pervezh mem, Gilbert Keith Chesterton e 1936⁸⁹. Kentelius eo e bennadoù diàr-benn hennañ. Doc'h o lenn e komprenere e kouche alies mennozhioù Chesterton get re vBourdellez.

2° Levezon Gilbert Keith Chesterton (1874-1936).

Chesterton a varvas d'an 14 a viz Even 1936. Bourdellez a embannas nav fennad diàrbenn "Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor", da lâret eo kani Chesterton, adal Meurzh betek Mae 1936 (just a-raok marv Chesterton neuze) er gazetenn vreizhek *Breiz*⁹⁰. Beleget e oa bet Bourdellez tri blez bennak araok (e miz Kerzu 1932), n'eo ket souezhus eta er welet bout dedennet get levrioù hennañ a oa anezhañ ur skrivagner ag ar re vrudetañ en e amzer, bet ganet edan lezenn ar brotestanted ha bet androet doc'h ar lezenn gatolik e 1922, en oad a 48 vlez.

⁸⁶ *Ibid.*, p.8.

⁸⁷ E amzer Manzoni Bro Itali (Bro Itali an norzh a-vremañ) a oa edan beli an Aostrianed. Feurioù-emglev etrebroadel 1815 o doa lakaet ar Lombardia hag ar Venetia edan gward Ausria."Entre 1831 et 1848, le mouvement national s'approfondit et s'élargit (...). Dans la péninsule , romantisme et politique sont étroitement liés, avec le réveil de la science historique, la littérature exaltant les souvenirs du passé national (...)" (Guichonnet Paul,"Risorgimento" in *Encyclopedia Universalis*) (E amzer ar romant e oa ar vroioù-se edan beli ar Spagnoled). Rouantelezh Bro Italia a vo unanet e 1861 ha Manzoni a vo ur penn-bras anezhi (senatour ha Presidant Komision evit unvaniñ yezh Bro Italia e 1962).

⁸⁸ Bourdellez, "Kentskrid I", *Danvez Priedoù*,1986, p. 5.

⁸⁹ Pa oa Bourdellez é chom e-tal Paris e Chatillon-sous-Bagneux.

⁹⁰ Breiz n° 450 08 03 1936 p.1 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (1) gant Maen Tan; Breiz n° 451 15 03 1936 p.2 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (2) gant Maen Tan; Breiz n° 452 22 03 1936 p.2 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (3) gant Maen Tan; Breiz n° 454 05 04 1936 p.2 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (4) gant Maen Tan; Breiz n° 457 12 04 1936 p.2 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (5) gant Maen Tan; Breiz n° 455 26 04 1936 p.3 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (6) gant Maen Tan; Breiz n° 459 10 05 1936 p.2 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (7) gant Maen Tan; Breiz n° 460 17 05 1936 p.2 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (8) gant Maen Tan; Breiz n° 462 30 05 1936 p. 3 « Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor, J.K. Chesterton (9) gant Maen Tan.

Kavet en deus Bourdellez un dason ag e feiz-eñ enne ha stil lennegel brav ha fentus (mennozhioù a ya a-enep ar mennozhioù boutin pe "diac'hinadoù" 'zo e-leizh enne⁹¹) en doa plijet doc'hpenn ur bochad dezhañ⁹².

Kavout a ra din en deus Bourdellez lennet levr embannet get Chesterton e Bro Saoz e 1925 *The Everlasting Man*⁹³, pe troidigezh bet graet e galleg ag al levr-se e 1927⁹⁴. Diàr petra e vez kont? Levr un teolozian eo.

Pal ar levr-se 'zo prouñ dre arguzennoù poellek an Diskuliadur kristen (ur levr a "Apologétique" an hani eo). Setu penaos e ya à-raok get e zisplegadenn: da gentañ e studi Chesterton an Den èl ne vehe get hennzh nemet un aneval anezhañ, klask a ra displeg, arguzennoù e-leizh getañ, n'eo ket gwir an dra-se, embann a ra er c'hontrol, e vehe kentoc'h get an den ur spered; d'an eil e studi ar C'hrist èl ne vehe get hennañ nemet un den anezhañ, arguzennoù e-leizh kement-all, ha setu diskouezet getañ e vehe poellekoc'h ober degemer mat da gelennadurezh an Iliz diàrbenn ar C'hrist. Soñjal a ran eo bet pouezus-tre levezon Chesterton àr vBourdelles. **Setu mennozhioù Chesterton e voa kavet roudoù anezhe e nav fennad Bourdellez hag a raio hennañ e vad gete a-hed e vuhez.**

Evit Chesterton "nebeud-nebeud eus an tezennoù brudet e amzer 'zo gwir penn da benn" (pennad 1), adlakaat e kont anezhe 'zo ret d'ober. Ne faota ket lonkañ an traoù èl vent lâret get ar muiañ-niver.

Ur "wirionez" 'zo. Chesterton 'zo **a-enep an netraelouriezh**. Klask hag heuil ar "**wirionez**" a ya d'ober "talvoudegezh ar vuhez" hrevezoñ. Hejañ ha dihuniñ a ra spered e lenner evit e kemero hennzh un tamm poan da glask ar wirionez-se. Chesterton a lâr e vo talvoudus-tre studial "prederouriezh an drizekvet kantved" (hep resisaat muioc'h⁹⁵).

Chesterton 'zo anezhañ a lâr Bourdellez : "ur paotr-bag a vro Saoz kollet e hent adkavet bro saoz en ur gredi e oa un enezenn all ; evel-se en deus klasket anaout an den hag ar bed." (pennad 1)

Kelenn kentañ meneget get Bourdellez: **da bep unan da brederiañ anezhañ e-unan** ha pas lonkañ ar pezh a vez kinniget get ar muiañ niver pe get ar pennoù-bras. Ur gentel-se 'vo heuliet get Bourdellez eñ e-gunan, er gwelet a weleher pelloc'h.

An holl gredennoù 'zo bet tabutet, ar pezh n'eo ket fall, à lâr Chesterton, met gwelet a reer goude (da lâret eo e amzer Chesterton) n'eus ket mui kredenn ebet get an dud. Ha setu int é lakaat

91 Benvekaat eo bet goude Chesterton get tud an tu dehoù pellañ, nevezvirourien anezhe (Gwelet : "*Richard Bastien, L'homme heureux ou l'anthropologie chrétienne* de G.K. Chesterton" get Luc Gagnon, <http://www.egards.qc.ca/wp-content/uploads/2023/02/REVUE-EGARDS>) : "idée directrice : les philosophes modernes ont voulu porter la raison au pinacle et reléguer la religion au rang de superstition. Ce faisant, ils ont non seulement affaibli la foi, mais provoqué le suicide de la pensée et détruit la raison dont ils se réclamaient. Mais il ne faut pas perdre espoir : l'histoire de la civilisation chrétienne comprend un flux et un reflux de la parole de Christ : à l'affaiblissement de la foi succède invariablement « la renaissance de ce que cet affaiblissement avait fait disparaître ».

Richard Bastien : nevezmirour katolik a-enep an diforc'h, a-du get talvoudoù ar familh..., armerzhour ha kazetennour (kazetenn *Egards, Bro gKebek*). https://fr.wikipedia.org/wiki/Richard_Bastien

92 Kement-se en doa lâret din e 1977.

93 *The Everlasting Man*, 1925, Hodder and Stanghton.

94 *L'Homme Eternel* 1927 troidigezh kentañ lodenn *The Everlasting man* get Maximilien Vox, Paris : Petits-fils de Plon et Nourrit, Collection Le Roseau d'Or, 301 p.. Adembannet e 1928. An eil lodenn a zo bet troet e galleg e 1948.

95 Notenniñ a ran e vo studiet get Bourdellez tud ar Grenn-Amzer e fin e vuhez (Dante en ur droiñ " An Divina Commedia" ha buhez Sant Erwann da skouer) hag e venego ivez Sant Tomas Akin (1225-1274).

tout an traoù àr ar memes live. Ha Chesterton da geuziñ da gement-se. Ha Bourdellez d'e heuliñ. Menegiñ a ra Chesterton George Bernard Shaw ⁹⁶ a zo Chesterton a-enep doc'htañ pa lâr hennezh: "Setu amañ lezenn aour : n'eus lezenn aour ebet", da lâret eo n'eus "gwirioniez-diazezh ebet d'ar vuhez") (pennad 2). "Abaoe ma 'zeus aotre da zifenn pep kredenn an darn-vuiañ ne zifennont kredenn ebet" a lâr Chesterton." Bremañ 'vez roet d'an traoùigoù an dalvoudegezh a veze roet gwechall d'ar mennozhioù-meur. Ar pezh a zo en diavaez an den a vez studiet bremañ e-lec'h studiañ ar pezh a zo en e ziabarzh."

"Pa fell dimp en em dizober diouzh ar gizioù hag ar geennadurezh deut dimp dre hon tadoù ez omp heñvel ouzh tud en ur straed diouzh an noz, c'hoant dezo skeiñ e-traoñ ul letern koz zo war veg ur post-koad. Ar manac'h rous (spered ar Grenn-Amzer getañ) a lâr « sonjomp da getañ e talvoudegezh ar sklerijenn. Ma 'z eo ar sklerijenn un dra vat dreizi hec'h unan » (pennad 2)

Tud an XX^{vet} kantved 'zo tud oberiant, "n'int ket studierien-huñvreerien ; hag e troc'hont ar gomz d'ar manac'h rous, hag e sailhont àr ar post-koad, hag e tiskaront al letern" (pennad 2). Met goude ? Kompren a reomp e oa mat deomp selaou doc'h "ar manac'h rous" edan sklerijenn al letern, met en deñvalijenn emamp..." Setu tezennoù savet get Chesterton a adginnig Bourdellez da lennerien *Breiz é lâred* doc'hte eh eus get ar re-se ur geennadurezh a-feson.⁹⁷

Bourdellez a lâr doc'hpenn: "A-wezhoù e kavo al lenner e ya [Chesterton] re bell geti, marse, met aze emañ e stumm dezhañ e-unan da skriv, e stumm dezhañ e-unan da hejañ ha da zihuniñ ar spered morgousket, e stumm da zifenn al letern koz enep an torrierien leternoù." "Lenner Chesterton a gavo ouz e lenn kalz a blijadur pe kalz a zisplijadur. Menel kousket avat biken ne raio."

Eil kelenn meneget get Bourdellez (pennad 2) : fariañ a reont ar re a nac'h eh eus ur wirionez hag a daol kuit e poubellenn an istor prederouriezh kozh [hani ar Grenn-Amzer, ar "manac'h rous"].

Tabutal a ra Chesterton prederourien modern (n'int ket meneget getañ nemet Friedrich Nietzsche ⁹⁸ hag ar barzh Alfred de Vigny ⁹⁹) 'zo gete "faltazioù diwir", 'zo "distag ha disheñvel diouzh ar bed gwir" (pennad 3). **Gober a reont ag an den un Doue** pa n'eo ket nemet un den : "buhez an den 'zo mogeriet, hualet", "ezhomoù dispar" eh eus e "kalon an den" (pennad 3), hogen kalz eus ar brederourien a nac'h tout an traoù-se.

Farsal a ra Chesterton doc'h ar brederourion-mañ èl-se (en ur ober get ur gaou-gwir) : "Bez eus tud hag o deus graet get an douar kreizenn o buhez abaoe an deiz ma c'houvezer n'eo ket an douar kreiz ar bed !" (pennad 3).

Ha Bourdellez da zispleg penaos e ra Chesterton get "an Den". **Chesterton a gemer an den evel m'emañ er bed-mañ evit e studiañ "a-bezh"**. N'eo ket korf, yalc'h, deskadurezh an den

96 "George Bernard Shaw (26 July 1856 – 2 November 1950), known at his insistence as Bernard Shaw, was an Irish playwright, critic, polemicist and political activist. His influence on Western theatre, culture and politics extended from the 1880s to his death and beyond. He wrote more than sixty plays, including major works such as *Man and Superman* (1902), *Pygmalion* (1913) and *Saint Joan* (1923). With a range incorporating both contemporary satire and historical allegory, Shaw became the leading dramatist of his generation, and in 1925 was awarded the Nobel Prize in Literature." https://fr.wikipedia.org/wiki/George_Bernard_Shaw

97 Gwelet e vo diwezhatoc'h (lodenn III) e lâr kement-se Bourdellez pa gomz diàrbenn prederourion ar Sklêrijenn.

98 Friedrich Wilhelm Nietzsche (ganet d'ar 15 a viz Here 1844 e Röcken ha marvet d'ar 25 a viz Eost 1900 e Weimar) a oa ur prederour hag ur lizheregour alaman. https://fr.wikipedia.org/wiki/Friedrich_Nietzsche

99 "Alfred Victor de Vigny, ou comte de Vigny, né le 27 mars 1797 à Loches et mort le 17 septembre 1863 à Paris 8e, est un écrivain, dramaturge et poète français. https://fr.wikipedia.org/wiki/Alfred_de_Vigny

hepken. Un dra oc'hpenn 'zo da glask. Un dra a ne vo ket kavet get ar skiantourion. Setu petra a lâr parabolenn "Ar pemp dall hag an olifant" : "Ar skiantoù a rank sellout pizh an traoù bihan ha n'anavont nemet lodenn pe lodenn eus an den; ar medisin lagadoù n'avanavez nemet daoulagad...ar prederour n'avanavez nemet ar spered ... ha c'hoazh...arabat dimp bout evel ar pemp dall dirak an olifant : o tastorn korf an olifant, unan a gav un troad, unan ur skouarn ar pempvet a lâr : n'eus roud ebet a-gement-se met ur pikol kof 'zo."

Trede kelenn meneget ger Bourdellez: **ar skiantoù 'zo mat met ne vint ket biskoazh evit kavout petra eo natur an den.**

Neuze, penaos "anaout an den en e bezh"? E veajiñ ? E studial an istor ? Kaout deskamant dre ar levrioù ? Tout an traoù-se 'zo mat met n'eus ket trawalc'h anezhe evit tizhout ar pal-se.

"Kalz muioc'h a zeskefed diwar-benn temz-spered an dud o klask mont e ti oc'h amezeg dre ar prenestr eget kemer ul lestr betek New-York : er broioù pell e vo gwelet traoù, er gêr tud." "An den pa vev en un tiad bihan a vev en ur bed brasoc'h ".

"Ma fell dimp goût perak e toug tud Tomboukto pleuñ ruz war o fenn klaskomp perak e toug tud Kemper tokoù du" a skriv Bourdellez (pennad 4) " na gredomp ket re vuan ar pezh a lâr ar beajour bet er broioù pell : "Tud Mounbojumbo", emezañ, a gred e c'hell ar re varv debriñ hag a laka boued d'ezo en o bez evit o magañ er bed all; pa vezo ur Moumbojumboad o vale e Breiz e lavaro d'e dro : Breiz an XX^{vet} kantved a gred e c'hell ar re varo c'houesa rak lakaat a reont bleunioù war ar bezioù..."

N'eo ket get an istor, an douaroniezh, ar lignez, ar ouenn ... met get **"ar vroadelezh" an hini eo a ya d'ober an den**: "ar vroadelezh n'eo ket eun dra a ouenn nag a wad : **eun dra a spered** eo, evel eun Iliz : eun dastumadeg sperejou » (pennad 5). Ha Chesterton da veneg nerzh broadelezh an Iwezhoniz a-hed o istor pa o deus enframmet Normanded, Spagnoled, Daniz ha betek soudarded saoz Cromwell." An den a zo bet mêret eta, n'eo ket gant gwad e gorf, met gant ar vroadelezh he deus stummet e spered." (pennad 5). Kelenn niverenn pevar meneget get Bourdellez : ar vroadelezh dreist pep tra a ra an den.

Petra eo nerzh ha gwander an den? Petra eo **"ar gwir den"** ? **N'eus ket eus** un "Arc'h den", "un Den Meur", ur **"Superman" anezhañ¹⁰⁰**, **nemet un den kaezh**, fallakr, huñvreer, pec'her. N'en deus an den nemet div vrec'h, neuze ne faota ket er barn el ma oa bet kant brec'h dezhañ. **Met an den-se a c'hell diskouez bout kalonek ha stourm a-enep ar re greñv.** Er c'hontrol n'eo ket kalonek avat an hani kreñv a wask an hani gwan. **"Gwir nerz an den eo ober fae, dipriziañ an nerz.** Ar re a lavar da bep den plegañ d'e amzer a ankounac'ha penaos ar re wellañ eus pep amzer eo ar re ne blegont da netra."¹⁰¹. Kelenn niverenn pemp meneget get Bourdellez : "Ar re wellañ eus pep amzer eo ar re ne blegont da netra."

Kenderc'hel a ra Chesterton é lâred : "An deskadurezh a ra genaoueien", "ar madoù a ra an droug."(...) "Gwir eo war an tu-se emaomp o vont." Tabut a ra hennezh a-enep kevredigezh e amzer p'emañ daet an tud desket, an dud pinvik da vout pennoù bras ar vro ha pa vez lakaet gete ar re arall

100 A-enep "ar fals-den" eo Chesterton kani Nietzsche pa lâr hennezh : "eur gourc'hemenn nevez a roan deoc'h : bezit kalet !" (pennad 6)

101 Pelloc'h e vo gwelet penaos e nac'ho Bourdellez plegiñ doc'h spered e amzer, doc'h ar re a oa galloudus (pennoù-bras an Iliz da skouer).

da amoded. "Ne ganer ket mui a-stroll pa eh eus bremañ kanerion veur a-feson marse n'eo ket pell an amzer, a zispleg Chesterton, ne gredimp ket mui c'hoarzhiañ a-stroll pa vo c'hoarzhourion a-vicher".

An den pinvik n'eus ket mui "taolioù souez" en e vuhez n'eo ket ur gwir vuhez e hani neuze. Er c'hontrol, gwechall e yae ar sant betek ar c'hastell da roiñ e ali pa ne oa ket o fegement d'ar re binvik, a skriv Chesterton.

E kontadennoù ar bobl e klaske Chesterton ivez **ar "gwir den "** a lâre Bourdellez a vo ur lenner (hag un troer¹⁰²) aketus kontadennoù Breizh, ha kontadennoù broioù arall¹⁰³.

« Hag en deus kavet [Chesterton] n'eo ket ret, evit beza eur gwir den, beza nag eun den meur, nag eun den desket, nag eun den pinvidik. » (pennad 6). Kelenn niverenn c'hwec'h lakaet ar wel get **Bourdellez : ne faot ket fiziout en tud dre m'emaint ar re-se desket pe binvik.**

Levezonet eo bet Bourdellez get kelennadurezh kristen Chesterton ar dachenn **ar brederouriez ar den** setu ar pezh a weler amañ é lenn ar pezh en deus skrivet Bourdellez a-zivout Chesterton¹⁰⁴. Kavet en deus e kelennadurezh hennezh traoù resis a raio e vad gete goude : ar "vroadelez"¹⁰⁵, ar "bobl"¹⁰⁶, "kontadennoù ar bobl". Muioc'h, heuliñ a ray ali Chesterton pa lâre hennezh e ranker da bep unan tabut get mennozhioù trec'h er gevredigezh, re ar pennoù-bras kenkoulz ha re ar muiañ-niver.

A-du-arall e c'heller lâroul eh eus get mennozhioù Chesterton, displeget hag asantet get Bourdellez **mennozhioù a-du get ar gredenn gristen, ha mennozhioù é tonet a-bell ag ar Grenn-Amzer** nemet n'int ket displeget ur bochad (anvioù prederourion an amzer-se a blij dezhe ho-taou n'int ket meneget). Un dra tost a-walc'h marse doc'h ar pezh a lâre Favereau a-zivout Bourdellez: "santet e veze en e brezeg donder ha kozhentez ar sevenadurezh vrezhonek kristen eus a-bell".¹⁰⁷

Pelloc'h e weler e vo levezonet Bourdellez get tud (Leopold Kohr, Ivan Illich, Ernst Friedrich Schumacher, Louis-Joseph Lebret) bet levezonet int ivez get mennozhioù politikel Chesterton.

Met chomomp, evit ar poent, get re o deus levezonet Bourdellez e penn-kentañ e vuhez. Setu e zaoulagad é troiñ goude ar-zu Breizh, Bro Italia ha Bro Saoz, ar-zu Bro Iwerzhon.

3° Levezon Augusta Gregory (1852-1932).

Trouz dispac'h Bro Iwerzhon a oa daet betek tud desket e Breizh, ar re tomm o c'halonoù da Vreizh d'an nebeutañ. Sodet o fenn get darn anezhe mem. Bernez Rouz a skriv "Cette révolution

102 Troet en deus kontadennoù Marc'harid Fulup e galleg (*La Cigale des Brumes, Marc'harid Fulup*, Skol n° spécial, Guy Castel, 1967, 105 p.).

103 Marcharid Fulup, Fañch an Uhel, Erwan ar Moal, Augusta Gregory, Rob Southey, Willamm Wordsworth hag e konto e-unañ kontadennoù Bro-Dreger (Selaou enrolladennoù anezhañ ar lec'hienn Dastum, <https://www.dastum.bzh/>)

104 An dra-se a vo adkavet e pennad Bourdellez embannet er gelaouenn *Imbourc'h* e 1977 (a-zivout ar vMarksouriezh).

105 Gwelet pennad Bourdellez "An istor hag ar vro" en *Al Liamm* 1966 ha lodenn 3 ar labour-mañ.

106 *Ibid.*

107 Francis Favereau *"Lennegezh ar brezhoneg en XXvet kantved 1945/1968, levrenn 3"*, Skol Vreizh 2008 p.214-216.

[brezel dizalc'hiñ Bro Iwerzhon:1919-1921] crée un véritable engouement, suscite un véritable élan des lettrés bretonnants pour la littérature insulaire"¹⁰⁸.

A-benn, e 1921 e embann Jules Gros¹⁰⁹ "Gwerz Iwerzhon" troidigezh ur ganenn boblek Bro-Iwerzhon. Renablet en deus Rouz 26 pennad, troidigezhioù pennadoù lennegezh Bro-Iwerzhon pe pennadoù diàrbenn Bro-Iwerzhon e brezhoneg e kelaouennoù ha kazetennoù brezhonek (*Breiz Atao, Gwalarn, Dihunamp...*) etre 1922 ha 1936.¹¹⁰

Dedennet e vo Bourdellez d'e dro get lennegezh Bro Iwerzhon adal ar blezadù 1940¹¹¹ ¹¹²(ha get lennegezhioù Bro-Gembre ha Kerne-Veur ivez¹¹³). Dreist-holl é plediñ get oberennoù Augusta Gregory, dramaourez Bro-Iwerzhon, tri fezh-c'hoari skrivet e saozneg get honnezh¹¹⁴ vo troet pe azasaet e brezhoneg getañ, neuze embannet er c'helanouennoù *SAV, Studi hag ober, hag Al Liamm*.¹¹⁵ Ne vo ket e-gunan Bourdellez é gober seurt labour pa droo ivez Ronan Huon (bet skoliad Bourdellez) daou bezh-c'hoari Gregory e 1945 ha 1947¹¹⁶. Marse e oe bet un seurt elbig etreze.

N'en deus ket skrivet tra Bourdellez diàrbenn ar skrivagnerez Augusta Gregory, n'eo ket bet kavet nemet an teir zroidigezh edan e bluenn. Poellek soñjal neoazh n'eo ket dre zegouezh en deus choazet troiñ ar skrivagnerez-se. Dedennet e oa bet marse geti pa oa bet daet honnezh (hag hi ag ar rummad sokial uhelañ, ha protestant) da vout unan ag pennoù bras an "Irish Literary Revival" (get William Bultler Yeats), é c'hober àr dro an " National Theatre of Ireland" e Dublin adal 1904, é troiñ sagaù Bro Iwerzhon ha pezhioù 'zo Molière e "kiltartanese"¹¹⁷, ha neuze pezhioù-c'hoari farsus, tragikel ha politikel a-wezhioù ha p' he doa en em droet krenn-ha-krak kostez broadelourien Bro-Iwerzhon¹¹⁸.

108 *Ouest-France*, 28 11 2021 (D'an 06 12 1921 he doa Bro Iwerzhon kavet e frankiz vroadel).

109 "Jules Gros (*Jul ar Groz* hervez an doare brezhonekaet ; *Jules Gros* eo an anv a zo moulet war e levrioù), Ab Alan diouzh e anv barzh, zo ur yezhoniour breizhat, ganet d'an 2 a viz C'hwevrer 1890 e Pariz ha marvet e Lannuon d'ar 25 a viz Kerzu 1992." https://fr.wikipedia.org/wiki/Jules_Gros

110 *Ouest-France*, 28 11 2021.

111 Betek fin e vuhez e vo dedennet Bourdellez get Bro Iwerzhon ha lennegezh ar vro-se (skrivet en deus ur pennad a-zivout Bobby Sands just a-raok marv hennañ é gomz diàrbenn barzhoniezh kozh Bro Iwerzhon (an drouized, ar "filid", ha neuze ar sent ...)

112 Kemeret perzh en deus graet Bourdellez e skipailh skrivagnerion vretan o doa gouestlet un niverenn a-bezh ag ar gelaouenn *Al Liamm* da "Eire". *Al Liamm*, Genver-C'hwevrer 1967, n° 120. Merket eo en deus Per Bourdellez troet e brezhoneg pennadoù 'zo (N'eo ket resisaet pe hani).

113 "Istor berr al Lennegezh kembraek-Lennegezh Bro-Gernev-Veur" troidigezh Bourdellez studiaden Jean-Pierre Vinay, *Gwalarn*, niv 156-157, Genver-C'hwevrer 1943 p. 34-74 ha 75-77.

114 Daou anezhe 'vo kavet e *The Comedies of Lady Gregory*, being the first volume of the collected plays, edited and with a foreword by Ann Saddlemye, Colin Sythe, Gerrards Cross, 1970, p. 13/30 ha 95/107.

115 *SAV (Strollad Ar Vrezhonegerien)* n° 18, 1940 "Ar vrud a red", p. 46-67; *Studi hag Ober* n°12, 1940 p. 9-21; "Ar reder bro": *Al Liamm*, Genver Ebrel n° 12-13 1949, p. 54-61 "An daou gozh en ospital".

116 *Tir Na N-Og* 1945 "Dor an Toull-bac'h" n° 7 ha 1947 "Al Loar o sevel" (diàr *The rising of the moon*) n° 3 (rummad nevez) p.10-23. + ur studiaden a-zivout Lady Grégory *Al Liamm* 1947.

117 "Elle a utilisé un type d'anglais qu'elle a appelé "Kiltartanese" (après avoir entendu des gens le parler qui vivaient dans une paroisse municipale voisine). Également connu sous le nom de "Hiberno-anglais", il s'agissait d'un dialecte anglais qui conservait la syntaxe, les expressions idiomatiques et les rythmes distinctifs de l'irlandais d'origine." Dorian Brooks, <https://www.fembio.org/english/biography.php/woman/biography/lady-augusta-gregory/>

118 *Ibid.*: "Il n'y a pas si longtemps en Irlande, la culture irlandaise - y compris la langue irlandaise (gaélique) - était méprisée par la classe dirigeante anglo-irlandaise, connue sous le nom d'Ascendance. L'attitude dominante était que l'irlandais ne devrait être parlé que par des "paysans" ou des gens de la campagne. L'intérêt pour les anciennes traditions irlandaises de mythes et de sagas a été fortement décrié par les professeurs du Trinity College de Dublin. Mais tout cela a commencé à changer vers la fin du dix-neuvième siècle. Lady Augusta Gregory, elle-même membre de l'Ascendance, a été - ironiquement - l'un des principaux agents de ce changement, aidant à revitaliser la culture

Troet en deus Bourdellez daou bezh-c'hoari farsus : *Spreading the news* (1904¹¹⁹, daet da vout *Ar brud a red* - a gaver ennañ bommoù flemmus doc'h ar Saozon 'zo e penn Bro Iwerzhon- , *The Workhouse Ward* (1908) daet da vout *An daou gozh en ospital* hag an trede, relijiel e danvez, *The Travelling Man* (1909) neuze *Ar reder bro*¹²⁰.

Heñchet abred-tre ha groñs àr hent ar velegiaj get e familh hag e skolaj, stummet get an Iliz ha pelloc'h get ar skol-veur goude e vachelouriezh e troas Bourdellez davet skrivagnerien kristen tout, ha broadelourien mod-pe-vod evit ar lod brasañ anezhe. Ur brederouriezh speredelour 'zo getañ. Interesset dreist pep tra eo get ar brezhoneg, ar lennegezh (kani Breizh ha kani broioù estren 'zo) hag an istor.

Petra a rey get tout an deskamant-se? Ur c'helenner a vo (adal 1932 betek 1966), ar pezh 'zo bet pouezus-tre evitañ. Met kemer a ray perzh ivez, e meur a zoare, e vuhez sevenadurel, sokial, ekonomikel, politikel, relijiel Breizh.

-

II Bourdellez ha bed politikel e amzer : strolladoù ha tud.

Kemer perzh en deus graet Bourdellez, e mod pe vod, ezel pe vignon, e strolladoù politikel 'zo. Àr-zu strolladoù ha politikerion Emsav Breizh e vo gwelet dreist-holl; a-wezhioù e vo anv a strolladoù politikel Bro-Frañs ivez. E tielfenniñ kement-se e vo klasket difoupiñ mennozhioù politikel Bourdellez. Dielfennet e vo an traoù ez-kronologel.

Kemeret en deus perzh ivez er luskad "Bleun-Brug" hag en Iliz pa oa ur beleg anezhañ. Ma n'eo ket ar strolladoù-se strolladoù politikel e vo gwelet neoazh hag-eñ n'eus ket elfennoù politikel da denno ag engouestl Bourdellez enne.

A Bourdellez ha "Kevredigezh Vroadel Breizh."

Skrivet en deus Bourdellez daou varzhoneg a oa bet embannet er *Bulletin annuel de l'Union Régionaliste Bretonne* pe " Kevredigezh Vroadel Breizh (KVB) " 1932 ha 1933 (Kendalc'hioù 1931 ha 1932)¹²¹, ar re gentañ hag ar re ziwec'h bet skrivet getañ en e vuhez a-bezh (ma ne daoler ket kont a droidigezhioù barzhonegoù a ray pelloc'h). Kemeret perzh en doa, e deroù bleadoù 1930, e

irlandaise et à faire connaître sa littérature et son drame dans le monde entier."

119 *Ibid.*: "Augusta Gregory était particulièrement habile à écrire des comédies. Sa pièce en un acte, *Spreading the News*, a été l'une des premières jouées au Abbey Theatre en 1904 après l'ouverture officielle du théâtre."

120 Get Ronan Huon an hani eo eo bet troet pezhioù-choari politikel da vat (a-du get broadelourion Bro-Iwerzhon) : *Al Loar o sevel* da skouer. *Tir Na N-Og*, n° 3 rummad nevez, trede bloavezh p. 10-23.

121 *Bulletin Annuel 1932 Kevredigezh Vroadel Breizh*, Kendalc'h Ar Faouët miz Eost 1931, p. 68-70 "Glac'har Breiz" ur barzhoneg skrivet e 1931 get Per Bourdellez a Servel e-kichen Lanuon (aet e oa getañ eil priz ar genstrivadeg barzhonegoù aozet get ar g/Kevredigezh-se er blead-se (meneget p. 17-18, displeget p. 60-61 get E. Ernault President ar juri).

Bulletin Annuel 1933 Kevredigezh Vroadel Breizh, Kendalc'h Sant-Nazer 1932, p. 55-56 "Er Road" ur barzhoneg get an Abad Per Bourdelles, Kloerdi Cesson (Sant-Brieg). (Aet e oa getañ eil priz ar c'henstrivadeg barzhoniezh renket get ar gKevredigezh-se er blezad-se).

kenstrivadegoù barzhonegoù brezhonek aozet get Emil Ernault¹²². N'em eus ket kavet e oa bet Bourdellez a-zalc'h doc'h ar gevredigezh-se.

Interesant eo neoazh merkiñ e lenne ar pezh a brodue ar gevredigezh-se e penn-kentañ ar blezadoù 1930. Ur gevridigezh bet krouet en XIX^{vet} kantved, a zo bet hendad an Emsav politikel breton, mirour he c'hostezenn, a-enep krenn ar sokialouriezh. D'an tu dehou eo bet lakaet neuze hag evit ar pezh a sell doc'h Breizh a-du get ar rannvroelourion.¹²³

Kavet eo bet, a-du-arall, e dielloù Bourdellez (goarnet get e ninez Yvette Meurou) ar levrig *La désertion de nos campagnes, ses principales causes*, "Rapport présenté au Congrès de la Fédération Régionaliste Française à Blois le 14-06-1930 par le Marquis de L'Estourbillon, Président de l'Union Régionaliste Bretonne"¹²⁴, 16 p., Imprimerie commerciale de Bretagne Rennes."

D'an 05 a viz Gouhere 1958 e rey Bourdellez ur prezeg à istor ha stad Kêr-Lannuon da geñver Kendalc'h an "Association Bretonne" (liammet get ar "gKVB") aozet e Lannuon : "L'action va continuer cette semaine par L'Association Bretonne (...), Lemoine¹²⁵ étant tombé malade l'Association Bretonne se réunit à Lannion absolument dans le noir : je me prépare activement à remplir tous les trous. Je vais peut-être avoir l'air d'accaparer le congrès mais du moins je dirai ce que je veux dire"¹²⁶. Goude bout lennet ar pennad-mañ e c'heller lâret e oa tost c'hoazh Bourdellez doc'h ar gevridigezh-se pe, d'an nebeutañ, doc'h tud é ober à he zro èl Pierre Lemoine. Danvez e brezeg a oa bet : displeg istor Kêr ha Bro Lannuon, lâret pegen truezus e oa stad ar vro-se e 1958 e-keñver an divroañ abaoe 1918 ha dreist-holl abaoe 1944, lâret a ra eo dav cheñch penn d'ar vazh, da skouer é stummañ tud yaouank à ar maez d'an teknikoù modern ar labour-douar. (Muioc'h a vo lâret diwezhatoc'h er labour-mañ, a-zivout Bourdellez ha kudennoù Bro Lannuon).

Merkiñ a ran ivez e komz Bourdellez a-zivout an "ober" : "l'action va continuer cette semaine." Gwelet e vo e skriv Bourdellez alies èl-se, doare ur stourmer, un emsaver getañ.

Modernekaat Breizh, a-du emañ Bourdellez get un hevelep mennozh, pal an « association Bretonne » eo a ivez hag a-gozh¹²⁷. Mennozhioù rannvroel ha katolik a oa get honnezh ha get ar re-

122 Émile Ernault (Émile Jean-Marie), (1852 – 1938) a oa ur c'helenner skol-veur, ur gouizieg brezhonegour hag ur yezhonour a studias ar c'hrennvrezhoneg. https://fr.wikipedia.org/wiki/%C3%89mile_Ernault

123 Hrevez an istorour Michel Nicolas, ispisialour Istor an Emsav Breizh, *Histoire de la revendication bretonne ou la revanche de la démocratie locale sur le 'démocratisme': des origines jusqu'aux années 1980, Coop Breizh, Spézet, 2007*, 1 vol. (391 p.-XLVIII p. de pl.) p. 50-51: ill. en noir et en coul., couv. ill. ; 24 cm ISBN: 9782843463129.

124 "Régis-Marie-Joseph de L'Estourbeillon de la Garnache, pe Régis de L'Estourbeillon pe Markiz an Estourbeillon a oa bet ganet d'an 10 a viz C'hwevrer 1858 e Naoned ha marvet e oa en e gastell en Avezeg, e-kichen Redon, d'ar 4 a viz Gwengolo 1946. Bez' e voe unan eus saverien Kevredigezh Vroadel Breizh, ha kannad evit ar Mor-Bihan etre 1898 ha 1919.(...) Goude bezañ bet ofiser en arme ur pennad, e teuas da vezañ kannad, en anv ar roueelourien, er Mor-Bihan. Dont a reas da vezañ unan e-mesk paotred an Emsav breizhek ha difenn a rae mennozhioù breizhek gant ar gomz pe ar bluenn. Lakaet e voe e penn Kevredigezh Vroadel Breizh e 1898 ha chom a reas en he fenn e-pad bloavezhioù, betek an Eil Brezel-bed.https://fr.wikipedia.org/wiki/R%C3%A9gis_de_L%27Estourbeillon

125 "Pierre Julien Yves Marie Lemoine, anvet ivez Pêr Lemoine pe Pêr Manac'h, a oa un tisavour ha stourmer breizhat. Ganet e oa bet d'ar 4 a viz Eost 1927 e Mèl-Karaz (Kerne) ha mont a reas d'an Anaon d'an 19 a viz Here 2023". [https://fr.wikipedia.org/wiki/Pierre_Lemoine_\(architecte\)](https://fr.wikipedia.org/wiki/Pierre_Lemoine_(architecte))

126 Lizher kaset get Bourdellez da Yves Briand (1913-1999), istorour Kêr-Lannuon d'an 01 a viz Gouhere 1958. NB : lizherioù kaset get Bourdellez da Yves Briand ha paperioù brell (pe danvez-lizherioù) lizherioù kaset get Briand da vBourdellez 'zo goarnet e levraoueg an 'Association pour la Recherche Sauvegarde des Sites Archéologiques du Trégor' pe 'ARSATT', Espace Sainte-Anne, 2 Rue de Kerampont, 22300 Lannuon (<https://arsat.info/>). An dra-mañ a dalv evit razh ar lizherioù etre an daou zen-mañ e vo kont anezhe er labour-mañ.

127 "Depuis l'origine, elle a pour objectif principal l'étude de la Bretagne en vue d'accroître le rayonnement de sa culture et le développement de son économie. Elle a été fondée en 1843 à Vannes par Jules Rieffel et Armand du

se e oa a-du Bourdellez ivez moarvat.¹²⁸ Paotred Roue Bro-Frañs a oa get ur bochad re ar "gKVB". Pas get Bourdellez, gwelet e vo pelloc'h ivez.

B Bourdellez ha "Strollad Broadel Breizh".

Moarvat e c'hellehe bet techet Bourdellez da gemer perzh er strollad politikel en doa an Aotrou Abad Perrot en e soñj krouiñ nemet e oa bet difennet doc'htoñ en gober get e eskob.¹²⁹

Krouet e oa bet ar "Strollad Broadel Breizh" e 1931. Bet divodet d'an 20 a viz Here 1939, daet ar-wel en-dro e-pad ar brezel. 300 ezel en doa e 1940¹³⁰. Setu mennozhioù pennañ ar strollad-se : ur vroad breton zo, goulenn a ra frankiz Breizh, klask a ra e vehe unanet razh ar Vretoned en ur stumm dibolitik, "na ruz na gwenn" eo e lukan, nemet e embann ar strollad-se emañ-eñ a-enep groñs doc'h ar gommunisted hag ar sosialism.^{131 132} Lakaet eo bet ar strollad-se en tu dehoù pellañ¹³³

¹³⁴

Ha Bourdellez en deus bet e gartenn er "SBB"? Kavet ' meus, d'am soñj, ur brouenn a gement-se : ur follenn distag roneotipet, kavet ar lec'hienn an "Institution de Documentation Bretonne" pe "IDBE"/ "Levraoueg niverel Breizhek hag Europeat", a 'zo he zitl : "Membres du Strollad Breizh"¹³⁵. E-barzh e kaver ur listenn 34 ezel, gwazed ha maouezed, en o zouez 15 beleg. Edan niverenn 2 ar listenn-se e lenner : "Abbé Bourdelles, Professeur Institution St Joseph, Lannion", ha tud anavet mat getañ en o zouez "Abbé Le Floc'h, Professeur Institution St Joseph Lannion" (niverenn 1) ha "Monsieur Toisier, Avocat Perros-Guirec" (niverenn 32) a oa hennañ ur migon da

Châtelier. Créée par un agronome et un historien, elle se proposait dès cette époque de promouvoir le progrès technique de l'agriculture, en l'accompagnant par la connaissance de l'histoire, des lettres et des arts ; elle y associait la défense des traditions et de la langue bretonne. "https://www.associationbretonne.bzh/

128 GEMIE, Sharif (history professor), *Bulletin d'histoire politique*. "La 'Question bretonne' et le nationalisme breton" Volume 21, Number 1, Fall 2012 : "il y a aussi différents courants régionalistes. On pense ici aux monarchistes de l'Association bretonne (créée en 1843, interdite en 1854, puis recréée en 1873) qui défend une Bretagne catholique comme rempart à une France trop moderniste et laïque."

129 "De leur côté, les autorités ecclésiastiques s'opposent dès les années 1920 à la montée des idées nationalistes au sein du clergé. L'évêque de Quimper, Adolphe Duparc, met ainsi en garde en 1926 les cadres du Bleun-Brug, l'abbé Madec et l'abbé Perrot, contre toute tentation nationaliste, et en 1927, ceux-ci doivent temporairement mettre fin à leurs rapprochement politique avec cette tendance. L'évêque de Quimper va jusqu'à prononcer l'excommunication des nationalistes bretons en 1940, et les prêtres de son diocèse ont alors ordre de refuser l'absolution aux membres du PNB. Déniel, Alain *Le Mouvement breton (1919-1945)*, Paris, Maspero, mars 1976, 451 p. (ISBN 978-2-7071-0826-5)

130 NICOLAS, Michel, *Histoire de la revendication bretonne : Des origines aux années 1980*, Spézet, Coop Breizh, juin 2007, 397 (ISBN 978-2-84346-312-9), p. 76 ha 80.

131 *Ibid.* p. 76-77-78.: "En 1931 politiquement, il affirme l'existence d'une nation bretonne, et de ce fait réclame l'indépendance de celle-ci. Se réclamant apolitique, réclame "l'union sacrée de tous les Bretons", exprime cependant un anticommunisme, et un anti-socialisme marqué."

132 *Ibid.*, 2007, p. 33. Setu penaos e tispleg Michel Nicolas kelennadurezh politikel ar strollad-se : "Une doctrine mettant en avant la nation, dans le cadre étatique comme non étatique". Selon lui, les personnes appartenant à cette tendance peuvent choisir de se présenter comme séparatistes ou indépendantistes, c'est-à-dire réclamant le droit à "toute nation à un état, et le cas échéant doit pouvoir se séparer pour en créer un". Il l'oppose ainsi au régionalisme qui lui vise à un "réaménagement administratif accordant une autonomie à l'échelon régional" (c'est-à-dire autonomiste), et au fédéralisme breton qui lui cherche à mettre en place une organisation fédérale du territoire".

133 Ar lec'hienn Wikipedia "Strollad Broadel Breizh" (1931-1944).

134 "Si le PNB d'avant-guerre développe des thèmes d'extrême-droite, il ne sera jamais une organisation nazie" Michel NICOLAS *Histoire du mouvement breton Emsav*, Syros, 1982, p. 84. ISBN 978-2-901968-63-4

135 "Membres du Strollad Breiz" <https://bibliotheque.idbe.bzh>, Groupements et sociétés Bretonne année 1935.

vBourdellez doc'h e nizez¹³⁶. Hrevez an dailh emañ ar listenn-se listenn izili "SBB" departamant Aodoù-an-Hanternoz¹³⁷ nemet ne vehe ket "Strollad Breizh " ha "Strollad Broadel Breizh" an hevelep tra. Ar listenn-se eo bet lakaet en un teuliad merket arnañ "1935".

A-du-arall e ouier get an istorour Christian Bougeard¹³⁸ e oa un dregontad izili oberiant er strollad-se e dibenn 1941 e pastell-vro Lannuon¹³⁹. Anv Bourdellez n'eo ket meneget getañ neoazh.

N'eus ket bet adkavet pennad ebet skrivet get Bourdellez evit ar "SBB", diàrbenn ar "SBB" naket. Komz a rey Bourdellez a-zivout "ar re Breiz Atao" (hep bout resisoc'h) e film Jean-Louis Le Tacon¹⁴⁰ hep o tamall, hep sevel a-du gete naket met é lâret: "graet o deus un dra bennak d'an nebeutañ" [evit Breizh] é c'houglevet e oa chomet ur bochad tud arall dioberiant.

Ur gerig e vo lâret amañ a-zivout ar "Parti Social Français"¹⁴¹ en deus displeget Bourdellez n'en doa fiziañs ebet er strollad politikel-se na bout en doa hennezh prometet e vehe kelennet ar brezhoneg ma gouniehe an dilennadegoù.¹⁴²

C Bourdellez e-pad ar Ac'huberezh.

136 Testeni Yvette Meurou niz Bourdellez / miz Genver 2024.

137 Na bout e kaver enni daou zen ag diavaez an departament-se (unan ag departamant ar Meuse hag unan-arall ag Ar Relek-Kerhuon).

138 Christian Bougeard (ganet e 1952), istorour, kelenner à an istor a-vremañ, skol-veur Brest.

139 E *Les Forces Politiques en Bretagne* BOUGEARD, Christian, Presses Universitaires de Rennes. Collection Histoire, 2011, p. 282, e tispleg Bougeard e oa ar PNB renet a-choude miz Kerzu 1940 get Raymond Delaporte (ur c'hristen anezhañ, bet president ar Bleun-Brug adal 1938), e vo ar strollad-se e kreiz e vrud e 1942. Hervez un enklask meneget getañ e vehe bet un hanter-kant bennak a izili anezhañ e pastell-vro Lannuon e miz Kerzu 1941, en o zouez Marius Toisier, breutaer, mignon Bourdellez.

140 *An Abad Per Bourdelles, an emsaver (L' Abbé Per Bourdelles, l'éveilleur)*, LE TACON, Jean-Louis, 1987 / France / 26 mn, vidéo / Couleur, <https://www.cinematheque-bretagne.bzh/>

141 "Le Parti social français (PSF) est un parti politique français de droite conservatrice à tendance nationaliste fondé le 6 juillet 1936 à la suite de la dissolution des Croix-de-Feu, par son chef le lieutenant-colonel François de La Rocque [ganet en Oriant]. Le parti n'est pas reconstitué en tant que tel à la Libération. Le PSF, même s'il eut peu de représentants directement élus, est le premier parti de masse de la droite française et l'un des mouvements qui rassemble le plus de membres dans l'ensemble de l'histoire des partis politiques français. Il défend une idéologie chrétienne, conservatrice et patriotique, et met aussi en place des organisations d'entraide à but social. https://fr.wikipedia.org/wiki/Parti_social_fran%C3%A7ais

142 "Dans son journal *La Volonté Bretonne* paraissant à Brest [le Parti social français] fait des promesses sur l'enseignement du breton. N'eus get an dra-se, a skriv Bourdellez, nemet un droidell evit kaout tud da vouezhiñ a-du getañ, "c'est la première fois que ce parti fait ce type de manoeuvre c'est là donc une nouveauté probablement due à l'influence de la campagne Ar Brezhoneg er skol." Lizher Bourdellez da Yves Briand 18 a viz C'hwevrer 1937.

Petra en deus graet, petra en deus skrivet Bourdellez e-pad ar maread-amzer-se ? Kroget e oa bet ar brezel d'an 9 a viz Gwenholon 1939. Bourdellez a skriv un tammig goude (21 a viz An Azvent 1939) d' e vignon Briand¹⁴³ : "Que soit l'année 1940 soit pacifique et féconde "¹⁴⁴

Er skolaj Sant-Joseb Lannuon e oa chomet é kelenn e-pad ar brezel a-bezh pa vanke ur bochad kelennerien¹⁴⁵ ha p'o doa an Alamaned rekizisionet ur lodenn ag ar skolaj-se evite. É lenn ur lizher arall kaset getañ da vBriand d'an 10 a viz Genver 1941 e anaver e erlerc'h Bourdellez belean e parrouziou'zo¹⁴⁶.

Kemer a rey perzh, a-du-arall, e labour pare skrivagnerion a resisao, sañset, reolennoù ar skritur nevez "peurunvan" e 1941¹⁴⁷. Kavet eo bet ivez e oa bet skignet gwerziou relijiel, savet get Bourdellez, àr wagennoù skingomz Roazon Breiz¹⁴⁸ ¹⁴⁹ d'ar 04 a viz Imbrilh 1942.

A 1940 da 1944 e vo embannet un nebeut testennoù get Bourdellez, pevar e 1940, daou e 1941, unan e 1942 hag unan e 1943, neuze 8 pennad etretout.¹⁵⁰ Peseurt re? Teir zroidigezh lennegel

143 « Yves Briand (1913-1999) est un historien et archiviste paléographe du XX siècle, historien reconnu de Lannion et du Trégor. Après des études littéraires classiques, il prépare le concours d'entrée à l'École des Chartres, dont il réussit brillamment l'épreuve écrite, mais il ne peut passer les épreuves orales en raison d'un bégaiement prononcé. Il termine sa formation professionnelle à l'Institut de Recherche et d'Histoire des Textes (IRHT) à Paris, où il étudie avec des chartistes, et travaille ensuite aux Archives Nationales à Paris. Ses travaux continuent d'être utilisés au XXIe siècle, car ils ont été faits à partir du terrain et des sources d'archives, pas toujours faciles d'accès aux étudiants et aux chercheurs. » Mammenn:https://everybodywiki.com/Yves_Briand. (NB : Ha just a-walc'h e weler, é lenn meur a lizher eskemmet get Bourdellez ha Briand, e klaske Bourdellez dielloù kozh e Bro Lannuon, da skouer e presbitalioù" a zegase àr-lerc'h da vBriand a oa é chom e Paris.)

144 Lizher Bourdellez da Briand 21 12 1939.

145 E *La Nouvelle Revue de Bretagne (NRB)*, Volume 2, septembre-octobre 1948, p.320 e lenner eo bet Bourdellez "Accaparé [e-pad ar brezel] par la nécessité de suppléer les professeurs prisonniers ou morts". NB : n'eo ket sinet ar pennad-mañ met skrivet eo bet, hañval a vehe, get Adolphe Le Goaziou en doa savet hag a rene ar gelaouenn-se).

146 "actuellement à la paroisse de Loguivy [Plougras]".

147 *La Bretagne*, n° 95, juillet 1941 : "Au cours d'une entrevue qui réunissait à Rennes au siège de 'La Bretagne' le 08 juillet 1941 les directeurs ou représentants des différents périodiques paraissant actuellement en langue bretonne, ainsi que quelques grammairiens, il a été décidé de procéder à l'unification totale des quatre dialectes du breton écrit . L'assemblée s'est mise d'accord unanimement sur un certain nombre de principes généraux. **Un comité restreint a été désigné pour procéder à l'étude plus approfondie de la réforme adoptée**, réforme qui reste provisoirement facultative. Font partie de ce Comité : MM. Perrot, Loeiz Herrieu, Mary, Le Marouillé, Le Floc'h, **Bourdellès**, F. Uguen, Abeozen, Y. le Goff, Kenan Kongar, R. Hemon et G. Berthou en qualité de secrétaire. Un pas décisif vient d'être accompli . *La Bretagne* est heureuse d'avoir pu matériellement faciliter la réunion de hautes personnalités bretonnes qui viennent de donner une nouvelle preuve de leur patriotisme breton en se mettant d'accord sur une réforme essentielle. C'est un évènement historique qui vient de s'accomplir." "Sañset" m'eus skrivet. Marse n'emañ ket ar wirionez get ar pennad-mañ pa oa prest ar 'peurunvan' er bleadoù 1930 dija (nemet ne oa ket bet degemeret mat get Roparz Hemon d'ar mare-se). Marse emañ gwir pa lenner ur lizher skrivet get Armañs ar c'halvez (lizher da vBourdellez kaset d'an 22 a viz Kerzu 1966 : "Gant kalz a blijadur em eus lennet ho labour [*Ar Pevar Mab Emon*] ha keuz bras am eus e vefe chomet kement a faziou ennañ: faziou reizhskrivadur peurvuiañ, dreist-holl Z/H, ankouazet pe draoukimplijet. **Fentus eo a-berzh unan eus diazezerien doare-skrivañ 1941!**"

148 Er gelaouenn *Feiz ha Breiz* niverennoù 3-4 Meurzh Ebril 1942, 72^{vet} bloaz, p.133 e lenner: "Ar stourm etre ar marv hag ar vuhez" Prezegenn graet gant an Aotrou Perrot skingomzet gant Roazon Breiz da Zadorn Fask [04 a viz Imbrilh 1942], a-raok ar brezegenn, Mona Pesquer a ganas Kantik ar Basion, ha, war-lerc'h, Strollad Kanerien ha Sonerien Roazon Breiz a zisklerias eun oratorio nevez flamm savet gant Jef Penven war gwerziou an **Ao. Bourdelles** en e "Basion an Aotrou Krist."

149 Ronan Calvez, kelenner brezhoneg e Skol-Veur Brest, a skriv, e *La radio en langue bretonne*, CRCB, PUR, 2000, p. 127 et 141, e oa bet adal an 01 a viz Du 1940 betek miz Imbrilh 1944 abadennoù e galleg hag e brezhoneg àr "Radio Rennes-Bretagne".

150 *Feiz ha Breiz*, Mae-Mezheven 1940, n° 5-6, p.141-144."Arz Breiz e servij Doue" get Per Bourdelles beleg;

Studi hag Ober, hañv 1940, n° 11, p. 2-11. "Breiz e 1788" (lodenn gentañ: an dud), get Maen-Tan;

Studi hag Ober, Nedeleg 1940, n° 12, p. 9-21. "Ar reder bro", troidigezh ur burzud get Lady Gregory diàr ar saozneg e brezhoneg get Maen-Tan;

(daou bezh-c'hoari diàr Augusta Gregory ha daou bennad get Jean-Pierre Vinay a-zivout lennegez Bro Gembre ha kani Kerne-Veur) ha tri fennad 'zo relijiel o danvez. Danvez istorel ha politikel a vo kavet e daou bennad : "Breiz e 1788" embannet e 1940 ha "Jean V" e 1942 .

Embannet eo bet an eizh pennad er c'helaouennoù-mañ : *Feiz ha Breiz (I)*¹⁵¹, *Studi hag Ober (5)*¹⁵², *SAV (I)*¹⁵³ ha *Gwalarn (I)*¹⁵⁴.

Enne roud ebet get Bourdellez ag ar brezel, an Alamaned, an Ac'huberezh, ar Rezistañs, ar C'henlabour get an Alamaned, komprenabl eo. N'eo ket neptu àr an dachenn bolitikel neoazh an daou bennad istorel embannet e-pad an Ac'huberezh. Ar pennad "Yann V" a zispleg e oa bet hennezh un duk en doa graet ur bochad traoù mad evit Breizh a oa honnezh neuze en he frankiz¹⁵⁵. É lenn ar pennad "Breiz e 1788" e komprenet a-benn mennozh pennañ Bourdellez a dalv kement-mañ : **ur gwalleur evit Breizh eo bet an Dispac'h Bras Bro-Frañs** (gwelet e vo hiroc'h àr ar poent-se er lodenn III).

Didrouz e chomas Bourdellez àr an dachenn publik e-pad ar Ac'huberezh a-hend-arall. Àr ur gartenn-bost kaset getañ d'e vignon Briand e 1942¹⁵⁶ e c'houlenne get hennezh bout : "son interprète

Strollad Ar Vrezhonegerien (pe *SAV*), 1940, n° 18, p. 46-67. "Ar vrud a red...", troidigezh ur pezh-c'hoari get Lady Gregory diàr ar saozneg e brezhoneg, Maen-Tan;

Studi hag Ober, Pask 1941, n° 11, p. 4-19, "Hent ar Basion, Maen-Tan;

Studi hag Ober, Nedeleg 1941, n° 16, p. 24-26. "Stad ar C'hornog en amzer Sant German" Maen-Tan.

Studi hag Ober, diskar-amzer 1942, n° 19, p. 115-126. "Yann V", get P. Bourdellez (prezegenn displeget en Iliz-veur Landreger, geñver Bleun-Brug 1942 d'an 30 a viz Eost 1942);

Gwalarn, Genver-C'hwevrer 1943, n° 156/157, p. 34-74 "Istor berr al lennegezh kembraek"; p. 75-77 "Lennegezh Bro Gerne Veur" (troidigezhioù get "Per Bourdellez diàr Jean-Pierre Vinay).

151 Ar pennad nemetañ sinet Bourdellez er gelaouenn-se an hani eo. (Ar gelaouenn-se a zaas er-maez adal 1865 betek 1884 ha neuze adal 1900 betek 1944 /Kentañ gelaouenn sizhuniek e brezhoneg penn-da-benn eo bet.)

152 *Studi hag Ober* ur gelaouenn gatolik savet get Loeiz Ar Floc'h (alias Maodez Glandour)

153 Ar gelaouenn *SAV* a zaas er-maez bep tri miz adal 1936. Savet e oa bet get "broadelourien", pe "tud kar-o-bro diantao" (Favereau, Lennegezh ar brezhoneg en XX^{vet} kantved 1919-1944, Skol Vreizh, 2003, .520-521.) a oa o chom hag o labourat e Paris pe tro-àr-dro. tri den yaouank a gase *SAV* : Andreo Daniel un Tregeriad a Lannuon ijinour-chimiour e Argenteuil, Albert Gwilhou un Tregeriad ivez kostez Penn-ar-Bed, ijinour-tredan e Paris hag Herve Maze ijinour-chimiour e Levallois-Perret. "Brezhonegerien emskiantek" hvezvez Hervé Conan (*Al Liamm* n°36). O fal, a gendalc'h Favereau, a oa "pourchas danvez a bep seurt" evit ar vrezhonegerien (ar re a ouie lenn ar yezh da vihanañ atav)". E 1936 e oa Bourdellez e Paris é studial an Istor hag an Douaroniezh er Sorbonne (é chom e Chatillon-sous-Bagneux). Sur a- walc'h en deus kejet get re a gase *SAV* e Paris. Setu perak e kaver daou bennad skrivet getañ, er gelaouenn-se (1936 ha 1940).

154 "Revue littéraire fondée en février 1925 par Roparz Hemon et Olier Mordrel." *Emsav Dictionnaire critique, historique et biographique*, CADIOU, Georges, COOP BREIZH, 2013 , p. 189.

155 Ar pennad "Yann V" a oa bet lâret dirak an dud e Landreger d'an 30 a viz Eost 1942 da geñver gouel ar Bleun-Brug.

156 Lizher kaset get Bourdellez da Briand d'an 19 a viz Genver 1942.

auprès de Fouéré [Yann Fouéré¹⁵⁷] et de tous les amis" : "Que cette année voit se réaliser les grands espoirs qui sont nés en Bretagne, qu'elle voit la paix et le retour des prisonniers".

N'eo ket Bourdellez é kenkabourat get an Alamaned tamm ebet e-pad an Ac'huberezh met e-stok tud o deus klasket tenniñ splot ag an Ac'huberezh evit Breizh hag ar brezhoneg (Yann Fouéré, Roparz Hemon da skouer).

E-pad an tri blezad goude ar brezel e chomo Bourdellez mut : ne embanno pennad ebet a-raok 1948. Met setu ar CELIB é tonet kent pell .

D A zerou ar bleadoù 1950 betek 1965 : a-du get ar "CELIB" hag ar "MOB".

Amañ e vo klasket hag en doa kemeret perzh Bourdellez mod-pe-vod er "CELIB"¹⁵⁸ hag er "MOB"¹⁵⁹ ha perak. Met a-raok eo ret komz diàr-benn ar pezh en deus lakaet diaes Bourdellez, en deus eñ lakaet da bleidiñ get kudennoù armerzh ha kevridigezh Breizh da lâret eo : kudenn vras an divroadeg.

1° Kudenn vras divroadeg ar vBretoned : Breizh é vont d'an argoll.

Dielfenn a ra Bourdellez divroadeg yoc'hek ar vBretoned a-c'houde an Dieubidigezh. Yann Poupinot¹⁶⁰ a zegas dezhañ statistikoù a-zivout pet ha peseurt a vBretoned a zo é chom e Kêr Colombes e 1944¹⁶¹ da skouer. An divroadeg-se 'zo mantrus he dilerc'hioù a gav da vBourdellez. Mantrus àr veur a zachenn : ekonomikel, sokial, sevenadurel, relijiel.

Displeg a ra e soñj àr kement-se en ur brezeg bet graet getañ e Rostren d'an 26 a viz Mae 1957 dirak kelennerien skolioù kristen¹⁶². Pelloc'h e 1959 e vo graet getañ div brezegenn **a-zivout "an divroañ"** ha "diskoulmoù ar gudenn-se" e-pad staj Kamp Etrekeltieg Ar Vrezhonegerien

157 Yann Fouéré, a oa bet is-prefed berrbad pastel-vro Montroulez e fin ar blezad 1940, a rey àr-dro ar gazetenn *La Bretagne* e 1941, a vo sekretour meur ar "c'hComité consultatif de Bretagne" goude bout bet anvet d'ar garg-se get Prefed Rannvro Roazhon adal 1942 betek 1944. Fouéré a zegaso koun ag Bourdellez en e levr : *Histoire d'un breton (1). La patrie interdite*. Yann Fouéré. Autobiographie, France Empire GF, 1987, 459 p., é lâret en doa-eñ Fouéré graet : "Quelques visites aux militants bretons de la Région que je connaissais : James Bouillé, ancien Président du Bleun-Brug, l'abbé Bourdellès, professeur à Saint-Joseph, **homme à l'esprit clair et aux convictions solides**, mon vieil ami Marius Le Toisier, qui avait ouvert sur la place du centre un cabinet d'avocat, Abel Omnès et quelques autres » (p. 191-92). Skriv a ra Fouéré pelloc'h (*ibid.*p. 296) bout degemeret **Bourdellez** d'e zro e Louaneg e miz Here 1942, **Bourdellez** a oa "**bepred kennerzhus e weladennoù**".

158 "Comité d'études et de Liaison des Intérêts Bretons."

159 "Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne."

160 "Jean Poupinot, ou encore Yann (1921 Colombes - 1976 Naoned) géographe. Il est membre de l'Institut Celtique en 1941. Il crée avec Yann Poupinot Fouéré et Ronan Goarant le MOB Mouvement pour L'organisation de la Bretagne en 1957". https://fr.wikipedia.org/wiki/Jean_Poupinot

161 "L'émigration bretonne à Colombes-Contribution à l'étude des mouvements de la population bretonne contemporaine", teuliad savet get Yann POUPINOT 'Dessinateur-Géographe"ha kaset getañ da vBourdellez. Un teuliad statistikoù diàrbenn Bretoned stalied e Ker Colombes e 1944 (18 pajenn) : titouroù a-zivout niver a vBretoned 'zo é chom er gêr-se, peseurt micherioù 'zo gete ha kement'zo.

162 "Le Bleun-Brug sa doctrine, son esprit, ses combats", prezeg e galleg get an Aotrou Abad Pierre Bourdelles, Gouel Bleun-Brug 1957, Rostren: ur pennad 11 pajenn hag ur pennad arall, tost-tre d'an hani kentañ, nemet eh eus 13 pajenn ennañ. Tri chabistr a ya d'ober ar pennadoù-se:"un siècle tous les dix ans"; "populo sancto Dei, pour le saint peuple de Dieu"; "un chapelet qui se brise") <https://bibliotheque.idbe.bzh/document.php?id=le-bleun-brug-sa-doctrine-son-esprit-ses-combats-9241&l=fr>

(KEAV) 1959 e Rostren¹⁶³. Pelloc'h c'hoazh e 1962 : ur brezegenn bet graet getañ d'ar 14 a viz Eost ar sujed "Stad ha Boblañs" e-pad staj KEAV dalc'het e Sant Nicolaz-ar-Pelem¹⁶⁴. Prezegennoù bet graet e-pad stajoù KEAV n'int ket bet adkavet. Met e weler splann e oa an divroadeg kudenn bennañ Breizh evit Bourdellez.

Setu amañ da heul un diverrañ ag danvez pennad 1957 : Aet eo kuit dija ur bochad bretoned er-maez ag ar vro. Meneg a ra Bourdellez disoc'hoù ur studiadenn bet graet get Edouard **Ollivro**, kelenner, a-zivout **divroadeg tud departamant an Hanternoz** hed-ha-hed ar 50 blez kent; da lâret eo abaoe penn-kentañ an XX^{vet} kantved: 106 000 den divroet e-pad 50 blezad, 54 000 e-pad an 40 blez kentañ, 52 000 e-pad an 10 diwezhañ. Fonnusaat ar ra an traoù neuze. Meneg a ra ivez ur studiadenn bet graet get an "IRAM" ("Institut de Recherche sur la Misère dans le Monde"¹⁶⁵) a lâret honnezh e kuita Breizh gozik 25 000 a dud bep blez. Ha gwashoc'h 'vo pa n'eo ket achu c'hoazh, eme Bourdellez e 1957, pell aze: "Il serait enfantin de croire que l'accélération de l'histoire contemporaine qui nous fait vivre un siècle tous les dix ans va désormais se freiner. Les jeunes bretons sont obligés d'aller se battre en Algérie. La France est dans la situation bien connue désormais de "Paris et le désert français"¹⁶⁶. **La Bretagne se vide à une vitesse vertigineuse**. Les études du CELIB signalent le danger des années d'après 1960: arrivée sur le marché du travail de "tous les jeunes nés après la guerre". Breizh a 'zo daet da vout mantrus e stad: **"La Bretagne est déchristianisée, dévirilisée, ruinée, vidée...C'est un réservoir où l'on puise sans compter"**¹⁶⁷.

Cheñchamentoù fonnus 'zo e Breizh a ya an traoù falloc'h-fallañ geti. Diloasket eo douaroù a veze gouniet e penn-kentañ ar c'hantved, dilezet ar lannegi a vehe moian plantiñ gwez àrne. Keuzius eo gwelet ne vez biskoazh komzet diàr stad Breizh d'ar vBretoned a gav da vBourdellez pa vez komzet bepred dezhe a-zivout ar re-varv e Bro Aljeria, brezel Indez-Sina, plijadurioù ha pinvidigezhioù Paris : "Les champs où j'ai coupé le blé sont maintenant des landes. Je ne puis pas les revoir sans imaginer l'épaisseur des couches de céréales, de légumes, de fourrages que cela ferait si l'on entassait entre les talus de chaque champ toutes les récoltes qui ont mûri depuis **le jour où les premiers Bretons, il y a 1 500 ans, ont débarqué** sur cette plage, là, en bordure des emblaves (...) Et maintenant ces champs ne donnent plus rien(...) **les Bretons sont partis d'ici, presque tous** (...). Il me faudrait lire bien des traités de psycho-sociologie pour apprendre tout ce que m'a appris le spectacle de ce **cancer** qui ronge la vie d'un peuple, de cette **gangrène** qui lui pourrit le corps et l'âme. Églises en ruines, champs non cultivés, landes abandonnées, dépopulation massive, désert des esprits qui n'entendent parler que des plaisirs de Paris, des richesses de Paris, de la guerre d'Indochine, des morts d'Algérie... JAMAIS DE LA BRETAGNE. (...) L'entonnoir fonctionne terriblement chez nous, et les émigrants partent, partent, partent (...)."168

Daou blez àr-lerc'h e skrivo ar sosiologour Henri Mendras (1927-2003)¹⁶⁹ : "L'exode rural a vidé la plupart des petites communes de la majorité de leur population (...) elles ne sont plus

163 Roudoù ar prezegennoù-mañ 'zo bet kavet er gelaouenn *Al Liamm* 1959, p.313.

164 Hrevez ar gelaouenn *Al Liamm* n°93 1962.

165 N'em eus ket kavet roud ebet ag an ensavadur-se.

166 Daveiñ a ra Bourdellez da levr brudet Jean-François GRAVIER (1915- 2005) *Paris et le désert français* bet embannet e 1947 get Le Portulan Paris, 414 p.). Ur levr douaroniezh sokial a zispleg stad Bro C'hall goude an eil brezel bed : pinvidigezhioù e-leizh e Paris ha tro-àr-dro da bParis p'emañ peurrest ar vro é tinerzhiñ.

167 Bourdellez, 1957, "Le Bleun-Brug sa doctrine, son esprit, ses combats."

168 *Ibid.*

aujourd'hui [1959] capables de faire vivre ou même de justifier l'existence de leurs institutions traditionnelles : mairie, église, école... Dans de nombreuses régions le village n'est plus une cellule sociale vivante."

E 1976 e skrivo **Mendras** kement-mañ c'hoazh¹⁷⁰: "Tous les observateurs du XIX^{ème} et XX^{ème} ont été émus par des maisons qui se vidaient et tombaient en ruine, les champs retournés à la friche, les jeunes qui partaient, (...) les forges éteintes, etc. Le mouvement était si massif qu'il s'imposait à l'observateur, et ses conséquences si déplorables pour la vie villageoise qu'**il était impossible de ne pas s'en scandaliser**. Toute l'organisation et l'activité de la société rustique étaient remises en question par cette **véritable hémorragie qui vidait les campagnes de leur peuple** et notamment **de leur jeunesse**.(...) Devant une église qui se vide, une clientèle qui fond et des électeurs qui disparaissent, il est naturel qu' un curé, un notaire (ou un commerçant) et un député ressentent quelque tristesse. Perdre ses troupes n'est pas exaltant pour un chef, quel qu'il soit."¹⁷¹

Setu skridoù ne vehe ket bet **souezhet Bourdellez** o lenn ken e tassionont get ar pezh a lâre-ñ e 1957 àr sujed disoc'hoù an divroadeg àr gevredigezh Breizh. Mendras a gomz diàrbenn stad Bro Frañs àr ar maez a-bezh ha n'eo ket diàrbenn stad Breizh hepken é lâret "on assiste donc réellement à un **remplacement d'une société par une autre**. (...) **Les sociétés rurales perdent leur autonomie de structure et de civilisation**. Il n'y a plus rien de commun entre le genre de vie, les mentalités et les croyances des sociétés paysannes traditionnelles et les "cultures" que sont en train de développer les nouvelles classes rurales."¹⁷².Aze emañ an dalc'h evit Bourdellez just a-walc'h : ur bed 'zo é vont da get buan-tre, bed brezhonegerien, kristenion, labourerion-douar Breizh. Breizh 'zo é vonet d'an argoll.

Divroadeg tud diàr ar maez davet kerioù bras a ya get distrujiñ ar gevredigezh kozh a oa àr ar maez e Breizh : "Le transfert en ville de populations rurales à une époque d'industrialisation rapide, est en même temps le passage d'une civilisation paysanne traditionnelle à une civilisation industrielle technicienne et urbanisée."¹⁷³

Dav ober evit ne ey ket seurt planedenn da Vreizh. Neuze eo dav sevel a-enep an divroadeg-se evit saveteiñ ar yezh (ar brezhoneg), ar feiz (kristen e Breizh), pobl vBreizh hag evit lakaat endro ar vro-se da vont àr raok. Setu mennozhioù Bourdellez. Met penaos ha get piv? Àr-zu an dachenn bolitikel é kemero perzh er "CELIB", er "MOB", àr-zu tachenn ar skol e kelenno en un doare "dishañval" hag e krouio ar "GEES"¹⁷⁴, àr dachenn relijiel é klasko cheñch an traoù e-diabarzh an Iliz.

169 *L'économie agricole française 1938-1958*.(Ouvrage collectif) "L'évolution sociale" pennad get Henri Mendras, "Numéro spécial d' Economie Rurale" n° 39-40 1959 p. 153-159.
https://www.persee.fr/issue/ecoru_0013-0559_1959_num_39_1

170 *Sociétés paysannes, éléments pour une théorie de la paysannerie*, Henri Mendras 1976 Armand Colin -Collection U, 238 p., chapitre 8 p.158.

171 *Ibid.*, p. 158.

172 *Ibid.*, p. 155.

173 *Ibid.*, p. 141.

174 "Groupes d'Etudes Economiques et Sociales".

2° A-du get ar "CELIB".

Ezel ar "CELIB" a oa bet hrevez ar pezh en deus lâret din Jean-Yves Meuric (bet skoliad da vBourdellez ha chomet tost dezhañ goude) aterset geniñ d'an 11 a viz Gwenholon 2024.

Ar "CELIB" pe "Comité de Liaison des Intérêts Bretons" petra eo hennezh? Setu berr-ha berr ar pezh a zispleg Fabrice Marzin e 2016¹⁷⁵ : **ganet ar "CELIB" e 1950**. Ennañ e oa gozig tout ar pennoù bras politikel, ekonomikel, sokial ha sevenadurel Breizh an amzer-se. **Anavet e vo ar "CELIB" ez-ofisiel get stad Bro-Frañs e 1955**, hag eñ an hani eo a savas ar **"Plan Breton" e 1952**, neuze raktres ar "Loi-Programme" pe raktres **"lezenn-stur" evit Breizh e 1961**.

Lionel Henry a skriv¹⁷⁶ e oa a-du dre-vras emsaverien Breizh get spered a oa kani ar "CELIB" pa glasse hennezh unaniñ ar Vretoned evit mad Breizh. Ma oa chomet lod anezhe mut etre 1945 ha 1950 e welad meur anezhe é tistroiñ er jeu politikel dre ar "CELIB" (Joseph Martray da skouer) just a-walc'h ha pelloc'h dre ar "MOB". En o zouez e vo kavet Bourdellez a glasko neuze gober ar un dro ar an dachenn sevenadurel hag ar **an dachenn ekonomikel/politikel**.

An eil tachenn-mañ **zo un dra nevez evit Bourdellez** dre ma n'en doa pledet betek neuze nemet get traoù sevenadurel, lennegel, istorel ha relijiel. Gelliñ a reer lâret a-du get an istorour Jean-Jacques Monnier eh eus un troc'h amañ e buhez hag e engouestloù Bourdellez : "Il se produit alors chez Pierre Bourdellès une véritable mutation, avec la conscience de la gravité de la situation de la Bretagne et de l'émigration forcée des jeunes. Il se tourne vers la géographie humaine, la démographie, l'économie, il se lance à corps perdu dans l'action pour le développement pour éviter à la Bretagne le déclin démographique de la Creuse ou de la Lozère."¹⁷⁷. Yann Talbot¹⁷⁸ a lâar kement all: " War-dro ar bloavezhioù 1955 e kemmas e vuhez, pa zeuas an Tad Jozef Lebret, dominikad, breizhad eus Sant-Maloù d'ober enklaskoù ha prezegennoù e korn-bro Lannuon. Betek neuze n'en devoa ket pledet Per

175 MARZIN, Fabrice, « Le CELIB (Comité d'études et de liaison des intérêts bretons) », Bécédia, ISSN 2968-2576, lakaet en linenn d'ar 16/11/2016. Permalien: <https://bcd.bzh/becedia/fr/le-celib-comite-d-etudes-et-de-liaison-des-interets-bretons>: "Le CELIB est un organisme regroupant à partir de 1950 des élites politiques, socio-économiques et culturelles de la Bretagne. Sous la direction de René Pleven et de Joseph Martray, il promeut le développement régional et s'impose rapidement comme l'interlocuteur privilégié de l'État dans le cadre de la politique d'aménagement du territoire (...) **créé le 22 juillet 1950** à Quimper. Fondateur et secrétaire général du comité, Joseph Martray est un militant du mouvement breton. Conscient des divisions et des limites de l'action des différents organismes constituant l'Emsav et du discrédit qui frappe celui-ci à la Libération, il élabore une nouvelle stratégie visant à faire reconnaître les intérêts spécifiques d'un "peuple breton" (...). Il est convaincu de la nécessité de regrouper les forces vives de la région autour d'un néo-régionalisme breton. Le CELIB tente donc de rassembler les élites politiques de toute obédience à l'exclusion des communistes, les élites socio-économiques et les élites culturelles issues des grandes associations bretonnes fondées depuis la fin du XIXe siècle. Le succès rapide du CELIB doit beaucoup à l'énergie et à la perspicacité de Martray mais aussi à la personnalité éminente de son président, René Pleven. (...) Le CELIB (...) promeut un développement régional à travers: la modernisation des structures agricoles, le développement industriel et touristique, ou encore l'amélioration des infrastructures de transport.(...) Sous l'impulsion d'un géographe de l'université de Rennes, Michel Phlipponneau, le CELIB tente de coordonner et de structurer les demandes des milieux professionnels et des élus bretons dans le cadre de documents de planification régionale comme **le Plan breton en 1952** ou la **loi-programme pour la Bretagne en 1961**. Le CELIB coconstruit alors avec les représentants de l'État les documents prospectifs et les actions concrètes devant conduire à un développement régional soutenu afin de freiner les déséquilibres régionaux identifiés en 1947 par Jean-François Gravier dans son livre, *Paris et le désert français*.(...) L'action du CELIB débouche sur quelques succès incontestables pour la Bretagne. Ainsi, en 1956, la Bretagne est la première région dotée d'un Programme d'action régionale largement inspiré par le Plan breton (de 52)."

176 HENRY, Lionel. *Le Retour du Mouvement Breton après 1945 à travers le journal L'Avenir de la Bretagne*, Yoran Embanner. 2003, 162p. ISBN-10 2914855052

177 MONNIER, Jean-Jacques. "Pierre Bourdellès 1907-1989" e *Les Nouvelles de Lannion*, 1995, n° 47.

178 Skrivagner brezhonek ha beleg katolik.

Bourdellez gant kudennoù an armerzh hag ar gevidigezh. Troet oa e spered muioc'h war al lennegezh pe an istor. Met sebezet ha batet pa daolas evezh ouzh krommennoù ar boblañs e Bro-Dreger : an diboblañ oc'h ober e reuz, ar feur genel o vont d'an traoñ, an divroañ o washaat ha Breizh o koll he yaouankizoù hag **he nerzh**.¹⁷⁹ **Adal ar bleadoù 1955** e vo gwelet Bourdellez amañ hag ahont, ur wezh an amzer, kostez tud ha strolladoù zo, é c'hober. N'eo ket mui trawalc'h evitañ bout beleg ha kelenner. Afer en deus gober muioc'h. **Gwall vall eo, d'e soñj, mont da stourmer evit lakaat an dud d'emoueziñ doc'h stad truezhus emañ Breizh ennañ.**

Gwelomp da gentañ petra en deus graet get ar "CELIB". Klasket 'meus roudoù darempredoù Bourdellez get ar "CELIB. Setu ar pezh am eus kavet .

En ur lizher kaset get Bourdellez da vBriand d'ar 04 a viz Even **1955** e lenner: "Vous savez que je consacre le mois de juillet à **un rapport sur :- la nécessité et la possibilité de développer la vie économique en Bretagne et stopper l'émigration, - la nécessité première de rendre aux Bretons leur fierté et leur culture propres (littéraire, artistique, etc.)** pour obtenir quelques résultats.¹⁸⁰ À ce propos pouvez-vous me procurer le dernier Plan économique Français ? (se trouve sans doute au Journal Officiel). Je garde en résumé pour ce rapport un extrait de *La Croix* d'hier à propos de la **Sicile** : "Dotée de l'**autonomie en 1946**¹⁸¹ la grande île méditerranéenne s'est comme réveillée d'un long sommeil. **En 8 ans le gouvernement régional a plus fait pour l'île que le gouvernement central pendant 60 ans**, on confond trop souvent l'**uniformité administrative** avec l'**unité nationale** et la **centralisation bureaucratique** avec le **patriotisme**".

Briand a responto dezhañ d'an 10 a viz Even, kement-mañ : "En ce qui concerne votre rapport je crois qu'il serait très utile d'entrer en relation avec M. Martray, secrétaire général du CELIB (Comité d'Etudes et de Liaison des Intérêts Bretons) place de Rennes, Paris qui est pour moi un ami et pour nous un de « nos amis ». Ne ouier ket hag e oa aet Bourdellez e darempred get Martray d'ar mare-se ha n'eo ket bet adkavet an danevell en doa Bourdellez à ar stern e miz Gouhere 1955 met daou vlez bennak goude e tisklêrio Bourdellez, da geñver gouel ar "Bleun-Brug" e Rostren, neuze d'an 26 a viz Mae 1957 : "La date la plus importante de l'histoire de la Bretagne, depuis le 04 août 1789, c'est ce jour de décembre 1955 où le CELIB (groupant 42 parlementaires bretons, les conseils généraux, 518 municipalités, les plus grandes villes, les chambres de commerce et d'agriculture, les syndicats, les banques, les étudiants, les mouvements culturels et folkloriques etc. est allé demandé au gouvernement de déclarer la Bretagne "**zone critique**"¹⁸². Ne ouier ket naket hag e oa bet Bourdellez ezel kengor-mañ-kengor ar "CELIB". Evit gouiet hiroc'h e

179 TALBOT, Yann "Per Bourdellez, va mestr" *Al Liamm*, 1989, p.248.

180 Er gelaouenn *Bleun Brug*, Here **1955** e lenner ; "Da geñver **Bleun-Brug Landi** hon doa savet ur genstrivadeg dre skrid gant 15 000 lur e-giz priz kentañ. Goulenn a raemp **eur studiadenn war "ar red ma'z eo sevel uzinoù e Breiz da virout ouz ar Vretoned da zivroañ"**. Ar priz a zo aet gant an **Ao Bourdelles**, kelenner er skolaj Lannuon. Plijet gantañ digemer hor gwellañ gourc'hemennoù evit e studiadenn vat. Hon lennerien o devoa ar blijadur d'he c'havout en unan eus hon niverennoù da zont." p. 17. Siwazh, à a seblant, n'eo ket bet embannet (n'eo ket bet adkavet geniñ dianto).

181 Da rannvro emrenn e oa bet lakaet Enez Sisil get "Décret législatif du 15 mai 1946, n. 455, 'zo bet lakaet e-barzh ar "lois constitutionnelles de la République". "Statut de la Région sicilienne"

<https://www.regione.sicilia.it/sites/default/files/2020-11/Statut%20de%20la%20R%C3%A9gion%20Sicilienne.pdf>

182 Bourdellez n'en dehe ket bet a-du get Roparz Hemon pa lâre hennezh : "Krediñ a ran e ra ar skrivagner a fich pe a galfich ur gontadenn pe ur varzhoneg en hor yezh muioc'h evit Breizh eget trivec'h dousenn a CELIBoù." *Ar Bed Keltiek* 1962, n° 44, Eost p.130.

vehe bet dav furchal e dielloù ar "CELIB" 'zo gouarnet get Servij Dielloù Departamant Il-ha Gwilun. N'em eus ket bet amzer d'o studial tout¹⁸³ siwazh).

Doc'h e du en deus skrivet din Jean Ollivro¹⁸⁴, douaroniour, kelenner e Skol-Veur Roazhon 2 : "Pour le CELIB, l'abbé Bourdellès au moins dans le terreau des G.E.E.S ["Groupes d'Etudes Economiques et Sociales"], qui jouent un rôle central à la base, et semble co-organisateur, sinon organisateur de la réunion décisive de 1958 à Lannion. Il fait le compte-rendu Lannion ville condamnée à mort ? 1958, 28 p. (...) et cette réunion, ou M. Phlipponneau est invité, est décisive car l'un des participants donne l'idée de contacter Pierre Marzin. Deux ans plus tard on aura la première pierre du CNET¹⁸⁵. Je ne sais pas s'il a eu une part plus active au C.E.L.I.B.

Ar pezh 'zo sur neoazh eo an dra-mañ : ur roll kreiz a oa bet kani Bourdellez er "GEES" a oa bet ar re-se diazez pe "douar-teil"ar "CELIB" hrevez formulenn Ollivro.

3° Ar "Groupes d'Etudes Economiques et Sociales".

Neuze petra eo ar "GEESoù-se? Ha peseurt roll a oa bet kani Bourdellez er re-se?

E dibenn ar blezadoù 1950 e oa bet komprenet mad get pennoù bras Breizh e oa isdiorret Breizh àr an dachenn ekonomikel. A-du-arall e yae àr-raok ar "CELIB" abaoe dek blez bennak dija. Ar "CELIB"-se a glaske kavout an tu da cheñch penn d'ar vazh. Da heul ar lusk-se e oa bet krouet ar "GEES". Kelennerion ar skolioù kristen e-leizh, dedennet get kudennoù ekonomikel, sokial ha sevenadurel Breizh a savo paot a "GEES" dre Breizh a-bezh^{186 187}; hag ar "GEESoù-se" a vo liammet etreze en ur rouedad.

Er c'henarroud-se an hani eo e raio Bourdellez àr-dro **"GEES" Lannuon adal miz Gwengolon 1959** é kelenn d'an dud yaouank a oa e-barzh, skolacherion ha liseaned anezhe, **mennozhioù a-du get an digreizennañ ha terkadur an tiriagezh** : "Pierre Bourdellès, un prêtre enseignant, géographe et angliciste (...) anime, avec Edouard Ollivro, futur député, les Groupes d'Etudes Economiques et Sociales (G.E.E.S.), qui s'efforcent de populariser chez les jeunes¹⁸⁸ les

183 Oc'hpenn 20 metrad linnennek.

184 Postel kaset din d'an 17 a viz Gwengolo 2024 .

185 "Centre national d'études des télécommunications"

186 "A partir du début des années 1960 jusqu'en 1973, ont fonctionné dans des établissements scolaires du 2nd degré, principalement catholiques, en Bretagne (...) des Groupes d'études économiques et sociales (GEES), ces GEES, composés le plus souvent de 10-15 membres, avaient pour objet de réaliser des enquêtes socio-économiques sur des thèmes de l'environnement local tels que le tissu économique (agriculture, industrie, attraction commerciale) ou les loisirs(...) le travail de chaque groupe était encadré par un « adulte-conseiller », généralement professeur dans l'établissement, préoccupé par l'avenir des jeunes qu'ils formaient et souvent destinés à l'émigration en dehors de la Bretagne. La question du développement [de la Bretagne] est centrale dans les objectifs des GEES. Elle est confortée par l'évolution du catholicisme après le Concile de Vatican II et par les encycliques papales, notamment *Populorum progressio* (1967) (...).Une coordination régionale existait et donnait lieu à l'organisation de congrès et de stages faisant intervenir personnalités politiques et experts" a skriv Etienne LE NORCY, 2015, *Des élites d'après- guerre à la génération des années 68 en Europe : Héritage et transmission du régionalisme modernisateur breton (1963-1973)*. Université Sorbonne-Nouvelle Paris 3, Institut d'études européennes, Mémoire de Master 2 Recherche Etudes européennes.

187 *Ibid.* p.22 : "La cristallisation des préoccupations des enseignants "confessionnels" pour la jeunesse, autour d'un Bleun-Brug vivant son tournant progressiste. En 1959, la France prend conscience de sa nouvelle donne démographique et la Bretagne termine une décennie de réveil après le constat de son sous-développement et l'élan du CELIB et de la JAC [Jeunesse Agricole Chrétienne]. Ces dynamiques interpellent des professeurs de l'enseignement privé aux aspirations régionalistes et catholiques.

idées de décentralisation et d'aménagement du territoire." a skriv Le Norcy e 2015¹⁸⁹. E *kannadig ar GEES*, Meurzh 1964 edan an titl "Rapport du week-end de la Confédération "e lenner¹⁹⁰ : "le véritable démarrage se produit dans les Côtes-du-Nord, autour de trois hommes : L'idée fut lancée par Louis Martin, en 1958, avec la collaboration de Monsieur l'Abbé **Bourdellès**, de Saint-Joseph (Lannion) et de Monsieur Ollivro, maire de Guingamp. La présence des GEES dans d'autres sources que celles qu'ils produisent sont très rares et elles ne mentionnent que les noms de l'abbé Bourdellès et d'Edouard Ollivro. Ils se révèlent être deux figures locales. L'activité des premiers groupes apparaît dans le contexte d'implantation du Centre National d'Etudes des Télécommunications à Lannion, à partir de 1957."

En ur lizher a 1961¹⁹¹ e skriv Bourdellez emañ e bal "faire faire par ses élèves de 4ème à compter de l'année prochaine des monographies sur les communes de l'arrondissement de Lannion". Pelloc'h, en ur lizher arall¹⁹² e ro titouroù a-zivout ar sujedoù a bleustro àrné tud yaouank "GEES" Lannuon : labourat a rint a-zivout kumun Plouber, kumun Serwel, àr istor fabourzhioù Kerampont ha Rosampont Lannuon. "GEES" Lannuon a labouro betek ar blezad 1965 get Bourdellez en e benn.¹⁹³ "Les **GEES** apportent une **éducation civique** mais les initiateurs y voient **également le moyen de former de futurs responsables de la Bretagne**. Les jeunes des GEES doivent d'abord se révéler responsable du bon fonctionnement de leur groupe pour pouvoir produire leurs **enquêtes**. Ils se révèlent également enclin à développer le réseau et dans ce but continuent à **réfléchir par le local**, la proximité. Les activités des GEES les mènent à **sortir de leurs établissements et appréhender petit à petit des milieux sociaux** qui leurs sont étrangers bien souvent, à commencer par le milieu politique."¹⁹⁴

Adal 1962 betek 1966, d'an nebeutañ, e **aozas ar CELIB**, pep blez, get asant rektorelezh adakemiezh Roazhon **ur genstrivadeg studioù "Concours de monographies"** digoret da liseaned ha da studierion Breizh¹⁹⁵ ¹⁹⁶. **Oberiant-tre eo bet Bourdellez** er jeu-se é vroudiñ hag é sikour liseaned skolaj Sant-Joseb Lannuon da sevel studioù ha da lakaat o anv er c'henskrivadegoù-se¹⁹⁷, é

188 E *L'Echo de Lannion* 12 09 1959, ur rentañ-kont emvod GEESoù Lannuon ha Gwengamp (150 tud yaouank, tre dirak an ekonomist Louis-Joseph Lebreton).

189 *Ibid.*

190 *Kannadig ar GEES*, Meurzh 1964 meneget get LE NORCY, *Ibid.*, p.79.

191 Kaset da vBriand d'an 06 a viz Gouhere 1961.

192 Kaset da vBriand d'an 28 a viz Mae 1962.

193 Lizher Bourdellez da Briand 25 a viz Meurzh 1961 : "Notre 'groupe d'études' scolaire e a envoyé une pétition signée de 200 noms de jeunes gens et jeunes filles au congrès MRP ["Mouvement Républicain Populaire", strollad politikel Bro-Frañs bout bet oberiant adal 1944 betek 1967, àr an tu-kreizh, a-du get an Europa ha get a doare-spered kristen] de Lannion dimanche dernier et avec les mêmes signatures une lettre de félicitations à Pléven pour son bouquin" [*L'Avenir de la Bretagne*, Ed Calman-Lévy, Collection Questions d'actualité, 1961, 258 p.].

194 *Ibid.* LE NORCY, p.21.

195 E dielloù ar CELIB em eus kavet reoliadur 1962/63 ar genstrivadeg-se, setu ur bomm digoradur anezhañ : "...concours organisé par le CELIB avec l'accord du Ministère de l'Education Nationale (...) ouvert aux grands élèves de l'enseignement secondaire et technique et aux étudiants de l'enseignement supérieur sur les questions économiques et sociales bretonnes", but " encourager les jeunes de Bretagne à l'étude des problèmes économiques et sociaux de leur région.

196 *La Vie Bretonne*, n° 61, oct. 1962 : "Succès du concours de monographies du CELIB" (200 sujed kinniget d'ar CELIB a-berzh 58 tiez-skol Breizh evit ar blezad 1962/63. François-Régis Hutin, *Ouest-France* 18 06 1963 : "425 jeunes à la découverte de leur région", "le jury du concours de monographies organisé par le CELIB a choisi hier ses lauréats. Notenniñ a reer e vo savet 38 studi evit departamant Aodoù an Norzh evit ar blez 1964/65 (lizher ar CELIB) ne vo ket mui nemet 33 studi e 1966 neoazh (bodad-arnodenniñ 06/01 1966).

197 E dielloù ar CELIB em eus kavet roudoù ag ar 5 studi-mañ savet get liseidi Skolaj Sant-Joseb Lannuon, Bourdellez é blediñ gete (moarvat n'eo ket klok al listenn) : "L'industrialisation (zone de Lannion) : 1 Causes, 2 Rôle de M. Marzin, 3 Radôme, 4 Préparation d'implantation d'usines annexes CGE-Thomson-Houston, 5 Conséquences : création du

labourat evit ar CELIB é reizhañ studioù bet graet get liseaned liseoù arall^{198 199}, hag é kemer perzh bodadoù arnodenniñ krouet get ar CELIB²⁰⁰.

A-gostez lusk ar "GEES" e aozas ar Bleun-Brug (daet da vout ur luskad "progressiste" hervez Le Norcy) stajoù a gemero perzh Bourdellez enne : "les 'Stages annuels de l'Université bretonne d'été, organisés par le Bleun-Brug réunissent à la fois des personnalités appartenant au CELIB et des acteurs du monde culturel. Ainsi en 1964, à Lorient, son présents : « Gustave Thibon, Henri Queffélec, Yvonne Chauffin, Phlipponneau, Ollivro, Bourhis, les abbés **Bourdellès**, Dérian, etc...» a skriv Le Norcy²⁰¹ é venegiñ Herménégilde Cadouellan²⁰².

Skignañ mennozhioù rannvroel hag arnevesaus er strollad-studi-se e klask Bourdellez. Stummiñ tud yaouank 'zo e-barzh a-benn ma c'hellehent bout barrek diwezhatoc'h da vonet da

"Grand-Lannion", remaniement de la municipalité, la ZUP et la question des expropriations, deux sortes de population ville/communes rurales... ." labour a-stroll get tri lisead Abovilier, Thoraval ha Gourion, 1962; "La pêche dans la région de Locquémeau, Trébeurden, Perros-Guirec: 1 les différentes sortes de pêche : pêcheurs (syndicats etc.), l'année du pêcheur, lieux de pêche, poissons, crustacés coquillages, 2 les ports de pêche : site, équipements portuaires, 3 les débouchés de la pêche : vente aux mareyeurs et hôteliers, approvisionnement de la région en poissons" savet get Riou A. 1962; "Monographie de Buhulien : site, histoire, démographie, économie-agriculture-artisanat-industrie-commerce" savet get Fañch Broudic 1962/63; "Les économiquement faibles dans Lannion et le village rural de Kerouel en Ploubezre: 1_Métiers pénibles et peu rémunérés (petits fermiers, petits commerçants, petits artisans, ouvriers), le travail (durée, difficultés), l'habitat (habitat rural), équipements, moyens de transport -vélo sans moteur-, revenus et charges (impôts, fermages), difficultés : âge, santé, alcoolisme..., le moral : relations, enquête culturelle, information, lectures, chants, contes, cantiques, traditions..., leur passé, leur avenir - étude de cas précis, chiffrage par commune ou canton, étude des cas pénibles fréquents même des gens dont le revenu est normal (ex. jeunes femmes enceintes ou jeunes mères ne trouvant pas d'aide; fermières et commerçantes en traitement à Bégard par suite de soucis et de dettes etc., 2_ Les infirmes, malades vieillards : à domicile (ressources, soins, enquête culturelle/dresser le budget des vieillards avec ou sans loyer), recueil de souvenirs pour une enquête sur 1880/1890, à l'hospice. "savet get ur strollad lisean e 1964 (heñchet get Bourdellez ha Daniel le Berre) (lizher Bourdellez da Joseph Martray penn-sekretour ar CELIB 04 12 1963 ; "Etude des problèmes et de la mentalité des agriculteurs de la région de Lannion" savet get meur a lisean"classes terminales 1964/65.

198 E dielloù ar CELIB em eus kavet en doa Bourdellez reizhet 7 studi en o zouez an 3-mañ (moarvat n'eo ket klok ar listenn) : "L'émigration à Plénée-Jugon" (savet get Hercouet Guy lisean ag "Institution Notre-Dame", Gwengamp); "Dinan -1 Histoire-Population, 2 Histoire-Tourisme, 3 Artisanat, 4 Communications, 5 Industrie, 6 Bonneterie Busnal. savet get meur a lisean GEES Dinan, - reizhet get Bourdellez hag Edouard Ollivro; "Monographie économique et sociale de Taden" savet get Morez François, Lise merc'hed Dinan; "Monographie d'Uzel-près-l'Oust" savet get Vessières Catherine, Institution Sainte-Jeanne d'Arc, Pondi; ha 4 studi arall e 1965 (lizher A. Keravel da Melle de Lagarde Montlezun d'an 08/10 1965, studioù n° 5,6,14 ha 26 , n'eo ket resisaet o zitloù e-barzh ar lizher).

199 E dielloù ar CELIB em eus kavet anv ag reizhourion arall en o zouez : kelennerion skolioù-meur (Michel Phiponneau, Yves le Gallo hag all, liseoù; pennoù embregerezhioù, sindikadoù (CFTC-CFDT), kevredigezhioù sevenadurel; kazetennerion ha kement 'zo.

200 E dielloù ar CELIB em eus kavet en doa Bourdellez kemeret perzh e bodadoù-arnodenniñ e 1962 (meneget e daou lizher get Joseph Martray Penn-Sekretour ar CELIB / 20 05 ha 10 08 1963); e 1963 (meneget er mimp lizher) (d'an 10 a viz Even 1963/14 ezel en o zouez Bourdellez, Michel Phiponneau, F.R. Hutin (Ouest-France), Henri Ducassou (CCI Morbihan), Joseph Martray (Secrétaire général ar CELIB), A. Keravel (Emgleo Breiz), M. Plunier (UDAF ar Morbihan), e 1965 (d'ar 14 a viz Gwengolon 1965, 06 01 1966 (President Michel Phiponneau/24 ezel/33 studi/aet e oa ar maout get ar studi-mañ "Exode rural des Côtes-du Nord") .

201 *Ibid.*, p. 44.

202 CADOUELLAN, Herménégilde. *E HISTOIRE DES GROUPES D'ETUDES ECONOMIQUES ET SOCIALES (G.E.E.S) à partir de leurs publications et leurs travaux au jour le jour de 1963 à 1973. Des croisées de chemins en Bretagne (1960-1975), les GEES.* (Ul levr embannet get Cadouellan e-unan e 2020 / darn ag dielloù ar GEESoù a vez kavet a- barzh). Setu Cadouellan é komz diàr Bourdellez: "Les artisans de la mise en route des groupes : Louis Martin, le pionnier du premier groupe à Guingamp, puis à Dinan ; Edouard Ollivro (...) qui, professeur de lycée à Guingamp, apporte aux G.E.E.S. un soutien continu ; l'Abbé Pierre **Bourdellès** de Lannion, penseur à la parole forte et imagée qui livre son expérience de prêtre breton, de professeur et depuis longtemps de bon connaisseur de le Bretagne..."p. 17.

bennoù-bras Breizh hag, evit ar poent, da "is-ofiserien" ar "CELIB" hrevez formulenn Bourdellez e-unan.²⁰³

Bourdellez a ra get studioù bet graet get ar "CELIB" (en deus, marse, kemeret perzh é sevel anezhe) pa ra àr-dro "GEES" Lannuon ha pa gomz e **emvoudoù rouedad ar "GEESoù"**: "Le compte- rendu d'une réunion se tenant à Saint-Brieuc le 30 décembre 1964 rapporte la conférence tenue par l'un des fondateurs des GEES, l'abbé Pierre **Bourdellès**, dont deux points ressortent. Le premier concerne la question de "la situation actuelle de la Bretagne". Le constat **reprend** textuellement **les causes avancées par le CELIB**, quand il dit "La Bretagne est-elle condamnée à devenir un des déserts français ?", en lien avec le titre du livre de Jean-François Gravier paru en 1947²⁰⁴ *Paris et le désert français*, devenu "la référence des régionalistes et des aménageurs". Il **reprend un constat partagé et alarmiste de l'époque: "la pyramide des âges, le sous-développement, la désindustrialisation, le commerce maritime paralysé par les droits de douane, les routes en mauvais état, le revenu insuffisant, les ouvriers qui défilent à Hennebont, à Saint-Nazaire, l'alcoolisme, etc..."**. Le deuxième point recense **"les possibilités de la Bretagne"** et l'abbé Bourdellès conclut ainsi: **"Tout ceci suppose un dynamisme, un esprit inventif, des facilités financières, etc."**²⁰⁵

Evit klozañ e vo lâret ne voe ket penn tud ar "GEESoù" (Bourdellez, Ollivro hag ar re arall) é chom da dermal pe da hirvoudiñ p' he doa kollet Breizh he frankiz. Traoù mallusoc'h a oa d'ober. Stad ekonomikel ha sokial truezus Breizh a oa an dra bouezusañ da vout cheñchet, d'o soñj. Klask a ra tud ar "GEESoù", Bourdellez en o zouez, treuzkas d'an dud yaouank mennozhioù rannvroelour é klask lakaat Breizh àr hent an diorren hag ar modernekaat.²⁰⁶ Bourdellez hag Ollivro, o doa krouet ar GEESoù kentañ²⁰⁷ a bersonekae mennozhioù rannvroel hag arnevesaus d'ar mare-se²⁰⁸ a glaskent o zreuzkas.

203 "Les GEES, dont le but était de fournir des sous-officiers au CELIB pour établir le lien entre les responsables de la Bretagne et la population." Tennet ag danevell e vuhez get Bourdellez e-unan, embannet e *Le Peuple Breton* n° 312, 1989.

204 GRAVIER, Jean-François, *Paris et le désert français*, Paris, Flammarion, 1947, coll. L'Homme et la cité, 317 p.

205 *Ibid.* LE NORCY, p. 50-51 é venegiñ ar *Journal des GEES*, n°02, janvier 1965, p.17, 19, 20 ("50 den a gemeras en emvod-se, 6 den àr an oad en o zouez"): Bourdellez 'la situation en Bretagne se dégrade mais elle a des possibilités nécessité d'un dynamisme pour cela : formation intellectuelle et morale hommes de valeur recherche ouverture (p. 15).

206 *Ibid.* LE NORCY p.50-51 : "Les responsables des GEES à l'initiative de la transmission du 'régionalisme politique'. (...) "En 1965 (...) les propositions de Louis Martin, entres autres, placent indéniablement les GEES dans cet héritage de la modernisation des années 1950 et dans les mutations de la Bretagne. (...) Louis Martin (...) continue par une sentence révélatrice d'une partie de la philosophie du CELIB : "L'attachement à son pays est humain. S'il demeure sentimental sans chercher à se justifier par la réflexion, il est sympathique, mais risque la puérité." Louis Martin place indéniablement la démarche des GEES dans celle qu'avait eu Joseph Martray après la Libération vis-à-vis des nationalistes bretons. Les préoccupations économiques et sociales sont un terrain d'action bien plus propice que la nostalgie d'une époque où la Bretagne était indépendante. Le 'régionalisme politique' structure ainsi l'enseignement des GEES et se diffuse dans cette jeunesse bretonne. Louis Martin incite les groupes, à connaître particulièrement la planification économique, que ce soit celle défendue pour la Bretagne par le CELIB à travers la 'loi programme' de 1962 ou celle de l'Etat avec le V^{ème} Plan. Son programme se prolonge par la demande faite aux groupes de connaître la part dédiée à la Bretagne dans le budget, désormais régionalisé, de l'Etat et de porter leur intérêt sur les travaux du CODER nouvellement créé."

207 *Ibid.* LE NORCY (p.105) : "EDOUARD OLLIVRO, L'ABBE PIERRE BOURDELLES ET LOUIS MARTIN, LES INITIATEURS DES GEES, en 1959, alors qu'[Ollivro] entre en politique en tant que conseiller municipal de Guingamp, il fonde avec Pierre Bourdellès le premier groupe d'études économiques et sociales."

208 *Ibid.* LE NORCY (p.12), é komz diàrbenn Bourdellez hag Ollivro : " Ces initiateurs incarnent le régionalisme modernisateur".

Krouet e oa bet get Bourdellez, a-gostez "GEES" ar re yaouank, ur strollad-studi get tud àr an oad e Bro-Lannuon evit poueziñ àr ar vuhez politikel ha dazont ekonomikel ar vro-se. Oberiant-tre e vo Bourdellez, get un nebeud tud arall, evit lakaat ekonomiezh ar vro-se da vont àr-raok èl e vo gwelet un tammig pelloc'h amañ.

E miz Gwengolo 1966 koulskoude e kuitao Bourdellez Lannuon anvet get e eskob da aluzenner e ti ar re-gozh dalc'het get leanezed Gwareg. Setu ne raio ket mui neuze àr-dro ar "GEES"-se²⁰⁹, àr-dro ar strollad studi-labour-se naket, àr-dro "GEESoù" pe strollad studi-labour arall ar seurt-se naket. Echu e oa an abadenn, **torret e dizh dezhañ**.

4° É klask hejiñ politikerion Bro Lannuon ha broudañ politikerion da labourat evit dazont ho pastelloù-vro hag evit kani Breizh a-bezh (1957-1961).

E 1957 Jacques Gautier²¹⁰ a bedas Michel Phlipponneau, douaroniour ha Presidant Komite Kresk Armerzhel ar "CELIB" da brezeg e Lannuon (d'ar 16 a viz Genver 1957 e voe an emvod²¹¹) a-zivout : "Lannion va-t-il mourir?." Bourdellez, mignon Gautier, a gemeras perzh e divizoù a oa bet goude ar brezeg²¹² (an emvod a gomze Le Monnier diàr e benn a-us an hani eo).

Kanton Lannuon a oa en amzer-se àr e ziskar, kollet en doa ur bochad tud (o doa divroet)²¹³, ha tamm-ha-tamm e oa aet da get embregerezhioù kozh ar vro (labouradegoù kivijiñ, neziñ, dilhad, kouevrennoù ha gwiadiñ lin.)²¹⁴

E-pad emvod miz Genver 1957 e oa bet anv klask staliñ embregerezhioù nevez er vro, re é labourat àr dachenn an elektronegezh. Divizet e oa bet monet e darempred get Pierre Marzin, bet ganet e Lannuon, Pennrener ar "Centre National d'Etudes des Télécommunications" pe "CNET" d'ar mare-se.²¹⁵

209 Koulskoude 'meus kavet e oa bet pedet Bourdellez (hag e vignon Fañch Kerrain ivez) da gemer perzh en un emvod dalc'het d'an 30 a viz Even 1969 e Sant-Brieg en "Ecole des Cadres" "Réunion du COREL (Comité régional ?). Ur pal ag an emvod-se a oa : "Travailler [en amzer-dazont] sur des unités géographiques élémentaires dont l'ensemble constituent la Bretagne." Louis Martin kelenner e skolaj "Les Cordeliers" e Dinan a rae àr-dro ar GEES d'ar mare-se en doa eñ pedet (lizher Martin → Bourdellez 17 a viz Even 1969).

210 Apotiker ha stourmer kristen an tu-kleiz staliet e Lannuon hervez Jean-Jacques Monnier, *Pierre Marzin et la révolution lannionnaise (1954-1974) : un exemple précoce d'aménagement du territoire e kelc'hgelaouenn* "Norois, Revue géographique de l'ouest et des pays de l'Atlantique Nord," avril-juin 1995, Poitiers, t.42, n° 166, p. 419-426 (p.420) www.persee.fr/doc/noroi_0029_182x_1995_num_166_1_6640 DOI: <https://doi.org/10.3406/noroi.1995.6640>

211 MARJOU, Jean-Yves : " INCIDENCE DES TELECOMMUNICATIONS SUR LA VIE ECONOMIQUE ET SOCIALE DE L'ARRONDISSEMENT DE LANNION", 2009, 30 [p.\[http://memoire-alcatel-lannion.fr/histoires/RecueilT%C3%A9moinsages/\]\(http://memoire-alcatel-lannion.fr/histoires/RecueilT%C3%A9moinsages/p_6_IncidenceDesTelecomsALannion\) p 6 IncidenceDesTelecomsALannion. \(p.3\)](http://memoire-alcatel-lannion.fr/histoires/RecueilT%C3%A9moinsages/p_6_IncidenceDesTelecomsALannion)

212 *Ibid.* Monnier, Norois, 1995 (p. 421).

213 Poblanañ kanton Lannuon a oa e 1876 : 17 390 annezad hag e 1954 : 13 601 (troet diàr Monnier, Norois 1995 p. 420).

214 *Ibid.* Monnier, 1995, p. 421.

215 *Ibid.* Monnier, 1995, p. 421.

Nebeut goude, e 1957 e skriv Bourdellez "**Lannion, ville condamnée à mort?**"^{216 217}, ur pennad (28 pajenn) a dreuzkasas e miz Here 1957 da gentañ da vignoned dezhañ (da izili strollad-studi Lannuon ha neuze tud arall e rouedad dezhañ, en o zouez Yann Poupinot hag Yves Briand ²¹⁸. D'ar 14 a viz Genver 1958 e oa bet skignet e Bro-Lannuon ha trouz a reas buan er c'hornad-se. É-l-se e voe kroget divizoù foran e-keñver stad ekonomikel Bro Lannuon en amzer-se hag evit an amzer-dazont. Merkiñ a reer e voe embannet ur pennad 15 pajenn, neuze un tammig berroc'h, met tost da hennzh, get Bourdellez er gelaouenn *Barr Heol*²¹⁹ e miz Gwengolo 1958.

Bourdellez d'an 14 a viz Genver 1958²²⁰ : "Le groupe d'études prend de l'importance mon rapport a provoqué un flottement assez long dans l'opinion puis les attitudes se sont précisées. Contre : le maire [Maer Lannuon] sauf l'adjoint Quelle, le Télégramme parce que nous approuvions le CELIB comme base de départ (...), le SI [ar "Syndicat d'Initiative" moarvat pa ne oa ket bet krouet c'hoazh, d'ar mare-se, ar "Syndicat intercommunal pour le développement et l'industrialisation de la Région de Lannion"] qui veut lancer une pétition déjà imprimée sur feuille chez Anger [Ti-embann staliet e Ker-Lannuon] et serait en circulation depuis 8 jours sans une intervention violente de GAUTIER [an apotiker meneget a-us]. Selon cette pétition nous sommes des disciples de Malthus des anti-régionalistes (nous ne sommes donc plus des autonomistes!²²¹) car la Bretagne en général et la région de Lannion en particulier dans ses activités agricoles, administratives commerciales et industrielles jouit d'une prospérité exemplaire ! » (bomm ag ar gazetenn *Le Télégramme* meneget get Bourdellez er lizher). "Mais d'autres, sans entrer dans le groupe, a gendalc'h Bourdellez, collaborent et assistent aux réunions : le maire de Perros²²², le SI [ar "Syndicat d'Initiative" moarvat] de Perros et Trébeurden, Pierre Bourdellès député, conseiller

216 "Lannion ville condamnée à mort?". Diembannet, bizhskrivet, 28 p., e gallek. Danevell kinniget d'ar "Groupe d'Etudes Economiques et sociales- Bro Lannuon (deiziad ebet ar an teul a zegas ar gaoz ar an emvod bet dalc'het e miz Geñver 1957) pennad sinet Pierre Bourdellès.

https://bibliotheque.idbe.bzh/data/cle_88/Lannion_ville_condamnAe_A_Mort_.pdf

217 MARJOU, Jean-Yves. " INCIDENCE DES TELECOMMUNICATIONS SUR LA VIE ECONOMIQUE ET SOCIALE DE L'ARRONDISSEMENT DE LANNION, 2009, 30 p.: "La situation est analysée par exemple par : **P. Bourdellès** (professeur à l'Institution Saint-Joseph de Lannion) dans une étude qui relate la fondation du GEES (Groupe d'Etudes Economiques et Sociales de la région de Lannion). Invité par le GEES, Michel Phlipponneau (membre actif du CELIB de 1952 à 1967) fait une conférence le 16 janvier 1957 à Lannion au cours de laquelle il montre la France à l'ouest d'une ligne Le Havre- Marseille, région agricole et maritime qui se vide alors que la natalité en Bretagne est très forte donc des jeunes qui manquent de débouchés; à Lannion sur 2140 emplois, seuls 380 sont dans les industries de transformation (laiteries,...); les activités anciennes ont disparu (tanneries, filatures, traitement des peaux de lapins, cuivrierie, manufacture de chemises); des jeunes sont disponibles et des femmes pour des fabrications délicates, conflits sociaux inconnus, possibilité de loger les cadres, intérêt d'un salaire industriel plus constant que les gains du travail saisonnier. <https://memoire-alcatel-lannion.fr/histoires/RecueilT%C3%A9moinsages/> p 6 IncidenceDesTelecomsALannion.

218 Er lizher kaset get Bourdellez da vBriand d'an 28 a viz Here 1957 e komz a-zivout ar pennad en deus skrivet "sans avoir eu le temps de figoler pendant l'année scolaire [1956-1957] hag emañ-eñ é brofitiñ (eme-eñ) "que mon collègue [unan a oa é labourat e skolaj Sant-Joseb Lanuon] ait la grippe pour en faire des reproductions et les transmettre à une vingtaine de personnes dont Poupinot."

219 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1958, niverenn 16, p. 4-19."Lannuon dec'h, hiziv, warc'hoazh" (prezegenn c'hraet dirak Kendalc'h Breuriezh Breizh d'an 05 a viz Gouere 1958) get an Aotrou Beleg P. Bourdelles, kelenner Istor ga Douaroniezh.

220 Lizher Bourdellez da Briand 14 a viz Genver 1958.

221 Notomp neuze e soñje tud'zo e Bro Lannuon (hrezvez Bourdellez e-unan) e oa-eñ un emrenour ar an dachenn bolitikel a-raok.

222 Yves le Jannou ("RPF" neuze "UNR" goude)

général de Perros (ami de Pléven) et surtout de Marzin, Hainguerlot conseiller général de Lannion²²³, Alès²²⁴ maire et conseiller général de Plestin, les journaux lannionnais et Ouest-France."

Kendalc'h a ra Bourdellez é lâret ne oa ket bet degemeret mad e bennad get pennoù-bras Kêr-Lannuon o doa aon ar re-se rak koll o c'hargoù hag o doa komprenet, a-greiz-holl, e oant-int chomet pell dioberiant : "Si j'avais un peu de temps (...) je le passerais à recueillir des chiffres (population, production, chiffres d'affaires ...) et à les publier. Ce sont les chiffres qui les rendent fous (...) Mais hélas je n'ai pas le temps, jusqu'à présent je n'ai trouvé personne pour m'y aider (...). **Expérience faite je suis bien persuadé que le seul chemin (...) est le chemin des faits, de l'action inspirée par un grand dévouement des Bretons. J'espère que notre expérience servira pour toute la Bretagne, que Yann Fouéré s'en inspirera.** Elle échouera peut-être à **Lannion où la décadence est si lamentable.** Parce que Gautier, Bourdonnec, moi etc. avons nos défaillances, nous ne construisons peut-être pas demain, nous ne planterons peut-être pas des forêts dans les landes, nous ne ferons peut-être pas l'éducation bretonne de nos jeunes, nous n'irons peut-être pas jusqu'au **renouveau culturel et religieux qu'est l'épanouissement d'un peuple.** Mais nous avons certainement pris le bon chemin, sans bruit, avec un sourire pour chacun...avec beaucoup de fatigue aussi." Notomp ur wezh c'hoazh é komz Bourdellez él ur stourmer, un emsaver : "Je suis bien persuadé que le seul chemin (...) est le chemin de l'action..."²²⁵

Oc'hpenniñ a ra Bourdellez e marz ar lizher-se, e ruz : "**dites à Fouéré que la place des conseils d'arrondissement, laissée vide par la constitution [bonreizh Bro-Frañs] actuelle, est à prendre par des groupes du genre du nôtre, avec démarrage discret et sans lien officiel avec le MOB.**"²²⁶

Amañ e weler pegen rust e priz Bourdellez Maer radikal-sosialist Kêr-Lannuon an amzer-se²²⁷. Kompren a reer e oa **diàr intrudu Bourdellez** (hag un nebeud tud arall: Bourdonnec²²⁸ ha Gautier da skouer) e oa **bet aozet eskemmoù foran** àr ziazez ar pennad bet skrivet (un ton atahinus dezhañ) hag embannet getañ àr sujet dazont Bro-Lannuon. Kompren a reer c'hoazh e **c'hortoze Bourdellez e vehe bet krouet strolladoù-studi, skrivet studiadennoù lec'hel ha lakaet an dud da brederiañ àrne e pep kornad Breizh.** Kompren a reer a faote da vBourdellez e vehe lakaet **pastelloù-vro**, ha n'eo ket kummunioù, da vout **an tiriad mat da labourat àrnañ** àr an dachenn ekonomikel, sokial ha sevenadurel.

Lâret a ra sklaer Bourdellez petra eo e soñj a-zivout adsav ur bobl ha neuze adsav pobl Vreizh : **a-drugarez d'ur sevenadur ha d'ur relijion renevesaet an hani eo e c'hello ur bobl dispakiñ ha bleuniñ.**²²⁹

223 Édouard Hainguerlot (1896-1967), maer Brélévenez (Departamant Oadoù an Hanternoz), kuzulier kanton Lannuon, Baron, dehou-diseurt (DDS), a sinas ar "POB" a vo komzet diàr e benn un tammig goude.

224 François Alès "UDSR" ("Union Démocratique Socialiste de la Résistance") pelloc'h àr zu ar c'hreiz.

225 Lizher Bourdellez da vBriand 14 a viz Genver 1958.

226 "Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne" a vo komzet diàr e benn un tammig goude.

227 Gabriel Nogues, ur Radikal-Sosialist anezhañ, a roio e zilez e miz Meurzh 1958.

228 Yves Le Bourdonnec, labourer-douar e Bulien, melestrour "FNSEA" departamant Aodoù an Hanternoz, en doa sinet ar "POB" e 1957.

229 Komz a ra Bourdellez a-zivout ar: "renouveau culturel et religieux qu'est l'épanouissement d'un peuple".

Bourdellez a lâr : "Setu petra hon eus-ni graet e Bro Lannuon, marse 'zo aze un dra mat da vout eiladet²³⁰, kaeroc'h; mat da vout lakaet àr wel e par rannvroel gant Fouéré". Ur seurt strategiezh 'zo get Bourdellez a glask sevel ur luskad rannvroel a vehe bet diazezet (dre guzh un tammig) edan gazell ar "MOB" : **"Essaimer, faire partout des groupes tels que celui-ci sans dire qu'ils émanent ou sont concertés avec le MOB pour faire se lever les consciences dans tous les coins de Bretagne."**²³¹ Klask a ra Bourdellez enluskañ nerzhioù ar Vretoned evit dazont o bro.

Kinnig a rey Bourdellez e miz **Imbrilh 1959** e vehe bet krouet ur sindikad etrekumunel e pastell-vro Lannuon²³²: "Voici où nous en sommes : **l'opinion admet désormais que la situation de la Bretagne (pardon ! de l'arrondissement) est grave**, mais qu'il y a des moyens de s'en sortir. À Guingamp 6 conseillers dont Edouard Ollivro ont été élus uniquement sur ce programme, à Lannion 10. **Dans mes projets**, cela doit maintenant se continuer ainsi ; **regroupement des communes de chaque arrondissement en un syndicat intercommunal**²³³ pour obtenir des débouchés pour l'agriculture, la création d'industrie."

Amañ e weler, ur wezh c'hoazh, Bourdellez é komz é l un den engouestlet er vuhez bublik a foata dezhañ gober, a ginnig adaoziñ an traoù er par rannvroel ha pas hepken e Bro-Lannuon. Stagiñ a ra meur a wezh get Fouéré a hañval bout penn-bras politikel pouezusañ er "MOB" evitañ.

Kenderc'hel a raio Bourdellez da heuliiñ aferioù Ker-Lannuon²³⁴ ha disentezioù roet get ar c'huzul-kêr. Ne yelo ket ar re-se bep tro àr an tu a blije dezhañ²³⁵.

Komzet hon eus un tammig bihan a-zivout ar "MOB" pand eus bet anv ag ar "GEESoù" a oa-int é labourat a-gostez pe skoaz-doc'h-skoaz get ar "CELIB". Sellomp bremañ penaos en deus kenlabouret Bourdellez get ar "MOB"-se.

5° Ag ar"CELIB" davet ar "MOB".

Adal ar blez 1957 hon eus gwelet Bourdellez é krouiñ ur "GEES" get tud yaouank (skolacherion ha liseidi) evit o c'helenn hag ur strollad-studi arall get tud daet evit poueziñ àr bolitikourion Bro-Lannuon. Met ne vo ket trawalc'h evitañ gober àr-dro traoù Bro-Lannuon. Un eil rouedad en doa Bourdellez : ur rouedad rannvroel. E stok get tud ar "CELIB" e oa ha get re a grouo ar "MOB" kenkoulz all.

230 Lizher Bourdellez da Briand 14 a viz Genver 1958: Bourdellez a gomz a-zivout raktres krouiñ ur "GEES" tud àr an oad e Kêr-Loudieg: "Le curé doyen de Loudéac (M. RAULIC notre ancien professeur) m'a ménagé une entrevue avec son maire. J'espère que Loudéac marchera aussi. D'ailleurs la situation peut désormais se résumer dans le dilemme fameux : marche ou crève."

231 Lizher Bourdellez da Briand 14 a viz Genver 1958.

232 Lizher Bourdellez da vBriand 01 a viz Imbrilh 1959.

233 Het Bourdellez a oa daet da wir un tammig goude e dibenn 1958 (evit pastell-vro Lannuon d'an nebeutañ) pa oa bet divizet e vehe "digreizennet" ar "CNET" e Lannuon get Ministr ar PTT (divizet d'an 19 a viz Imbrilh 1958) pa vo krouet ar "SIDIRL" pe "Syndicat intercommunal pour le développement et l'industrialisation de la Région de Lannion" get 28 kumun Bro Lannuon (Marjou 2009) ha muioc'h c'hoazh e 1961 pa vo lakaet kumunioù Lanuon, Brelevenez Bulian, Logivi-Lannuon ha Serval d'ober ur gêr nemeti.

234 *L'Echo de Lannion* 26 09 1959 p.1-2 "Tribune libre: 'Lannion laisse passer sa chance' " sinet "Société de Géographie de Lannion a oa Bourdellez ezel anezhi, a damall politikourion Bro Lannuon pa n'o deus ket savet lojeris a-walc'h na lakaet prest dezougenoù ret da zegemer ar "CNET".

235 En ur lizher kaset da Briand d'an 15 a viz C'hwevrer 1961, da skouer, e lâr Bourdellez, badaouet, en deus nac'het ar c'huzul-se aprouiñ ur mennad a-du get diorenn ekonomikel Breizh « C'est raide...Les adversaires/ Jagoret instituteur public sans enfants très anticlérical et Me Blandin avocat".

Kroget en deus é gober àr-dro ar "**POB**" "Programme d'Organisation de la Bretagne" (a vo aprouet 1957), neuze àr-dro ar "**MOB**" "Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne" (a vo krouet e 1957). Skriv a rey pennadoù e kazetenn hennañ *L'Avenir de la Bretagne* (a vo krouet-hi e 1958).

Sujedoù politikel hag ekonomikel a weler Bourdellez komzet diàr o fenn adal 1957 a vo: an digreizenniñ e Bro-Frañs, reiñ da vBreizh ur vodadenn tud dilennet dezhi hec'h-unan, kas àr-raok diorren ekonomikel ha sevenadurel Breizh, Breizh er C'henvarc'had, labouradegoù e Breizh, arrest divroadeg ar Vretoned, souten raktres ar "Lezenn-Stur" kinniget d'ar Stad get ar "CELIB" e 1962. (àr dachennoù arall e skrivo ivez adal 1955: evit tabut get pennoù-bras 'zo an Iliz met diwezhatoc'h e vo gwelet evit ar pezh a sell doc'h ar sujed-se).

Gwelet e vo Bourdellez birvilh ennañ da gentañ get raktres ar "Lezenn-Stur", ha diwezhatoc'h dipitet bras pa ne vo ket mouezhiet honnezh. Komzoù c'hwerv a vo getañ pa vo nac'het get Stad Frañs kavet mat raktres ar "lezenn-stur"-se, ha pa vo mouezhiet budget Bro-Frañs 1964, ne oa ket hennezh, d'e venno, mat da respont, pell a-se, da ezhommoù Breizh.

E 1964 a pa vo gwelet pennoù-bras politikel Breizh 'zo dislaoskiñ raktres ar lezenn-stur ha plegiñ doc'h bolonte Stad Bro-Frañs é vouezhiñ budget Bro-Frañs kinniget get hennezh, ha kement-se en desped da emsavadegoù pe vanifestadegoù kriz labourerien-douar Breizh e penn-kentañ ar blezadegoù 1960 e skrivo Bourdellez pennadoù ne oant ket mui c'hwerv o stumm, flemmus ha leun a gounnar ne lâran ket. Sellomp pizh bremañ penaos e oa arru kement-mañ.

a) Ar "**Programme d'Organisation de la Bretagne**".

Ar c'hennaroud: E 1956 e oa bet lañset ur c'houlzad bruderezh get ar "CELIB" evit lakaat an dud da siniñ a-du get ar "Programme d'Organisation de la Bretagne" a choulenne hennezh e vehe bet krouet un vBodadenn-Veur e Breizh ha digreizennet Stad Bro-Frañs. P'en doa graet berzh e oa bet divizet get re o doa roet lusk d'an afer krouiñ ar "Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne".

Bourdellez hag ar "POB" : E dielloù Bourdellez, goarnet get e ninez Yvette Meurou, em eus kavet ur lizher-skouer a-berzh timbr ur "Comité provisoire Projet d'Organisation de la Bretagne" (hag a-berzh Eugène Le Roux ²³⁶) o 'zo e bal lakaat an dud da siniñ ha da glask tud arall da siniñ ar "POB-se". Sinet e vo hennezh get 6 217 den, en o zouez Bourdellez da vare emvod meur krouidigezh ar strollad politikel "Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne" pe "MOB" d'an 10 ha d'an 11 a viz Kalan-Gouiañv 1957 en Oriant. Anviou 110 sinour 'zo meneget e dibenn ar pennad²³⁷.

Petra a lâar ar "POB"-se berr-ha-berr ? Ret eo da Vro-Frañs, evit he mad, cheñch hec'h ensavadurioù é kemer get an digreizenniñ ; evit mad Breizh, evit mad hec'h ekonomiezh kenkoulz

236 Moarvat Eugène Le Roux bet kannad "SFIO" (1932-42) Departamant al "Liger-Is" pe "Loire-Inférieure" ha marvet e 1958.

237 Ar "POB" stagadenn rentañ-kont Kendalc'h diazezañ ("congrès constitutif") ar "MOB", p. 36-41 embannet el levrig *Pourquoi et Comment, rapports présentés à l'Assemblée Générale constitutive du Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne*, Supplément au n° 5 de l'Avenir de la Bretagne, https://bibliotheque.idbe.bzh/liste_theme.php?id=les-cahiers-du-mob-1183&l=fr

ag he sevenadur eo ret krouiñ a-raok pep tra ur Velestradurezh hag ur Vodadenn rannvroel e Breizh.²³⁸ Dav eo reiñ da vBreizh ur statud nevez, er lakaat da rannvro.

Get piv e oa bet savet testenn ar "POB?" E kelc'hgelaouenn *Breiz*²³⁹ kevridigezh Kendalc'h²⁴⁰ e skriv Fouéré e oa bet savet : "en quelques réunions chez Yann Poupinot ". Hrevez Jean-Jacques Monnier ²⁴¹: "Le POB a été rédigé notamment par Fouéré et Poupinot au cours de l'hiver 55-56 et présenté en mai 56 à l'Assemblée générale de la JEB [n'em eus ket kavet petra oa ar JEB-se] comme pétition à faire signer". Hrevez Fañch Kerrain²⁴² en doa kemeret perzh Bourdellez é skriv ar pennad-se, a oa bet skrivet mump "ar pep pouezusañ anezhañ" getañ. Gouiet a reomp e oa bet Bourdellez e darempred get Fouéré ha get Poupinot hag a-choude pell 'zo. Ne c'hellan ket kadarnaat neoazh larêdoù Kerrain, met ne vern, ar pezh a zo sur eo en deus Bourdellez sinet ar "POB" e 1957 hag e-touez ar re getañ.

b) É kenlabourat get ar "MOB" (1957-1965) hag e gazetenn *L'Avenir de la Bretagne* (1963-1966).

Ar "M.O.B." pe "Mouvement pour l'organisation de la Bretagne" 'zo an emsav politikel breton kentañ bet krouet goude ar brezel 1939-45. Tud a-du get **mennozhioù ar gevredadelourion hag emrenerion habask**. Lakaet e kostezenn ar virourien get tud 'zo a-du-arall. N'eo ket bet Bourdellez ezel ar "MOB" (N'eo ket bet kavet kement-se geniñ diantao). Tost dezhañ e oa bet neoazh pa skrivas e *L'Avenir de la Bretagne*, bet kazetenn ar strollad-mañ, tost ma oa da dud a rae àr dro ar gazetenn-se kenkoulz, en o zouez Yann Fouere, penn-rener ar gazetenn hag ar "MOB"²⁴³, Yann Poupinot, pe Lukian Raoul.²⁴⁴

Oberiant e voe ar "MOB" 1957 da 1965. Pelloc'h ne chomo nemet e gazetenn *L'Avenir de la Bretagne*. Krouet e oa bet ar luskad-se get Jean Le Gall (bet ezel servij kelaouiñ Pennoù-Bras ar Re-Gevredet e-pad an eil Brezel Bras), Yann Fouéré, bet rener ar gazetenn "*La Bretagne*" e-pad an Ac'huberezh, Ronan Goarant, Albert Poulain, ar resistanted Pierre Lemoine ha Jean Kergrene, ha Jean Poupinot.²⁴⁵

238 Setu ur bomm ag lizher an 01 a viz Genver 1957 meneget a-us "Nous sommes convaincus en effet que la nécessaire défense des intérêts bretons, tant sur le plan économique que sur le plan culturel, ne peut se faire sans que nous obtenions la création préalable d'une Administration et d'une Assemblée régionales bretonnes."

239 N° 210, Meurzh 1976.

240 "Ar c'hengevredad Kendalc'h a oa bet savet e fin ar bloavezh 1950 e Kemper. Bleinet e oa bet gant ar rezistant Pêr Mokaer betek e varv e 1961. Bodañ a ra an holl re a zo dedennet gant sevenadur Breizh. Polig Monjarret a oa bet pennsekretour ar c'hengevredad-se. Dont a reas da vezañ pouezusoc'h-pouezusañ adalek 1956 gant donedigezh Studierien Yaouank Breizh ha Diazevadur Sevenadurel Breizh." *Lec'hienn Internet "Kendalc'h"*
<https://fr.wikipedia.org/wiki/Kendalc'h>

241 Mail bet degaset din getañ d'ar 15 09 2024.

242 *Le Peuple Breton*, n° 1990 n° 313, p. 25.

243 "Amnistié en 1953, acquitté lors d'un nouveau procès en 1955, il reprend rapidement une activité de militant régionaliste finalement au moins aussi marquante qu'avant et sous l'Occupation et qui lui vaut d'acquérir la stature de figure de proue incontestable du mouvement breton. **A partir de 1957 il dirige le Mouvement pour l'organisation de la Bretagne (MOB) et le journal L'Avenir de la Bretagne**, qui laisseront une empreinte durable. CAMUS, Jean-Yves, (kazetenner ha politikoniour ganet e 1962) "Mort à 101 ans de Yann Fouéré, figure de l'autonomisme breton" *Le Nouvel Observateur* <https://www.nouvelobs.com/rue89/rue89-politique/20111023.RUE5187/mort-a-101-ans-de-yann-fouere-figure-de-l-autonomisme-breton.html>

244 Lucien Raoul, pe c'hoazh "Lukian Raoul" (1932-2009) emsaver ha kelaouenner, bet kelenner, ezel skipailh bleinerion ar "M.O.B" a 1962 da 1970. Pennskridaozer "*L'Avenir de la Bretagne*" a 1965 da 1975 (pajenn *Wikipedia* Lukian Raoul. https://fr.wikipedia.org/wiki/Lucien_Raoul)

245 Lec'hienn Internet "Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne".

https://fr.wikipedia.org/wiki/Mouvement_pour_l'organisation_de_la_Bretagne#:~:text=Le%20Mouvement%20pour

Tud disheñvel o mennozhioù 'zo e-barzh ar luskad-se. Klask a ra neoazh bodañ tout ar vBretoned, lâret a ra eo "**dibolitik**" met e lâr ivez emañ **kevreadelour**²⁴⁶ e raktres politikel. **Pennadoù-stur** a bep seurt a vo embannet **a-du a bep eil get ar vroadelouriezh, get ar rannvroelouriezh pe c'hoazh get de Gaulle**²⁴⁷.

Fouéré a skrivo e 1989, goude marv Bourdellez, : " Il [Bourdellez] s'était dès sa fondation intéressé aux efforts du MOB"²⁴⁸. Da lâret eo, ma komprener mat, e oa tost hep bout ezel da vat.

E 1963 e kuitao izili 'zo dezhañ a-zoc'h ar "MOB" hag e vo krouet get ar re-se ur strollad politikel nevez an "Unvaniezh Demokratel Breizh" pe "UDB"²⁴⁹. Bourdellez a chomo-eñ tost d'ar "MOB" peogwir emañ e-karg ag ar pennadoù ekonomikel e gazetenn e 1965²⁵⁰ hag é kaso en-dro staj yaouankizoù ar "MOB" e Mael-Karaz e 1966.²⁵¹

Tost eo bet **Bourdellez** ag ar "**MOB**" ha **kenlabouret** en deus getañ e daou zoare d'an nebeutañ. Da gentañ é skriv pennadoù er gazetenn *L'Avenir de la Bretagne* : **seizh pennad** 'zo bet kavet sinet getañ er gazetenn-se²⁵² a oa bet embannet a viz C'hwevrer **1963 betek 1966**. Da eil e ra àr-dro **stajoù a oa o fal kelenn yaouankizoù ar "MOB"**, unan e **1964** hag un eil e **1966** d'an nebeutañ.

Sujedoù-pennañ a gomz Bourdellez diàr o fenn enne 'zo raktres al Lezenn-Stur evit Breizh ha kudennoù sokial e Breizh ; ha kement-se kenkoulz er gazetenn hag e stajoù yaouankizoù ar "MOB".

c) Raktress al "Lezenn-Stur" (1962/1964).

²⁴⁶ "l'organisation, plus pertinent" C'hoazh e 2010. https://fr.wikipedia.org/wiki/Union_d%27A9mocratique_bretonne

²⁴⁷ N'em eus ket kavet e vehe bet skrivet ur pennad àr sujed ar c'hevreadelezh get Bourdellez.

²⁴⁸ *Ibid.*

²⁴⁹ *L'Avenir de la Bretagne* Septembre-Octobre 1989, n° 338 "Nos disparus Jean-Louis Bertrand, Pierre Bourdellès".

²⁵⁰ Àr lec'hien *Wikipedia* "UDB" e lenner : "Krouet e oa bet an UDB e 1964 gant ur strolladig tud yaouank, ur pemzek bennak, studierien an darn vrasañ anezho. (...) levezonet gant mennozhioù ar sokialourien hag an tu kleiz dre-vras. An darn vrasañ a oa er Mouvement pour l'organisation de la Bretagne (MOB) a-raok. An UDB a zo bet krouet goude un disrann er MOB, e-kerzh un emvod e 1964. E 1962, nac'het en doa ar MOB kondaoniñ an OAS. Er mod-se ez ae a-enep d'ar studierien a-du gant an FLN. Kendalc'h kentañ an UDB a voe dalc'het e Kemper, e miz Kerzu 1964 (...). UDB a oa bet krouet evit enebñ ouzh ar brezel renet en Aljeria gant Frañs hag en ur lakaat un damheñvelder etre didrevadennerezh ar Maghreb hag hini Breizh. Kentañ karta UDB a lakae en a-raok ar fed kaout ur steuñv ekonomikel ha krouiñ ur c'hevread europat. A-enep an arme hag an drevadennerezh e oa UDB.

²⁵¹ https://fr.wikipedia.org/wiki/Union_d%27A9mocratique_bretonne

²⁵² Kavet eo bet àr lec'hienn an "IDBE" an testenn-mañ : "Komite skridaoziñ *L'Avenir de la Bretagne* 1965 : Yann Fouéré : rener, Lukian Raoul: pennskridaozer" hag, e-touez un nebeut arbennigourion veneget e kaver : "Abad Per Bourdellez Lannuon : aferioù ekonomikel". <https://bibliotheque.idbe.bzh/>

²⁵³ *L'Avenir de la Bretagne*, 15/09/1966, n°11. "Le stage civique du M.O.B. à Mael-Carhaix -Jeunes Bretons 1966" kaset en-dro get "L'Abbé Pierre Bourdellès", prezeg Bourdellez.

²⁵⁴ *L'Avenir de la Bretagne*, 16 février 1963, n°70, p. 1 et 4. "Le ministre Pisani ironise : la loi-programme c'est un mauvais dada." par L. Pempoul (alias Bourdellez);

²⁵⁵ *L'Avenir de la Bretagne*, 16 février 1963, n°70, p 2. "Inquiétudes agricoles" par L. Pempoul (alias Bourdellez);

²⁵⁶ *L'Avenir de la Bretagne*, 1963 n° 77 p. 5, Atersadenn an abad Bourdellez "Les saisonniers de Jersey" get Lucien Raoul;

²⁵⁷ *L'Avenir de la Bretagne*, 17 août 1963, n° 82, p. 1 et 4. En ur pennad get Lukian Raoul "La loi programme minimum vital pour la Bretagne" e kaver bommoù ur lizher sinet Abbé P. Bourdellès (àr ur skeudenn p.1 niverenn-se ar gazetenn-se e vez gwelet Bourdellez e-barzh ur strollad tud);

²⁵⁸ *L'Avenir de la Bretagne*, octobre 1963, n°85, p. 2. "Ce qu'il faut dire" (flemmskrid) get l'Abbé Pierre Bourdellès;

²⁵⁹ *L'Avenir de la Bretagne*, jour décembre 1963, n° 90, p. 1 et 8. "Les injustices mal camouflées et les calculs truqués du budget 'régionalisé'" Abbé Pierre Bourdellès;

²⁶⁰ *L'Avenir de la Bretagne*, 1966, n° 11, p. 2 ha 5 "Jeunes Bretons".

Ar c'henarroud : Ar "CELIB" a oa bet lakaet ez-ofisiel da "gKomite rannvroel astenn ekonomikel" e 1954²⁵³ (da lâret deo : "Organismes de statut associatif, d'études et de conseil auprès des pouvoirs publics, ils ont pour objectif de favoriser le développement économique de chaque territoire. Ils sont un relais nécessaire entre l'Etat et les départements, les élus locaux et les acteurs socio-économiques."²⁵⁴ neuze e-pad ar IV^{vet} Republik.

E derou ar **blezadoù 1960** emañ fall stad kevredigezh Breizh, **labourerien-douar a vanifest é tispakat o c'hounnar e-pad an nevez-amzer 1961**. Ret e vo da Stad Bro-Frañs gober get ar "CELIB" 'zo ar framm nemetañ bet degemeret mat get ar labourerion-douar evit komz evite. **E 1962 e vo manifestadegoù arall gete hag a droio da fall.**

E miz Even 1961 en doa savet ar "C.E.L.I.B." ur raktres "Lezenn-Stur" evit Breizh ha n'eo ket servijoù ar Stad o doa eñ savet. Arouet e oa bet ar raktres da geñver Emvod Meur ar "CELIB" d'an 13 a viz Even 1962.

Pres a vo lakaet goude àr gouarnamant Bro-Frañs get ar "CELIB" a-benn e vehe degemeret mat getañ ar raktres-se ha neuze mouezhiet get Parlamant Bro-Frañs. Hervez an dailh e oa bet degemeret mat get Georges Pompidou, bet anvet da gKentañ Ministr nevez-zo : ar Lezenn-Stur a oa sañset bout mouezhiet e 1963. Gortozet e vo pell, en aner. Muioc'h, d'ar 14 a viz Meurzh 1964²⁵⁵ e vo krouet ur "**c'hCODER**" (ur c'homité edan beli ar Prefed, ur roll aliiñ dezhañ hepken) e-tal da bPrefed Rannvro Breizh. **An hani-se a gemero lec'h ar "CELIB" da vat.**

Gouniet e vo dilennadeg ar gannaded get tud a-du get de Gaulle e 1962. Setu kreñvoc' h ar gouarnamant a zilaoskas raktres ar "Lezenn- Stur". Pennoù-bras ar "CELIB" a asanto kemer perzh er "ch'Koder ", Joseph Martray a vo pennsekretour, ha René Pléven, presidant hennañ. Echu e oa da vat get ur "CELIB" kreñv ha get ar "Lezenn-Stur" kement-all.

Bourdellez ha raktres ar "Lezenn-Stur" : Setu ar pezh a skriv²⁵⁶ Bourdellez a-zivout "ar Lezenn Stur" d'an 12 a viz Even 1962, neuze un deiz araok e vehe bet arouet get Emvod Meur ar

253 Dekred 54-1231 11 a viz An Azvent 1954 "Institution de Comités d'expansion économique"
<https://www.legifrance.gouv.fr/loda/id/JORFTEXT000000886958>

254

<https://ceser.normandie.fr/lorigine#:~:text=Cr%C3%A9ation%20des%20Comit%C3%A9s%20d'Expansion,d%C3%A9veloppement%20%C3%A9conomique%20de%20chaque%20territoire.>

255 Er gazetenn *Le Monde*, Joseph Martray : "CODER et Comités d'expansion", 12 août 1967 : " Les comités d'expansion sont en état de crise depuis le 14 mars 1964, c'est-à-dire depuis la signature des décrets portant création des nouvelles structures régionales, en particulier des Coder. Ils avaient été pendant dix ans les interlocuteurs des pouvoirs publics, officiellement " agréés " en 1954, obligatoirement consultés ensuite "sur l'élaboration des plans régionaux", reconnus par une circulaire du premier ministre en date du 20 janvier 1961 (J.O. du 21) comme " l'instance où pourront être recherchés principalement des avis sur les grandes orientations et les options essentielles du développement économique de la région". Les comités d'expansion étaient donc bien, comme le précisait une autre circulaire du 25 août 1961 signée du ministre de l'intérieur, des " organes consultatifs " pour tout ce qui concernait l'aménagement du territoire dans la région. Or voici qu'à partir de 1964 le gouvernement institue et met rapidement en place dans chaque circonscription d'action régionale un organisme consultatif nouveau, la commission de développement économique régionale appelé à émettre des avis sur les questions relatives à la mise en œuvre du développement économique et social et de l'aménagement du territoire concernant la circonscription". Aucun texte n'a certes abrogé les dispositions précédentes concernant le rôle consultatif des comités d'expansion. Mais ceux-ci ne sont plus considérés par l'administration comme ses interlocuteurs. Ils fonctionnent à vide, privés de la documentation et de la présence des chefs de service, frappés d'impuissance et condamnés au verbalisme. Les comités d'expansion peuvent toujours parler : ils ne sont plus écoutés. Ne doivent-ils pas se résoudre d'eux-mêmes à disparaître ?"

<https://www.lemonde.fr/archives/article/1967/08/>

256 Lizher Bourdellez kaset da vBriand d'an 12 a viz Even 1962.

"CELIB". Mat e vehe, emezan, komz diàr he fenn er gazetenn: "J'approuve votre projet [kani e vignon Briand]de parler de **la loi-programme** dans l'Écho de Lannion. J'avais rêvé de le faire moi-même mais vraiment je manque de temps. J'ai donc relu à votre usage, le texte de Phipponneau²⁵⁷, c'est un monument. Il faudrait être un spécialiste en tout pour en juger, surtout pour formuler des critiques. Ne critiquez pas. Dites que **c'est un minimum** ; que **c'est une question de vie ou de mort**, de ruine; que les jeunes en ont parfaitement conscience et constituent en dehors de toute politique des Groupes, des Stages, des Sessions, des Camps pour étudier le texte et obtenir à tout prix son application dont dépend leur avenir et celui de leurs parents. Sur quels points insister? Sur l'agriculture et les transports (**la nécessité d'une formation agricole savante** face aux agricultures hollandaises et allemandes), les tarifs du chemin de fer qui doivent ouvrir des débouchés sur le continent et l'équipement des ports qui doit nous ouvrir des débouchés atlantiques et mondiaux. Sur le plan culturel insister sur l'avantage qu'il y aurait si le breton comptait, non seulement pour la mention au bachot, mais comme seconde langue remplaçant à volonté soit le grec, soit l'espagnol, le russe ou l'arabe. Mais surtout insister sur l'importance d'une véritable radio bretonne, qui doit expliquer à tous en français et en breton, les problèmes de notre presqu'île, qui permette à tous nos auteurs en français et en breton de lire, d'expliquer, de chanter leurs œuvres : Jarl Priel, Maria Prat, Jean Derrien, Maodez Glanndour. Nos meilleurs élèves, nos meilleurs conférenciers. Les cultures et les élevages les plus réussis de manière à mettre tout le monde dans le coup et à créer un esprit de dynamisme, de coopération, de progrès. Concluez en demandant à Lannion de préparer sa "régionalisation" de la Loi-Programme. Signalez le danger de l'arrondissement coupé en deux : Lannion-Perros dominant avec le CNET, Radôme et Cie, leurs touristes aussi, et d'autre part les cantons abandonnés : Plestin, Plouaret, La Roche-Derrien, dépeuplés appauvris où quelques hommes dynamiques (...) réussissent parfois mais difficilement à tenir tête à des politiciens aigris (...) capables d'exciter la haine mais incapables de relancer le progrès."

Dassoniou afer ar Lezenn-stur a vo kavet e pennadoù Bourdellez embannet er gazetenn *L'Avenir de la Bretagne* meneget a-us. Er pennad "**Le ministre Pisani ironise : la loi-programme c'est un mauvais dada.**" get L. Pempoul (alias Bourdellez)²⁵⁸ e kav Bourdellez da lâret, hag àr un ton rust, diàr Edgard Pisani, Ministr al labour-douar, en deus graet goap doc'h raktres al Lezenn Stur é lâret e oa hennañ "un mauvais dada" evit ar Vretoned pa oa ur raktres sirius, a skriv Bourdellez, bet savet get 52 tud ispisializet, hag aprouet get 1 200 dilennad ha stourmer.

Bourdellez en deus keuz hag e vehe bet asantet get kannaded ar labourerien-douar Breizh monet e darempred get ar Ministr-se ha prefeded 12 departament kornog Bro-Frañs, hep ar "**CELIB**" en doa **nac'het Pisani kejañ getañ**. Evit Bourdellez eh eus ur gwir gudenn vreton ha n'eo ket bet-hi degemeret get ar gouarnamant. **Echuiñ a ra e bennad é c'halviñ ar Vretoned da vout unanet evit bout kreñv dirak ar gouarnamant**. Diougan a ra e vo trubuilhoù e Breizh a-benn an hañv 1963 : "1963 verra la bataille décisive qui décidera si la Bretagne doit être un désert ou redevenir un pays prospère. Cette bataille est engagée. Nous allons voir la Bretagne se couvrir de camps militaires, de police, de troupes en prévision de la crise annuelle qui se déclencherà cet été. Quelques jeunes bretons indignés commettront des imprudences tombant dans le piège classique des provocations. On criera aux "autonomistes" pour

257 Moarvat PHILIPONNEAU, Michel, *Le problème breton et le programme d'action régionale, un problème-type de la politique de développement des économies régionales*, Paris. Armand Colin. 1957, 179 p.

258 *L'Avenir de la Bretagne*, 16 février 1963, n°70, p. 1 et 5.

effrayer les braves gens et discréditer le Mouvement ; soyons vigilants et unis : c'est le seul moyen de déjouer l'action qui se prépare."²⁵⁹

D'ar 16 a viz C'hwevrer ivez e stago Bourdellez get nec'hamant labourerion-douar Breizh.²⁶⁰ Pelloc'h c'hoazh e klever dason komzoù Bourdellez get Lukian Raoul en ur pennad "la loi-programme minimum vital pour la Bretagne".²⁶¹

Ha neuze e miz Kalan-Gouiañv e weler Bourdellez é tamall gouarnamant Bro-Frañs a zo é klask touelliñ ar Vretoned get ur raktres budget a hañval bout mat evit Breizh pa n'emañ ket, er c'hontrol : "Les injustices mal camouflées et les calculs truqués du budget 'régionalisé' " Abbé Pierre Bourdellès.²⁶² Danevelliñ a rey Ronan Caerleon²⁶³ en doa skrivet ivez Bourdellez e 1964 (é tislep, reizh ha splann, stad truezhus Breizh d'ar mare-se)²⁶⁴: **"Depuis 1962 les agriculteurs font la grève de la viande, les chiens policiers font la chasse aux scieurs de poteaux électriques, les tribunaux condamnent les syndicalistes pendant qu'Hennebont ferme peu à peu ses portes à mille cinq cent ouvriers et Saint-Nazaire à deux mille, au lieu de quinze mille emplois nouveaux qui devaient se créer chaque année."**²⁶⁵

E miz Gwengolo e skrivo Bourdellez ur pennad a-zivout ar "CELIB" ha raktres ar "Lezenn-Stur" **"Fall an eost 1964"** e *Barr Heol war Feiz ha Breizh*²⁶⁶. Ennañ e kaver un diverrañ euriou ha dizeuriou raktress ar "Lezenn-Stur" ne voe ket mouezhiet hag un daolenn stad ekonomikel Breizh : "Goude ar brezel (...) e tiwanas ar CELIB. **Betek ar bloaz 1962 en deus graet ar CELIB ul labour dispar** ha n'eo ket bet komprenet a-walc'h gant an Emsav. Bodet ennañ holl bennadurezhiou Breizh, e savas dre labour an Ao. Kelenner Mikael Phlipponneau un danvez-lezen-stur a voe kavet mat, e Bodadeg-Veur an Orient, gant 1 200 mouezh enep 1. Peadra a oa evel-se da ziskoulmiñ hep reuz na tabut kudenn Vreizh, ekonomikel ha kulturel, ha zoken politikel(...) Asantiñ d'al lezenn-stur a vije bet asantiñ da adsav Breizh."²⁶⁷ (...) "Ar C'hallaoued a brometas e vije roet da Vreizh ul lezenn-stur er bloaz war-lerc'h : 1963." N'eus ket bet anezhi, [a verk Bourdellez], gwashoc'h eo bet mouezhiet budget Bro-Frañs 'zo ur vezh evit Breizh". **"Skrivet em eus d'an Ao. Bourdelles, depute Lannuon, ha d'an Ao. Pléven, a skriv an Abad Pêr Bourdellez da c'houlenn diganto penaos o deus kredet votañ ur budget evel-se, ur vezh!** Ret eo hen lavarout hag en lavarout, dreist-holl dirazo ha dirak an dud. **An Emsav a zo kablus o vezañ tavet war an torfed-se."**^{268 269}

259 *L'Avenir de la Bretagne*, 16 février 1963, n°70, p. 5.

260 *L'Avenir de la Bretagne*, 16 février 1963, n°70, p 2. "Inquiétudes agricoles" get L. Pempoul (alias Bourdellez).

261 *L'Avenir de la Bretagne*, 17 août 1963, n° 82, p. 1 et 4.

262 *L'Avenir de la Bretagne*, jour décembre 1963, n° 90, p. 1 et 8.

263 CAOUSISSIN René pe CAERLEON Ronan (1914-1986) : "militant de la cause bretonne"(...) "Membre du PNB"(...) "historien engagé de l'Emsav", "(...) "a laissé quelques ouvrages qui ne manquent pas d'intérêts, indispensables pour l'étude du second et troisième Emsav", à condition, bien sûr, de resituer l'auteur dans son contexte et de se rappeler qu'il était lui-même acteur de cette histoire, engagé et donc partial." in *Emsav Dictionnaire critique, historique et biographique* par Georges Cadiou, Coop Breizh, 2013, 435 p., p. 71-72.

264 CAERLEON *La Révolution permanente 1969*, L'histoire contemporaine revue et corrigée, La Table Ronde, 1969, p.106-107.

265 *Ibid.*, p.106. Ne resisaa ket Caerleon pegourzh nag e-menn en doa lâret Bourdellez kement-se neoazh.

266 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1964, n°40, p.60-66, "Fall an eost 1964", P. Bourdelles, beleg.

267 Bourdellez, *Barr Heol* n° 40, 1960 , p. 62-63.

268 *Ibid.*, p. 65.

269 Merkiñ a reomp e gav da vBourdellez n'eo ket Emsav Breizh barrek a-zoc'h e garg. Meur a wezh eo bet skrivet kement-se getañ.

Ronan Caerleon a veneg ivez Bourdellez en dehe lâret : "Si la loi-programme n'a pas vu le jour ("ce mauvais dada que les Bretons ont enfourché", disait Pisani), **le budget 1964**, par contre, nous est tombé sur le tête comme une douche froide! Ce budget-là, ne se présente pas comme les autres : il est régionaliste, c'est-à-dire qu'il est découpé par régions. Ce budget-là est un budget d'injustice, un arrêt de mort et de ruine (...) **Accepteront-ils ces députés qui, un an auparavant, au banquet du CELIB avaient de si bon cœur mangé, juré, signé? Ils ont accepté! Tous sauf deux (Tanguy-Prigent²⁷⁰ et Blanche²⁷¹) ont voté le budget.** Tous portent et porteront la responsabilité inexorable de ce qui se passe et de ce qui se passera ces années-ci en Bretagne."²⁷²

A-benn ar fin e c'heller lâret en deus Bourdellez kenstourmet get hag a-du get ar "CELIB" hag ar "MOB". A-du e oa gete àr meur a boent pennañ ar re-se (is-diorren greantel Breizh, tud é tivroañ e-leizh, tamall diforc'h spontus 'zo etre stad ekonomikel Paris ha peurrest Bro-Frañs, a-du get an digreizenniñ, lakaat stourm evit Breizh uheloc'h evit stourm ar c'hostezennoù politikel é klask unaniñ nerzhioù ar gevridigezh e Breizh evit ma vehe adlañset ekonomiezh Breizh ... Nemet ne vo ket mui a-du get ar "MOB" pa yey henezh a-du get luskadoù politikel an tu kreiz Bro-Frañs adal 1965 ("le MOB s'insère dans le mouvement centriste français"²⁷³).

Hag e vignon Edouard Ollivro a rey kemend-arall e 1967 (daet da vout ezel ar strollad "Progrès et démocratie moderne"). Merkomp doc'h penn e oa mirourion àr an dachenn sokial ar pemp penn-bras ar gazetenn *L'Avenir de la Bretagne*²⁷⁴. Kelennadurezh sokial an Iliz an hani eo a oa stur Bourdellez èl e vo diskouezet pelloc'h er labour-mañ.

Notomp ivez e oa ar gazetenn-se a-enep stourm ar renkadoù-sokial²⁷⁵. A-du e oa Bourdellez get kement-se èl e vo gwelet pelloc'h er labour-mañ ivez.

Labour ar "CELIB", afer ar "Lezenn-Stur" d'un tu hag ar "MOB" hag ar "GEESoù" o deus klasket reiñ un diazez poblek d'ar "CELIB" betek 1966 (hep dont a-benn d'en ober neoazh), razh an traoù-se **o deus lakaet meur a zen da gompren e oa ur "gudenn" e Breizh hag o deus roet en-dro talvoudegezh da stourm an Emsav,**

Kemeret perzh en deus Bourdellez en argerzh-se. Setu ar pezh a lâr da yaouankizoù ar "MOB" etre 1964 ha 1966. "Devant votre Bretagne sous-développée, exploitée, colonisée, vous vous souviendrez que **la politique et l'économie doivent être au service du peuple et non les masses au service du capital et du système.** Révoltés par l'injustice de l'Etat inhumain, vous n'hésitez pas à vous engager dans l'action pour la défense et l'affirmation de l'Homme breton."²⁷⁶

Gober a rae ar "MOB" àr un ton habask a-walc'h àr an dachenn bolitik, c'hoant dezhañ bout degemeret èl ur strollad "dereat" nemet ne oa ket tout e bennoù-bras a-du kenetreze àr sujed-mañ-

270 Kannad pastell-Vro Montroulez (hep strollad politikel).

271 Kannad pastell-Vro Sant-Nazer (sosialist).

272 *Ibid.* CAERLEON, 1969, p. 10.

273 *Ibid.* HENRY, 2003 *Le retour du mouvement breton après 1945 à travers le journal L'Avenir de la Bretagne*, préface Michel Nicolas, Yoran Embanner, EAN 132 9782914855051 ISBN 978-2-914855-05-1, p. 567-64.

274 *Ibid.* HENRY: "Les 5 leaders de fait sont conservateurs au niveau social : Yann Fouéré, Yann Poilvet, Lukian Raoul, Yann Poupinot, Pierre Laurent."

275 *Ibid.* HENRY

276 *Ibid.* CAERLEON (Bourdellez meneget get Caerleon), 1969, p. 107.

sujed, da skouer pa veze kont a vrezel Aljeria ha muioc'h pa gavas izili 'zo ne oa ket bet efedus oberenn ar "MOB" hag ar "CELIB" pa ne oa ket bet just a-walc'h a "Lezenn-Stur".

Setu tud 'zo é klask gober en ur mod arall kostez an tu kleiz get an "UDB" e 1964 ha get ar "FLB"²⁷⁷ hag ar "FLB-ARB" un nebeud blezadoù goude.

Met a-raok sellet pizh get peseurt hent politikel e yey Bourdellez e fin ar bleadoù 1960 kreizomp àr darempredoù 'zo bet etre Bourdellez hag un den daet da bolitiker adal fin ar bleadoù 1950: Edouard Ollivro.

E Edouard Ollivro.

Jean Ollivro, mab Edouard Ollivro, en deus skrivet din²⁷⁸ kement-mañ: "l'abbé Bourdellès a exercé une influence décisive sur mon père (...). Il en a été le mentor à Saint-Jo." Edouard Ollivro a oa bet skoliad Bourdellez, a oa daet da vout mignon dezhañ. Tost-tre eo bet an daou zen. Gwelet hon eus e oant bet o daou é lañsiñ ar "GEESoù" kentañ 'zo bet, Bourdellez e Lannuon, Ollivro e Gwengamp.

Ollivro a vo maer Gwengamp (a 1961 betek 1977), kannad maered Departamant an Hanternoz er "CODER" Breizh²⁷⁹ e 1965, kannad pastell-vro Gwengamp (a 1967 da 1978), eil-presidant ar "CELIB" e 1969, presidant strollad kreizour "CD"²⁸⁰ Bodadenn Vroadel Bro-Frañs. "Moumoun politikel" Bourdellez eo bet Ollivro (biskoazh ne yey Bourdellez àr ar renk), nemet ne vo ket a-du Bourdellez getañ pa vo Ollivro a-du get Gouarnamantoù Pompidou e 1969 ha Giscard-d'Estaing adal 1974.

É lenn ur lizher kaset get Bourdellez da vBriand e miz Genver 1962²⁸¹ e weler, en doa Ollivro degaset doereioù diàr-bouez un emvod, en doa eñ kemeret perzh ennañ, a oa e bal prientiñ dilennadegoù kannaded miz Kalan-Gouiañv 1962 : **"législatives de novembre 1962**: à ce propos je crois savoir qu'Ollivro, Martray, Ducassou²⁸², Phlipponneau ont décidé de s'entendre pour mettre au point la carte des nouvelles candidatures. Aux dernières nouvelles Ollivro m'écrit : 'Réunion fraternelle simple réaliste et efficace 15 présents. Unanimité pour lancer très vite une action: Mobilisation de la Bretagne autour de la Loi-Programme.' En fait d'élections je crois que son avis est primordial : à Guingamp il avait contre lui tous les partis politiques et il les a battus, tous battus [komz a ra Bourdellez amañ ag dilennadegoù-kêr Gwengamp 1961]. Comme je suis certain qu'il n'a aucune ambition que de se dévouer pour le corps et l'âme de la Bretagne, je lui fais entière

277 "Front de Libération de la Bretagne (FLB), troet a-wechoù e *Talbenn Dieubiñ Breizh* (TDB)[2] [3] e brezhoneg, a oa un aozadur politikel kuzh oberiant etre 1966 ha 2000, a oa da bal dezhañ dieubiñ Breizh. Ur skourr armet en doa, anvet *Armée républicaine bretonne* da gentañ, deuet da vezañ *Armée révolutionnaire bretonne* (ARB) da c'houde." https://fr.wikipedia.org/wiki/Front_de_lib%C3%A9ration_de_la_Bretagne

278 d'an 17 a viz Gwengolo 2024.

279 "CODER" : "Commission de développement et d'expansion régionale"

280 "Le Centre démocrate (CD) est un mouvement politique français de centre droit. Fondé par Jean Lecanuet après sa campagne présidentielle de 1965, En 1969 se pose la question du ralliement à Georges Pompidou à partir de son élection à la Présidence de la République. Malgré le soutien de Lecanuet à Alain Poher, le centre démocrate atténue son opposition à la majorité présidentielle. D'ailleurs, les décisions du gouvernement Jacques Chaban-Delmas rejoignent souvent les propositions du mouvement. Article "Centre démocrate", in. Dictionnaire historique de la vie politique française, levr a-stroll edan renerezh ", 1995, PUF, Paris

281 Lizher Bourdellez da vBriand 03 a viz Genver 1962

282 Henri Ducassou, penn embregerezh en Oriant.

confiance. (...)." Setu peseurt fiziañs en deus Bourdellez e Edouard Ollivro àr an dachenn bolitikel e 1962.

Skrivet e vo get Bourdellez, e *Barr Heol*, miz Kerzu 1962, ur pennad "Tri fazi ur votadeg"²⁸³ (ur pennad ne oa ket bet e bar betek an amzer-se, hervez ar gazetenn *L'Avenir de la Bretagne* n° 69, miz C'hwevrer 1963²⁸⁴). Dielfenniñ a ra disoc'hoù mouezhiadeg ar gannaded e pastell-vouezhiñ Gwengamp e miz Du 1962.

Petra a zeskomp é lenn ar pennad-se a-zivout mennozhioù politikel Bourdellez? Meur a dra. Da gentañ e lâr Bourdellez e oa bet displeget mat d'an dud stad ar pastell-mouezhiñ ha stad Breizh e-pad ar c'habalerezh. Displeget mat doc'hte e-menn e oa an dalc'h. "Get re ar CELIB, paotred ar MOB, hag ar c'hambrou-micher ha kambr al labour-douar" e oa bet displeget mat an traoù, emezañ, ha n'eo ket get ar c'hostezennoù meur e oa bet graet. Amañ e weler ur wezh c'hoazh ne blije ket tamm ebet ar c'hostezennoù meur politikel da vBourdellez kalz ne vern o liv.

Bourdellez a gomz diàr "fankigell ar politikerezh"²⁸⁵. Emañ ar c'hostezennoù meur, da lâret eo an "MRP"²⁸⁶ (kristenien a-du get de Gaulle), ar "SFIO" hag ar gomunisted é kas an dud àr un hent fall : ar gasoni²⁸⁷. Ne labouront ket evit mad an dud, o mad dezhe ne lâr ket. Ret eo "digomunistañ Breizh"²⁸⁸. Neuze e cheller lâret **ne oa ket Bourdellez a-du get ar "MRP" nag ar "SFIO" e 1963 hag e oa a-enep-bev ar "gomunisted" (ar strollad politikel "Parti communiste Français")** (Komzet e vo hiroc'h a-zivout Bourdellez hag ar varksouriezh hag ar gommunisted pelloc'h).

Ha Bourdellez da zielfennañ dre ar munud astaolioù ar bouezhioù gozik kumun-ha-kumun ag an tro kentañ d'an eil, ha da damall an dibastellañ dilennel: "stoufet eo bet o genoù d'ar beorien get hennezh" a lâr Bourdellez.

An danvez-kannad a gounias e 1963 a oa kani an "MRP". Hani a blije ar muiañ da Bourdellez a oa, anat, Ollivro : "gwelloc'h e vehe bet klask an emglev get **"ur c'hristen dibolitiker [sañset Ollivro]²⁸⁹ met "Breizhad"** evit monet davet an Adsav" a skriv Bourdellez. Krouet en deus Ollivro un esperañs", a lâr Bourdellez "hini al labour, an emglev hag ar garantez evit Breizhiz."²⁹⁰ na bout ne oa ket bet trec'h ar wezh-se.

Rust eo bet Bourdellez e-keñver strolladoù politikel Emsav Breizh ur wezh c'hoazh e 1964 : "Keuz bras am eus e pled kement a Emsaverien gant mennozhioù ha ken nebeut gant an darvoudoù. E-pad m'emaint o sellout ouzh Heol ar Frankiz o vont da sevel du-hont, pell-pell...marteze... emañ ar mor o sunañ an traezh a-zindan o zreid!. **"An Emsav a zo kousket . (...)**

283 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Kerzu 1962, n° 33, p. 6-13.

284 "Les résultats malheureux des manœuvres électorales de Guingamp".

285 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Kerzu 1962, n° 33, p. 9.

286 "Le Mouvement républicain populaire (MRP) est un parti politique français existant de 1944 à 1967. Le MRP se présente comme un mouvement démocrate-chrétien et centriste, europhile, partisan d'une vision non-conservatrice et sociale du catholicisme politique". https://fr.wikipedia.org/wiki/Mouvement_r%C3%A9publicain_populaire

287 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Kerzu 1962, n° 33, p.11.

288 *Ibid.*, p.13.

289 *Ibid.*, p.8.

290 *Ibid.*, p.11.

Gwa an dall [Breizh] hentchet gant un dall all.[an Emsav]" e "Fall an Eost 1964"²⁹¹. Klask a ra Bourdellez lâret amañ n'o deus ket pledet emsaverion 'zo get kudennoù ekonomikel, an divroañ, stourm evit ar lezenn-stur ha kement 'zo. Rust ivez e-keñver kazetenn ar "MOB" *L'Avenir de la Bretagne* memp, ur gazetenn a embann neoazh ur pennad flemmus get Bourdellez a dabut anezhi pa ne renta ket kont ag traoù fetis bet graet get Bretoned.²⁹²

F Bourdellez e kendalc'h "Strollad Ar Vro" e Mae 1972.

Anna Youenou he deus skrivet e 1983²⁹³ he doa kejet get Bourdellez d'an 20 a viz Mae 1972²⁹⁴ e Mur da geñver keñdalc'h "Strollad Ar Vro"²⁹⁵. Krouet e oa bet ar strollad politikel-se e miz C'hwevrer 1972. "A droite, le Strollad Ar Vro (parti du pays) défend les couleurs d'un **régionalisme de droite modéré** jusqu'au milieu des années 1970 avec un certain impact sur l'électorat breton" a skriv ar politikoniour Romain Pasquier e 2004²⁹⁶.

Doc'h lenn Manifesto ar strollad-se embannet getañ e 1972²⁹⁷ e weler splann e balioù politikel:

- goulenn a ra e vo adlakaet Breizh en he frankiz hrevez feur 1532, e vo stad Breizh²⁹⁸ un tamm ag Stad Bro-Frañs get ma vo daet hennezh da vout ur gwir stad kevreadel, neuze e vo stad kevreadel Bro-Frañs un tamm ag Stadoù-Unanet Europa da zont...
- sevel a ra a-enep ar gevalaouriezh, ar sokialouriezh, ar faskouriezh, an naziegezh, ar c'houennelouriezh, an hollvelouriezh.
- an dra bouesushañ da SAV 'zo lezel pep den da vevañ ha da zispakat él ma gav mat dezhañ en e strollad etnek,
- SAV a gav dezhañ ivez e fell d'ar gevredigezh mont à-raok en ur glask emglev etre ar renkadoù sokial (ha neuze pas get stourm ar renkadoù).

P'en deus Bourdellez kemeret perzh e Kendalc'h SAV e 1972 eh eus moaian d'ober ar marseadenn-mañ e oa eñ, d'ar mare-se, a-du get ar pezh a oa e manifesto hennezh. Kaeroc'h en em harpiñ a ra manifesto SAV àr ur pennad get ar pab Yann XXIII.²⁹⁹ Hag èl e vo gwelet pelloc'h e

291 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1964, n°40, p.60-66. "Fall an eost 1964", get P. Bourdelles, beleg, p.66.

292 *L'Avenir de la Bretagne*, octobre 1963, n°85, p. 2. "Ce qu'il faut dire" get l'Abbé Pierre Bourdellès.

293 *Fransez Debeauvais de Breiz-Atao et les siens Tome VI "Après la tourmente, (Après la disparition du Chef Breton, mémoires de sa femme)*, Auto-édition Rennes, 1983, 585 p. (p. 549-550)

294 Resisaat a ra Youenou (*Ibid.*, p. 550) n'he doa ket gwelet Bourdellez abaoe 35 blez - da lâret eo abaoe 1937).

295 An emvod-se o doa kemeret perzh ennañ ivez (hrevez Youenou *Ibid.*, p. 549-550) : Christian Guionvarc'h, Raymond Tassel, Abherve Gwegwen.

296 PASQUIER Romain in "L'Union Démocratique Bretonne ou les limites de l'expression partisane autonomiste en Bretagne", *Pôle Sud*, vol.20, n°1, 2004, p.113-132 (DOI 10.3406/pole.2004.1181)

297 Strollad Ar Vro, *Manifeste*, Collectif, 1972, Kemper, <https://bibliotheque.idbe.bzh/document.php?id=strollad-ar-vro-manifeste-1972-6001&l=fr>

298 "Le mouvement Strollad Ar Vro réclame un véritable pouvoir régionalisé", in *Le Monde*, 30 05 1973.

299 "De même que l'on ne peut enlever aux particuliers pour les transférer à la communauté les attributions dont ils sont capables de s'acquitter de leur seule initiative et par leurs propres moyens, ainsi ce serait commettre une injustice en même temps que troubler d'une manière très dommageable l'ordre social que de retirer aux groupements d'ordre inférieur pour les confier à une collectivité plus vaste et d'un rang plus élevé les fonctions qu'ils sont en mesure de remplir eux-mêmes. L'objet naturel de toute intervention sociale est d'aider les membres du corps social, et non pas les détruire et les absorber." Jean XXIII.

klask dalc'hmat Bourdellez en em harpiñ àr gelennadurezh an Iliz (lizherioù-meur, pennadoù skrivet get Doktored an Iliz ha kement 'zo).

N'em eus ket kavet roud ag Bourdellez pelloc'h e strolladoù politikel arall Emsav Breizh, da skouerioù : an "UDB" krouet e 1964 pe ar "POBL" krouet e 1982 pe "Emgann" krouet e 1983 pe ur strollad a-rall nemet ar "FLB".

G É kompren oberoù "Talbenn Dieubiñ Breizh".

Ar c'hennaroud: e 1966 e oa bet embannet er gazetenn *L'Avenir de la Bretagne* ur gemennadenn a-berzh ar "Front de Libération de la Bretagne", setu ur bomm anezhi : "Nous reprenons le combat progressiste et révolutionnaire que chaque génération de Bretons a entrepris pour la **liberté de la Bretagne** et pour le **droit des Bretons à rejeter le statut colonial** afin de **se gouverner lui-même.**"

Embannet e vo d'an 28 a viz an Azvent 1968 Manifesto ar "Conseil politique national du Front de Libération de la Bretagne (FLB)" a skriv Ronan Caerleon³⁰⁰. Petra e oa ha petra a faote d'ar FLB-se ? Goulenn a ra e vehe mistri ar Vretoned en o bro^{301 302}, nac'h a ra stad trevadennet Breizh get Bro-Frañs èl m'emañ³⁰³, a-du eo get "pennaennoù ar sokialouriezh."³⁰⁴ **Temoù an FLB 'zo tost-tre da re displeget get vBourdellez.** Posubl e vehe bet dezhañ siniñ ar pennadoù meneget a-us.

E 1967 e oa bet graet dija un tregont bennak a walldaolioù get an ARB-FLB³⁰⁵ : Prefetioù, Kazarnioù an Archerien, Tier an Taosoù ha savadurioù publik e Breizh da lâret eo arouezioù Stad Bro-Frañs³⁰⁶ a voe bet graet vil dezhe. Ha tud a oa bet arestet e 1968.³⁰⁷ Tud arall a vo arestet e deroù miz Geñver 1969 en o zouez pevar beleg eskopti Sant-Brieg ha Landreger. Kentañ "meeting" ar FLB a oa bet dalc'het e Paris sal ar "Mutualité" d'an 05 a viz Du 1969. E-touez ar seiz prezegour e

300 Testenn ar Manifesto-se a vez kavet e-barzh *La révolution bretonne permanente*, CAERLEON, Ronan, L'histoire contemporaine revue et corrigée, La Table Ronde 1959, 344 p. (pp. 289- 294).

301 "Nous dénonçons tout d'abord le fait qu'un peuple ou une entité distincte soit privée du pouvoir politique de gérer ses propres affaires en raison de la domination coloniale et impérialiste qui les affecte (p. 291).

302 "Nous sommes avant tout nationalistes et indépendantistes" (Manifesto FLB 1968 p.292).

303 "Nous sommes dans une situation coloniale type, où une poignée d'entrepreneurs capitalistes étrangers représentés par l'Etat français, exploitent et transforment à leur gré et selon leurs désirs et leurs intérêts, les richesses naturelles et humaines d'une **communauté indigène impuissante, asservie, assimilée**, c'est-à-dire **presque détruite.**" ((Manifesto FLB 1968 p. 289-290).

304 "Le peuple breton n'étant qu'un peuple prolétaire et de prolétaires maintenus volontairement à ce stade par les intérêts capitalistes, maîtres de l'Etat français, nous ne pouvons donc concevoir notre combat que dans une adhésion aux principes généreux du socialisme. Mais notre socialisme refuse quoi que ce soit de commun avec le socialisme étatique, bureaucratique, autoritaire et impérialiste pratiqué par les Etats qui n 'ont fait que remplacer le capitalisme privé par un capitalisme d'Etat tout autant oppresseur." (Manifesto FLB 1968 p. 291).

305 "Le Front de libération de la Bretagne (FLB) est une organisation indépendantiste bretonne active de 1966 à 1981. Deux branches armées se disputeront l'appellation F.L.B., l'Armée républicaine bretonne ou ARB, dès 1968, et l'Armée révolutionnaire bretonne, à partir de 1971. De cette date à 1974, les deux ARB revendiquaient leurs attentats."

https://fr.wikipedia.org/wiki/Front_de_lib%C3%A9ration_de_la_Bretagne

306 *Ibid.*

307 Da skouer : Caerleon,1969, p. 316 : "Le 30 décembre 1968 la police judiciaire d'Angers a procédé à Nantes à des arrestations de plastiqueurs bretons ayant opéré en Loire-Atlantique".

kaver an Aotrou Abad Aimé Le Breton, person Gwannac'h ha Trevereg. Lâret a ra³⁰⁸ : "Je vous parle ce soir au nom de plusieurs dizaines de mes confrères, recteurs dans les paroisses ou **professeurs** [Bourdellez moarvat en o zouez] dans les écoles qui souffrent comme moi des souffrances trop lourdes et des injustices trop graves que subit notre **peuple** depuis trop longtemps. "

A viz Kerzu 1968 da viz Genver 1969 e voe lañset ur c'houlzad kelaouiñ get kazetenn *L'Avenir de la Bretagne* a-benn sikour ar re bet toullbac'het. E fin miz Genver 1969 e skrivo 127 beleg ur lizher kaset da bPresident Republik Bro-Frañs evit ma asanto hennezh selaou doc'h klemmoù ar vBretoned. Ur lizher arall, sinet ar wezh-mañ get 258 den, a vo kaset d'ar Jeneral de Gaulle e miz Here 1969. Fromet eo ar vBretoned goude bout gwelet e oa bet toullbac'het e prizon 'La Santé' laiked ha belean, a lenner er lizher-se. Ur strollad belean get an abad Le Breton a c'houlenn da bep unan bout kengred get an dud tamallet hag ivez get labourerion-douar, pesketourion, micherourion Breizh.³⁰⁹ Pedet eo ar vBretoned mont e-barzh ar poellgor-souten a zo é chom e ti an abad-se.³¹⁰

Bourdellez e-barzh ar jeu: Er gelaouenn *Barr Heol*, n° 69, Kerzu 1969, p. 57-60, e pennad "Sarmon parrez Treogan" (ur sarmon bet graet moarvat un tammig amzer a-raok embann niverenn-se ar gelaouenn-se) e kav digarez Bourdellez da dud ar "FLB" bout implijet an nerzh evit 'en em zifenn' da lâret eo da zifenn ar vBretoned ha kement-se "hervez kelennadurez an Iliz" dre "an doktor bras Sant Tomaz" da lâret eo en em harpañ àr skridoù Sant Tomas Akin.³¹¹: "Diwezhañ gwech e teuis da oferenn en iliz venniget an Aotrou Sant Kogonan [iliz parrouz Treogan], e oa tud vat eus hon bro er prizon, ha beleien ganto, hag em boa diskleriet deoc'h, hervez an doktor bras Sant Tomaz kelennadurez an iliz war implij an nerzh pa vez ret d'an den en em zifenn."³¹²

Komz a ra Bourdellez moarvat ag tud toullbac'het e miz An Azvent 1968 e Naoned hag ivez ag an 53 arall bet toullbac'het e 1968-1969 en o zouez (bet toullbac'het e miz Genver 1969) an Aotrou Barz, Kure Kallag, an Aotrou Gwilhom ar C'hamm, Person Plouvagor, breur an Aotrou Barz, Arzhur, Kure Sant-Visant Sant-Brieg, ha Kure-skolaer Plijidi, an Aotrou Job Lec'hvien.³¹³

"Beleion Breizh" ur gevredigezh kaset en-dro dreist-holl get Bourdellez ha Marsel Blanchard (Kure Kerlenn Pondi)³¹⁴ an hani eo a zastumas 127 sinadur beleion a c'houlenne ma vehe lezet da vonet an dud toullbac'het en o zouez ar pevar beleg-se. Displeget e oa er lizher e oa gwalldaolioù bet graet get ar FLB a-du get meur a emsav-klemm a oa bet e Breizh er bleadoù 1950

308 En un diell roneotypet 38 pajenn + Manifesto an FLB (4 fajenn) " FLB Front de libération de la Bretagne, 1er meeting, salle de la Mutualité Paris le 05 novembre 1969". (p. 18)

https://bibliotheque.idbe.bzh/data/gouren/cle_19_15_mars_2016/F_L_B_Front_de_LibAration_de_la_Bretagne_.pdf

309 *Ibid.* CAERLEON, p. 321-322

310 HENRY, Lionel. *L'histoire du FLB*, p. 82 83 (Bommoù troet e brezhoneg geniñ)

311 "Thomas d'Aquin, né en 1225 ou 1226 (...) et mort le 7 mars 1274 (...), est un religieux italien de l'ordre dominicain, célèbre pour son œuvre théologique et philosophique. https://fr.wikipedia.org/wiki/Thomas_d%27Aquin

312 *Barr Heol*, n° 69, Kerzu 1969, p. 57.

313 E niverenn 123 ar gelaouenn *Ar Bed Keltiek* Ebrel ,1969, p. 82 e kaver ur pennad tennet ag *Kelc'hlizher ar veleion* sinet ur "Strollad Beleien Vrezhon" a zispleg " ez eus aotre d'ober gant ar freuz evit en em zifenn."

314 Pajenn wikipedia "Kristenion Breizh" https://br.wikipedia.org/wiki/Kristenion_Breizh

ha 1960. Echuñ a rey an afer pa vo graet un distaoler da re a oa bet arestet get ar President Pompidou.^{315 316}

Lionel Henry en deus skrivet en doa soutenet Bourdellez tud ar "c'hentañ FLB", da lâret re o doa graet gwalldaolioù a 1966 betek 1969³¹⁷. Ha gwir eo p'en deus prezeget a-du gete en un oferenn diantao, p'en deus kemeret perzh é tastum sinadurioù belean da zifenn tud toullbac'het.

Dirak Lez-Varn Surentez ar Stad e yeas Bourdellez pelloc'h, e miz Meurzh 1977 da zifenn an Aotrou Abad Aimé Le Breton e 1977³¹⁸. Nizez Bourdellez, Yvette Meurou, he deus dalc'het soñj bout degemeret en he zi e Paris an daou abad d'ar c'hourz-se.³¹⁹ Ronan Caerleon a gomz ivez a-zivout an dra-se.³²⁰

Moarvat o doa Bourdellez hag an abad le Breton eskemmet a-raok meeting kentañ ar FLB am eus komzet diàr e benn uheloc'h. Ar pezh a oa bet lâret get le Breton a oa bet roet kred dezhañ get Bourdellez. En afer ar FLB, e fin ar bleadoù 1960 hag er bleadoù 1970, o deus labourer Bourdellez ha le Breton dorn-ha-dorn èl eo bet gwelet (evit sikour an tud toullbac'het). E 1971 e oant bet aterset o daou assemblez get ar gazetenn *Le Monde*.³²¹

Fañch Kerrain a oa bet aterset-eñ get ar gelaouenn *Pobl Vreizh* e 1990³²², goude marv Bourdellez. Setu ur bomm ag an atersadenn-se : An aterser : " Bez ez eus mennozioù Pêr Bourdellez 'zo hag a laka diaes : **an doare ma vez ar feulster** ". Respont Kerrain : "En em c'houlenn a ran ha

315 LOSTEC, Fabien (istorour): "Les attentats du FLB, Front de Libération de la Bretagne" <https://fresques.ina.fr/ouest-en-memoire/fiche-media/Region00063/les-attentats-du-flb-front-de-liberation-de-la-bretagne.html> : " Le premier FLB (1966-1969) plastique perceptions, gendarmeries, bâtiments administratifs, installations militaires, "pour la liberté de la Bretagne". Toutes ces opérations doivent endommager des bâtiments mais ne doivent pas blesser ou tuer. Il s'agit d'attirer l'attention de l'Etat sur les problèmes bretons. C'est ainsi que le 27 avril 1968, le dépôt de véhicules des CRS à Saint-Brieuc est détruit. L'apparition de l'ARB - Armée républicaine, puis révolutionnaire, bretonne - entraîne une escalade. Peu de temps avant le voyage du général de Gaulle en Bretagne, au début de l'année 1969, 53 membres sont arrêtés. Ces arrestations satisfont pleinement le ministre de l'Intérieur de l'époque, R. Marcellin, maire de Vannes (...). En établissant un rapprochement entre le FLB et les autonomistes bretons de la Seconde Guerre mondiale, les autorités françaises semblent les assimiler aux nostalgiques du nazisme. **Une partie de la population bretonne, exprime au contraire une certaine solidarité, en voyant dans l'action du FLB une convergence avec les mouvements revendicatifs des années 1950 et 1960.** L'amnistie décidée par Georges Pompidou en 1969 met finalement un terme aux poursuites judiciaires, tandis que René Pleven - qui n'est autre que le président du CELIB - est nommé ministre de la Justice. A ce titre, il n'engage pas de poursuite contre les acteurs de publications autonomistes, au grand dam du ministre de l'Intérieur, breton lui aussi."

316 Lezenn n° 69-700 du 30 juin 1969.

317 *Dictionnaire biographique du mouvement breton* Lionel HENRY, Yoran Embanner, 2013, 431 p., (p. 48). "De 1966 à 1969, l'organisation, influencée par des membres fidèles au courant nationaliste traditionnel, va poser ses bases et perpétrer une première série d'attentats pour la plupart "symboliques", et s'inscrivant dans une lecture purement nationalitaire des problèmes bretons."

318 Testadur bourdellez a-du get an abad le Breton a gaveher penn-da-benn e-barzh stagadenn VIII ar labour-mañ. An Abad le Breton a oa bet tamallet bout gouarnet ha kaset danvez tarzh ha savet en-dro ar « F.L.B. »

319 Testeni dastumet geniñ get e nizez Yvette Meurou a oa é chom d'an amzer-se e Pariz hag he doa roet bod dezhe en he zi.

320 CAERLEON, Ronan, *Les Bretons le dos au mur : le FLB devant la Cour de sûreté de l'État*, 2002, Celtics Chadenn Série(s) : Non précisé., Collection / Brittia, devoir de mémoire".

321 Kazetenn *Le Monde* 03 - 07 a viz Eost 1971, "Enquête sur le 'Régionalisme' " Henri DELIGNY, Atersadenn Bourdellez ha Le Breton getañ.

322 Fañch Kerrain *Pobl Vreizh* n° 315 mars 1990 p.13.

n'eo ket treuzintented e soñj gant an arvesterien hag a ra un tabou eus an tem-se. Er bloavezhioù 1970 en doa distaget Per Bourdellez prezegennoù a-zivout ar FLB³²³ : **ar gudenn evitañ ne oa ket bezañ a-du pe a-enep ar strollad-se** hogen klask sklaeriañ saviad hon bro. Ur fed e oa hag a oa da vezañ komprenet. **Eñ a oa, araok pep tra, un istorour hag ivez unan hag en doa kemeret perzh e istor hon bro er bloavezhioù 1960 gant krouiñ ar GEES evit reiñ dorn d'ar CELIB.** Gouzout a rae penaos e oa bet kont gant afer al "lezenn stur", peseurt esperañs a oa bet savet gant an dra-se ha peseurt dizesper en doa reuziet ar c'halonoù war-lerc'h nac'hidigezh ar Stad. **An FLB a veze diskleriet gantañ evel un heuliad eus ar c'hwitadenn-se hag un azon eus trajedienn euzhus ar vro** war an dachenn ekonomikel, kevredigezhel ha sevenadurel. N'eo ket kanmeuliñ ar FLB an hini a felle dezhañ ober, steriañ ar feulster e Breizh ne lavaran ket, kenkoulz hini ar strollad-se hag hini al labourerien-douar pe a-wechoù hini ar c'hantvedoù kent."

G Bourdellez hag an Iliz : bec'h kenetreze adal ar bleadoù 1950.

Kemeret perzh en deus Bourdellez en un ensavadur arall n'eo ket unan politikel met relijiel³²⁴: an Iliz. Soubet eo bet e aergelc'h kristen e familh pa oa ur bugel, frammet get ur soklaj kristen (lojer adal e 12 vlez e skolaj Sant-Jozef Lannuon), stummet get an Iliz en Hennbont hag e Tunis da vout misioner, neuze e kloerdi Sant-Brieg ha neuze lakaet da veleg e1932.

É studial euriou ha dizeurioù 'zo bet e darempredoù etre Bourdellez ha pennoù-bras an Iliz, pennadoù en deus skrivet Bourdellez a-zivout Iliz Breizh, é tielfenniñ pennadoù Bourdellez a-zivout emdroadurioù ar Bleun-Brug, ar skolioù kristen ha kloer Breizh e vo marse moian diguzhat mennozhioù politikel Bourdellez. An Iliz hec'h unan 'zo renet get tud n'int ket neptu àr an dachenn-se, na pennoù-bras an Iliz na Bourdellez. Sellomp.

Bourdellez 'zo bet **a-du get gouelioù Bleun-Brug stumm an Abad Perrot.** Ur prezeg-stur en deus lâret e galleg diàrbenn ar Bleun-Brug d'an 26 a viz Mae 1957 e Rostren da geñver gouel ar Bleun-Brug aozet just a-walc'h du-se : *Le Bleun Brug sa doctrine, son esprit, ses combats*³²⁵. Bet eo bet oberiant-bras er gouelioù-se nemet adal 1951 e trenko darempredoù Bourdellez get pennoù-Bras 'zo ar luskad-se.

Bourdellez 'zo bet **ur c'helenner é labourat en ur skol gristen**³²⁶ nemet ne vo ket mui a-du get ar programmoù istor a veze kelennet enni na get ar fed ne veze ket kelennet ar brezhoneg enne. Muioc'h e rebech d'ar skolioù gristen ne gelemont ket mui en ur spered kristen.

Bourdellez a damall **Iliz Breizh** dre vras p' **he dehe honnezh dilaosket ar Vretoned kristen.** N'he deus ket degemeret e oa don ar feiz enne. Klasket he deus lakaat àrné stummoù nevez é tiskenn a-zoc'h pennoù bras an Iliz. An disoc'h 'zo bet spontus, d'e venno-eñ : gosig digristeniet emañ daet Breizh da vout.

323 N'int ket bet adkavet geniñ (nemet sarmon Treogan).

324 "Figure marquante du clergé" *Le Télégramme*, 25 07 1989, "Nécrologie: l'Abbé Pierre Bourdellès"

325 Ur prezeg rannet e tri chabistr "un siècle tous les dix ans", "populo sancto Dei = pour le saint peuple de Dieu", "un chapelet qui se brise" 13 pajenn etretout.

326 Betek mis Even 1966 (ha c'hoazh ne rae ket mui e 1963/64 nemet 3 eur Istor ha doaroniezh/ "Arrêté du Recteur d'Académie du 23 011964 : service de 3 heures en qualité de maître auxiliaire/ dielloù Yvette Meurou).

1° Ur bleuñv-bruger penn-kil-ha-troad daet da vout ur bleuñv-bruger é winkal.

Kemeret perzh en deus Bourdellez e gouelioù ar Bleun-Brug adal 1934 (a-dra sur pa 'meus kavet roudoù ag an dra-se, marse koursoch'h c'hoazh) ha bet eo bet oberiant enne alies-tre. N'em eus ket kavet amzer da furchal razh a-grenn e dielloù ar Bleun-Brug 'zo goarnet e levraoueg Abati Landevenneg. Koulskoude e c'heller lâret en deus kemeret perzh er gouelioù-mañ d'an nebeutañ : 1934 Montroulez³²⁷, 1938 Lannuon³²⁸, 1953 Boulvriag³²⁹, 1954 Pleuvian³³⁰, 1955 Landivisiau³³¹, 1957 Rostren³³², 1957 Landreger³³³, 1958 Pervenat³³⁴, 1958³³⁵. Setu Bourdellez é komz diàrbenn ar vBleuñv-Brugerion : tud "un nerzh en o c'hreiz"³³⁶. Unan anezhe eo bet-eñ. Kement-se eo bet kadarnaet din get Jean-Louis le Tacon³³⁷. Goude ar brezel 1939-45 e yae tud a-yoc'hadoù da c'houelioù ar **Bleun-Brug**³³⁸ (40 000 den e Kastell-Paol da skouer e 1950).

327 *Breiz*, niverenn n° 373, 16 Eost 1934, p. 3 ha 4. "Ar Bleun-Brug e Montroulez" Abad Per Bourdelles

328 "(...) evit Bleun-Brug 1938 e Lanuon, hon devoa savet un abadenn c'hoariva gant an teir oberenn-mañ : *Fostus an Doktor daonet* [troet e brezhoneg get Roparz Hemon diget Christopher Marlowe (1564-1593)], *An Tamall*, eus Langleiz, ur pezh hag a oa ennañ ur gentel evit ar gerent a fell dezho reiñ un deskadurezh c'hall d'o bugale a-raok an hini vreizhat, hag *Ar C'hornandoned diwezhañ*, ur gontadenn eus Mari-Anna Abgrall, kempennet evit ar c'hoariva gant an aotrou Perrot ha me. Met un dra koulskoude va souezhas gant Fostus : ugent c'hoarier. Ha Roparz Hemon da reiñ ar guzuliadenn-mañ : "A-walc'h ez eus gant c'hwec'h. Unan a raio Fostus, unan Mefistofelez. Ar rolloù all a c'hell bezañ rannet etre pevar c'hoarier !". Furoc'h e kavimp memes tra ober gant dek, rak hor c'hoarierien-ni ne oant ket c'hoarierien ouesk, boazet da vale war roudoù Frigoli (...). Rak-se 'ta, an darn vrasañ eus c'hoarierien Fostus, dre ma oant eus Lanuon hag eus Bear (Kelc'h keltiek hor mignonez Ivona Galbrun), a voe kenteliet gant an aotrou **Per Bourdelles, dedennet eñ ivez gant Fostus Marlowe.**" Herri KAOUISSIN, "Roparz Hemon hag arz ar c'hoariva : 'Fostus an Doktor daonet'", *Al Liamm*, 1978, p. 442-445

329 *Bleun Brug, expression d'un idéal breton* Père Marc Simon, 1998, 122 p., Association Abati Landevenneg.

330 *Ibid.*

331 Kelaouenn *Bleun Brug*, Here 1955, n° 84.

332 Lizher Bourdellez da Briand 14 10 1957.

333 Lizher Bourdellez da Briand 10 10 1957.

334 *Barr Heol* niverenn 16, Gwengolo 1958. Pennad "Gweltaz Fur, taolennoù war vuhez Sant Weltaz" p. 24-32 get Bourdellez, c'hoarier e goul Pervenat.

335 Lizher Bourdellez da Briand 01 07 1958 : Bourdellez a skriv en deus labouret ur bochad evit aozñ ar Bleun-Brug d'ar blez-se : "le Bleun Brug m'a demandé énormément de choses, tout mon temps y passe mais il fallait à tout prix cette année imposer le Bleun Brug à l'opinion, à l'évêque et l'évêché, à la bourgeoisie "Ça commence" "De sorte que désormais nous pourrions parler clairement et franchement sans être catalogués d' 'autonomistes'."

336 *Studi hag Ober*, diskar-amzer 1942, n°19, p. 115-126. "Yann V", get P. Bourdelles (prezegenn displeget en Iliz-veur Landreger get ar Bleun-Brug 1942 d'an 30 a viz Eost 1942).

337 "Organisteur de Bleun-Brug" a oa bet Bourdellez a skriv din Jean-Louis le Tacon (Postel kaset din get hennezh d'an 05 a viz C'hwevrer 2024 ("*Né en 1945 en Bretagne, Jean-Louis Le Tacon est un réalisateur, vidéaste d'art, militant. Il passe d'une formation en théologie catholique à la sociologie marxiste, puis du film militant en Bretagne au film ethnographique, initié par Jean Rouch. Film de fin d'études pour son doctorat, tourné en Super 8, Cochon qui s'en dédit remporte le Prix Georges Sadoul en 1980.*" Mamenn : *tënk la plate-forme du cinema*, https://www.film-documentaire.fr/4DACTION/w_liste_generique/C_407_F)

338 Michel NICOLAS meneget get Christian BRUNEL, kounskrid, p. 98.

Oberiant eo bet Bourdellez e gouelioù Bleun-Brug dreist-holl àr dachenn ar choariva³³⁹

^{340 341} a oa ur lodenn bouezus er gouelioù-se hervez Christian Brunel³⁴².

"Les **mouvements d'action catholique** étaient devenus des agents actifs de la **francisation** visant l'intégration de la Bretagne à l'ensemble français³⁴³ mais **s'éloignaient de l'idéal de l'Abbé Perrot**³⁴⁴. Tous les défenseurs de la Bretagne et de sa langue se sont retrouvés dans le Bleun-Brug.³⁴⁵ Gouelioù ar Bleun-Brug aozet a-raok ar brezel (neuze pa oa bev an Abad Perrot) a vo gwanaet o stumm broadelour goude hennañ, pouezet e vo kentoc'h àr ar relijion hag ar 'folklor'.³⁴⁶

339 "les jeux scéniques étaient souvent préparés par l'**Abbé Bourdellès** et M. Cadoudal" (p. 140) "Le jeu scénique était l'occasion unique pour une population qui ne connaissait pas l'histoire de son pays de l'apprendre en le jouant, et de l'apprendre aux autres qui le regardaient et c'était en breton." a lâr an Abad le Breton é komz ag gouel Boulvriag 1953 (meneget get Christian Brunel, 1982, Mémoire sur "le Bleun-Brug 1943 1963, p. 132. "Le comité du Bleun-Brug du Trégor participa à son succès, grâce en particulier aux mises en scène de grande tenue historique et littéraire de l'**abbé Bourdelles** », Christian Brunel, Juin 1984, *Les Cahiers du Trégor* n° 7, p. 20.

Meneg a ra Brunel ivez (p. 17-18) e oa bet choariet: "*Faustus, an Doktor daonet* adaptée par Roparz Hemon d'après l'œuvre de Christopher Marlowe avec le concours de l'**abbé Bourdellès** et d'acteurs du collège Saint-Joseph de Lannion", e Lannuon da geñver gouel Bleun Brug 1938.

340 Un nebeut pezhioù-c'hoari skrivet ha lakaet àr ar leur get Bourdellez eo bet renablat : *An Tad Maunoir* /Bleun Brug Gourin 1968 (n'eo ket bet kavet, ur pennad a-zivout an arvest-se e Bleun-Brug n° 172,1968 p. 9-10), *Guirec* (Bleun Brug ne ouier ket pegourzh, n'eo ket bet kavet), *Gweltaz fur* (taolennoù war Vuhez St Weltaz) : *Barr Heol* n° 16, p. 24- 32, Bleun Brug Perwenan, 22 a viz Even 1958. *Arthur* (Bleun Brug ne ouier ket pegourzh, n'eo ket bet kavet)/ *La quête du Grall* (Bleun Brug, ne ouier ket pegourzh, n'eo ket bet kavet); moarvat eh eus bet a bezhioù arall.

341 E lenn *l'Echo de Lannion* n° 516, p. 3 e anaver en doa lakaet Bourdellez ur pezh-c'hoari skrivet get Tristan d'Ardenne e galleg "Le Roi Arthur et la Conquête du Graal" àr al leur e park kastell Kerduel Pleuveur-Bodoù dirak pennoù-bras ar vro.

342 BRUNEL Christian, "La Tradition du jeu scénique en Bretagne au XXème siècle, in *Les Cahiers du Trégor* n° 7, juin 1984, p. 17-21 : "Fondée en 1905, dans le but de maintenir et de créer une culture propre face à une pression externe de plus forte, le Bleun-Brug ne se départit jamais du triple objectif qu'il s'était fixé : catholique, breton et populaire. Chaque année ses assises, lieu de rencontre de plusieurs milliers de personnes, permirent l'expression de nombreuses créations littéraires et artistiques. » (...) "Le théâtre conserva, au cours de la longue vie du Bleun-Brug, une place de première importance, et l'association apporta une contribution active au développement de diverses formes à l'expression. » (...) "Après la dernière guerre [1939-1945], Bernard de Parades et Herri Caouissin conjuguèrent leurs efforts et leur expérience théâtrale pour adapter à la scène bretonne une forme d'art dramatique renouvelée : le jeu scénique (au XVIIème siècle, le Père Maunoir et ses disciples utilisèrent ce genre d'expression pour évangéliser les populations bretonnes.). Il s'agissait moins d'une rupture que de l'aboutissement des recherches entreprises en matière de théâtre par le Bleun-Brug dans les années 30." "Herri Caouissin subit l'influence de Léon Chancerel, le pionnier en France de ce genre d'expression. théoricien du théâtre d'amateurs participa à la découverte de techniques antiques comme le masque ou le mime. » (...) "**Le théâtre**, dans l'esprit des dirigeants du Bleun-Brug, ne pouvait se contenter d'être un spectacle, même de qualité, enrichi par une mise en scène élaborée, mais devait être conçu comme un **moyen de formation privilégié, animé par une volonté d'éducation populaire.**" Il s'agissait "à travers l'évocation – d'inspiration parfois plus ou moins légendaire - de grands personnages de l'histoire de Bretagne, de redonner aux Bretons, la fierté d'une culture et d'un passé propres." "Dans les années 50 en Bretagne, on assista à l'émergence d'une nouvelle culture qui se substituait à l'ancienne civilisation paysanne. L'Eglise grâce à laquelle la langue et les traditions bretonnes s'étaient maintenues si longtemps, participa à la désidentification, faute de souvent être en mesure de maîtriser [ce] changement (...). Il, apparut nécessaire aux **dirigeants du Bleun-Brug de s'adapter à la nouvelle physionomie bretonne. Le jeu scénique bilingue** entendait réussir le difficile pari de satisfaire un public étranger, avide de "folklore" de plus en plus nombreux en période estivale, sans rien sacrifier de la place de la langue bretonne." (ar pezhig *Tad Maunoir* skrivet get Bourdellez, bet c'hoariet e Gourin e 1968 a oa un pennad divyezhek, 5 pajenn (Kelaouenn *Bleun Brug*, n° 172, 1968, p. 9. (...) "La formule du jeu scénique fut reprise souvent dans les années qui suivirent".

343 Brunel p. 98.

344 *Ibid.*, p. 115.

345 *Ibid.*, p. 37.

346 *Ibid.*, p. 98.

Bec'h a savo etre belean Bro-Dreger 'zo, en o zouez Bourdellez, Loeiz ar Floc'h, Armañs ar C'halvez ha Marsel Klerg ha pennoù bras ar Bleun-Brug adalek ar bleadoù 1951 da gentañ ha pelloc'h adal 1954. E 1956 ar gelaouenn *Barr Heol*, a oa betek neuze kelaouenn Bleun Brug Bro-Dreger, a zay da vout ur gelaouenn diere get Marsel Klerg³⁴⁷ en he fenn, ha Bourdellez da genlabourer plaen.³⁴⁸

En ur lizher skrivet d'an 10 a viz Here 1957 da vBriand e kont Bourdellez ar pezh a oa bet lâret en un **emvod meur ag ar Bleun-Brug dalc'het e Gwened d'an 13 a viz Here 1957** en doa Bourdellez kemeret perzh ennañ. A-zivout re "Ar Falz"³⁴⁹ : Bourdellez a lâre en deus lâret e soñj : mennout a ra kenderc'hel labourat gete ("j'ai défendu le maintien des collaborations avec les laïcs communistes d'ar Falz mais en présentant les choses de la façon suivante : on continue de collaborer dans le diocèse de Saint-Brieuc mais avec discrétion et "avec prudence à cause des roublardises des francs-maçons et des communistes" : mais cette position a suscité des "cris" et de "raisonnements divagants" "nous avons été accusés (c'est tout ce que j'en retiens de clair) d'autonomisme" pour avoir (...) invité Huon [Ronan]³⁵⁰ et Fouéré [Yann] au banquet du Bleun-Brug de Rostrenen! » (...) "Je les ai noyés de réponses tour à tour débordantes d'amitié (...) et violemment indignées. J'aime assez ce sport-là, et je m'en accuse, car ce n'est pas très sacerdotal : ça a duré une heure et demi au moins. Et la question n'a pas avancé d'un mot. Demain quand je serai reposé j'écrirai à Gab³⁵¹ pour lui dire que son Bleun-Brug est une pagaïe dans les faits et dans les idées et dans les finances et qu'il faudrait mettre ordre à cela avec l'aide de ce magnifique Bleun-Brug de Tréguier qui marche si bien (...) et qui lui est dévoué."

Rebechet e veze neuze da vBleun-Brugerion Bro Dreger, neuze da vBourdellez, kenlabourat get tud an tu kleiz d'un tu ha get tud re "vroadelour" d'un tu-arall. Ha lakaet e oa bet Bourdellez da "emrenerour" get Presidant ar Bleun-Brug e 1957.

Kenderc'hel a ray Bourdellez koulskoude da gemer perzh e gouelioù ar Bleun-Brug hag er "stages de culture bretonne", pelloc'h, en "Universités d'été" aozet get ar Bleun Brug", adal 1956 betek 1964 d'an nebeutañ, e lakaat àr ar leur pezhioù c'hoari bihan skrivet getañ get krennarded (da skouer *Gweltaz fur*³⁵² e 1958) pe e prezeg dirak kelennerion ar skolioù kristen ha tud arall ivez, àr sujed-mañ-sujed, en o zouez ur pennad pouezus e 1957, just a-walc'h diàrbenn petra eo ar "Bleun-Brug"³⁵³. Souezhet e oa bet Bourdellez é welet e voe goulennet getañ sevel ha gober ur prezeg àr ar

347 "Marsel Klerg, prêtre catholique, écrivain de langue bretonne,(...) nom de plume gallois Klerg Llydaw (...) nom français Marcel Le Clerc (...) créateur de la revue en langue bretonne *Barr-Heol war Feiz ha Breizh* (...) 1954 à 1977, d'inspiration ouvertement catholique. (...) L'orthographe du breton utilisée est l'orthographe KLTG. L'abbé Marsel Klerg fut aussi le « découvreur » de la poétesse de langue bretonne Anjela Duval.https://fr.wikipedia.org/wiki/Marsel_Klerg

348 Un tregont bennaket a bennad sinet get Bourdellez a zo bet kavet e-barzh ar gelaouenn-se (Gwelet stagadenn n° I ar labour-mañ).

349 "Ar Falz ("La Faucille") est une organisation bretonne progressiste et laïque, créée en 1933 pour développer et favoriser l'enseignement du breton". https://fr.wikipedia.org/wiki/Ar_Falz

350 "Ronan Huon (Saint-Omer (Pas-de-Calais), 3 a viz Eost 1922 – Brest, 18 a viz Here 2003) a oa ur skrivagner brezhonek hag un embanner.https://fr.wikipedia.org/wiki/Ronan_Huon

351 Gab ar Moal Presidant ar Bleun-Brug.

352 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1958, n° 16, p. 24-32 "Gweltaz fur" (taolennoù war Vuhez St-Weltaz) evit ar Bleun-Brug Perwenan 22 06 1958 get Per Bourdellez.

353 Prezeg e galleg lâret get an Aotrou Abad Pierre Bourdellez d'an 26 a viz Mae 1957 da geñver Gouel Bleun-Brug Rostren : "Le Bleun Brug sa doctrine, son esprit, ses combats" prezegenn e galleg, Gouel Bleun Brug 1957, Rostren

sujed-se. Ur varseadenn a vo graet : marse e oa bet goulennet dezhañ na bout e oa a-du get ar "peurunvan" (ar reizhskrivadur ne oa ket bet degemeret mat get pennoù-bras ar Bleun-Brug) dre ma oa komprenet él un araokaour àr an dachenn sokial (GEES Lannuon a oa bet krouet a-nevez d'ar mare-se getañ...) hag unan dedennet get kudennoù an ekonomiezh.

Ar c'henarroud: adlañset e voe bet gouelioù ar Bleun-Brug goude ar brezel a-benn 1946, met tud 'zo a oa é ober àr-dro ar gouelioù-se neuze (en o zouez : ar Chaloni Mévellec, Maodez Glannour, an Abad Bourdellès, an tad Chardronnet, abaded Lec'hvien, Motreff, Quémener, ar Breur Visant Seité, ar Venec'h Dom Godu ha Dom Alexis Presse ha laiked Langleiz, Bernard de Parades a voe gwelet un tamm a-dreuz get pennoù bras an Iliz...) A-du e vo ur bochad belean get cheñchamentoù en Iliz a lak ar brezhoneg er-maez ag ar jeu."Certaines forces 'progressistes' au sein de l'Église sont totalement étrangères à toute culture bretonne, voire hostiles et considèrent la liturgie comme leur chasse gardée."³⁵⁴ Belean arall a venn kenderc'hel get ar brezhoneg evelato (abaded Motreff e Groñwel, Blanchard e Kistinic, Lec'hvien à Plijidi ha...Bourdellez).

2° Bourdellez kelenner kristen diaes er skolioù kristen.

É tabutal get programmoù ar skol adalek ar bleadoù 1955 (d'an nebeutañ), get spered ar skolioù kristen ha get pennoù-bras ar skolioù kristen adalek penn-kentañ ar bleadoù 1960 (d'an nebeutañ). Lakaet er-maez ag ar skolioù-kristen e 1966.

a) É kelenn an istor hag an douaroniezh hep gober get dornlevrioù gall àr an istor hag an douaroniezh.

Setu ar pezh a lâr Bourdellez da gelennerion kristen e 1957 e Rostren : "les autorités diocésaines seules ont autorité pour appliquer ce que la loi prévoit déjà, et pour compléter les programmes en y faisant une place à la Bretagne" (...) "l'enseignement officiel et l'enseignement libre se concurrencent en Bretagne pour enseigner le grec parlé 500 ans avant Jésus Christ et non le breton...". **O broudiñ a ra da lakaat en o c'hentelioù ar brezhoneg, istor ha kudennoù ekonomikel ha sokial Breizh, ha dreist pep tra ar brezhoneg :** "Et si le breton lu, écrit étudié dans le Barzaz Breiz, Calloc'h, Malmanche, Jakez Riou et Roparz Hemon me donne le goût de construire une Bretagne vivante en créant du travail, en chantant, en dansant, en priant les Saints ...Alors enracinez-moi en Bretagne avec une bonne dose de breton, faites de moi un homme de caractère et d'initiative, et je pourrai avaler après français, l'anglais et le reste sans chanceler sur mes bases."³⁵⁵

Displegiñ a ra dezhe emañ posubl gober kement-se. Graet eo bet get ar Yudevion a zo daet a benn da zasorc'hiñ ur yezh *an hebraeg* (a oa aet da get) en ur baour a vro bihan tout. "Un peuple anéanti depuis 2000 ans, emezañ, quelques rêveurs, quelques illuminés ressuscitèrent l'hébreu qui n'était déjà qu'un patois au temps de Jésus. Et cet hébreu ressuscité, artificiellement adapté à la vie moderne leur a insufflé l'enthousiasme fou qui les a lancés à la conquête de la Terre Promise (...). Ils attendent 100 000 immigrants par an à partir de l'an prochain [1958] dans leur petit pays moitié-

(11pajenn) + ur pennad 3 chabistr d'en ober "un siècle tous les dix ans"; "populo sancto Dei = pour le saint peuple de Dieu"; "un"Le Bleun Brug sa doctrine, son esprit, ses combats" chapelet qui se brise") neuze 3+ 4+ 6 = 13

pajenn.<https://bibliotheque.idbe.bzh/document.php?id=le-bleun-brug-sa-doctrine-son-esprit-ses-combats-9241&l=fr> .

354 *Bleun-Brug : expression d'un idéal breton*, Père Marc SIMON, Musée de l'ancienne abbaye de Landévennec, 1970.

355 Bourdellez, 1957, "Le Bleun Brug sa doctrine, son esprit, ses combats."

déserts moitié-montagnes alors que la Bretagne deux fois plus grande, incomparablement plus favorisée et mieux placée perd 25 000 émigrants par an! En 1954, pour nous enseigner leur exemple, les Israéliens ont publié chez nous *Israhel*. Fidèles aux principes dont ils ont prouvé l'efficacité, ils ont publié ce livre en breton.³⁵⁶

Evitañ e-unan en deus graet Bourdellez ar pezh a vroud ar gelennerion gristen d'ober a skriv Yann Talbot : "Beleget d'ar 17 a viz Kerzu 1932 (...) ha kaset diouzhtu da gelenner e skolaj Sant-Joseb. Chom a raio eno betek 1966, 34 bloavezh eta, nemet an daou a dremenas er skol-veur. Kelenner e voe war bep seurt danvez, yezhoù (saozneg hag italianeg), istor ha douaroniezh evel just, met traoù all ouzhpenn ivez, muioc'h dic'hortoz, latin, galleg zoken...(...) Ur c'helenner dispar e oa, barrek da lakaat ar skolidi da garout an danvez ha da gompren emdroadur ar bed, da dañva braventez un pezh lennegel, da vamañ dirak ul livadur eus El Greco pe Rubens, da dridal gant digoradur navet simfonienn Beethoven. [Eñ] a oa eus ar gelennerien-se a grede c'hoazh e oa gwelloc'h reiñ c'hoant gouzout eget kargañ ar speredoù a draoù didalvoud. "Neuze ne ray ket mui Per Bourdellez get dornlevrioù gall evit an istor hag an douaroniezh.³⁵⁷ Faos-tout, emezañ, gevier³⁵⁸ pe diouiziegezh, ne gelennot ket an doujañs evit an dud hag o sevenadur. Adalek neuze e raio e gentelioù drezañ e-unan o tastum amañ hag ahont ar greun en devo ezhomm evit reiñ bara yac'hus d'e skolidi." a zispleg Yann Talbot.³⁵⁹

b) A-enep spered ar skol kristen e amzer.

"Les écoles actuelles ne forment que des cadres au service du capitalisme de Paris, du Nord et de l'Est. Ne forment pas des chefs responsables pour le peuple breton (des "révolutionnaires régionalistes"). Il faut des écoles qui vous apprendront la vérité sur votre pays et qui fassent de vous des hommes langue histoire géographie bretonnes et atlantiques. Les obstacles : le jacobinisme et le nationalisme tricolore (...). Y a-t-il des solutions à la question bretonne? Actuellement non: c'est la ruine pour tout le monde. La question est politique : la politique est la forme supérieure de la charité. Nous pouvons à la Breuriez Sant-Erwan rendre quelques services. Des maires, des députés peuvent incomparablement plus."³⁶⁰ a lâr Bourdellez da tud yaouank Breuriez Sant-Erwan e 1964/65.

"Ar skol avat, nag an Obererezh Kristen peurvuiañ, n'o deus komprenet mat biskoazh an dra-se [feiz poblek an dud e Breizh] ha **dre o digomprenidigezh o deus sikouret mougañ bro ha pobl ha feiz.**"³⁶¹ a skriv Bourdellez.

356 Bourdellez a gomz amañ a-zivout niverenn 44 ar gelaouenn *AL LIAMM* embannet e 1954 moarvat. Un niverenn a oa bet gouestlet penn-da-benn da Bro Israhel.

357 Er gelaouenn *Ar Vro Gwirionez*, Eost 1965, n° 32 p. 86-87, e kaver ur "Lizher" skrivet d'an 05 a viz Mezheven get Bourdellez bet kaset getañ da vouler ur "Livre de Lecture, Cours Moyen et Supérieur, Collection D.S., Plihon, éditeur, 5 rue Motte-Fablet, Rennes. Sujed ar lizher : ar barzhoneg "La Bretagne Française" get Louis Tiercelin (1846-1915) a gaver er levr-se, a ziskouez o deus ar Vretoned di vroad hani an amzer dremenet Breizh hag hani an amzer da zont Bor C'hall...

358 "El levrioù gall ne vez komzet eus Breizh nemet goude m'eo bet staget ouzh rouantelezh Bro-C'hall" a verker Bernez Rouz e 1975 (Skol an Emsav, miz Even 1975 p.29)

359 "Per Bourdellez, va mestr" *Al Liamm* n° 256, 1989.

360 "Comment on ment au mouvement breton", Steuñv ur brezegenn d'ober dirak izili yaouank Breuriez Sant-Erwan), Diembannet/kavet e dielloù Yvette Meurou (deziad ebet/ komz a ra ag an UDB : "collabore uniquement avec la gauche", neuze skrivet e 1964/65 pe 66 pa ne ray ket mui Bourdellez àr-dro ar vBreuriez-se adal an 01 a viz Gwengolo 1966). Notenn : n'eo ket bet peurlipet ar pennad get Bourdellez,

361 Bourdellez, Imbourc'h 1977, p. 512.

Klask a ra perak ha penaos e tigrask an danvez-belean e eskoptioù ha bugale er skolioù. E respont : **"n'eo ket mui graet gant an Iliz ul labour mat e-keñver ar re yaouank;** diheñchet he deus, kollet geti e kefridi meur". Tamall a ra Bourdellez 'tezenn nevez' an Iliz a hual, emezañ, ar gelennerion : "Gant an desenn nevez ("Peogwir out desket ec'h eus ar gwir da vezañ pinvidik") n'eo ket bet hepken goullonteret ar c'hloerdi bras, met **ar gelennerien gristen a zo bet hualet en o labour,** hag ar re yaouank pennfollet. Evel a lavar mat an Aotrou Mucchielli, kelenner psikologiezh e Skol-Veur Roazhon, "war-dro an oad a 17 vloaz e plij d'ar re yaouank adsilañ, advêrat an holl venozioù kinniget dezho betek neuze. Plijout a ra dezho douetiñ, tañva blaz an NETRA, blaz ar MARV. (...) D'an oad dañjerus-se, eme ar psikologour, eo ret diwall ouzh "an dezertelezh", ober evezh ne vefe an amzer-da-zont evito 'evel ur voger pe un noz teñval." "D'an oad-se eo ret eta tommañ kalon an den yaouank ma chomo yac'h ha birvidik. HEN STAGAN ouzh UR C'HORN-BRO da gentañ, ret eo dezhañ bezañ gwriziennet en ur barrez, en ur vro (bezañ stag ouzh tud ha traoù - ouzh ur vicher (ar c'hentañ ar gwellañ) ouzh ur pal uhel da seveniñ e-touez an dud, da heul ur boblad. Ret eo dezhañ kaout ur gredenn, ur feiz, krediñ start ez eus un Dra Uhel 'us dezhañ , un Dra da gas war-raok." a oc'hpenn Bourdellez³⁶² Ha **n'eo ket mui graet ar labour-se get ar skolioù kristen** a gav dezhañ.

Ha eñ neuze d'en em adresiñ da gelennerion kristen da-geñver gouel Bleun Brug Rostren e 1957 kement-mañ, é klask o hejiñ : **"les Bretons sont soumis à une propagande anti-bretonne qui les paralyse** ils sont comme certains thibétains décrits par Chesterton : "Tous autour d'eux ressemblaient à l'habitant d'une cabane de bambous du centre du Thibet à qui on apprendrait qu'il fait partie de l'empire chinois, ou le cas échéant, à l'empire britannique, et **qui finirait par tenir l'empire qu'il ne voit pas pour plus réel que la hutte qu'il a sous les yeux.**" **"Combien de Thibétains autour de nous?** Vous êtes partisans de l'Europe unie? C'est bien. Mais vous ne voyez pas le mal de la Bretagne disloquée en cinq départements artificiellement séparés les uns des autres. Ô déraciné, Ô avaleur de slogans, Ô Thibétains que vous êtes! Vous connaissez Victor Hugo et Racine et peut-être même Virgile ou Shakespeare ou Ibsen ou Tchekov ? Très bien. Mais vous n'avez jamais lu, étudié, appris par coeur le "Barzaz Breiz" ou "Gurvan" dans le texte. Ô Thibétains! Votre discothèque collectionne les musiciens de tous les temps et de tous les pays. Parfait sauf que vous ignorez tout de la musique populaire bretonne et des musiciens qu'elle a inspirés. Vous admirez Reims, et même Cologne, le Kremlin, les temples hindous... sans doute aussi la culture nègre. Moi aussi. Mais que dites-vous de nos cathédrales, de nos églises, de nos chapelles, de nos calvaires? Si vous ne citez pas sans hésitation la liste des plus beaux, vous n'êtes qu'un Thibétain. Vous commentez à tort et à travers les problèmes ouvriers de Paris mais les problèmes de nos ouvriers et de notre agriculture vous les ignorez. L'exploitation du Sahara (...) n'a pas de secret pour vous mais dites-moi donc ce que signifie CELIB? et en quoi consiste le 'plan breton'? et ce qu'il prévoit pour votre paroisse? Avouez (avouons tous) que **nous sommes des déracinés intellectuels, des rêveurs de rêves pseudo-sociaux, pseudo-politiques, pseudo-culturels, pseudo-économiques. De vulgaires Thibétains!**"

Klask a rey Bourdellez dihuniñ e skolidi é kelenn er skol (hag er GEES). Berzh a raio un tammig met dipitet eo pa n'int ket bet dihunet mat an darn vrasañ anezhe : "Je compte désormais, de par le vaste monde, un nombre impressionnant d'anciens élèves. Eh bien, même parmi eux je trouve

362 *Barr Heol war feiz ha Breizh*, Meurzh 1964, n° 38, p. 26-29 ha 76. "Un eskopti war e dremenvan" P. Bourdellez (p. 76)

de ces avaleurs de slogan qui vous résolvent l'équation bretonne en deux phrases. Les slogans changent (non pas d'après le bonhomme mais d'après les années). Le résultat est toujours le même = zéro. Tous leurs slogans sont toujours anti-bretons. Ce qui est quand même un peu louche!... Ils sont aussi depuis quelque temps anti-chrétiens, mais badigeonnés du même vernis pseudo-scientifique que les premiers. Par exemple l'agriculture bretonne, le commerce, l'industrie, les ports, la langue, la population, tout ça est appelé à disparaître par Les lois économiques "(...) par les "conclusions de la science économique moderne".³⁶³

En o zouez eh eus darn hag a lâ: "pourvu que la 'production' soit maintenue au même niveau en Bretagne, l'homme breton peut disparaître."³⁶⁴ Respont a ra Bourdellez dezhe : "1) **qu'ils sont atteints de 'matérialisme historique'**; ce matérialisme "qui prétend que la société humaine est subordonnée à la matière et régie par elle. 2) qu'ils sont sur le chemin du malthusianisme et du birth-control." **Lonket int bet get ar gevalaouriezh a zo daet da vout mestrez àrné : "la grande masse s'est laissée happée par l'idéologie capitaliste."**^{365 366}

A-du-arall e nac'ho Bourdellez aozñ emvodoù get tud skolidi Skolaj Sant-Josef ken ne oa ket a-du get palioù ar skolaj-se.

Ar skolioù kristen a vehe bet o fal, da venno Bourdellez, **stummañ paotred ha merc'hed mat da vleinañ ar vBretoned en amzer da-zonet, ur sevenadur breizek dezhe** : "Où donc est l'élite chrétienne et bretonne sortie de ces écoles [chrétiennes] pour sauver et diriger le peuple?"³⁶⁷

3° Ur beleg a-renk get an Iliz, ur beleg é winkal.

C'hoant dezhañ bout misioner en Afrika, beleget e 1932, é skriv pezhioù-c'hoari relijiel a-benn kenteliañ ar vugale hag an dud à an oad, é vout oberiant-tre e gouelioù Bleun Brug setu ur beleg a-renk get e Iliz, a seblant bout enframmet mat enni. Ya, met setu Bourdellez é tabutal groñs get Iliz Breizh er bleadoù 1960 ha 1970. Perak 'ta?

a) Iliz Breiz n'eo ket Iliz ar Vretoned.

An Iliz 'zo kaoz da zigristenaet Breizh. Bourdellez a lâ: digristenaet eo bet Breizh en XX^{vet} kantved. Setu ar pezh a ziskoueze splann ur studiadenn bet graet get danvez-kuzulierion-labour-douar en doa Bourdellez o skoazellet³⁶⁸: " Brasoc'h souezhadenn en devo c'hoazh an hini a studio istor an Iliz en XX^{vet} kantvet : **gwelout ur bobl kozh krouet gant sent, ha maget er Feiz e-pad pemzek kant vloaz o yenaat e servij Doue hag alies o treiñ enep dezhañ** ; Breizhiz o deus kollet o feiz, kalz anezho, d'ar c'houlz o devoa ar muiañ a skolioù kristen hag a veleien, eme

363 Bourdellez, 1957 "Le Bleun-Brug, sa Doctrine, son Esprit, ses Combats."

364 *Ibid.*

365 *Ibid.*

366 Interesus a vehe tostaat mennozhioù Bourdellez a-zivout an Iliz, ar Skol, ar gevalaouriezh da re **Yvan Illich** (1926-2002) beleg, prederour é tabutal kevredigezh industriel, ar skol, an Iliz.... (Gwelet mennozhioù Illich e **Libérer l'avenir**, 1971; **Une société sans école**, 1971/temoù : "contreproductivité de l'école, appel à la révolution des institutions, bureaucratisation insensée de l'Eglise, soumission des minorités, politiques iniques du développement, aliénation des pauvres face à la contrainte des 'besoins'".

367 Bourdellez, 1957, "Le Bleun-Brug, sa Doctrine, son Esprit, ses combats".

368 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1960, n°24, p. 32-34 "Galvadenn evit kompren ar fed ma kuita ar vreizhiz ar feiz -N'ouzomp na perak na penaos" gant P. Bourdellez. Titour ebet er pennad-se diàrbenn ar re o deus graet ar studiadenn-se.

Bourdellez e 1960³⁶⁹ ha da oc'hpenniñ : "ne oa ket buhez relijiel e Breizh ur vuhez bet aozet get doctored an Iliz met gant ar bobl e-unañ"³⁷⁰ "

Klask a ra Bourdellez (er pennad-mañ) **perak eo bet digristenaet Breizh**: « Er XIX^{vet} kantved **micherourien é labourat en uzinoù o deus kollet ar feiz**, met an dra-se n'eo ket trawalc'h da zisplegiñ perak eo bet digristenaet Breizh; n'eo ket abalamour d'**an trede Republik** kennebeut na bout e **oa bet honnezh a-enep ar relijion** hag ar veleion; marse ar '**mekanikou**'? ", a c'houlenn Bourdellez, " 'zo ken dedenet an dud gete, pe marse a-walc'h **o deus bet kristenion Breizh aon?** »³⁷¹ Ret e vehe, a gav da Bourdellez, **e vehe studiet digristenniñ Breizh evit kavout abegoù gwir an emdroadur-se get sokiourien ar skol-veur** : "Ne gav ket din e vije bet graet ar studi-se betek-hen. Ma 'n em glevjemp neuze gant ar skolioù-meur d'en ober?³⁷² Aliet gant sokiourien e vefe aes a-walc'h sevel **folennoù-goulennata** da hentañ bep klasker"³⁷³.

E 1961 e kendalc'h Bourdellez é prederiañ àr ar sujet-se³⁷⁴: "**Eskibien ne oant ket Breizhiz** 'zo bet anvet e Breizh³⁷⁵, **skolioù, manatioù Breizh 'zo bet gallekaet a-bell**", a skriv Bourdellez : "**un disparti souezhus 'zo bet e Breizh a bell 'zo etre an 'Iliz Kelenneres'** hag **he fobl kristen**"³⁷⁶. "Speredelez³⁷⁷ Pobl Breizh n'eo ket aozet gant an Doktored. Pobl Vreizh 'zo bet barrek da groui doareoù-relijion, gizioù speredelez, hag a glote seul vui ouzh ar bobl ma oant bet krouet ganti³⁷⁸. "**Ar Feiz evite n'eo ket bet danvez-skol** na danvez-prezeg **met danvez-buhez**"³⁷⁹; "N'o doa ket div vuhez : ur vuhez vreizhat diouzh un tu, ur vuhez kristen diouzh an tu all. 'Ar

369 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1960, n°24, p. 32 -34. Rubrikenn : « Galvadenn evit kompren ar fed ma kuita ar vreizhiz ar feiz » Titl : « N'ouzomp na perak na penaos » P. Bourdellez, p.32.

370 *Ibid.*

371 *Ibid.*

372 Notenniñ a reomp eo bet graet un hevelep doare-ober get un eskob Bro-Suis en doa goulennet d'ar sosiologour alaman Harmut Rosa klask perak ne yae ket mui an dud en e iliz. Labour graet get Rosa a voe bet embannet "Pourquoi la démocratie a besoin de la religion" Préface de Charles Taylor. La Découverte, 2023, 80 pages, https://www.editionsladecouverte.fr/pourquoi_la_democratie_a_besoin_de_la_religion-9782348079627

Setu pevare pajenn golo al lev-r-se : "Partout en Europe, et indépendamment des scandales qui les traversent, les Églises chrétiennes font face à des difficultés majeures et voient de plus en plus de fidèles désertier leurs rangs. On pourrait sans doute s'en réjouir. Après tout, la religion peut être perçue comme une force obscurantiste et réactionnaire, voire archaïque, un obstacle dressé face aux choix rationnels et aux élans émancipateurs de la modernité. Le célèbre sociologue Hartmut Rosa, lui, suggère une tout autre analyse et s'inquiète des effets de cette crise : que se passe-t-il quand la religion dans son ensemble n'a plus d'écho dans les sociétés démocratiques ? Que perd la société quand la religion n'y joue plus aucun rôle ? Quel est l'avenir d'une démocratie sans religion ? Est-il vraiment sage de renoncer au riche trésor du religieux ? Avec son acuité habituelle, Hartmut Rosa nous montre que cette situation de crise aiguë coïncide avec **le triomphe d'un rapport instrumental au monde né à l'aube de la modernité capitaliste**. Ainsi, ce que nous perdrons avec l'effacement de **la religion**, ce ne sont pas seulement une série d'histoires, de croyances ou de rituels, mais avant tout **une capacité à entrer en résonance avec le monde**, à le laisser venir à nous et à lui permettre de guérir des traumatismes que nous lui avons infligés."

373 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1960, n°24, p. 33. Rubrikenn : "Galvadenn evit kompren ar fed ma kuita ar vreizhiz ar feiz », Titl : « N'ouzomp na perak na penaos » P. Bourdellez.

374 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, 1961, Meurzh, n°26, p.30-33. "Perak ha penaos ?" get Per Bourdellez beleg.

375 E *Breizh* (kelaouenn Kendalc'h) miz Gouere 1976, n° 214, p.23. e kaver ur pennad sinet J. Lec'hvien, Kergrist Moeloù 2210 Rostrenen "au nom d'un groupe de prêtres de la partie bretonnante des Côtes du Nord relative aux souhaits de ceux-ci quand au profil du successeur de Mgr Kervéadoù évêque démissionnaire de l'évêché de Saint-Brieuc-Tréguier" (Anvioù ar veleion n'int ket notennet met moarvat e oa P. Bourdellez ezel ar strollad-se.) Goulenn a reont e vo anvet ur Breizhad.

376 *Ibid.*, p 31.

377 Skrivet en deus Bourdellez ur pennad "Istor ar speredelez", n'eo ket bet adkavet.

378 *Ibid.*, p 31.

379 *Ibid.*, p 31.

brezhoneg hag ar Feiz, an holl a goar, a zo breur ha c'hoar'. "**Ar pennoù-bras ne oant ket gouest da gerzhet war an hent pleustret gant ar bobl**"³⁸⁰. "**A-benn ar fin eo bet arallekaet ar vBretoned get doktored an Iliz gall o deus kinniget dezhañ doareoù arall**"³⁸¹. "**Gouest omp da blegañ dezhe, n'omp ket gouest da vevañ diwarne**"³⁸². **Ha neuze eo aet ar feiz da goll get ar Vretoned.** Pa skriv kement-se e tispieg sklaer Bourdellez emañ a-du get an Abad Perrot evit ar pezh a sell doc'h "Feiz ha Breizh". Liammet don eo an daou dra-se.

Iliz Breizh n'eo ket er XX^{vet} kantved **Iliz** ar vBretoned eme Bourdellez. **Dilezet geti yezh tud ar vro er skolioù kristen**, en iliz hag e pep lec'h. **Pennoù bras Iliz Breizh ne zoujont ket da lizher-Meur ar Pap Paol VI 1967 *Populorum progressio* a ginnig gober get yezh ar vro.**³⁸³ An disoc'h 'zo mantrus, eme Bourdellez : **an iliz 'zo daet da vout dinerzh**, un skouer : un eskopti à e dremenvan: kani Sant-Brieg³⁸⁴.

Kinnig a ra e vehe cheñchet penn d'ar vazh e-diabarzh an Iliz. Setu ar pezh a skriv d'ur mignon dezhañ, lean en Abati Landevenneg, d'an 18 a viz Kerzu 1971: "D'ar meurzh 14 a viz Kerzu 1971 em eus graet ur brezegenn e Gwengamp dirak ur c'hant bennak a dud yaouank hag un dek bennak a dud àr an oad diàr "An Iliz ha Breizh"³⁸⁵. Intereset bras e oant. Atizet 'meus anezhe krouiñ un Iliz Breizh." Kinnig a ra Bourdellez a-du arall, labourat, reiñ an dorn d'ur lean pe da leaned a vehe en o soñj **sevel ur levr diàr Istor Iliz Breizh** peogwir (eme Bourdellez) en deus labouret dija àr ar sujed-se (met traoù a vank dezhañ). "Aes e vehe ec'h embann e Sant-Brieg en un ti-embann" d'e veno. N'eo ket bet kavet levr ebet nemet pennad Bourdellez "La Bretagne et l'Église catholique" embannet e 1971 e-barzh ar levr *Annuaire des dix mille bretons*.³⁸⁶

b) An iliz a-enep Bourdellez.

Enep emdroadur ar Bleun-Brug, é burutelliñ programmoù kelenn er skolioù kristen, enep palioù nevez ar skolioù-se, enep an Iliz hec'h unan a ra fae àr ar Vretoned, o yezh, o istor, o feiz. Setu ar stad m'emañ Bourdellez e derou ar bleadoù 1960. Emberr ne blede ket mui get ar Bleun-Brug, e vo lakaet abredik er-maez ag ar skolaj a gelenne ennañ abaoe 34 blez pa ne oa nemet 58 blez (e miz Even 1966)³⁸⁷ get penn-rener ar skolaj (daou veleg arall, kelennerion ivez anezhe, a vo

380 *Ibid.*, p 31.

381 *Ibid.*, p 33.

382 *Ibid.*, p 33.

383 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, miz Mezheven 1967, n° 52 p. 38-44 "Populorum progressio -Lavar-dislavar diwar-benn al lizher meur" get Per Bourdellez ; *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, miz Kerzu 1967, n° 54, p. 3-14. "Populorum progressio -Araokadur ar Pobloù" gant Bourdelles (oberer Per Bourdellez àr daolenn ar gelaouenn ha sinet Klerg e dibenn ar pennad p. 14).

384 *Barr Heol war feiz ha Breizh*, Meurzh 1964, n° 38, p. 26-29. "Un eskopti war e dremenvan" Per Bourdellez

385 Get ar gelaouenn *Ar Bed Keltiek*, 1970 n° 137 p.140 e anaver en doa graet dija ar brezegenn-se d'an 22 a viz Meurzh 1970 e Treogan (marse en deus hi graet meur a wezh) : "E Treogan: prezegennoù ar C'horaiz. E Treogan, etre Gourin ha Rostrenen, e voe prezegennoù gant an Aotrou Bourdelles e-pad ar C'horaiz. (...) d'ar Sul 22 Meurzh : 'An Iliz e Breizh' "

386 *Annuaire des dix mille bretons*, Saint-Brieuc, PUB, 1971, oberenn stroll, enni ur pennad get an Abad Bourdelles pp. 416-429. "La Bretagne et l'Église catholique".

387 Lâret eo bet din get Jean-Yves Marjou e oa bet bihannaet ur bochad e gentelioù d'an blezadoù diwezhañ en doa kelennet eno.

skarzhed kuit pa ne sentent ket dalc'hmat naket doc'h hennezh ha pa oant a-du get mennozhioù Bourdellez)³⁸⁸.

Difennet e oa bet da vBourdellez prezeg en "Université Bretonne d'été" aozet e 1965 get ar Bleun-Brug er lise Likès e Kemper get eskob Kemper ha Leon, Andre Fauvel. Kompren a reer é lenn ur lizher kaset get hennezh da vBourdellez³⁸⁹ ³⁹⁰ ³⁹¹ **e oa bet difennet groñs da vBourdellez prezeg en a-raok dija [abaoe 1960 d'an nebeutañ].** Kastizet e oa bet dija e fin ar bleadoù 1950 : "L'évêque de Quimper [André Fauvel] m'interdit d'assister à toute réunion dans son diocèse, tout en refusant obstinément d'en donner les raisons. J'essaie d'arranger la chose par l'intermédiaire de Mgr Favé son coadjuteur, et je déploie toute ma diplomatie... sans succès jusqu'à présent." "J'ai rétabli les relations diplomatiques avec Kerveadou" (Eskob nevez anvet e eskopti Sant-Brieg ha Landreger) a skriv Bourdellez d'an 03 a viz Genver 1960.

Perak eta e oa bet difennet da vBourdellez monet en eskopti Kemper ha Leon e darempred get belean an eskobti-se e-pad 5 blezad d'an nebeutañ (1959-1964)? Kavout a rae dezhañ e oa ret labourat evit e vehe cheñchet penn d'ar vazh àr an dachenn bolitikel e Breizh a lâre alies moarvat. Gwelet e veze get an eskobed él **ur broadelour a felle dezhañ e tistroehe Breizh d'he frankiz, e vehe bet graet get ar brezhoneg en Iliz**, ar pezh ne oa ket faos (kement-se a vo gwelet diwezhatoc'h). Ha neuze e voe bet tabudet get pennoù bras an Iliz, lakaet er maez ag Skolaj Sant Joseb e 1966 hag bet anvet dre heg da aluzenner e ti leanezed Gwareg e miz Gwenglo 1966.³⁹²

388 Lâret eo bet din get Jean-Yves Marjou e oa bet e skolaj Sant-Josef tri beleg d'ar mare-se a oa bet lakaet er-maez pa gendalc'hent da zibunañ pedennoù e brezhoneg e-pad ar c'hentelioù asamblez get ar skolidi. Tud skolidi 'zo, bourc'hizion kreiz-kêr Lannuon anezhe, o doa komzet kreñv enep dezhe ha lâret e vehe bet dilammet o vugale ag ar skolaj ma vehe kollet o amzer gete é ober ar pedennoù-se.

389 Lizher (kavet e dielloù Yvette Meurou nizez Bourdellez) bet skrivet get Visant Favé Eskob skoazeller Kemper ha Leon d'an 23 a viz Kerzu 1964 da vBourdellez.

390 "Je remarque que vous êtes prévu au programme, comme devant faire une conférence sur 'l'histoire de Bretagne et les jeunes'. Vous savez la lettre que vous a adressée en son temps Monseigneur Fauvel, et à laquelle vous n'avez jamais répondu. Vous aviez l'intention de lui faire une visite; je vous avais écrit qu'il vous recevrait volontiers, et je vous invitais à ma table à l'occasion. Vous n'avez pas donné suite à votre projet... Il en résulte - je viens d'en parler avec Monseigneur Fauvel - que si vous êtes maintenu au nombre des conférenciers de la session, nous resterons l'un et l'autre en dehors."

391 Daou zanvez-lizher (dornskrivet àr paper brell) skrivet get Bourdellez un tammig goude Nedeleg 1964 a vez lennet àr kement-mañ, (un danvez-respont da lizher Favé d'an 23 a viz Kerzu 1963 int, ne ouier ket hag-eñ int bet kaset da hennezh met interessus eo pa ziskuilh mennozhioù Bourdellez): "Monseigneur Fauvel et moi ne nous sommes jamais vu (...) Qu'a-t-il donc contre moi? qui dure malgré les années écoulées (...) Il m'a adressé sur sa carte de visite une phrase très sèche **m'interdisant de participer désormais à toute réunion de prêtres dans le diocèse de Quimper** sans aucune explication. La seule réponse était dans l'obéissance. J'ai obéi. Je ne suis plus allé au pardon du Folgoet. Peu après M. Ollivro, maire de Guingamp, écrivain, fut éliminé de la rédaction de la revue Bleun-Brug sous la seule raison qu'il votait par amitié pour moi. M. le chanoine Gloaguen lui non plus n'a pas réussi à savoir de quoi j'étais coupable. Vous et M. le Chanoine Mévellec avez eu la bonté de me proposer une entrevue avec Monseigneur Fauvel. J'aurais été très soulagé. Jamais cependant ni le sujet, ni le jour de cette entrevue n'ont été fixés. Lannion-Quimper est un voyage long et coûteux (...) Frère Daniélou est certainement au courant de **ma condamnation**. Tout le monde est au courant. Puisque vous me dites qu'il me charge d'une conférence c'est sans doute qu'il croyait qu'après le Concile (...) **il imaginait lui aussi que le temps des coups de crosse était passé**. Daniélou croyait venu le temps de l'ouverture et du dialogue (...). Moi aussi je le croyais. Mais puisque vous maintenez indéfiniment ma pénitence (...). Je n'ai aucune possibilité d'apaiser Monseigneur Fauvel, je ne sais pas ce qu'il me reproche. Quand vous serez à la tête d'un diocèse soyez bon pour les prêtres, ne les condamnez pas sans certitudes et sans explications, ne les faites pas souffrir pendant des années sans raison. Souvenez-vous de l'Abbé Perrot : les prêtres aussi ont un coeur. Ra vezo laouennoc'h ho Nedeleg eget an hini hoc'h eus degaset din. Perak e rit c'hwi kefridi evel-se goude bezañ klevet HTS ar Pab?"

392 Hervez ninez Bourdellez en doa goulennet get e eskob, en aner, bout anvet da veleg chapel Beg-Leger, parrouz Serwel. Faotiañ a rae dezhañ kenderc'hel ober àr dro ar re yaouank en e barrouz genidik, Serwel, en ur chapel koad en doa savet du-se get sikour tud a anave.

Moian 'zo (krediñ a ran en gober) kenveriañ emzalc'h politikel Bourdellez adal ar bleadoù 50-60 da gani belean Stadoù-Unanet ar Su er blezadoù 1950-60. Er vroioù-se er bleadoù 1930-40 ne rae ket belean àr-dro kudenn ar re Zu, tremen a raent get an traoù relijiel hepken. Met er blezadoù 1950-60 e kemerezant perzh a-zevri-bev e stourmoù a re Zu³⁹³. Kement-all e vo graet get Bourdellez e Breizh e-keñver ar Vretoned met ne vo ket heuliet kalz get e gensorted, ha pas tamm ebet get pennoù-bras an Iliz.

c) Oberoù arall Bourdellez liammet doc'h ar relijion.

A-du arall en deus Bourdellez kemeret perzh e aozadurioù tost d'an Iliz él "Saint-Vincent de Paul", "Urzh Ospitalerien Sant Yann", kenlabouret get belean é klask troiñ an Testamant Kozh, get breuriezhioù él "Breuriezh Sant Erwan" pe "Beleion Breizh". **Gwelet a rimp n'int ket neptu alies ar strolladoù-se àr an dachenn bolitikel**, ha neuze n'eo ket neptu mont a-barzh.

Saint-Vincent de Paul³⁹⁴: Jean-Yves Marjou en deus skrivet din en deus kaset àr-raok Bourdellez ar "Conférence de Saint-Vincent de Paul" e Lannuon, adal 1935 betek 1962 dianto. "Il conduisait les élèves à aller le jeudi après-midi sur des chantiers de démolition pour récupérer du bois et le porter comme bois de chauffage aux déshérités de Lannion ; j'y ai participé pour livrer chez des personnes âgées rue de la Poterie à Lannion."³⁹⁵ "Moi-même j' ai participé au ramassage de bois en 1961-62 et 1962-63" a ochpenn din Jean-Yves Meuric.³⁹⁶ Ar pal a oa **sikour an dud baour**.

Breuriezh Sant Erwan: é labourat a-gostez an Iliz en un doare disheñvel. Er gelaouenn *Skol*, n° 27 Kerzu 1964, e lenner : "Katoliged a Vreizh, mantret o welout beleien o vont mui-ouzh-mui war ar galleg, o deus divizet en em strollañ evit **daskoriñ d'hon yezh al lec'h dleet dezhi**. Se ne reont ket get ur spered a eneberezh ouzh an iliz, pezh a vefe ur fari grevus. **E ober a reont gant spered a sentidigezh ouzh alioù ar Babed**, ha dreist-holl gant ur spered a garantez ouzh an holl. Lennit "Galvadenn" ar rener Meur, Yann Talbot, ha da heul "Diskleriadur" ha "Reoliadur Diabarzh" ar vreuriezh : **uhelaat buhez speredel an izili, skoazellañ a re o deus ezhomm a skoazell, servijañ Breizh hag e yezh**, setu berr-ha-berr, ar pal a vennont tizhout." digor d'an dud yaouank paotred ha merc'hed, adalek an oad a 11 vloaz" Rener: Yann Talbot, teñzorier : Fransez Broudic, animatour Armand ar C'halvez." Bourdellez n'eo ket meneget met e ouiamp en deus-eñ kemeret perzh e emvodoù ar vreuriezh-se a-drugarez da skouer da destenioù Riwanon Kervella³⁹⁷, Jean-Yves

393 Gwelet Film Bertrand Tavernier *Missisipi Blues* 1983.

394 "La Confédération internationale de la Société de Saint-Vincent-de-Paul est une organisation de bienfaisance catholique laïque, dirigée par des bénévoles, et fondée à Paris en 1833 par un groupe de laïcs catholiques parmi lesquels Frédéric Ozanam (...). Elle est active dans 153 pays, dont en France par l'intermédiaire de la Société de Saint-Vincent de Paul, association française reconnue d'utilité publique. Depuis sa fondation, l'organisation a toujours été dirigée, uniquement et exclusivement, par des laïcs catholiques collaborant avec la hiérarchie de l'Église catholique mais agissant de manière indépendante(...)

Leurs actions englobent plusieurs domaines dans lesquels le plus important est le contact personnel avec les personnes seules ou défavorisées auxquelles ils viennent en aide sans discrimination de genre, origine, croyances religieuses, milieu social ou ethnique, état de santé, culture et opinions politiques."

https://fr.wikipedia.org/wiki/Soci%C3%A9t%C3%A9_de_Saint-Vincent-de-Paul

395 Postel kaset din get Jean-Yves Marjou d'an 12 a viz Here 2024

396 Postel kaset din get Meuric d'an 12 a viz Here 2024 ("L'une des personnes était une comtesse ruinée venant je ne sais d'où (elle ne parlait pas breton), une autre était infirme.")

397 Riwanon Kervella a skriv e *Al lañv*, n° 144, miz Even 2018, p. 7-8, he doa kemeret perzh en staj aozet get Breuriezh Sant Erwan e 1962 get Armañs ar Chalvez, **Per Bourdelles** ha Yann Talbot.

Marjou³⁹⁸ pe é lenn *Ar Bed Keltiek*.³⁹⁹ Gouiet a reomp ivez e labourer Bourdellez ha Talbot dorn-ha dorn d'ar mare-se.⁴⁰⁰

Urzh Ospitalerien Sant Yann (Malta)⁴⁰¹. E 1967 e oa Bourdellez chapalan an urzh-se⁴⁰² (a betek 1977 e vo d'an nebeutañ⁴⁰³) evit Breizh. Ur foto a 1967⁴⁰⁴ zo bet kavet get **Bourdellez, Yann Fouéré, ha Per Lemoine** (hag izili arall), gwisket razh get chupennoù kroaz Valta àrné. E 1971 e oa c'hoazh chapalan an urzh-se. Setu bommoù ur lizher kaset get Bourdellez d'ur lean a Abati Landevenneg d'an 18 a viz Kerzu 1971 troet geniñ: "Digoret en deus prioldi an urzh-se, savet a-nevez, un **ti-degemer evit bugale brin**⁴⁰⁵ e Brest (kentañ oberenn ar prioldi-se)." Goulenn a ra Bourdellez ma vehe posubl da abati Landevenneg degemer e izili ('zo **tud o c'halon tomm da Vreizh**) evit ur retred berr e 1972. (staget eo da skourr eukumenik repuidi Bro Russia amzeriad Napoléon, ur protestant en o zouez).⁴⁰⁶

Labouret en deus Bourdellez àr pennadoù lennegel :

- **É studial tem ar bPasion e lennegeh Breiz.**⁴⁰⁷ (A-du arall en doa skrivet ur pezh-choari àr sujet ar bPasion evit ma vehe c'hoariet e parrouzioù Bro-Dreger e 1939.⁴⁰⁸
- **É kemer perzh e troidigezhoù an Aviel kozh e brezhoneg:** *Levr Deniel, Levr ar Roueed*. E skipailh Loeiz ar Floc'h e oa hrevez "Emglev an tiegezhioù".⁴⁰⁹ : "l'abbé Pêr Bourdelles, (Diocèse de St Briec 1907-1989) dont nous avons trouvé une traduction partielle du *livre des rois* dans les archives de l'abbé Le Floc'h et aussi, au moins, avec lui et Pêr ar Gall pour *Le livre de Daniel*."⁴¹⁰

398 Postel kaset din get Jean-Yves Marjou d'an 12 a viz Here 2024 : Bourdellez "conduisait les élèves à mettre en valeur des monuments tombés dans l'oubli : exemple la chapelle Saint-Marc en 1959, relaté dans Ouest-France du 14 avril 1999".

399 *Ar Bed Keltiek*, n° 91 Gouere 1966, p. 206 : "Breuriezh Sant Erwan, kamp-studi Plougraz, 21 /28 Gouere 1966, gant Per **Bourdellez**, Armañs ar C'halvez ha Yann Talbot. *Ar Bed Keltiek*, 1967, p. 332 : "Kamp labour Breuriezh Sant Erwann e Pleuveur-Bodoù, 6/10 a viz Gwengolo 1967, daou brezeg gant Per Bourdellez " Breizh ha Kembre er C'henvarc'had", "Istor an Emsav e-pad an eil Brezel-Bed".

400 "Per Bourdellez ,va mestr" Yann Talbot, *Al Liamm*, n° 2546, 1989

401 "Ordre Souverain de Saint-Jean de Jerusalem - Chevaliers de Malte- appelés aussi Chevaliers Hospitaliers.

402 "L'Ordre de Saint-Jean de Jérusalem, fondé à la fin du XI^{ème} siècle, s'est scindé au moment de la Réforme en une branche catholique, l'Ordre Souverain de Malte, et une branche protestante qui a conservé le nom d'Ordre de Saint-Jean. Sa vocation première est le service aux malades et aux déshérités." <https://museeprotestant.org/notice/lordre-de-saint-jean/>

403 Kavet eo bet kartenn ezel 1977 Bourdellez e dielloù goarnet get e ninez Yvette Meurou.

404 Foto ur strollad an Urzh-se àr treuzoù un iliz 'zo bet kavet àr <https://bibliotheque.idbe.bzh/> /à

405 Prin = "déficient."

406 Oc'hpenn a ra Bourdellez kement-mañ : "Le Prieur est le général Pierre du Chélas maire et conseiller général de Paimpont Beau-frère de l'évêque de Valence. L'équipe se soude peu à peu. Le caractère et l'esprit "monacal" ce n'est pas très facile à acquérir dans une équipe d'hommes de **50-60 ans** qui n'ont pas fait de noviciat. (...) Je suis le 'chapelain'."

407 *Pax*, kelc'hgelaouenn Abati Landevenneg, miz Imbril 1972, n° 909, p. 44-54, "La Passion dans la littérature de langue bretonne" Pierre Bourdellès.

408 *Pasion an Aotrou Krist*, 1939.

409 Er pennad "Note de présentation de la traduction en langue bretonne, revue et corrigée, de la Bible appelée *Ar Bibl Santel*", é vont da vout embannet get Emglev An Tiegezhioù. 12 p., (deiziad, sinadur ebet) e anaver e oa Bourdellez e-barzh skipailh renet get Maodez Glandour he doa troet darn ag an Aviel Kozh adal 1953 betek 1983 (8 ezel: Maodez Glandour, Marsel Klerg, Pêr ar Gall, Job Lec'hvien, Maurice Colleau, an Tad Medar, Guilherm Dubourg ha **Pêr Bourdellez**.) <https://emglev.wordpress.com/>

410 Troidigezhioù an Testamant Kozh : *Levr Deniel, Levr ar Roueed* : "An destenn nevez-ouzhpennet e renkell 'Bodad ar Bibé a zo hini *Levr Daniel*. Div lodenn ez eus : unan a zo bet skrivet en hebraeg hag eben "deuterokanonek", da lavarout eo n'eo ket degemeret gant ar brotestanted dre maz eo bet skrivet war-eeun e gresianeg. Un droidigezh a sav d'ar bloavezhioù 60 moarvat. Savet eo bet gant an Tad Ar Gall person Eviaz a oa ur mailh war an hebraeg,

N'eo ket bet kavet an troidigezhioù en doa kemeret perzh Bourdellez enne. Hañval a ra n'int ket bet embannet an troidigezhioù-se : " Il [Maodez Glanndour] prépara l'édition de plusieurs autres livres de la Septante [en o zouez *Levr Daniel* ha *Levr ar Roueed*] dont il avait eut les Imprimatur en 1983, mais renonça à les publier sans doute pour raison de santé, et aussi parce que les abbés Pêr ar Gall et Jozef Lec'hvien publièrent leur traduction complète de l'*Ancien Testament* en cinq volumes à partir de 1981."⁴¹¹

Labouret en deus ivez Bourdellez àr dachenn troiñ e brezhoneg un nebeut pennadoù liderezh, Kavet am eus pemp "prefas" evit al liderezh troet e brezhoneg getañ e dielloù Yvette Meurou.⁴¹²

Ha c'hoazh : ezel ar gevrudigezh "**Beleion vBreizh**" a voe e fin e vuhez adal 1971 betek fin e vuhez.⁴¹³ É kemer perzh en "**Unvaniezh Speredel Vreizh**."⁴¹⁴

H Bourdellez dipitet bras get tout ar strolladoù politikel hag an Iliz.

"Dek vloaz 'zo emañ (er Bleun-Brug, e Kendalc'h, er G.E.E.S.) o vodañ re yaouank, o tigeriñ o speredoù hag o c'halonoù war gudenn Vreizh, ouzh o degas betek penn an hent politikel. **Biskoazh n'hon eus kavet gwir bolitikourion, gwir danvez-renerion-tud, evit mont pelloc'h gant al labour.** Kavet hon eus merourion menozioù goullou, ha netra ken. **Sur on ez eus e Breizh milieroù a dud o deus bet roet o anv d'ur strollad politikel breizhat, hag a zo aet e-maez peogwir ne raed nemet merat menozioù ! En amzer-mañ, ne glever komz e Breizh nemet eus 'Kudenn Vreizh' : labourerion douar, saverion-yez, pesketaerion, micherourion..., anken ar re yaouank, nec'hamant ar re gozh, pegen diaes eo bevañ, pegen nec'het eo an holl gant an amzer da zont. Eno emañ gwir ziazez kudenn Vreizh : piv a savo ar samm-se diwar choug ar bobl hag a roio dezhañ magadurezh-korf, magadurezh-spered, esperañs hag enor ? Ha ne gavan skouer ebet en Emsav nemet skouer Meven MORDIERN (a zoujan kalz)⁴¹⁵, peadra a-walc'h dezhañ da chom hep kemer labour-bevañ ebet ha reiñ e holl amzer d'ar studi !!! En anv Doue, goulennit digant ho kenlabourerion lakaat o zreid war an douar ! Homañ eo ar gudenn : n'eus den ebet da bleidiñ gant ar re yaouank a vez bet degaset betek tachenn ar politikerezh, **n'eus den****

adkempennet gant an Tad Bourdelles, ha reizhet gant Maodez Glanndour. Al lodenn c'hresianek (3, 24 -43 ha lodenn 'Suzanna ha Bel') a zo troet diwar ar galleg gant **an Tad Bourdelles** ha reizhet gant Maodez Glanndour evit klotañ gant ar Vulgata latin evel ma c'houlenn an Iliz."

411 "Note de présentation de la traduction en langue bretonne, revue et corrigée, de la Bible appelée "Ar Bibl Santel", en cours d'édition par Emglev An Tiegezhioù." p. 3.

412 *Prefas Pask, Prefas ar C'haoreiz, Prefas ar Groaz hag ar Pasion, Prefas an Azvent, Prefas Nedeleg, Prefas an Epifaniez*. "Les préfaces sont structurées en 3 parties" a skriv Dom Robert le Gall *Dictionnaire de la liturgie*, Chambray, CLD, 1982 ; in-8° broché, 278 pp.. Il semble que les 5 textes retrouvés correspondent à la deuxième partie, de la structure habituelle des préfaces, la plus importante celle qui dépend du propre du jour. "Ces formules sont concises, mais riches de doctrine théologiques. Elles décrivent le mystère particulier que l'on découvre dans la liturgie du jour. On compte quatre-vingts préfaces dans le Missel romain"(R. le Gall Dic de la liturgie).

413 Teuliad "Beleion Vreizh", <https://bibliotheque.idbe.bzh/>

414 Lizherioù pediñ kavet e dielloù Yvette Meurou evit un emvod e Kastellin d'an 01a a viz Mae 1967 àr sujed : "Ar brezhoneg el liderezh"un devezh peden ha studi "en ur sal prestet get an aotrou Etienne Abanna : Maen ar Ya. Unan a-rall evit un emvod e Plougernevel d'an 01/05/1970 àr sujedoù-mañ : "envoriñ 250-vet deiz-ha-bloaz marv Pontkalleg hag an 3 denjentil all bet dibennet e Naoned (prezeg get an Aotrou Dubourg) ha lidañ ar c'henlabour efedus sevenet gant komision etreeskoptiel Gwened-Treger evit al liderezh brezhonek".

415 "Reun ar Rouz (René Le Roux) (1878-1949), anavezetoc'h dindan e anv-pluenn Meven Mordiern, zo ur skrivagner brezhonek hag ur yezhour gouziek war ar brezhoneg , an hengeltieg hag ar Gelted kozh. Bet e voe unan eus krouerien ar brezhoneg unvanet hag arnevez, a-gevret gant Frañsez Vallée hag Emil Ernod".

https://fr.wikipedia.org/wiki/Meven_Mordiern

ebet da zisplegañ d'ar bobl eo gwall gudenn Vreizh eo a zo o sammañ o buhez pemdeziek, n'eus strollad oberiant ebet war dachenn ar politikerezh, hag al labour a reomp gant ar re yaouank er Bleun-Brug, e Kendalc'h, h.a. ne dalv da netra peogwir ar re a c'hallje hon skoazellañ a gav aesoc'h stlepel ganimp falstamalloù! "Oberoù ! Oberoù ! Oberoù !" ⁴¹⁶ Setu Bourdellez e kemer rannalon e 1969... pa ne wel hani gober evit ma vehe gwellaet stad Breizh.

Komprenet hon eus dija ur bochad traoù a-zivout e vennozhioù politikel goude bout eñ heuliet adal ar bezadoù 1930 betek ar blezadoù 1970, é kemer perzh e vuhez, e strolladoù politikel ha kani an Iliz.

Hiviziken e vo klasket kentoc'h prederennoù don politikel Bourdellez é furchal e pennadoù politikel teorikel skrivet getañ hag é lakaat anezhe tal-doc'h-tal get re prederourion arall.

III É klask petra eo devezout politikel Bourdellez

Gwelet e vo ez-kronologel petra a soñje Bourdellez diàr-bouez an Dispac'h Bras, ar Chouanted, ar varksouriezh, ar gevalaouriezh, an drevadenouriezh, penaos e weled ar c'hudennoù sokial, ha petra a oa evitañ bout broadelour e Breizh.

A Hag eh eus get Bourdellez un enepdispac'hour?

Petra eo ar mennozhiaour enepdispac'hel? Setu termenadur roet get *Geriadur ar brederouriezh*: "ur redenn vennozhioù a-enep Dispac'h 1789" ⁴¹⁷. E-touez prederourion bennañ ar luskad-se e c'heller gober anv ag an Iwerzhonad Edmund Burke (1729-1797) hag an daou Frañsizion-mañ : Louis de Bonald (1754-1840) ha Joseph De Maistre (1753-1821).

Roudoù ag ar mennozhiaour enepdispac'hel a vez kavet e skridoù Bourdellez, alies emañ-eñ a-du get ar re-se : dre vras emañ, éltè, **a-enep an Dispac'h, a-enep bedouriezh prederourion ar Sklêrijenn**. Koulskoude, pa vez klasket donoc'h e vez kavet diforc'hoù.

Skrivet en deus ivez Bourdellez tri fennad a-zivout ar Chouanted. Setu e vo penaos eo bet degemeret ar luskad-se getañ?

1° A-enep an Dispac'h Bras.

A-du eo Bourdellez evit lâret eo ret **gober stad doc'h ar renad politikel padus**, eh eus e skiant-prenet dezhañ e-unan, en deus produet gizioù hag ensavadurioù dezhañ e-unan, **ur gevrudigezh 'zo daet da vout ur bobl** hag he deus honnezh neuze un "dra ispisial" mat da vout gwarezet. Ne faot ket dezhañ e vehe skarzhet kuit ar c'hizioù-kozh, ar re bet kaset deomp get **an hengoun** gwelet aze a-choude e oa erruet ar Vretoned en Armorik: "Pa fell dimp en em dizober

416 *Emsav, kelaouenn bolitikel*, n° 4 Ebril 1969 "Emsav ha Kendalc'h" ur lizher (08 02 1967) get An Aotrou Beleg P. Bourdelles, p.86.

417 "Courant opposé au processus révolutionnaire de 1789" *Larousse Encyclopédie de la philosophie*.

https://www.larousse.fr/encyclopedie/philosophie/contre-r%C3%A9volutionnaire_pens%C3%A9e191396#:~:text=Courant%20oppos%C3%A9%20au%20processus%20r%C3%A9volutionnaire,l'id%C3%A9e%20sur%20les%20faits.

diouzh ar gizioù hag ar gelennadurezh deut dimp dre hon tadoù ez omp heñvel ouzh tud en ur straed diouzh an noz, c'hoant dezo skeiñ e-traon ul letern koz zo war veg ur post-koad. Ar manac'h rous (spered ar Grenn-Amzer getañ) a lâr "sonjomp da getañ e talvoudegezh ar sklerijenn. Ma 'z eo ar sklêrijenn un dra vat dreizi hec'h unan"⁴¹⁸. **Ret eo gober stad ag doareoù, perzhioù ispisial ar vro, da lâret eo re vBreizh. Ne c'heller ket peurskubañ an amzer dremenet.** Setu mennozhioù tost-tre da re ar brederourion enepdispac'hel. "Selon Burke, auteur, en 1790, des *Réflexions sur la Révolution de France*, il faut même se flatter en la matière de ne faire aucune découverte, si l'on ne veut pas laisser à ses successeurs "une ruine à la place d'une habitation". La tradition est ce qui donne aux institutions toute la force qu'elles peuvent avoir, et c'est bien plus dans **la continuité** assumée de leur histoire que dans le surgissement et l'imposition volontaire d'une idée abstraite que se loge leur vrai principe.(...) **la contre-révolution joue donc clairement l'histoire contre la philosophie**"⁴¹⁹. Liammet eo menozhiadur enepdispac'hel, hrevez ar prederour Bruno KARSENTI, doc'h un "thème d'origine préromantique : celui de l'unité organique du peuple, dont la vie propre s'exprime à travers ses coutumes et ses institutions configurées singulièrement et auxquelles on attribue un sens spécifique".⁴²⁰

Ne ginnig ket Bourdellez e vehe bet cheñchet penn-da-benn ensavadurioù a oa e plas e 1788 e Breizh. Muioc'h c'hoazh ne oa ket afer ag un Dispac'h e Breizh d'ar mare-se, emezan, er c'hontrol memp : "E 1788 Breiziz a zo eta, koulz lavaret, mistri er gêr, hag emañ e penn ar vro Stadoù Breiz ha Breujoù Breiz, kaeroc'h eo bet skoulmet un emglev etrezo er XVIII^{vet} kantved, ha goude 80 vloaz stourm emañ Breizh e 1788 tostoc'h d'he frankiz, dirak ur Roue gall dic'halloud, eget n'eo bet bizkoazh abaoe ar bloaz a c'hlaç'har 1532.E 1788 pa gomz Breiziz e rank Roue Bro-C'hall plega."⁴²¹.

Amañ e weler Bourdellez é soñjal a-du get an enepdispac'herion a lâre, berr-ha-berr, hrevez Karsenti⁴²²: klasket o deus an dispac'herion gober traoù nevez, skubat an traoù kozh (en o zouez an ensavadurioù kozh) ha digabestrañ da vat ar gevredigezh a-zoc'h ar gevredigezh hengounel. Hogen n'eo ket posubl nevezaat an traoù àr an dachenn bolitikel, àr dachenn an divezouriezh politikel naket.

Met aze e welomp **un diforc'h** etre Bourdellez hag ar brederourion enepdispac'hel. **Louis de Bonald ha Joseph De Maistre**, a oa politikourion ha prederourion gatolik anezhe, **prederourion an tu dehou reizhvelielour** (hrevez René REMOND)⁴²³, **a yae betek lâret e c'helle monet dorn-ha-dorn an Istor ha Doue**. Neuze e oant **a-du get an unpeniezh hollveliek e Bro-Frañs**⁴²⁴.

418 BOURDELLEZ, Per. *Breiz*, n° 451 15 03 1936 p.2 "Kelennadurezh eus an tu all d'ar mor," J.K. Chesterton (2) gant Maen Tan.

419 KARSENTI, Bruno (prederour gall ganet e 1966). " Contre-révolutionnaire (pensée)", *Dictionnaire de la philosophie*, Larousse https://www.larousse.fr/encyclopedie/philosophie/contre-r%C3%A9volutionnaire_pens%C3%A9e/191396

420 *Ibid.*

421 BOURDELLEZ, *Studi hag Ober*, hañv 1940, n°11, p.4, "Breiz e 1788".

422 *Ibid.* KARSENTI: "Les révolutionnaires ont voulu innover, renverser ce qui précède, mettre à bas les institutions et introduire dans l'histoire une ligne de fracture qui affranchit définitivement la société du poids de la tradition. Or, on n'innove pas dans le domaine des choses politiques et morales."

423 "légitimiste" pe "contre-révolutionnaire" hervez termenadur René REMOND en e oberenn vrudet *Les Droites en France*, Aubier, 1954, 544 p. ISBN 2-7007-0260-3

424 *Ibid.* KARSENTI. Hervez Karsenti emañ "la pensée contre-révolutionnaire" liammet doc'h "une pensée de type théologico-politique profondément enracinée dans le catholicisme. Chez Bonald et de Maistre, principaux représentants

Pleustriñ a ra **Bourdellez** diàrbenn Breizh ha n'eo ket diàrbenn Bro-C'hall evel a ra an daou-se. **Ne vo ket c'hoantaet getañ tamm ebet e vehe adlakaet àr an tron Roue Bro-C'hall**, sklaer eo. (Gwelet e vo pelloc'h er pennad 'Bourdellez hag ar Chouanted' ha pelloc'h c'hoazh e-barzh kani a-zivout 'Bourdellez ha frankiz Breiz'). Gwir eo neoazh en deus degemeret mat Bourdellez ar formulenn '**Feiz ha Breizh**' a oa bet kani an Abad Perrot, o doa mennozhioù hennañ levezonet Bourdellez ur bochad (Lâret eo bet-kement-se dija e lodenn gentañ al labour-mañ).

Ha koulskoude en deus soñj Bourdellez ag e oa bet Bretoned o doa kroget get an Dispac'h e penn-kentañ e 1789 hep o dinac'h tamm ebet : "Ar re a oa e penn an Dispac'h, Dispac'h Braz Bro C'hall en amzer gentañ, a oa Bretoned" a lâr Bourdellez diàrbenn ar "C'hclub Breton"⁴²⁵ er film *Le Tacon*⁴²⁶ un tammig lorc'h ennañ é lârouet kement-se.

Setu n'eo ket a-du Bourdellez penn-da-benn, get an daou enepdispac'herien katolik meneget. N'en deus ket skrivet Bourdellez e c'hoantae e vehe adlakaet un duk nag ur roue bennak àr dron Breizh kennebeut.

Koulskoude, ken sklaer eo ivez e kav dezhañ ne oa ket afer ag un dispac'h e 1789 e Breizh, **kempenn ensavadurioù Breizh** ne lâr ket : re a dudjentil e Stadoù Breiz "kalz re emaint"⁴²⁷ ha remerk a ra Bourdellez : "Ar maezioù n'o deus kannad ebet".⁴²⁸ Setu neuze, d'e venno, daou dra d'an nebeutañ a vehe bet mat o cheñch.

Bourdellez a gav dezhañ e tifoupas an Dispac'h e Breizh dre ma ne oa ket bet studiet e Versailles kaieroù-klemm ar Vretoned na respontet dezhe: "An tamalloù a oa bet merket, e gwirionez, er c'haieroù-klemm a gaso ganto da Versailles kannaded Stadoù Bro-Chall e 1789, met ar c'haieroù-klemm-se ne oa ket bet sellet outo, hag an Dispac'h ne vo ket graet evit gounit ur frankiz resis, met evit gounit ar Frankiz; nag evit kempoueza eun disingalded re-vras met evit an Ingalded, nag evit ur rummad tud er boan met evit ar Bobl."⁴²⁹

N'eo ket pell soñjennoù Bourdellez doc'h re ar varksourion a gav dezhe eo bet Dispac'h 1789 kani ar vourc'hizion o deus embannet ur bochad frankizoù ne oant ket bet **frankizoù gwerc'hek da**

de cette tendance, l'historicisme se concilie avec le providentialisme sans pour autant s'annuler."

425 *Wikipedia* pajenn "Kleub Breton" : "Graet e veze Kleub breton eus ur strollad kannaded eus Breizh. Evel ar gannaded c'hall all e oant bet galvet gant ar roue Loeiz XVI da gemer perzh e Breujoù Bro-C'hall a-benn ar 1^{añ} a viz Mae 1789. Kenkent hag erru e Versailles e dibenn miz Ebrel 1789 e kustumjont en em vodañ e tavarn Nicolas Amaury, evit "breutaat en araok war an danveziou a ranke bezañ graet war o zro er Breujoù" pa vijent liammet ouzh Breizh pe ouzh danveziou all. Krouet e oa bet d'an 30 a viz Ebrel 1789 gant an alvokaded roazhonat Isaac Le Chapelier (1754-1794), Jean-Denis Lanjuinais (1753-1827) ha Jacques-Marie Glezen (1737-1801) peurgetket.

426 *An Abad Pêr Bourdellez, an emsaver* LE TACON, Jean-Louis, 1987, Format Umatic, Film professionnel, Court Métrage 25 mm 30. Documentaire couleur sonore (d'an navet minutenn) <https://www.cinematheque-bretagne.bzh>

427 *Studi hag Ober*, hañv 1940, n° 11. BOURDELLEZ "Breiz e 1788" ("lodenn gentañ: an dud"), Maen-Tan, p. 4.

428 *Ibid.* p. 5.

429 BOURDELLEZ, *Studi hag Ober* hañv 1940, n°11, "Breiz e 1788", p.7.

vat, frankizoù furmek ne lâront ket.⁴³⁰ (Hiroc'h e vo gwelet evit ar pezh a sell doc'h ar c'hraf-mañ er lodenn gouestlet da "Bourdellez hag ar varksouriezh hag ar gevalaouriezh".)

Setu e weler amañ e oa ur bochad traoù da cheñch e Breizh hrevez Bourdellez : frankizoù a oa da c'hounit, kempouezhiñ an disingaldedoù a oa d'ober, rummadoù tud a oa er boan... Setu ar pezh a lâr ar c'haieroù-klemm hag a adlâr Bourdellez d'o heul.

Gouiet a reomp ne felle ket d'an **enepdispac'herion** e vehe bet cheñchet tra ebet er gevidigezh kozh. Evit prederourion kostezenn an enepdispac'h emañ **an urzh sokial un dra zigemmus, sakr**. N'eo ket a-du Bourdellez get un hevelep soñjennoù. Petra a oa da cheñch d'e venno? N'eus ket bet kavet muioc'h en e bennadoù⁴³¹. Met an Dispac'h, forzh petailh, n'eo nemet ur fals-remed d'an traoù a vehe bet mat o cheñch. **Àr washaat eh ehe (hag eh ey) an traoù get an Dispac'h** memm an hani eo d'e soñj-eñ.

Kement-se e tisplego e 1948 er pennad-mañ : "Kentoc'h mervel. Anciens Elèves de Tréguier, victimes de la persécution révolutionnaire"⁴³². Sujed ur pennad-mañ 'zo studierien kozh Landreger bet handeet e-pad an Dispac'h Bras. Darvoudoù ar blezadoù 1789 /1794 e Bro-Dreger 'zo displeget dre ar munut get Bourdellez. Tamall a ra bourc'hizion Bro-Dreger hag ur lodenn ag ar velean (a yelo da vout kloer intru) bout bet a-du etreze evit skrapañ madoù ha kargoù an Iliz, komz a ra Bourdellez a-zivout yuzh a lazioù⁴³³ pe "coalition d'intérêts" ar re-se, tamall a ra an dispac'herion o doa rekisisionet dre heg tud yaouank Bro-Dreger ne oant ket a-du mont da vrezeliñ e 1792, ha neuze telloù-kastiz, tud lakaet en toull-bac'h, tud kondamnet d'ar marv ha lazhet gete (1792: "bloavez an taolioù bazh"; 1794 : "17 den lazhet e Bro-Dreger" get an dispac'herion, mistri nevez ar vro), **tamall a ra an Dispac'h dre vras p'en deus henezh kaset reuz e Bro-Frañs a-bezh : "23 ans de violence [1792] jusqu'à Waterloo1815."**

Adal 1793 e tarzhas ur brezel diabarzh e Breizh etre an dispac'herion ha re a vo anvet an Chouanted.

430 BERCIS, Pierre. (Président an Aozadur An-Gouarnamantel pe "Organisation Non-Gouvernementale Nouveaux Droits e l'Homme") *Le Monde*, 01 10 1977 : La première, la conception des libertés formelles (ou des droits formels) est la conception libérale, "bourgeoise" (au meilleur sens du terme) : celle que la première génération révolutionnaire de 89 pensait suffisante pour établir la démocratie. Elle proclame la liberté d'expression mais ne se soucie pas du monopole de la presse ; elle garantit le droit de propriété sans dénoncer l'exploitation que cette dernière permet au détriment des travailleurs ; elle affirme l'égalité mais n'en donne pas les moyens (...) Cependant, devant l'inadéquation par trop voyante entre les droits et les faits, certains penseurs politiques du dix-neuvième siècle (baptisés socialistes) ont, peu après, commencé à cerner les insuffisances de la Déclaration de 1789, analysant l'abîme qui séparait les libertés formelles des libertés réelles, distinction devenue classique depuis, et que l'on retrouve même répartie géographiquement depuis les deux guerres mondiales, puisque, à l'Est, groupés autour de l'Union soviétique, un ensemble de pays ne tient pour seuls sérieux que les droits réels et néglige systématiquement les libertés "bourgeoises", considérées comme secondaires, tandis qu'à l'Ouest la bourgeoisie régnante feint d'ignorer que ces libertés ont des fondements économiques pour n'en parler qu'à la manière dont les philosophes en parlaient au dix-huitième siècle." https://www.lemonde.fr/archives/article/1977/10/01/libertes-formelles-et-libertes-reelles_2879002_1819218.html

431 Marse e vehe kavet muioc'h en ur pennad arall diarbenn "Breizh e 1788" 'zo bet skrivet get Bourdellez, an dra-se 'zo kemennet e *Studi hag Ober*, n° 11, 1940, met n'eo ket bet embannet evit doare, e istil a vehe bet "Breizh e 1788 -An darvoudoù".

432 BOURDELLES, Per. "Kentoc'h mervel, Anciens Elèves de Tréguier, victimes de la persécution révolutionnaire" *Bulletin de l'Association des Anciens élèves du Petit séminaire de Tréguier et de l'Institution Saint-Joseph*, 1948, p. 42-51.

433 "Conflits d'intérêts" hrevez Martial Ménard *Dictionnaire français breton*; Palantines p. 293 : "kenniñv lazioù", ha hrevez "Geriafurch : "yuzh a lazioù"

2° É kompren hag é buretelliñ ar Chouanted.

Skrivet en deus ivez Bourdellez daou bennad a-zivout ar Chouanted. Gwelet e vo penaos en deus komprenet ha degemeret ar luskad-se. Solitiñ e oa bet Bourdellez d'ober rakskrid tezenn Erlannig alias François Marquer⁴³⁴ diàrbenn ar Jeneral de Sol de Grisolles. Skrivet e oa bet getañ pa oa bet embannet an dezenn-se e stumm ur levr e 1968⁴³⁵. Ar rakskrid-se a voe embannet en-dro e 1968 er gelaouenn *Barr Heol*⁴³⁶. Ur pennad arall en doa skrivet Bourdellez a-zivout ar Chouannerezh en a-raok: er gelaouenn *Al Liamm* e 1948, n° 8, p. 73-77, "Ar Chouanted diwezhañ".

E rakskrid tezenn Erlannig ne ra Bourdellez nemet lâroust berr-ha-berr ha displegiñ ar pezh en deus-eñ desket é lenn anezhi. Ne bella ket a-zoc'h lâredoù ha dielfennañ an tezenour. A-du eo dre vras getañ. E fin rakskrid Bourdellez embannet e *Barr Heol* e 1968, e kaver tres kalon ar Chouanted get ar groaz, arouez ar Chouanted.

Pal kentañ ar Chouanted a oa, hrevez Erlannig ha Bourdellez, monet àr hent frankiz Breizh. Dre benaos tizhout un hevelep pal? Moarvat é lakaat en-dro Roue Bro-C'hall àr e dron. Perak? Peogwir o doa prometet breudeur Loeiz XVI e vehe roet gete he frankiz da Vreizh: " Ar Roueri⁴³⁷ a oa ur politikour ampart. Lakaat a reas ar Briñsed tec'het da Vro-Saoz (daou vreur Loeiz XVI, a re a vo diwezhatoc'h Loeiz XVIII ha Charlez X) da sinañ e toujfant da wirioù Breizh...⁴³⁸. Troet fall en deus luskad ar Chouanted neoazh a skriv Bourdellez : "A-hed ar bloavezhioù, e weljod emsav ar Chouanted evit frankiz Breizh o tonet da vezañ un emsav evit adtronañ ar Roue gall"⁴³⁹. Kadoudal ha Sol de Grisolles, pennoù-bras anezhe, a stourmo get Bretoned 'zo, ar Chouanted, a-enep an dispac'herion, ha neuze a-enep Napoleon, spi gete e talc'he Roueed Bro-Chall o fromesa. Ar pezh ne rint ket goude : "Gwir eo o doa sinet Loeiz XVIII ha Charlez X d'ar Roueri e toujfant da frankiz Breizh. Met maget mat ha lojet dizañjer e Bro-Saoz, ha diduet gant itronezed flour, ne rejont ket ur fiñv evit skoazellañ ar Chouanted. Er bloaz 1799, p'edo Bro-C'hall heuget gant dek bloaveziad lazhadeg ha dizurzh, o klask ur mestr, ne zeuas roue ebet d'en em ginnig. Ar C'horsikad eo a azezas war an dron diberc'hen."⁴⁴⁰. **Ne oa ket bet Kadoudal na Sol de Grisolles spiswel a-walc'h**, ankouiet gete pal kentañ ha pouezusañ o stourm é vrezeliñ. Madelezhus e chom Bourdellez en o c'heñver neoazh : " Dibaot an dud a c'hellfe bezañ war un dro politikerien ha tud a vrezel (...).

434 "François Marquer connu sous les pseudonymes de Erlannig ou encore Even Erlannig était un historien de la région de Questembert qui a écrit de nombreux livres. Il est né le 15/11/1913 à Questembert et est décédé le 31/03/1997 à Questembert", *Levraoueg Niverel Breizhek hag Europeat*, <https://bibliotheque.idbe.bzh/>

435 *Le Général Louis-Charles-René de Sol de Grisolles (1761-1836), frère d'armes et successeur de Georges Cadoudal*, get ERLANNIG Even (alias François MARQUER), Les Presses Bretonnes, Saint-Brieuc, 1968, 410 p. .Rakskrid get P. Bourdellès p. 9-11. Adembannet e 1994, Edition La Découverte, Collection L'Amateur Averti. ISBN 2-910452-21-2

436 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, n°56, Mezheven 1968, "Ar Jeneral Sol de Grisolles" P. Bourdellez p.13-16.

437 "Charles Armand Tuffin, markiz ar Roueri (13 a viz Ebrel 1751 e Felger - 30 a viz Genver 1793 e Sant-Denwal), a oa ur soudard hag ur brogarour breizhat, unan eus harozed Brezel dieubidigezh ar Stadoù-Unanet. Emezelet e oa er c'h-Continental Army, lec'h ma oa lesanvet Koronal Armand. E penn ar Iañ rejimant dragoned (lesanvet Lejion Armand) e oa. Kemeret en doa perzh e Seziz Yorktown gant ampartiz. Kamalad bras George Washington e oa bet. Pa za en-dro da vBreizh emañ Jeneral-brigadenn, enoret eo gant medalenn Sant-Loeiz ha medalenn Urzh Cincinnati. Ur wech echu ar brezel stadunanat e tistroas da Vreizh, ma tifennas Breujoù Breizh a-enep skridoù-embann Versailles. Toullbac'het e voe er Bastille d'ar 14 a viz Gouhere 1788. E penn an *Association bretonne* e oa, egin ar Chouannerezh. Hiziv-an-deiz n'eo ket ken anavezet evit Lafayette. https://fr.wikipedia.org/wiki/Armand_Tuffin_de_La_Rou%C3%ABrie

438 BOURDELLEZ, 1968, rakskrid, p.10.

439 *Ibid.*

440 *Ibid.*

Arabat tamall da Jord Kadoudal na da Sol de Grisolles e vefe bet re vêrr o mennoziou politikel. Ret e vije bet aozañ evel ma reas ar Spagnoled - hag evel ma en deus desket ober, abaoe, pep emsav-ur gouarnamant kuzh... Ar bolitikerezh a zo ur vicher diaes ha luziet : **fealded divrall ha dall e-keñver ur Roue gall ne oa ket un diazez fiziuz da salviñ pobl Vreizh**. E 1815, Loeiz XVIII, adtronet a-drugarez da Chouanted Breizh hag o doa trec'het en e anv, na voe chalet na gant ar sinadurioù roet d'ar Roueri na gant an anaoudegezh vat dleet da re a oa marvet evitañ.⁴⁴¹ "Setu kentel griz an istor evel ma 'm eus-hi desket el levr-mañ."⁴⁴²

Bourdellez a stag ivez get tud pobl Vreizh o deus kemeret perzh e luskad ar Chouanted: "Gant tud ar bobl eo koll amzer chom da zirouestlañ kudennoù luziet ar bolitikerezh: adalek an deiz kentañ int en em savet evit difenn: "frankiz ar parrezioù", eeun ha didro. Ne felle ket deze e teuje bourc'hizion gant o Gwardoù Nazional da harluiñ o ferson ha da lakaat ur beleg intru e penn ar barrez. Ne felle ket deze bezañ renet, e-lec'h "Jeneral" ar Barrez, gant politikerion kriz ha didruez. Ne felle ket deze e vije kaset o faotred yaouank da lazhañ war dachennoù Bro an Ankou, evit difenn ar re a zibenne ar veleien, hag a brizonie ar Pab."⁴⁴³.

Er pennad "ar Chouanted diwezhañ" en doa staget Bourdellez get **Chouanted Bro-Wened ar bleadoù 1830/45**, pa oa Loeiz Fulup àr dron Bro-C'hall, é tispieg gwall zarvoudoù etre ar Chouanted-se hag archerien ar Roue. Meuliñ a ra Bourdellez an emglev 'zo bet etre ar vrientined hag ar beizanted: "Amañ emañ an ofisourion deuet darn eus ar maner darn eus an ti-soul, breudeur ha mignoned holl aneze, holl o vevañ e-pad keit amzer 'hep ti nag aoz, na gwele da gousket en noz.'⁴⁴⁴

Bourdellez a gav dezhañ er pennad-se n'eo ket anavet mat istor ar Chouanted "ne vezont ket kavet nemeur el levrioù"⁴⁴⁵. Ha setu eñ é pediñ lennerion tezenn Erlannig da studial istor ar Chouanted é lâroust kement-mañ: "An hini a fell dezhañ gouzout petra eo bet Brezel ar Chouanted (ha daoust pe ruz pe wenn e vefe e gostezenn, dever pep Breizhad eo o anaout a-raok o meuliñ pe o zamall, a ranko studiañ buhez tri zen : ar Roueri, Jord Kadoudal hag hini a c'honzas ar brasañ trec'h, a c'houzañvas ar gwashañ poan, hag a zoujas d'ar gwashañ dismegañs : Sol de Grisolles."⁴⁴⁶.

Goude bout studiet istor **ar Chouanted**, n'en deus ket Bourdellez o zamallet, o meuliet ne lâreher ket⁴⁴⁷. Tamall a ra Loeiz XVIII, Charlez X pa n'o deus ket skoazellet ar Chouanted ha pa n'o deus dalc'het d'o fromessa e-keñver "Frankiz Breizh". Madelezhuz e chom e-keñver pennoù-bras ar Chouanerezh daoust ma o deus diheñchet. Meuliñ a ra tud ar bobl ("**tud ma fobl**"a lâre-ñ) o deus kemeret perzh er Chouanerezh.

3° A-enep bedouriezh prederourien ar Sklêrijenn?

N'eo ket a-du Bourdellez get mennozhioù ha bedouriezh prederourien ar Sklêrijenn pand int ar re-se **dizoue**, pa lakont **ar Poell da vennozh pennañ o soñjennoù**, pa reont get **meizadoù difetis**. N'o deus ket pledet ar brederourion-se, hrevez Bourdellez, get kudennoù fetis an dud (ar re a

441 *Ibid.*

442 *Ibid.*, p.11.

443 *Ibid.*

444 *Ibid.*

445 *Ibid.*

446 *Ibid.*, p.9.

447 Kemeret perzh en deus Bourdellez e 1954 en Alré en ur lid aozet get Aotrou 'N Eskob Gwened le Bellec e-keñver 150 deiz-ha-blez marv Kadoudal. *La Liberté du Morbihan*, 03 a viz Eost 1954, p. 5.

oa bet resisaet er c'haieroù-glemm da skouer). **Liamm ebet etre ar brederouriezh-se ha bed gwerc'hel ar Vretoned a gav dezhañ.**

Gwasoc'h **ne glask ar brederourion-se nemet diskar hep klask adsevel**: "Pelec'h eo bodet 'an Dud hervez ar Poell'? Ganet int diwar spered prederourien an XVIII^{vet} kantved. Strolladoù-prederia a anver o strolladoù, rak n'o deus ket pal ebet, n'emaint o klask seveni netra, ne fell dezho nemet kas war-raok ar Sklêrijenn 'progrès des Lumières' hag evit se e prederiont, e tivizont, e skrivont diwar-benn Den an natur, en dije bevet en eun Henamzer a huñvre, e Roma pe Hellaz, d'o meno, pe en Amerika-Franklin e Paris-" a skriv Bourdellez e 1940⁴⁴⁸.

Skignet e oa bet ar mennoziou-se e Breizh get "daou strollad-prederia, breuriezhoù ar Frañmasoned, ar c'hambroù-lenn, ar c'helaouennoù (o doa kroget da c'hober berzh d'ar mare-se)." ⁴⁴⁹ E 1788 o doa gouniet mennoziou ar Sklêrijenn kalz a bennoù-bras Breizh, izili ar Stadoù kenkoulz a re vBreujoù Breizh, a lâr Bourdellez : "Piou 'zo bet gounezet gant ar spered-prederia-se? Tud a bep stad e gwirionez, hiniennoù du-mañ ha du-hont, dreist-holl : Burev meur ar Stadoù (...), kevredigezioù-micher. breutaerien, studierien, ar c'horfoù-micher." ⁴⁵⁰.

"Ar strolladoù-prederia a anavez ar muia e Breiz eo ar 'Strollad-studi-labour-douar' gant breutaerien ha dudjentil n'o deus biskoazh labouret douar pe o deus kollet kalz arc'hant o klask en ober. Lâret o deus avat eur bennwirionez kaer : **'Lezit ar c'hoantou-gounit d'en em zibab etrezo, ha dre ar c'hevezerezh en em gavint kempouezet mat'** hag ar 'strollad Brogarour': ar reolenn o deus kavet ar re-mañ eo : **'Lezit ar bobl d'ober ar pezh a blijo d'ezhi hag en em gavo ar perziou mat enoret, ar siou fall mouget hag an holl evurus.'** "Dishualit!" 'Lezit pephini en e frankiz!" reolennoù mat-tre da ziskar pep beli. Met ne dalvezont netra pa glasker adsevel. An Den hervez ar Poell n'en deus na kar, na par, na liamm a nep tu." a zispleg Bourdellez ⁴⁵¹.

Goude bout lennet ar frazenn-mañ e c'heller lâret ne oa ket bet get Bourdellez ur libertarian nag un anarkour anezhañ. ⁴⁵² **Evit Bourdellez eo dav e vehe ur beli é ren ur vro. N'eus ket anezhañ ur frankizour àr an dachenn ekonomikel naket** (Gwelet e vo diwezhatoc'h).

Bourdellez, ne faot ket dezhañ kennebeut e vehe bet lakaet mennozhioù, gerioù difetis, hep liamm ebet get an dud, uheloc'h evit ar fedoù. Àr a seblant emañ **kreñvoc'h an Istor evit ar prederouriezh evit Bourdellez**, kement-arall e kav d'an enepdispac'herion ⁴⁵³. Difiñ a ra Bourdellez a-zoc'h mennozhioù difetis 'zo, re savet get prederourion ar Skêrijenn, bet graet gete goude get an Dispac'herion. E 1789 o deus en em silet e brezhoneg gerioù gallek 'zo bet skignet get un nebeut tud (prederourien ar Sklêrijenn ha tud gouniet get o mennozhioù). Gerioù amresis, difetis ne gouche ket ket o ster get kani gerioù brezhoneg a gouche-int get bed pemdeziek, buhez wirion ar Vretoned, setu ar pezh a zispleg Bourdellez: "A-benn ar bloaz 1789 an anoiou "Pobl", "Tudjentil", ha kalz a anoiou

448 Bourdellez, *Studi hag Ober*, hañv 1940, n°11, "Breiz e 1788", p.8.

449 *Ibid.*, p. 9.

450 *Ibid.*, p. 10.

451 *Ibid.*, p. 8.

452 Termenadur "libertarian" : "libertarien : Partisan d'une philosophie politique et économique (...) qui repose sur la liberté individuelle conçue comme fin et moyen. (Les libertariens se distinguent des anarchistes par leur attachement à la liberté du marché et des libéraux par leur conception très minimaliste de l'État.) Geriadur Larousse en linenn <https://www.larousse.fr/dictionnaires/francais/libertarien/10910910>

453 Karsenti, "pensée contre-révolutionnaire" : "Selon Burke, auteur, en 1790, des *Réflexions sur la Révolution de France* (...) la contre-révolution joue donc clairement l'histoire contre la philosophie.

all evel "Brogarourien", "Prederourien", "Ar Vroad", "Broadelour", "An Dud Yaouank", a oa anioù bet laeret gant un nebeut tud evit luzia ar menozioù hag en anv an holl. Tremenet e oa ar menozioù nevez e brezhoneg gant ar gerioù gallek "Nasion", "Sitoianed", "Filosofed", ha n'eo ket dindan an troidigezhioù hon eus graet anezo. Ar gerioù brezhonek o deus miret eur ster eeun, ha sklaer eo an disparti ez eus etre an eil hag ar re all. An 'Nasion' n'eo ket ar Vroad-tud a-bez. **Eur 'sitoian' n'eo ket forz petaoe keodedad, met un nebeut tud a reas d'ar re all plega dindan "Gwaskerez ar Frankiz."**⁴⁵⁴. Interesant eo preder Bourdellez amañ a lak da soñj e labour re o deus prederiet àr ar bruderezh politikel èl Armand Robin⁴⁵⁵.

"Dre holl eta ez eus hini pe hini hag en deus degemeret ar mennoziou nevez, re ar 'Sklerijenn', re 'An Dud hervez ar Poell', **mennoziou ha n'int ket bet aozet gant ar skiant-prena, met ijinet.**" "Dre ma 'z int groñs, balc'h ha rok evel reolennoù divuhez ar Poell, e tiskarint [an dispac'herion] pep tra : Breiz, ar Stadoù, au Breujou, ar c'horfou-micher."⁴⁵⁶

A-du a-walc'h e seblant bout Bourdellez get mennozhioù an enepdispac'herion a gav dezhe, a skriv KARSENTI "**Avec le rationalisme philosophique, c'est l'universalisme des Lumières qui est rejeté au profit d'un particularisme national.**"

Evit prederourion kostezenn an enepdispac'h emañ an urzh sokial un dra sakr, digemmus hon eus lâret dija. Pep den a aparchant d'**ar c'horf sokial** 'zo un dra bouezhus-tre, kalz pouesusoc'h ar c'horf-se evit **ar penn den**.

Hogen, petra 'c'hoarvez get ar "Sklerijenn" hag an Dispac'h 1789? Ar penn den an hani eo a za da vout an hani poueshusañ just a-walc'h. Dañjerus an dra-se, hervez ar re-se, pa c'hellehe lakaat an urzh sokial en arvar.

Bourdellez en deus skrivet ha graet ur bochad traoù en e vuhez a ziskouez splann ne faote ket dezhañ bout mailhurennet get strollad-mañ-strollad, mem get an Iliz en deus aparchantet dezhi a-hed e vuhez. Graet en deus e vad neuze ag an nevezenti-se bet degaset get ar Sklerijenn hag an Dispac'h 1789. Lâret e c'heller e oa a-du Bourdellez e vehe laosket frank an hiniennoù da soñj hrevez ar pezh a garont.

Koulskoude emañ Bourdellez a-du get an enepdispac'herion pa lâr ar re-se eo bet krouet get an Dispac'h **ur gevredigezh nevez e-lec'h emañ pep den en e-unan e-tal ur galloud a zo techet da greñvaat en ur mod spontus, a c'hellehe marse monet betek an despotegezh hag an dibersonelaat.**⁴⁵⁷ (Tud luskad ar frankizourion èl Tocqueville o deus lâret kement-se ivez.).

454 BOURDELLEZ, "Breiz e 1788", p.4.

455 *La Fausse Parole* Armand ROBIN, Paris, Éditions de Minuit, collection "Documents", 1953.

456 BOURDELLEZ, 1940, "Breiz e 1788", p.11.

457 KARSENTI: "Antihistorique, rationaliste et athée, la pensée révolutionnaire se devait aussi d'être individualiste, c'est-à-dire "anti-sociale". Pour la même raison, elle s'avère despotique : aveugle à la nature sociale de l'homme, elle est contrainte d'engendrer un nouvel État au pouvoir exorbitant, puissance normative extérieure et exclusive s'appliquant uniformément et sans frein à des individus préalablement isolés. On voit ainsi s'amorcer une critique du pouvoir moderne, qui trouvera ses prolongements chez des penseurs libéraux comme Tocqueville.

4° Prederouriezh ar Grenn-Amzer kentoc'h kani ar "Sklêrijenn"?

Hervez Bourdellez "ez eus ag natur an den a ya pelloc'h evit frouezh e zoare bevañ" (Bourdellez 1977,⁴⁵⁸ p. 493). Komz a ra diàrbenn ar Grenn-Amzer gristen. Hounnezh "he deus krouet ur C'hultur, arz ha lennegezh"⁴⁵⁹. "A-boan 'm boa troet e brezhoneg Divina Comedia Dante"⁴⁶⁰ em eus gouezet e oa bet troet nevez 'zo e tibetaeg. Ur skrid eus an amzer gozh kristen en deus talvoudegezh denel en amzer-vremañ, en ur vro bell."⁴⁶¹ Setu e tistroer marse d'ar pezh hon oa lâret a-us. Marse eh eus get Bourdellez unan a gav dezhañ he deus lakaet ar 'Sklêrijen' ar bed àr un tu fall. **Ar Grenn-Amzer gristen setu mammenn-vev, pimpatrom e vennozhioù**, ha n'eo ket re ar 'Sklêrijenn' he deus degaset ar gevalouriezh hag e verc'h ar varksouriezh (gwelet e vo kement-se pelloc'h).

A-enep prederouriezhoù danvezelour hag "hrevez ar poell" diwanet lerc'h-doc'h-lerc'h abaoe an trivec'hvet kantved eo Bourdellez p'o doa, holl anezho, 'lazhet Doue'⁴⁶². Er XVIII^{vet} kantved eh eus bet ur luskad a-enep luskad ar "Sklêrijenn" en o zouez kristenien (katoliked ha protestanded) a zifenne ar relijion gristen hag a ginnige addistroiñ betek mamenn ar gelennadurezh gristen. Tamall a rae ar re-se ar 'Sklerijenn' pa nac'he honnezh Doue ha "gwirionez ar Skritur Sakr".⁴⁶³ En ur mod, marse emañ Bourdellez d'o heul nemet n'en deus ket **bizkoazh skrivet e oa a-enep doc'h ar renadoù demokratel nag a-enep digaezhadur an den**. Ne ouier ket pa n'en deus ket skrivet Bourdellez muioc'h evit displegiñ e sonjennoù.

Evit klozañ get an Dispac'h, ar Chouanted, bedouriezh an enepdispac'herion hag hani ar "Sklêrijenn" e vo lâret eh eus get Bourdellez meur a vennozh a gouch doc'h re an enepdispac'herion na bout n'eo ket a-du penn-da-benn get ar re-se. A-enep an Dispac'h, a-enep prederouriezh ar Sklêrijenn eo pand eo an daou-se dizoue (ar pezh ne c'helle ket degemer mat ar beleg a oa anezhañ moarvat). A-enep prederouriezh ar Sklêrijenn pand eo houmañ difetis ha pell doc'h kudennoù gwirion an dud. A-enep an Dispac'h pa zegaso ar gevredigezh àr hent ar reuz hag an despotegezh.

A-du eo evit lâret emañ ret goarniñ traoù hengounel. A-du eo e vehe cheñchamentoù evit gwellaat stad an dud paour, evit ma vehe gwellaet ensavadurioù Breizh an XVIII^{vet} kantved

458 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 465-528. "Marksouriezh (hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep)" "prezegennoù graet get an Aotrou beleg P. Bourdellez diàr-benn ar varksouriezh e-pad devezhioù-studi 'Kristenion Breizh' e Kistinid e dibenn miz Kerzu 1976". 58 p.

459 *Ibid.*, p. 493.

460 *Imbourc'h*, kelaouenn a studi, Roazhon, 15 Eost 1977, niv. 90-91/1, 197 p.. "An divina commedia » get Dante Alighieri troet diàr an italianeg e brezhoneg get Per Bourdellez, skeudennoù get Annaig Coué, digoradur get Per Bourdellez (19 p. doc'hpenn).

461 BOURDELLEZ, 1977, p.494.

462 *Ibid.*, p.473.

463 "Au XVIIIe siècle, un courant anti-Lumières a existé, composé d'écrivains catholiques ou protestants qui défendent la religion chrétienne et prônent un retour aux sources de sa doctrine. Finalement, il y a une multitude de courants (jansénistes, jésuites, apologistes, etc.) ayant pour point commun la haine des Lumières accusées de mettre en doute l'existence de Dieu et la vérité absolue des écritures." "La détestation des Lumières" Patrick JUIGNET, 12 a viz Gwengolon 2018 <https://philosciences.com/detestation-lumieres> Lennet d'an 12 03 2025, pe c'hoazh àr ar memes sujed : Didier MASSEAU, *Les ennemis des philosophes. L'antiphilosophie au temps des Lumières*, Paris, Albin Michel, 2000). Juignet a gendalc'h (troet geniñ): "Pelloc'h, er XIX^{vet} kantved eh eus bet tud hiraezus, hag o dehe plijet dezhe e vehe bet lakaet ar roue en-dro àr e dron get ur renad aotrouniek, é tabutal prederouriezh ar "Sklêrijenn" pa oa honnezh a-du get ur renad demokratel ha digaezhadur an den. Pelloc'h c'hoazh; goude 1945 eh eus bet tud arall é tabut ar "Sklerijenn", tud a soñje dezhe ne oa get ar brederouriezh-se nemet traoù touellus a guzhe e gwirionez e oa Broioù ar C'hornog é korvoñ peurrest ar bed pe c'hoazh nemet un diavaez dengarour ha touellus mat da guzhañ ar "mestroni" (Michel Foucault).

kenkoulz. A-du eo Bourdellez neoazh get an enepdispac'herion pa gav gwelloc'h ar re-se ar c'houbarzhegezh broadel evit hollvedelezh ar Sklêrijenn⁴⁶⁴. **Ur c'houbarzhegezh vroadel** gall evit ar re-gentañ, **unan vreton evit Bourdellez**. Pal an enepdispac'herion a zo lakaat en-dro Roue ar Frañsizion àr e dron hag adsevel rouantelezh Bro C'hall. **Pal Bourdellez 'zo dishañval : adreiñ da vBreizh e frankiz mod-pe-vod.**(Gwelet lodenn diwezhañ ar labour-mañ).

Sellomp bremañ àr-zu an div brederouriezh bennañ an daou c'hantved diwezhañ, da lâret eo ar varksouriezh hag ar gevalaouriezh, hag ar mod en deus Bourdellez o degemeret.

B A-enep ar varksouriezh.

"Piv 'ta, o varn ar wezenn diouzh he frouezh⁴⁶⁵, a c'hell lavarout ez eo grevusoc'h en em glevout gant ar varksouriezh eget gant ar gevalaouriezh kreizennerez ? Diwarbenn houmañ hag hounnezh e tle ar c'hristen diwall d'en em douellañ."⁴⁶⁶ a skriv Bourdellez e 1971. Sellomp neuze petra eo soñjennoù Bourdellez e-keñver ar varksouriezh, hag ar c'hevalaouriezh kreizennerez.

1° A-enep ar varksouriezh, enepkomunour tout.

Petra a lâr diàrbenn ar varksouriezh? Pegoulz hag e-menn en deus Bourdellez komzet diàr ar varksouriezh?

Pennadoù a gomz Bourdellez enne a-zivout ar varksouriezh a vez kavet a 1962 betek 1977: *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1962, n°31, p.5-10. "Brezel ar fusuil hag ar chapeled" P. Bourdellès, Beleg ; 1970 ur pennad e galleg " Explosion marxiste en Bretagne" roneotipet⁴⁶⁷; *Imbourc'h*, 31 Gwengolo 1971, n°21, p. 232/246 : "Mao war ar maez : Emsav ar yaouankiz ha kouerien an 'Ouest' " get P. Bourdellez, beleg (troidigezh ur rentañ-kont savet get maourion); ha dreist-holl *Imbourc'h*, Here 1977, p. 465-528."Marksouriezh (hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep)".⁴⁶⁸

Doc'hpenn ar pevar skrid-se, 'zo pennadoù prederiañ anezhe, e lakain un destenn lennegel embannet er gelaouenn *Al Liamm*, Mae-Mezheven 1972, n° 152, p. 208-215. "Kêr al Loened , ur vojenn (lodenn gentañ)" troidigezh romant George Orwell *Animals Farm* get Bourdellez diàr ar saozneg e brezhoneg.

464 KARSENTI : "Avec le rationalisme philosophique, c'est l'universalisme des Lumières qui est rejeté au profit d'un particularisme national."

465 Aviel Mahe "Matthieu 7, 15-20 / 15 Méfiez-vous des faux prophètes qui viennent à vous déguisés en brebis, alors qu'au-dedans ce sont des loups voraces. 16 **C'est à leurs fruits que vous les reconnaitrez**. Va-t-on cueillir du raisin sur des épines, ou des figues sur des chardons ? 17 C'est ainsi que tout arbre bon donne de beaux fruits, et que l'arbre qui pourrit donne des fruits mauvais. 18 Un arbre bon ne peut pas donner des fruits mauvais, ni un arbre qui pourrit donner de beaux fruits. 19 Tout arbre qui ne donne pas de beaux fruits est coupé et jeté au feu. 20 Donc, c'est à leurs fruits que vous les reconnaitrez".<https://sacredspace.com/fr/scripture/matthieu-7-15-20/>

466 BOURDELLEZ, *Imbourc'h*, 31 viz Eost 1971, niverenn 20, p.204.

467 Roet din e 2024 get Jean-Yves Meuric bet skoliad Bourdellez.

468 "Prezegennoù graet get an Aotrou beleg P. Bourdellez diàr-benn ar varksouriezh e-pad devezhioù-studi" "Kristenion Breizh" e Kistinid e dibenn miz Kerzu 1976.

2° Get ar varksouriezh eh eus ur gelennadurezh anaraezus⁴⁶⁹ d'an hani gristen.

"Neo ket aes kompren ar varksouriezh ken disheñvel eo an danvezelouriezh daou-enebek hag istorek diouzh pep meizadurezh all eus ar bed, 'meizadurioù hengounel ha gwerinel' eme ar Varksourion." a skriv Bourdellez e 1977⁴⁷⁰. Pennreolennoù ar varksouriezh 'zo bet studiet get Bourdellez.

A-du eo Bourdellez amañ penn-da-benn get mennozhioù an Iliz, get Lizher-Meur ar pap Pie XI *Divini Redemptoris* embannet e 1937⁴⁷¹ (pa oa Bourdellez 29 blez) a savas ar pap-se enni a-enep pennreolennoù ar varksouriezh. A-du ivez get mennozhioù Jacques ELLUL (1912-1994, prederour, istorour sosiologour ha teologour protestant)⁴⁷² pa gav da hennzh emañ anaraezus ar gelennadurezh varksour d'ar Feiz.

A-du get ar re-se da gentañ àr an dachenn boudoniel (ontologel), a-du ivez gete pa vez kont ag leviadurezhioù lakaet e pleustr get tud en em amc'houlont ag ar varksouriezh (renadoù peotramant kostezennoù politikel).

E *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1962, n°31, p.5-10. "Brezel ar fusuil hag ar chapeled" e skriv Bourdellez evit ar wezh kentañ a-zivout ar varksouriezh. Hag evit gober kement-se e tispieg petra eo an dra-se evit ur c'hristen. D'e soñj eh eus daou ved : kani ar gristenion get kelennadurezh an Iliz ha kani ar varksourion get kelennadurezh Karl Marx. "Evito [ar varksourion] n'eus Doue ebet. **N'eus netra nemet 'an danvez'**"⁴⁷³. N'eus ag an den nemet "kant hanter-kant lur bouez a zanvez"⁴⁷⁴. "Evit ar gomunisted, an den ne gont ket, n'en deus gwir ebet, n'eo nemet benveg ar Gostezenn, Homañ a c'hell "gwalc'hiñ dezhañ e empenn", ober dezhañ "anzav e dorfedoù anezhañ e-unan", en em 'zisober' dioutañ, hag all."⁴⁷⁵.

469 anaraezus pe digempadus = "incompatible."

470 BOURDELLEZ, *Imbourc'h*, 1977, p. 468.

471 Setu ar pezh a skriv Germain SICARD, bet istorour ar gwir, a-zivout al lizher-meur-se : "Pie XI remonte aux principes de l'explication marxiste du monde, le matérialisme athée, fondement de tous les régimes communistes. Selon ce système, le monde, les êtres, la société ne sont que les produits de l'évolution de la matière. De telles conceptions éliminent jusqu'à l'idée de Dieu. "Il n'y a plus de différence entre l'esprit et la matière, ni entre l'âme et le corps. Il n'y a plus de survivance de l'âme après la mort, et par conséquent, nulle espérance d'une autre vie". Au niveau de l'organisation sociale, l'homme n'est plus une personne libre mais un rouage d'une collectivité toute puissante. "Toute hiérarchie, toute autorité est annulée. Détruite la dignité et l'indissolubilité du mariage, profanée la famille... La religion est appelée l'opium du peuple et combattue par tous les moyens. Toute idée de Dieu est niée, est vilipendée". Le pape condamne vigoureusement ces principes : "un système social rempli d'erreurs et de sophismes, opposé à la raison comme à la Révélation divine..., système qui méconnaît la véritable origine, la nature et la fin de l'État, ainsi que les droits de la personne humaine, sa dignité et sa liberté". SICARD, Germain. "L'encyclique Divini Redemptoris condamnant le communisme athée devant la Presse quotidienne parisienne (Mars 1937)". *Mélanges Germain Sicard*, Presses de l'Université Toulouse Capitole, 2000, <https://doi-org.distant.bu.univ-rennes2.fr/10.4000/books.putc.12337>, p. 665-690

472 "Jacques ELLUL considère qu'on ne peut être à la fois chrétien et marxiste. Et c'est afin de dénoncer cette hybridation contre nature qu'il écrit *L'idéologie marxiste chrétienne* avec pour sous titre *Que fait-on de l'Évangile ?* Selon Jacques Ellul, les chrétiens marxistes ne se posent pas suffisamment la question de la compatibilité entre une philosophie matérialiste, et une foi dans la transcendance : en réinterprétant le christianisme à travers le filtre du marxisme, ils font preuve en réalité d'adhésion fidéiste à l'idéologie marxiste." Frédéric ROGNON : <https://www.jacques-ellul.org/influences/karl-marxhttps://www.jacques-ellul.org/influences/karl-marx>:

473 *Ibid.*, p. 5.

474 *Ibid.*, p. 6.

475 *Ibid.*, p. 6.

Ár un dro e tabut Bourdellez kelennadurezh Marx, ar c'hostezenn gomunist hag ar renad soviedel hag emzalc'h ar gomunisted Bro-C'hall ("pa oa Hitler ha Stalin mignoned, e 1939, e nac'has Thorez difenn e vro. Met pa savas enebiezh etre an daou genseurt e troas ar gomunisted o chupenn ruz evit diskouez an doubleür triliv hag e teuas Thorez⁴⁷⁶ da vezañ ministr gant de Gaulle".⁴⁷⁷ **Ar renad soviedel a nac'h an den** ha, muioc'h, a skriv Bourdellez, **a nac'h un dra a ya d'ober an den: ar vroadelezh**. "An den n'en deus gwir ebet (...) d'en em dommañ ouzh e vro. N'eus nemet ur vro evitañ : an URSS. Eviti e tle labourat ; dezhi e tle kas muiañ ma c'hello eus eostoù hag arc'hant e vro c'henidik. Eviti e tle mervel. Kaeroc'h : e zever a zo lakaat dizurzh ha dispac'h en e vro-eñ, ma teuio an URSS da drec'hiñ warni aesoc'h a-se."⁴⁷⁸ **Ar renad soviedel a zo keñveriet get Bourdellez doc'h renad ar sklavaj en Henamzer** : "Setu m'eo distroet an den d'ar bed kozh (...) pa n'en doa **ar sklavour bro ebet nemet ti e vestr, koustiañs ebet nemet youl e vestr!**"⁴⁷⁹.

En ur pennad arall (embannet e *Imbourc'h* e 1977⁴⁸⁰) e skrivo Bourdellez⁴⁸¹, spouronet ma 'oa goude bout lennet getañ, ar levr brudet-kenañ hag a oa bet embannet meur a wezh, Henri LEFÈVRE *Le Marxisme*⁴⁸² pa gomz hennezh diàrbenn an danvezelouriezh istorek : "an istor a oar e hent, ne ra ket fazioù "neb piv bennak n'en deus ket en Istor feiz diarvar-krenn, n'eus lec'h ebet evitañ e renkoù ar Gostezenn". Bourdellez a lâre⁴⁸³ : "Bremañ e komprenomp perak ne vez ket nec'het ar gomunierion evit lazhañ! Ar Gostezenn eo 'korfadur' an Istor, diskrupul ha dinec'h eveltañ, hag, en anv an Istor e lazh." "Daoust hag e penn Hitler e-unan e vefe bet tremenet mennozioù diaoulekoc'h?" a oc'hpenn Bourdellez. Bourdellez a veneg Bertol Brecht evit skeudenniñ e gomzoù : "An neb a boagn evit ar gomunourion a zle gouzout : (...) eus an holl vertuzioù, unan hepken en deus: evit ar gomunouriezh e poagn..." **An "den nevez"** a vez kinniget get ar varksouriezh a vo **un "den dibersonaet"**⁴⁸⁴. Bourdellez a nach ar gelennadurezh varksel ha renad politikel an URSS àr un dro, lakaet int o daou getañ er mump sac'h. **N'eus get ar renad soviedel, d'e veno, nemet ar varksouriezh lakaet e pleustr**. Ar re 'zo ar gwashañ o stad, an isproletaerion, n'int ket difennet get ar gomunisted e wirionez hrevez Bourdellez : "Ha ma tle an den karout pep krouadur e tle, da gentañ, karout (...) tud e di ha tud e vro; ha dreist-holl (...) an isproletaerion", an dra-se a dalv "evit kement kostezenn a zo" a oc'hpenn Bourdellez.⁴⁸⁵

Muioc'h c'hoazh 'zo da damall doc'h ar varksouriezh ha doc'h ar renad soviedel hervez Bourdellez: **broudañ a reont "emgann ar renkadoù-tud", neuze kasoni**. "Pa zeuont da vezañ mistri war ur geriadenn hag en em glev an dud enni o c'hentañ pal 'zo klask 'gwaskerien', trenkañ,

476 "Maurice Thorez, (1900-1964), a oa ur politkour gall, ezel eus ar Strollad Komunour Gall. Sekretour meur an aozadur e voe etre 1930 ha 1964. Bez e voe ivez ministr ar gargidi Stad etre 1945 ha 1947 ha besprezidant ar C'huzul etre 1946 ha 1947. https://fr.wikipedia.org/wiki/Maurice_Thorez

477 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1962, n°31, p.7. "Brezel ar fusuil hag ar chapeled".

478 *Ibid.*, p.7.

479 *Ibid.*, p. 7.

480 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 465-528. « Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep)»

481 *Ibid.*, p. 490.

482 *Le Marxisme*, Henri LEFÈVRE, Presses universitaires de France, coll. "Que sais-je ?" 1948, 128 p.(adembannadur diwezhañ 2018 EAN 9782130801542)

483 *Imbourc'h*, Here 1977, "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep)", p. 490-491.

484 *Ibid.*, p. 509.

485 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1962, n°31, p.7. "Brezel ar fusuil hag ar chapeled".

isañ, lakaat ar gasoni da virviñ hag an amezeien d'en me zebriñ."⁴⁸⁶, klask a reont lakaat e blas 'diktotouriezh ar broletourezh' (da lâret eo "diktotouriezh ar Gostezenn"), klask a ra 'adkenteliañ' an tud, 'gwalc'hiñ o empenn d'an "naered hudur' da lâret eo d'ar 'gapitalourion', d'an 'dihentourion' ".⁴⁸⁷ Kaeroc'h, ar renadoù komunist a heskin ar gristenion." N'eus nemet gwelout ar brezel kriz a reont e Bro-Sina da skouer d'an dornadig kristenion a zo er vro-se (...)."⁴⁸⁸

3° Ne c'hell ket ar gristenion kenlabourat get ar gomunisted pe ar varksourion.

N'eo ket a du tamm ebet Bourdellez, e 1962, get an Tad Kongar⁴⁸⁹ pa ginnig hennezh klask gober kement-se, er gelaouenn *Esprit*, Kerzu 1961, p. 699 : "Ret e vo, emezañ [Kongar], kavout an tu da doullañ kaoz hervez spered an Aviel... War un dachenn e c'helle en em glevout da genlabourat [gant ar varkselezh] : war aozidigezh ar peoc'h" (pennad an Tad Kongar meneget get Bourdellez⁴⁹⁰). Ha koulskoude e vo gwelet pelloc'h e toullo un tammig kaoz Bourdellez e-unan get marksourion 'zo e1970.

E 1962 neoazh n'eo ket posubl kement-se pa n'eus get ar gomunisted, d'e soñj, nemet "tud ne glaskont nemet ar brezel" (...) an enebiezh, ar gasoni, disemglev,(...) an dispac'h.⁴⁹¹ Darempredoù etre kristenion ha komunisted n'int ket posubl⁴⁹²: " Tabutal gant ar gomunisted avat, ne dalv ket ar boan. Evito n'eus nemet Danvez ha Nerzh. Doue ebet, ene ebet, gwirionez ebet, madelezh ebet, truez ebet, gwir ebet, karantez ebet, bro ebet. Mar fellfe deoc'h tabutal ganto, e fevec'h dallet gant o respontoù, ne rafent nemet stlepel ganeoc'h, mesk-ha-mesk, fank ha gerioù disuit. Me em eus bet va lod ha c'hoazh moarvat em bo⁴⁹³, ha pa ne vefe nemet abalamour d'ar pennad-mañ." Setu komzoù krak-ha-krenn Bourdellez e 1962.

Emañ Bourdellez a-enep-groñs ar varksouriezh. "N'eo ket anavet an tesennoù komunist zoken gant ar speredoù meur" a oc'hpenn Bourdellez⁴⁹⁴. Komz a ra Bourdellez amañ ag an Tad Kongar a zo lakaet getañ d'un den dizesk àr ar varksouriezh. Sachañ a ra Bourdellez evezh ar gristenion àr ar fed n'emañ ket ar wirionez get Kongar àr ar poent-se. Seblant 'ra neoazh n'en doa ket komprenet mat-tre Bourdellez ster ar pezh a oa bet lâret get Kongar d'ar mare-se. Hennezh en doa skrivet: "Dire non dogmatiquement au marxisme est un acte simple, nécessaire bien évidemment, et que l'Église n'a pas manqué d'accomplir. Cela ne laisse pas intactes les questions posées par le marxisme ou les réponses qu'il propose aux questions posées par la révolution industrielle; il reste pourtant de vraies questions et des éléments valables dans les réponses."⁴⁹⁵

486 *Ibid.*, p.8.

487 *Ibid.*, p. 8.

488 *Ibid.*, p. 8.

489 Georges-Yves CONGAR (1904-1995) teologour dominikan.

490 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1962, n°31, p.8. "Brezel ar fuzuilh hag ar chapeled" P. Bourdellès, Beleg.

491 *Ibid.*, p. 7-8.

492 *Ibid.*, p. 10.

493 N'em eus ket kavet pennadoù emañ bet tabutet Bourdellez enne get komunisted. Àr a seblant eh eus bet anezhe.

494 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1962, n°31, p.8. "Brezel ar fusuil hag ar chapeled" P. Bourdellès, Beleg

495 *La Vie intellectuelle*, février1954, meneget get Etienne Fouilloux : <https://maitron.fr/spip.php?article20515>, notice CONGAR Georges-Yves [CONGAR Marie-Joseph en religion], lakaet en linenn d'an 25 a viz Here 2008", lennet d'an 11 a viz Meurzh 2025.

A-du e vo Bourdellez get kement-se diwezhatoc'h, e 1970. Marse e oa bet levezonet Bourdellez get Lizher-meur "Pacem in Terris" get Yann XIII bet embannet e 1963 pa skrivo Bourdellez e 1963 : "Nebeut amzer goude ma voe anvet da Bap, e choulennas Yann XXIII digant an Eskibien C'hall paouez gant ar "velein-micherourien".

Met e "Pacem in Terris" e skriv ivez : "Bodadegoù hag emglevioù etre ar Gristenien ha tud digristen pe hanter-zigristen a c'hell bezañ un degouez da gavout ar wirionez ha da zoujañ dezhi."⁴⁹⁶

Ar pennad-mañ "Explosion marxiste en Bretagne"⁴⁹⁷ sinet "Bourdellez beleg", bet skrivet 8 vlez diwezhatoc'h (1970), a gomz diàrbenn un emvod en deus Bourdellez kemeret perzh ennañ, aozet get "La paroisse étudiante" e Roazhon d'an 17 a viz Genver 1970. Deiziad ebet àrmañ met e c'hellomp lâret eo bet skrivet moarvat un tammig goude an emvod-se. Diverrañ ur prezeg bet graet get Bourdellez eo. N'eo ket bet adkavet skrid klok ar brezegenn. Sujed an emvod a oa "L'Eglise de Bretagne par rapport à la question sociale, la lutte des classes et la lutte de libération nationale". Kemeret perzh o doa en emvod-se : an Tad Cardonnel (beleg, Dominikan, maoist, difenner pennañ luskad teologiezh an dieubidigezh e Bro-Chall, brudet evit bout "mojenn ar gatologiezh a-du get ar gostezenn gleiz pellañ, bet difennet dezhañ komz ha skriv get an Iliz"⁴⁹⁸, daou dad Sant-Frañsez é ober àr-dro ar gelaouenn "Frères du Monde"⁴⁹⁹, ar fizisian Jean-Pierre Vigier⁵⁰⁰ (dizoue, marksour, danvezelour, bet lakaet er-maez ag ar "PCF"⁵⁰¹, tamallet get ar gostezenn-se bout "gevarist"), Gwenael Maze (kelaouenn vreizhek "Emsav"⁵⁰²), un nebeut belean Bro Dreger - en o zouez Bourdellez -, tud ar "PSU"⁵⁰³, tud ar "FLB-2"⁵⁰⁴, "kleizourion", ha meur a aluzenner ha leanez karget ag ar studierien e skol-veur Roazhon.

Petra e oa aet Bourdellez d'ober en emvod-se, d'ar mare-se, ha peseurt remerkoù a ra en e rentañ-kont? Setu ar c'hrafoù pennañ displeget getañ dirak ar bodadeg-se:

- pouezus-tre eo bet levezon ar varksouriezh àr ar re yaouank e blezadoù da heul Mae 1968;
- ankouiet he deus Iliz Breizh kelennadurezh sokial an Iliz a rae-hi geti araok ar brezel 1939-45 (hag a oa a-du get an Aviel).
- Disoc'hoù kement-mañ 'zo truezus dre vras hag evit an Iliz hec'h unan;
- dav eo distroñ da gelennadurezh sokial an Iliz ;

496 Bourdellez, "Perak en deus Yann XXIII estlammet ar bed? ", *Barr Heol war Feiz ha Breizh, Gwengolo* 1963, n° 63, p. 61-68. (p.63)

497 Pennad roet din dorn-ha-dorn get Jean-Yves Meuric e 2024, roneotipet, 2 b., e galleg. "Explosion marxiste en Bretagne". Embannet eo bet ar pennad-se e *Mouez Sant Erwan*, 1970, n° 7, Stagadenn da *Skol* n°45, p. 35-38. "Explosion marxiste en Bretagne", P. Bourdellez, beleg.

498 Jean CARDONNEL, lennet d'an 11 aviz Meurzh 2025, https://fr.wikipedia.org/wiki/Jean_Cardonnel

499 Ur pal ag ar gelaouenn-mañ (1959-1974) a oa bet klask tostaat kristenion da varksourion ("Tentative de rapprochement entre Chrétiens et Marxistes") hervez LAPEROUSE a veneg Caroline Boone Arbod Borssat de, *La Revue Franciscaine "Frères du Monde", 1959-1974*, Paris, 2018, 136 p., 21x29, "Mémoire de maîtrise, polycopié "

500 Jean-Pierre VIGIER, [https://fr.wikipedia.org/wiki/Jean-Pierre_Vigier_\(homme_politique\)](https://fr.wikipedia.org/wiki/Jean-Pierre_Vigier_(homme_politique)) lennet d'an 11 a viz Meurzh 2025. "Né en 1920 , mort en 2004; physicien ; militant communiste (1940-1968), membre du comité central du PCF (1959-1961) ; résistant, membre des Francs-tireurs et Partisans français." <https://maitron.fr/vigier-jean-pierre/>

501 "Parti Communiste Français."

502 *Emsav, kelaouenn bolitikel viziek*, embannet etre 1967 ha 1979.

503 "Parti Socialiste Unifié."

504 "Front de Libération de la Bretagne-2."

- ret eo sellet pizh doc'h diforc'hioù 'zo etre ar rannvroioù pinvik hag ar re-baour (ar pezh a ginnig Lizherioù-meur ar Pap) kentoc'h evit doc'h re 'zo etre ar renkadoù sokial;
- ret eo sellet pizh ivez doc'h sevenadur ar broioù (ha pas chom get an danvezelouriezh hepken);
- plegiñ a ra an dud edan ar gevalaouriezh : mand eo truezus an dra-se ne aotre ket koulskoude d'ar gristenion kenlabourat get ar varksourion é kemer perzh e "stourm ar renkadoù".

Goude bout dibunet tout an traoù-se e kendalc'h Bourdellez é lared e kompren, neoazh, e klask ar gleizourion, al labourerien-douar ("kement a ziaesterioù o deus ar re-mañ"), broadelourion Breizh hag ar velean "nevez" en em gavout asamblez, ha gober un emglev d'ober un "dispac'h". Ar yaouankizoù a gav heug doc'h ar gevidigezh emaint é veviñ enni e 1969-70; stad Breizh 'zo truezus; danevell Vedel 1969⁵⁰⁵ a-zivout al labour-douar 'zo dispi; pennoù-bras ar vro 'zo "nul", hag an Iliz a chom "mut" (memes goude an taol-dispac'h bet graet get kouerien e Kemper d'an 2 a viz Here 1967 pa oa bet gloazet tost da 300 anezhe get ar polis⁵⁰⁶) a oc'hpenn Bourdellez⁵⁰⁷. Dirak seurt taolenn emañ komprenapl e klask tud' zo e Breizh gober un dispac'h a zispleg Bourdellez. Ne ya ket betek meuli seurt raktres neoazh.

4° Un draig bennak 'zo mat er varksouriezh.

Skarzhet ar varksouriezh neuze àr an dachenn ontologel da gentañ hag da eil abalamour ma kas "an dud d'ar reuz" met" koulskoude, a gendalc'h Bourdellez, arabat dimp lavarout ez eo didalvoud mennozhioù ar varksourion⁵⁰⁸. "Ar varksouriezh dre ma'z eo bet graet en amzer an ijinerezh ne wel an traoù nemet hervez an ijinerezh. Ul lodenn gwirionez 'zo geti met ul lodenn hepken."⁵⁰⁹ Na petra 'ta?

Nec'het eo bet Bourdellez e 1971 é welet maourion en em staliñ e Breizh. E *Imbourc'h*, 31 Gwengolo 1971, n°21, p. 232/246 e embannas "Mao war ar maez : Emsav ar yaouankiz ha kouerien an 'Ouest' ". Troidigezh ur rentañ-kont savet get maourion o-unan àr-bouez ar labour bet graet gete e Breizh an hani eo (en em staliet e oant e tachennoù 'zo, é reiñ an dorn d'ar labourerion-douar e-pad an hañv, en ur skigniñ o vennozhioù hag en ur sevel rouedadoù kenetreze da vout efedusoc'h c'hoazh é c'hober o bruderezh. Bourdellez a glask dispelgiñ ne gav ket mat mennozhioù ar re-se; ar vaourion 'zo tud dañjerus; gober an dispac'h mod Mao eo o fal... Met oberiant-tre int bet, elfet-tre hag efedus. Bamet e chom é welet anezhe é labourat hag eñ da lâret : **"Ur skouer evit emsav Breizh pa seller doc'h o hentenn labourat ha renkañ!"**. Setu hentenn labourat ha renkañ ar

505 Danevell ar c'homision Georges VEDEL embannet 1969 e Bro Frañs a lâre e vehe bet digresket poblañs ar labourerion-douar en un doare mantrus : 4 031 000 a dud e 1954, 3 500 000 e 1965, 1,4 pe 1 million bennak hepken e 1985. "Perspectives à long terme de l'agriculture française 1968-1985" in Population Année 1969 24-6 pp. 1209-1210, https://www.persee.fr/doc/pop_0032-4663_1969_num_24_6_14153

506 "Nous sommes le 2 octobre 1967. De Gaulle est au pouvoir. Dans quelques mois, ce sera Mai 68. Ce jour-là, 20 000 personnes font le siège de la capitale. La gigantesque émeute paysanne se heurte violemment, très violemment même, à la police. 283 blessés, dont 2 grièvement, sont recensés. La préfecture est incendiée. C'est lourd. Cela préfigure ce qu'est la Bretagne révoltée." "Les grandes manifestations qui ont marqué Quimper". Ouest-France, Mickaël DEMAUX, .Publié le 01/11/2013 à 21h44 <https://www.ouest-france.fr/bretagne/les-grandes-manifestations-qui-ont-marque-quimper-1688937>

507 BOURDELLEZ, 1970, "Explosion marxiste en Bretagne", 1970, p.2.

508 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 468. "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep."

509 *Ibid.*

vaourion e Breizh er blezadòù 1970 lakaet da skouer get Bourdellez. Marse c'hoazh e oa Bourdellez, é welet ar vaourion labourat èl-se Breizh, é soñjal en hentenn en doa graet-eñ geti pa en doa lañset ar "GEES" un daouzek blez bennak a-raok é klask emskiantañ ar re yaouank kenkoulz ag an dud àr an oad àr gudennoù o bro, ha kement all get yaouankizoù Kendalc'h, ha re gouelioù ar Bleun-Brug. Skriviñ a ra él e 1967 er gelaouenn bolitikel *Emsav*, ar pezh 'zo bet meneget dija a-us: "Homañ eo ar gudenn : n'eus den ebet da bleidiñ gant ar re yaouank a vez bet degaset betek tachenn ar politikerezh; n'eus den ebet da zisplegañ d'ar bobl eo gwall gudenn Vreizh eo a zo o sammañ o buhez pemdeziek, n'eus strollad oberiant ebet war dachenn ar politikerezh (...) h.a."

Neuze ar pezh 'zo mat amañ eo doare d'ober an emsav maour. Un hune gaer en deus Bourdellez : ret 'vo sevel un Emsav e Breizh ken oberiant, ken elfet ha ken efedus a kani ar vaourion. N'em eus ket kavet muioc'h àr dachenn kostezenn vat ar varksouriezh e pennadoù Bourdellez.

A-du arall e kinnigas Bourdellez troidigezh arvest kentañ *Animal's Farm*⁵¹⁰ get George ORWELL er gelaouenn *Al Liamm*⁵¹¹. Ne ouier ket mand eo bet troet muioc'h getañ.⁵¹² Meneg a ran an dra-se pa eh eus get an oberenn-se ur flemmigan a-enep ar renad soviedel ha Stalin met ivez a-enep ar gevalaouriezh ha renadoù bolitikel arall an XX^{vet} kantved. Dilaosket en doa Bourdellez tachenn al lennegezh⁵¹³ ⁵¹⁴ evit an dachenn bolitikel ('CELIB', 'MOB'). Distroiñ a ra davet al lennegezh get ORWELL e 1972. Kavet en deus e pennad ar skrivagner-mañ ar pezh a soñje-eñ moarvat. N'en deus ket choazet troiñ anezhañ dre zegouez⁵¹⁵ (n'eus ket bet kavet pennad ebet get Bourdellez é spisaat perak en deus taolet pled doc'h ar pennad-mañ neoazh⁵¹⁶). Distroiñ a ra d'ar lennegezh neuze met dre un oberenn dalvoudus àr an dachenn bolitikel.

Donoc'h ha sklaeroc'h e yey preder Bourdellez àr ar varksouriezh hag ar c'hevalaeriezh àr-un-dro en ur pennad hir a-walc'h a vo embannet e 1977 .

510 *Animal Farm*, George ORWELL, Londres, éd. Secker & Warburg, 1945.

511 *Al Liamm* Mae-Mezheven 1972, n° 152, p. 208-215. *Kêr al Loened*, ur vojenn (lodenn gentañ) troidigezh diàr ar saozneg e brezhoneg romant Georges Orwell *Animals Farm* (1945) get P. BOURDELLES. (un droidigezh pe un azasadenn peogwir e ro Bourdellez anvioù breton d'an tudennoù, e kan un dudenn àr un ton tost da hani Bro-Dreger "Julig ar Ververo" (« Feuille volante », Emgleo Breiz, F-02224, Malrieu 599 /-<https://www.dastum.bzh/>), e ro Bourdellez ur ster nevez da stourm ar loened-se: stourm a reont evit dieubidigezh Breizh ha setu Jeff Fulup é kanal goude ar pennad-se edan an titl "Loened a Vreizh" (skignet d'an 20 04 1973 àr Radio Armorique ID notice INA : PRF15006901).

512 Erwan HUPEL a ginnigo kalzh diwezhatoc'h un droidigezh glok ar levr-se *Kêr al loened*, troet diwar ar saozneg (embannadur 1987-Penguin Classics) embannet e *Al Liamm* a niverenn 367 da niverenn 380, pelloc'h e stumm ul levr get Skrid e 2011.

513 Nemet an azasadenn ag *Ar Pevar Mab Emon* bet graet getañ e penn-kentañ ar blezadòù 1960, neuze embannet get ar gelaouenn *Skol* e 1966.

514 *Ar Pevar Mab Emon lesanvet Ar Pevar Marc 'h Limon* renket hag adaozet e brezhoneg a-vremañ hag e peurunvan get Per BOURDELLES, skeudennet gant Erwan Kervella, *Skol* 1967, niverennoù 36-37-38, 209 p. (8 lodenn / c'hoariva), Lannuon, Ar C'halvez, 209 p..

515 N'eus ket pennadoù bet troet e brezhoneg get Bourdellez n'en doa ket prederiet en a-raok àrné. Bep taol e vez kavet un abeg liammet d'e yaouankiz (*Ar Pevar Mab Hemon*), d'e vignoned (*Al laer avaloù* get Edouard Ollivro, d'e feiz (*Ar Reder Bro*, get Augusta Gregory, *Divina Commedia* get Dante, *Ar C'hleier* get Edgard Allan Poe), d'e vennozhioù (*Danvez-Priedoù* get Alessandro Manzoni ha neuze *Kêr al Loened* George Orwell).

516 Notomp a hend-all int daet loened an danevell-se "loened a Vreizh" get Bourdellez : "Loened a Vreizh hag a bellvro, deredit a dro-war-dro, selaouit ha grit mat o kont, e vo kaer an amzer da zont!" (pennad kanet get Jeff Fulup/Gwelet stagadenn III).

Er pennad skrivet e 1976, embannet e 1977 er gelaouenn *Imbourc'h*⁵¹⁷, "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep, prezegennoù graet get an Aotrou beleg P. Bourdellez diàr-benn ar varksouriezh e-pad devezhioù-studi 'Kristenion Breizh' e Kistinid e dibenn miz Kerzu 1976" (58 pajenn e brezhoneg) e kaver ar pezh a soñje Bourdellez diàrbenn ar gevalaouriezh /frankizouriezh hag ar varksouriezh/komunouriezh, e weler pegement e klask Bourdellez o dizarbenn hag o dispenn groñs mep, kenkoulz an eil hag egile.

C A-enep ar gevalaouriezh.

1° Ar gevalaouriezh é vonet àr-raok.

Bourdellez a gav dezhañ emañ ar **frankizouriezh ekonomikel** ("frankiz" mod ar vourc'hizion) a ren àr ar gevridigezh, **kenkoulz hag ar gevalaouriezh** a ya àr-raok, traoù spontus ha **dañjerus evit mab-den hag ar broadoù**. Petra 'zo erruet er XIX hag er XX^{vet} kantved? Ganet eh eus ur bed nevez, modern er XIX^{vet} kantved, reuz he deus graet ar gevalaouriezh ha setu ar varksouriezh é tifoupañ, sañset a-enep doc'hti, ne rey nemet lakaat an traoù da washaat neoazh, a lâar Bourdellez. "O tigristenañ, o tivroañ an dud, o tiskar pep sevenadur-pobl" emaint an div-se : "mamm ha merc'h int."⁵¹⁸

Petra 'zo c'hoarvezet er XIX^{vet} kantved a c'houlenn Bourdellez? Setu e respont : dres ma tiwane ar brederouriezh dizoue e kroge Dispac'h an Ijinerezh ha setu ur gevridigezh nevez edan "frankiz" mod ar vourc'hizion 1789 hag ar "c'hevezerezh dizalc'h, dishual" é trec'hiñ. Tamall a ra Bourdellez "**Dispac'h an Ijinerezh**" hag "**ar c'hevezerezh dizalc'h**": "Dre ar bed a-bezh emañ o vervel **an holl sevenadurezhioù denel, disleberet ha dismantret** int gant an ijinerezh dirollet"⁵¹⁹.

A-du emañ Bourdellez get dielfenniñ Marx pa gomz hennezh a-zivout disoc'h (fall) ar gevalaouriezh àr ar "vroadoù": "Déjà les démarcations nationales et les antagonismes entre peuples disparaissent de plus en plus avec le développement de la bourgeoisie, la liberté du commerce, le marché mondial, l'uniformité de la production industrielle et les conditions d'existence qu'ils entraînent" a skriv Marx⁵²⁰.

Met n'eo ket mui a-du Bourdellez pa gendalc'h Marx èl-mañ : "Le prolétariat au pouvoir les fera disparaître plus encore (...) les ouvriers n'ont pas de patrie."⁵²¹ Ha setu perak emañ ar varksouriezh "merc'h" ar gevalaouriezh. O fal 'zo distruj ar vroadoù ivez, neuze Mab-Den.

Penaos e ya en-dro an traoù get ar renad ekonomikel nevez-mañ? "Pep micherour n'en doa d'ober nemet en emglev "dizalc'h" gant e implijer. Frankiz al louarn dishual e klud ar yer dishual."⁵²². Bourdellez a veneg enklaskoù an Doktor Guépin⁵²³ diàrbenn micherourien straed an

517 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 465-528.

518 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 465-528. "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep."

519 *Ibid.*, p. 471.

520 Bomm *Manifesto ar C'hostezenn gomunist II*, get Karl MARX, Friedrich ENGELS, 1848, meneget get Bourdellez. 1977.

521 *Ibid.*

522 *Ibid.*, p. 475.

523 "Ange Marie François Guépin, né le 12 fructidor an XIII (30 août 1805) à Pontivy, mort le 21 mai 1873 à Nantes, est un médecin, un écrivain et un homme politique français, républicain et socialiste, qui a joué un rôle important dans

Teil Pondi ha kani an abad Gautier⁵²⁴ diàrbenn labourerien douar Breizh o tivroñ a-vil-vern (tezenn hennañ : "Divroadeg ar Vizer") evit displeg **reuz en deus graet ar c'hevezerezh ekonomikel dizalc'h-se e Breizh.**

An "**Ijinerezh Bras**" en deus lakaet er bed div ouenn tud⁵²⁵: "**an dud dreist** : kabitened-ijinerezh, d'ar re-se : an deknikelezh, an intrudu, al levezon, an deskadurezh, hag ar c'honederion ; **ar broletarion** n'int ket tud, n'int nemet tudigoù 'mevelion an dud dreist : ar proletar e vro zoken a vezo ret dezhañ dilezel" (meneg a ra Bourdellez film 'Charlig' (Charlie Chaplin) *les temps modernes* evit skeudenniñ e gomzoù).

2° Trevadennet peurrest ar bed geti.

Trevadennet eo bet restad ar bed get ar gevalaouriezh europeat hag amerikan. Bourdellez é kondaoniñ an trevadennerezh-se.

E *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1978, n° 97/98, p. 46-49. er pennad "Foar an arigrap war Afrika" e tispleg splann Bourdellez e soñj àr an trevadennerezh hag an drevadenouriezh. Ur flemmskrid feuls, entanus a-enep trevadennerezh Afrika get broioù Europa ar C'hornôg ha get Stadoù-Unanet Amerika eo. Trevadennerezh a-gozh ha kani ar blezadòù 1970 doc'hpenn: un trevadennerezh graet dre heg (dre armoù) evit kaout danvezioù ha tud (sklavourion) ha pa gomze ar broioù-se o doa tout ar pobloù droed d'ober àr o zro o-unan : "Afrika n'eo ket bet biskoazh, evit tud Europa hag Amerika, nemet ur 'vengleuz' da dennañ anezi mevelien ha madoù. (Ha gwir eo kement-se ivez evit broioù sujet Europa hag Amerika, Breizh er penn-kentañ, siwazh : ar broioù bras o vevañ diwar goust ar re vihan). Gwechall, o deus bet tennet Europiz, diwar zouaròù Afrika, sklavourien. Dimezelled Naoned 'a vramme 'barzh ar seiz' a-drugarez d'an arc'hant a c'honeze o zadoù o werzhañ 'koad-ebena' d'an Amerikaned; goude-se, ez eus tennet soudarded eus Afrika, gant Bro-C'hall, dreist-holl er Brezel Pevarzek."⁵²⁶

la vie politique et sociale de Nantes au XIX siècle, comme conseiller municipal et conseiller général, et, à deux reprises, comme préfet par intérim, mais surtout comme médecin philanthrope et comme théoricien et militant d'une forme de socialisme refusant la Terreur, mais incluant le féminisme.' Pajenn Wikipedia Ange Guépin
https://fr.wikipedia.org/wiki/Ange_Gu%C3%A9pin

524 "Élie Gautier (1903-1987), prêtre, fondateur et directeur de la Mission bretonne, historien de la Bretagne et sociologue. Auteur de *Un siècle d'indigence : pourquoi les Bretons s'en vont...*, Éditions ouvrières, 1950. Thèse: 1er volume, 170 p. : *La Dure existence des paysans et des paysannes : pourquoi les Bretons s'en vont...*, Éditions ouvrières, 1950. Thèse,

2e volume, 182 p.; *Le problème de l'émigration bretonne étudié à travers la situation économique et sociale des Côtes du Nord aux XIXe et XXe siècles*, 1950 ;

3ème volume : *L'Émigration bretonne : où vont les Bretons émigrants, leurs conditions de vie*, Bulletin de l'Entr'aide bretonne de la région parisienne, Aubin, 1953, 287 p. ;

4ème volume : *Les Emigrés bretons. Essai sur la répartition géographique, la situation sociale, morale et religieuse des Bretons émigrés*.

Hélène Bergues qualifie cette étude de minutieuse et précise, avec une enquête portant sur 400 communes des Côtes-du-Nord et une solide documentation, montrant les causes sociales, économiques et psychologiques de l'émigration, les conditions de vie, la densité démographique, l'insuffisance des sols, la précarité des situations et des revenus, la misère, la mendicité (Hélène BERGUES, "*Gautier Elie – Un siècle d'indigence et La dure existence des paysans et des paysannes*", *Population*, vol. 5e année, no 4, 1950, p.7).

525 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 477. "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep".

526 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1978, n° 97/98, "Foar an arigrap war Afrika", p.46.

Tamall a ra ivez Bourdellez **ar fals-didrevadennerezh** bet graet goude ar brezel 1939-45 pand eo bet lakaet harzoù d'ar broioù nevez ne gouchent tamm ebet get tiriadoù ar meuriadoù, sevenadur, yezh, stumm bevañ ar re-se, harzoù bet treset get an drevadennourion na petra 'ta.

Èl-se eo o deus gallet broioù Europa lakaat o yezh-int da chom yezh ar "broioù nevez-se" ha plasiñ o zud plouz e penn ar broioù nevez: "E daou zoare e tenn ar re Wenn o mad ac'hano: 1 Evit o skolioù ha renadur "o bro", e rank ar pobladoù kraouiet evel-se an eil gant egile ober gant yezh ar re Wenn, o mistri kozh, ar galleg pe ar saozneg.(...) Setu perak e komzer eus 'Afrika gallek' daoust ma n'eus neblec'h nemet nebeut-tre a dud o komz galleg, ha n'eo ket sur e vefe ar re speredekañ nag ar re furañ eus an dud! Met ar c'hallegerien-se hepken a c'hell kemer ar c'hargoù uhel. 2 Gant arc'hant hag armoù e teu ar re Wenn a-benn, aes a-walc'h, da lakaat da brezidant ar politiker pe an ofiser a werzho dezho pinvidigezhioù e vro! An deiz na fello ken dezhañ sentiñ, e vo aes broudañ ha paeañ, gant arc'hant hag armoù, ur politiker eus ur boblad all enep dezhañ. Setu perak, da skouer, emañ ken troet ar C'hallaoued gant an Impalaer Bokassa hag ar jeneral Mobutu : ar re-se eo o zud: 'Ni a roio deoc'h arc'hant ha harp hon arme, ha c'hwi a lezo dimp ar gwir da eostañ madoù ho pro!'"⁵²⁷

Komzoù flemmus 'zo get Bourdellez pa gomz diàrbenn politikerezh Presidant Bro-C'hall Giscard d'Estaing e-keñver ar Jeneral Mobutu : "Arabat bezañ souezhet eta o welout gant pegement a hast a oa war ar C'hallaoued o kas o soudarded da harpañ Mobutu (hag a zo ur paour-kaezh den) àr zigarez herzel doc'h ul lazhadeg a oa é red er vro-se. "Ar C'hallaoued a-viskoazh, evit gallout lakaat o c'hrabanoù war zouaroù diavaez, o deus bet implijet doare ar 'petits paquets' ('pakadennoù bihan') : lakaat un nebeut tud e dañjer... ha pa vez gwallgaset ar re-mañ, neuze evit 'enor ar Baniel', kas an arme, hag en em ziasezañ war ar vro."⁵²⁸

Er lizher kaset get Bourdellez da vBriand e 1957⁵²⁹ e lenned dija e oa Bourdellez a-enep an trevadennerezh bet graet e Afrika an Hanternoz get Stad Bro-C'hall : "Goarin [grefier pe urcher justis e Lannuon] a mis ses menaces à exécution (plus d'annonces judiciaires pour 'L'Echo' suite à un dernier éditorial de Anger [rener ar gazetenn *L' Echo de Lannion*]: "Le numéro de cette semaine reproche au Maroc et la Tunisie de ne pas être assez reconnaissants à la France qui les a progressivement rendus aptes à se gouverner eux-mêmes en les dotant d'institutions que cette autonomie requérait et en leur accordant récemment l'indépendance !!!" Bourdellez a oa (get mignoned dezhañ - en o zouez unan anvet Goarin) d'ar mare-se é klask harz rener ar gazetenn *L'Echo de Lannion* a embann pennadoù, blaz an drevadennouriezh enne.

Pelloc'h e vo displeget get Bourdellez eo bet trevadennet Breizh get Bro-Frañs en XIX^{vet} hag er XX^{vet} kantved).

3° Gwallgaset an Douar geti.

Ar gevalaouriezh (hag ar renad soviedel kerkoulz) a ziwad, a saotr an douar a skriv **Bourdellez é tiouganañ e 1977 e erruehe un 'dorridigezh' emberr.**

E 1977 e *Barr Heol*, er pennad "Ar yaouankiz hag ar bed modern"⁵³⁰ e kondaon Bourdellez hennañ: "Ar bed modern, da lavarout eo, ar bed a foeltr madoù ar bed, ar bed a zistruj an den d'ober

⁵²⁷ *Ibid.*, p.47.

⁵²⁸ *Ibid.*, p.48.

⁵²⁹ Lizher kaset d'ar 05 a viz Gwengolon 1957.

ur proletour gantañ, ar bed a saotr pep tra." E *Imbourc'h* e 1977⁵³¹ e oc'hpenn emañ an douar, ar forestoù, ar mor en arvar abalamour d'ar gevalaouriezh : **"Pep ijinerezh a zistruj he danvez kentañ**: houarn, glaou, tireoul ha setu kudennoù an dazont : penaos magiñ bugale bet ganet e Tarzhadeg ar boblañs, penaos harz kresk prizoù metaloù ar mamennoù-gremm, **petra gober get atredoù, ar saotradur, ar maradoù du ...**⁵³² **"An div reizhiad a zo o ren war ar bed a-vremañ n'o deus ket, evit gwir, dalc'het kont eus ar gwall-gudennoù-se**". Marse e vo un "dorridigezh", a ziougan Bourdellez e 1977, "pa eo savet an ti war an traezh"...Ha Bourdellez da glozañ: **"N'emañ ket silvidigezh ar bed nag er gevalouriezh nag er varksouriezh"**⁵³³.

D Ar varksouriezh "merc'h" ar gevalaouriezh.

Spontet e oa Bourdellez, àr a seblant, get araokaat ar "varksouriezh" e dibenn an XIX^{vet} ha dreist-holl er XX^{vet} kantved : "Gwelout mat a reomp, diwar skiant-prenet, pebezh levezon he deus ar varksouriezh war ar speredoù goullonderaet gant ar gevalaouriezh"⁵³⁴. "Tamm ha tamm e voe gonezet ar c'hostezennoù micherourien gant e vennoz [re Marx] goude "An Embann Komunour"⁵³⁵ hag ar "C'hevala"⁵³⁶ a zo aet d'ober arm ideologek (kealiadurezhel) ar varksouriezh⁵³⁷.

Adkemer a ra Bourdellez ar pezh en doa skrivet Maurice CLAVEL (1920-1979), skrivagner daet da vout katolik: **"Ar pezh a oa ur c'hoari-mennozhioù evit ar brederourion c'hwezhet gant al lorc'h a ziskenne hag en em sile a-nebeudoù e kalonoù an dud-a labour"**⁵³⁸. "Ret eo anaout ar perzh 'zo marksour ennomp : ... pa heuliomp ar bed 'modern',⁵³⁹ **pa varnomp tud ha traoù hervez ar gomunisted, hervez o askorudsted, an aez-bevañ, an nevested pe an ampartiz kalvezel**

530 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Kerzu 1977, n° 95, p.16-17. "An emgann etre ar yaouankizoù hag ar bed modern", P. Bourdellez.

531 *Imbourc'h*, 1977, p. 482.

532 *Ibid.*, p. 482.

533 *Ibid.*, p. 482.

534 *Imbourc'h*, Here 1977, p. 485. "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep".

535 *Le Manifeste du parti communiste* (en allemand : *Manifest der Kommunistischen Partei*) est un essai politico-philosophique commandé par la Ligue des communistes (ancienne Ligue des justes), et rédigé en allemand par Karl Marx (qui intègre dans le texte certains passages écrits antérieurement par Friedrich Engels). Écrit fin 1847 et début 1848 et publié en février 1848, il a été diffusé à l'origine sous le titre *Manifest der kommunistischen Partei* (*Manifeste du parti communiste*), bien qu'il n'existât alors aucun Parti communiste ; le terme "parti" désignait à l'époque l'ensemble des courants partisans du communisme), et il a ensuite été republicé sous le titre *Manifeste communiste*. https://fr.wikipedia.org/wiki/Manifeste_du_parti_communiste

536 *Le Capital. Critique de l'économie politique* (du titre original allemand *Das Kapital. Kritik der politischen Ökonomie*) est l'ouvrage majeur du philosophe et théoricien de l'économie politique allemand Karl Marx. Marx a consacré plus de 20 ans de sa vie à l'écriture de cette œuvre, mais n'en a achevé qu'une partie : le premier livre, publié le 14 septembre 1867(...), est consacré au développement de la production capitaliste. Des brouillons de Marx ont été utilisés par Friedrich Engels pour publier les livres 2 et 3, en 1885 et 1894. Les ébauches de Marx consacrées à l'histoire des doctrines économiques (prenant ainsi forme en tant que "livre 4 du Capital") ont été publiées par le socialiste allemand Karl Kautsky sous le titre *Les Théories de la plus-value* (4 vol., 1905-1910) https://fr.wikipedia.org/wiki/Le_Capital

537 *Imbourc'h*, Here 1977, "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep". p. 478-479.

538 *Ibid.*, p. 473.

539 Bourdellez a ziskouez penaos emañ ar bed vodern ur bed "fall" d'e soñj en daou bennad-mañ : *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Geñver 1971, n° 67, p. 53-59. "Hiziv ha Warc'hoazh. Ar bed a-vremañ hag ar bed a zo o tont- Testenioù dastumet gant an Ao. Per Bourdelles 1" Penaos e kerzh an ekonomiezh a vremañ ?" ha *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1971, n° 69, p.15-18. "Hiziv ha Warc'hoazh, Ar bed a-vremañ hag ar bed a zo o tont- Testenioù dastumet gant an Ao. Per Bourdelles 2 "Spouron ar bloaz 2000".

(teknikel) emaomp war an hent fall." a skriv⁵⁴⁰. "Rak-varksouriezh avat, pelec'h n'eus ket anezhi er bed a-vreman?"⁵⁴¹. Ha Bourdellez da ginnig un arridennad a skouerioù é tispieg int skouerioù ag ar "varksouriezh" e kevredigezh ar blezadòù 1970 e Breizh hag e Bro-C'hall : an divrezhoneg, an digulturañ dre vougañ ar yezh hag ar Feiz, an dis-wriziennañ, an divroañ, an diberc'hennañ, diskar al labourerien-douar bihan⁵⁴² hag ar c'henwerzh bihan; an tabutoù savet etre ar gouerien dre an adlodennañ, hollc'halloud ar Stad ne lez buhez ebet e korfadou-etre ar gevridigezh, an disrannou politikel dre ar c'hostezennoù, relijiel dre ar laikelezh c'hall, kevredigezhel dre ar stourm etre ar renkadou, renadurezh an dekmokraterien (hep bout resisoc'h. Petra a dalv kement-mañ, ne ouier ket⁵⁴³), dispennidi geizh an 'tiegezh bourc'hiz', ar vamm o labourat e-maez ar gêr, ar bilulenn, an torr-dimeziñ, ar skridoù ha skeudennoù hudur."⁵⁴⁴

Ur bern traoù neuze lakaet get Bourdellez er memes sac'h ha kinniget evel disochou ar varksouriezh, "merc'h" ar gevalaouriezh, he deus en em silet dre-holl er gevridigezh. N'en deus **Bourdellez**, àr a seblant, nemet **ur sorc'henn** : nac'hañ ar varksouriezh a wel dre-holl tro-àr-dro dezhañ na bout ne oa ket a renad politikel na gomunour na marksour e penn ar vro, ur renad frankizour ne larer ket. **Nemet e oa kreñv ar varksouriezh e-touez pennoù-bras douget da labourioù ar spered.**⁵⁴⁵

Setu amañ kompren an dra-se: evit Bourdellez eo bet digoret hent ar varksouriezh get ar frankizouriezh : "Kompren a reomp tamm-ha-tamm n'eo ket ar frankizouriezh, drezi hec'h unan, "enebourez d'ar gomunouriezh", ne ra nemet digeriñ an hent dezhi ha seul vui ez a war-raok betek dont da vezañ 'ar frankizouriezh aet war-raok', end-eeun, al "libéralisme avancé" tost da galon an Arlevier (?) gall Giscard, seul vui e tostaa roudou-treid an eil ouzh roudou-treit eben."⁵⁴⁶

Notenniñ a reer a-du-arall e kondaon Bourdellez tout an traoù bet listennet a-us hag a ya d'ober, hrevezoñ, marksouriezh ar blezadou 1970 en o zouez: "dispennidi geizh an 'tiegezh bourc'hiz', ar vamm o labourat e-maez ar gêr, ar bilulenn, an torr-dimeziñ (...)", setu sujedoù nevez edan bluenn Bourdellez e 1977 é lâret dres él an Iliz diàr o fenn.

Evit kloziñ get ar pennad-mañ e vo lâret en deus skrivet ha kenteliet (e fin e vuhez) Bourdellez a-enep ar gelennadurezh varksour dre m'eo honnezh hollzanvezel. Feal eo amañ doc'h kelennadurezh voutin an Iliz⁵⁴⁷ a nac'h tout ar meizhadennoù hollzanvezel ha kani Marx dreist-holl.

540 *Imbourc'h*, Here 1977, "Marksouriezh hag ar rekisadurioù kristen da stourm enep". p. 521.

541 *Ibid.*, p. 522-523.

542 E 1971 e oa Bourdellez en ur gevridigezh nevez krouet *Beleion Vreizh* he deus honnezh soutenet un tiegezh labourerien-douar (ar familh Souvestre, kumun Cornillé ez-tal Roazhon) en arvar da vout lakaet er-maez ag o zachenn (Gwenglo 1971, ur pennad sinet "Strollad Beleion Vreizh" e teuliad "Beleion Vreizh" <https://bibliotheque.idbe.bzh/>

543 Kavet 'meus div gartenn dilenner Bourdellez e dielloù e familh goarnet get e ninez Yvette Meurou. Mouezhiñ a rae ma ne rae ket bepred, setu ar pezh a lâr deomp ar re-se.

544 *Imbourc'h* 1977, *Ibid.*, p. 523.

545 "La pensée de Marx semble indissociable de son utilisation politique et pratique. En France, le marxisme nourrit de nombreux courants intellectuels.(...) Le marxisme devient une idéologie qui s'impose comme le marqueur de diverses organisations. (...) Le marxisme alimente divers courants universitaires et intellectuels." *Setu berr-ha-berr tesenn an istorourion en ur levr graet a-stroll get tud arall*: Jean-Numa Ducange et Anthony Burlaud (dir.), *Marx, une passion française*, La Découverte, 2018. <https://www.zones-subversives.com/2018/09/le-marxisme-en-france.html>

546 *Ibid.*, p. 523.

547 Levezonet eo bet Bourdellez moarvat get Lizher-Meur *Divini Redemptoris* get ar Pab Pie XI (Meurzh 1937) a gondaon groñs ar gomunouriezh dizoue. Bourdellez a oa 29 blez d'ar mare-se. Degemeret e oa bet ar Lizher-Meur-se él

A enep ar renad soviedel hag emzalc'h komunisted Bro Frañs ha Breizh en XX^{vet} kantved. Kement-arall en deus graet a-enep ar gevalouriezh (mamm ar varksouriezh), an trevadennerezh (kani agozh ha kani an XX^{vet} kantved) ha Dispac'h an Ijinerezh bet kroget er XIX^{vet} kantved. Kement-se en anv gweladur kristen ne zouje ket ar sistemoù-se tamm ebet dezhañ. Setu ar pezh a lâre ivez Yann Talbot d'an 26 a viz Gouere 1989, Talbot en deus heñtet Bourdellez a-hed un dregont blez bennak : "**War un dro e pellaemp diouzh an doare kapitalour da welout an traoù, ha diouzh an tu-all e welemp pegen divarrek e oa ar gelennadurezh varksour da gas war-raok ur gwir diorren. Ni a oa er-maez eus an emgann ideologel-se**, ha kavout a raemp hor mammenn speredel e kelennadurezh an Iliz ." ⁵⁴⁸

Pa vez kont ag an "Den", ar "vBro" hag an "Douar" e c'heller, marse, lâroul e oa Bourdellez a-du get mennozhioù dibleg a oa re an Abad Madec ⁵⁴⁹, lesanvet "Madec social" : mennozhioù dibleg a-enep ar renad komunist kenkoulz hag ar renad kapitalist getañ, a skriv Yvon Tranvouez ⁵⁵⁰. Tamall ha kondaoniñ a ra groñs Bourdellez ar varksouriezh, ar renad soviedel, ar gevalouriezh, an trevadennerezh dre ma ziskaront an "den", ar "broioù", an "douar".

E Dirouestlañ ar c'HUDENNOÙ sokial é tistroiñ davet kelennadurezh sokial an Iliz hag he lakaat e pleustr.

1° Kelennadurezh sokial an Iliz da nadoz-vor.

Get petra gober neuze pa vez kont ag kudennoù sokial pa n'eus disoc'h mat ebet na get ar varksouriezh na get ar gevalouriezh? Treiñ a ra Bourdellez e selloù àr-zu lizher-meur *Rerum Novarum* embannet get ar Pap Leon XIII e 1891 ⁵⁵¹ hag a yey d'ober kelennadurezh sokial an Iliz.

Pal ar gelennadurezh-se 'zo da gentañ sellet doc'h ar c'HUDENNOÙ sokial dre an Aviel met ivez get sikour ar skiantoù sokial, a zo tout ar re-se benveger mat d'ober gete, ha, da eil, ober er gevidigezh. Setu ar pezh a zisleg Augustin BOURGUE, danvez-doktor àr an deologiezh sokial ha eneel ("Collège des Bernardins" Paris) e 2024. ⁵⁵²

torkad savboentoù an Iliz e-keñver ar gomunouriezh. Ar lizher-meur-se 'zo bet embannet, un droigigezh anezhi e galleg get Jean MADIRAN, Mouladurioù 'Nouvelles éditions latines', 1986, ISBN : 978-2-7233-0313-2

548 "Per Bourdellez va mestr" Yann TALBOT, *Al Liamm*, Gwengolo-Here n° 256, 1989 p. 249.

549 "L'abbé François-Marie Madec (1879 -1936). En tant qu'ecclésiastique, c'est un pionnier de l'action sociale, c'est aussi un ardent défenseur de la culture bretonne. https://fr.wikipedia.org/wiki/Jean-Fran%C3%A7ois_Madec

550 *Catholiques en Bretagne au XXème siècle* Yvon TRANVOUEZ, Presses Universitaires de Rennes, Collection Histoire, 2006, 237 p. Chapitre 2 Silhouettes de Basse-Bretagne p. 39-45 "Un prêtre déconcertant Madec-Social" (1879-1936).

551 Bet nevesaet e vo get ar pab Yann-Paol II- lizher-meur: *Sollicitudo rei socialis* e 1987.

552 "La raison d'être de la doctrine sociale est de regarder une question sociale et de l'éclairer par l'Évangile afin de proposer des principes d'actions. Le Cardinal Cardjin en résume ainsi la pédagogie : "Voir ; Juger ; Agir" : Avec l'aide de toutes les sciences humaines, voir un phénomène et comprendre les enjeux d'une question sociale ; juger c'est-à-dire éclairer cette question à la lumière de la sagesse et de l'anthropologie chrétienne ; enfin l'action est entreprise par le peuple de Dieu, appelé à agir à la lumière des principes et des critères forgés par la doctrine sociale de l'Église" e *La Doctrine Sociale de l'Église en cinq questions* get Augustin BOURGUE, 14/2/2024

<https://www.collegedesbernardins.fr/magazine/article/la-doctrine-sociale-de-leglise-en-cinq-questions#:~:text=On%20trouve%20une%20d%C3%A9finition%20de,le%20but%20d'orienter%20l'> "Voir, juger, Agir" setu hentenn en doa degemeret Bourdellez é labourat get ar 'GEES' da skouer.

Ma heuliehe an Iliz ar gelennadurez-se, (met ne ra ket hervez Bourdellez. Fallidik eo.), neuze e vehe-hi "gouell an dud" : "An Iliz an hani eo a dlee bout "goell an dud"⁵⁵³.

2° Chom feal d'ar feiz kristen en ur ober er bed get ur pal politikel.

Met pelloc'h e ya Bourdellez à an dachenn sokial. Kenderc'hel a ra é lâret piv a c'hellehe cheñch an traoù, da lâret eo piv a ray an Iliz nevez d'e soñj-eñ: tud èl Camillo Torres⁵⁵⁴ ha Don Helder Camara⁵⁵⁵ en Amerika ar Su hag ivez belean 'zo e Bro gKatalogn hag Euskadi (anv ar velean-se n'int ket meneget e pennad Bourdellez):⁵⁵⁶ Setu d'ar mare-se tud awenus evit Bourdellez e 1970, tud an iliz a brederie àr ar c'hudennoù sokial ha betek unan en deus stourmet armet evit ar beorien (C.Torres).

Marse e c'hellomp kompren amañ perak e lâre Jean-Pierre Marjou din e oa get Bourdellez ur "c'hleizour", ha perak e oa ket forbannet ag skolaj Sant-Joseb⁵⁵⁷ get penn-rener hennañ ha difennet doc'hton prezeg get un eskop e-pad pemp blez bennak d'an nebeutañ?

Skoet e oa bet Bourdellez get enkadenn sokial e penn-kentañ ar bezadoù 1930 a lâr Yann Talbot : "Dalc'het en devoa soñj eus gwallenkadenn ar bloazezhioù tregont : dilabour, reuzeudigezh, naon, dizesper...Ret e oa lakaat da dalvezout, emezañ, reolennoù nevez an ekonomiezh evit ma ne c'hoarvezfe ken seurt gwallvarradoù"⁵⁵⁸. "E soñj a oa : Doue n'en deus ket krouet ar bed evit ma vije rummadoù re binvidik diouzh un tu, hag engroezioù o vizeri diouzh an tu all. D'an holl emañ ar bed. Penaos **sevel ur gevredigezh deneloc'h ha reishoc'h**."⁵⁵⁹ Ma n'eo ket bet kavet geniñ pennadoù get

553 Bourdellez, 1970, "Explosion marxiste en Bretagne".

554 Pajenn Camillo Torres à Wikipedia : "Camilo Torres Restrepo, né le 3 février 1929 à Bogota (Colombie) et mort le 15 février 1966, est un prêtre et révolutionnaire colombien, sociologue et militant de gauche. Il œuvra pour la représentation et les droits des Colombiens les plus pauvres et, déçu du manque de résultats politiques de son action entra en clandestinité pour rejoindre la guérilla de l'Ejército de Liberación Nacional (ELN), fondée en 1964. Tué en 1966 lors d'affrontements avec l'armée, Camilo Torres deviendra l'un des symboles de l'engagement armé de prêtres, liés à la théologie de la libération, dans la guerre civile colombienne."

555 Pajenn Wikipedia Helder Pessoa Camara : "1909-1999, oa un eskob katolik brazilian. Anavezet eo evit ar stourm en deus renet enep ar baourentez en e eskopti hag er bed a-bezh.(...) Difenner gwirioù mab-den e Brazil eo bet e Brazil hag unan eus perzhidi heverk teologiezh an dieubidigezh en Amerika ar Su. Emouestlañ a reas eus tu ar re baourañ. Oberiant-tre e voe e-pad Sened meur Vatikan II oc'h enebañ groñs ouzh an tu mirour. Er 'CELAM' ('Conseil épiscopal Sud-Américain') e sikouras da dermenañ "an dibab bezañ eus tu ar beorien da gentañ".Sevel a reas enep diktatouriezh ar jeneraled (1964-1985). Dont a reas da brezegenniñ en Europa hag e Frañs peurgetket evit lakaat war wel paourentezh broioù an trede-bed, stourm ouzh ar werzh armoù, brezel Viêt Nam ha feulster an diktatouriezh brazilian.(...) Tost oa ouzh al luskadoù nann-feuls ha diskouez a rae bezañ awenet gant Gandhi ha Martin Luther King. Diazezañ a reas e zoare da avielañ war ar servij d'ar re baour. Fellout a rae dezhañ gwelout an danvez beleien stummet kement war dachenn an obererezh sokial ha war hini an deologiezh.

556 "Construire une société fraternelle et entrer dans cette lutte à laquelle commence à participer des prêtres et des évêques d'Amérique du Sud (Camillo Torres, Don Helder Camara), les prêtres basques et catalans qui seront la Nouvelle Eglise. " (*Ibid.*, Bourdellez, 1970, p.2)

557 Jean-Yves Marjou en deus lâret din ne oa dielloù ebet diàrbenn remzad kelenner Bourdellez e dielloù skolaj Sant-Joseb (tra souezhus a-walc'h). Diellourez Eskpoti Sant-Brieg, solitet geniñ, en deus respontet din ne oa mann ebet naket du-se (tra souezhus kement all) e teuliad "Pierre Bourdellès".

558 TALBOT Yann " Per Bourdellez, va mestr", *Al Liamm* n° 256 Gwengolo-Here p. 251.

559 *Ibid.* p. 247.

Bourdellez àr ar sujed-se eo bet kavet pennadoù é komz a-zivout kudennoù sokial Bretoned é labourat e Jersey⁵⁶⁰ pe c'hoazh kudennoù labourerion-douar Breizh e 1962/63⁵⁶¹ da skouer.

Jean-Jacques Monnier⁵⁶² a zegas ar gaoz àr ar levezon en dehe bet Bourdellez àr tud engouestlet e kostezennoù an tu kleiz, menegiñ a ra Jacques Gautier⁵⁶³ (ezel ar 'MRP' , neuze ar 'PS'⁵⁶⁴ hag 'Les Verts'⁵⁶⁵, ur c'hatolik an tu-kleiz a lâr Monnier) pe Pierre Yvon Tremel ⁵⁶⁶ (PS). Doc'hpenniñ a reer Yann Talbot ⁵⁶⁷, Fañch Kerrain ⁵⁶⁸, Ronan Huon⁵⁶⁹, Yann-Fanch Kemener⁵⁷⁰ pe ar film-aozer Jean-Louis Le Tacon.⁵⁷¹

560 *L'Avenir de la Bretagne*, 01 juin 1963, n°77, p. 5. "Les saisonniers de Jersey" "Ce qu'il faut dire", Atersadenn an Aotrou Abad Per Bourdellès get Lukian Raoul. Savet en doa Bourdellez ur film a-zivout labourerion rannvleziat Breizh e Jersey, pa oa aet e darempred gete du-se a lâr kement-se er gazetenn. N'eo ket ket adkavet ar film-se.

561 *L'Avenir de la Bretagne*, 16 février 1963, n°70, p 2. "Inquiétudes agricoles" L. Pempoul (alias Bourdellez).

562 Notenn "GAUTIER Jacques" get Jean-Jacques Monnier, doare diwezhañ 25 juillet 2018, <https://maitron.fr/spip.php?article50487>

563 "Gautier a oa bet, eme Monnier, sensibilisé à l'importance du développement local par un prêtre enseignant, par ailleurs "militant breton [Bourdellez]". Gautier qui participa à l'action d'un groupe de citoyens [get Bourdellez] qui tentait de réveiller la petite sous-préfecture en déclin, en faisant appel à Pierre Marzin, un haut fonctionnaire des Télécommunications, originaire de Lannion." (Lâret eo bet hiroc'h dija àr ar sujed-mañ er labour-mañ).

564 "Parti socialiste" strollad politikel Bro C'hall.

565 "Les Verts" strollad politikel Bro C'hall (1984 -2010).

566 "Ur politikour breizhat e oa Pierre-Yvon Tremel (1946-2006). Bet Maer Kawan (1971-2006), kuzulier-departamant (1979- 2002), Besprezidant Kuzul-departamant Aodoù an Hanternoz, Kannad (1988 ha 1993) a-raok mont da senedour etre 1998 ha 2006". Pajenn *Pierre-Yvon Tremel* <https://fr.wikipedia.org/wiki/Tr%C3%A9mel>

567 Yann Talbot (1940-2018) zo ur skrivagner brezhonek hag ur beleg katolik. https://fr.wikipedia.org/wiki/Fichier:Yann_Talbot.JPG

568 "Fañch Kerrain, ganet e 1938 e Kamlez, e Treger, zo bet kelenner prederouriezh e Kintin, Lannuon hag e Lise Diwan. Skrivet en deus pennadoù diwar-benn ar brederouriezh e-barzh Aber, Barr-Heol, Imbourc'h, Al Liamm, Pobl Vreizh hag Al Lanv. Priz Langleiz a zo bet roet dezhañ e 2014 evit e levrioù prederouriezh deuet er gouloù e 2013. (...) **Merket don e oa bet, pa oa e skolaj Sant-Jozef, gant ur beleg desket-bras ha speredet, an aotrou Pêr Bourdellez** hag en doa digoret e spered dezhañ war gudenn Vreizh. Diwar e levezon ez eo deuet da vezañ ur broadelour breizhat. Kemeret en deus perzh da gentañ en aozadurioù sevenadurel. Adalek ma voe diazezet Skol an Emsav gant Youenn Olier e 1970, e labouras e-barzh ar framm-se betek ar bloaz 1975. Met ne oa ket gwell blijet gant ar spered kleizelour hag enep-broadelour a oa en em silet en aozadur da heul dispac'h Mae 68. Er bloaz 1976 e kavas gwelloc'h kuitaat Skol an Emsav hag ober politikerezh. **Emezelañ a reas en UDB**, e-lec'h ma chomas un ugent bloavezh bennak, bet zoken e penn kevredad Treger-Goueloù e-pad eizh vloaz. Dilezet en deus ar strollad pa 'z eus bet goulennet digantañ mont da gelenn da **zDiwan**.

569 "Kelenner Istor ha douaroniezh e oa [Bourdellez] e Sant Josef pa oa Ronan Huon skoliad eno. Kalz levezon en doa bet An Aot. Bourdelles warnañ a-fed deskiñ ha stourm evit ar yezh." *Al Liamm*, Eost 2004, n° 345 p. 23.

570 "Yann-Fañch Kemener : Où j'ai pris conscience d'être breton ? [...] Ça s'est fait à l'adolescence. J'étais bretonnant. Je parlais breton, toujours. J'étais toujours intéressé par la musique, le chant. Tout ça, c'était important pour moi. RLC : Toujours ? Yann-Fañch Kemener : Tout le temps. C'est d'ailleurs ce qui m'a fait découvrir, après, autre chose ; et prendre conscience de ma différence et de ma richesse. Et comment j'ai pris conscience ? Eh bien, par le chant, d'une part, et puis, par les gens que j'ai rencontrés à ce moment-là, mais toujours par le biais du chant. C'est vrai que j'ai pris conscience dans une période, peut-être, qui se prêtait à ça. C'était dans les années soixante-dix, quatre-vingts. L'après soixante-huit, où, dans ce pays, on s'est posé la question de l'identité. C'est là qu'on a vu apparaître, tu sais, tout le retour à la terre, aux traditions, à d'autres valeurs, disons. [...] Et c'est là que j'ai pris conscience qu'il y avait des gens qui avaient écrit, qui écrivaient, qu'il y avait des gens qui enseignaient l'histoire, qui... C'est comme ça que j'ai connu **Bourdellès**, par exemple, des écrivains, des gens qui écrivaient en breton et pas seulement des choses anciennes." COADIC Ronan, *L'identité bretonne* 1997, Tesenn Université Brest, Presses universitaires de Rennes; Terre de Brume, 1998, 2-84362-019-8. fihal-02910275f p.73.

571 Jean-Louis Le Tacon : "Dans ma famille, dans le Trégor, à Pontrioux, mon père, pourtant né au XIXe siècle, s'était acheté une Pathé Marconi. Moi, je poursuis mes études à Saint-Joseph de Lannion, je fais du scoutisme et surtout beaucoup de théâtre, j'ai une véritable passion pour la scène. **Et puis survient l'abbé Bourdelles, dont j'ai raconté**

Gwelet hon eus, é studial pennadoù Bourdellez a-zivout ar varksouriezh hag ar gevalaouriezh, e oa Bourdellez a-enep ar reizhiadoù-se a wask an tud, a nac'h o ene, o vro, o yezh, o sevenadur. Kavout a reer ivez, edan e bluenn, pennadoù arall a-zivout stad truezhus tud paour àr an dachenn danvezek ha sevenadurel.

Meur a wezh en doa komzet Bourdellez din a Marc Sangnier hag ar luskad "Le Sillon" a oa bet dedennet ur bochad gete. Setu ar pezh a lâr François Châtelet hag Evelyne Pisièr-Kouchner⁵⁷² a-zivout **mennozhioù "a spered araok" kinniget get ar gristeniezh** en o zouez just a-walc'h Marc Sangnier hag ar luskad "Le Sillon": daet eo ar gristeniezh a-benn kinnig mennozhioù a spered a-raok pe, d'an nebeutañ, tud é taliñ doc'h tra-mañ-tra adal an XIX^{vet} kantved. Kostezennoù kentoc'h ag an tu dehou 'zo bet e Frañs. Nebeutañ a berzh he deus bet ar gristeniezh **en tu kleiz**. Koulskoude eo ret menegiñ **Marc Sangnier** (1873-1950/ bet kondaonet get ar Pab e 1910), e luskad "Le Sillon" hag ar gostezenn krouet getañ "Jeune République". Henezh, ur vedouriezh gristen getañ, en deus klasket gober er gevredigezh get ur pal politikel: "Le christianisme a été "capable de susciter des idées progressistes ou, du moins contestataires dès le XIX^{ème} siècle par exemple Marc Sangnier..."⁵⁷³. "Au sein de la pensée libérale la démocratie chrétienne est à la fois⁵⁷⁴ : réactionnaire (Saint Thomas) pour le maintien politico-social existant (...) se rallie à l'état gérant, veut promouvoir l'ordre⁵⁷⁵ et progressiste (Saint Augustin) s'oppose aux excès "totalitaires" (...) est favorable aux réformes indispensables⁵⁷⁶ (...) **ce qui est condamné, ce qu'il faut abattre c'est l'ordre inhumain, l'ordre de masse qu'instaure le règne de l'Industrie et de l'état-nation ordre qui broie la Personne, ou le Sujet** (Saint Augustin⁵⁷⁷ *Confessions / La Cité de Dieu*)" le sujet humain, conçu comme intériorité, comme Je libre et par conséquent responsable non seulement de lui-même mais du destin

plus tard l'histoire dans un film, Abbé Pierre Bourdelles, l'éveilleur (1987). C'est un grand militant de la culture bretonne, humaniste, et il pousse les élèves sur toutes ces voies. Curieux de toutes les nouvelles technologies, il enregistre, tourne des images. Il les monte lui-même, colle les films (...). Plus tard, il me remet une valise pleine de ses pellicules, qu'il me lègue... Je pars faire le grand séminaire à Saint-Brieuc. Je ne pense plus à cette valise. Je l'ouvrirai beaucoup plus tard, en 1976 ou 1977. Un trésor. Entre-temps, j'ai perdu la foi, mais pas le désir de cinéma. La roue tourne. Après les études religieuses, la découverte du marxisme. Année 1968 ! Je milite à La Cause du peuple, je m'inscris en sociologie à Rennes. Théâtre et propagande ne font qu'un, je me régale. Le cinéma va me rattraper. J'ai acheté une caméra Minolta dans un supermarché, je suis les manifestations, les occupations d'usines, je me fais même enfermer avec les patrons, je tourne, je monte, c'est le bonheur... Je suis totalement autodidacte, brut de fonderie. Avec quelques camarades (...) nous montons le groupe Torr-e-benn (Casse-leur la tête), sur le modèle des Kinoks de Dziga Vertov, en Union soviétique. Nous sommes de toutes les luttes : lutte foncière à Orvault (Olivier Tric), lutte des kaolins à Plémet, du Joint français à Saint-Brieuc. En Super 8, nous tournerons et produirons *Nous irons jusqu'au bout, la grève des Kaolins de Plémet* et *Voici la colère bretonne : la grève du Joint français*, (...). <https://www.bretagne-et-diversite.net/fr/portraits-realisateurs/jean-louis-le-tacon>

572 "Les conceptions politiques du XX^{ème} siècle, histoire de la pensée politique" François CHATELET, Evelyne PISIÈR-KOUCHNER, Presses Universitaires de France, Thémis, Science Politique 1981, 1088 p.

573 *Ibid.*, p.112.

574 *Ibid.*, p.117.

575 *Ibid.*, p.118.

576 *Ibid.*, p.118.

577 "Ur prederour hag un douenonour roman hag unan eus ar c'hentañ pennoù e deroù ar relijion kristen e voe Sant Eosten, anvet *Sant Aogustin Hippo* ha *Sant Aoustin* ivez, bet ganet d'an 13 a viz Du 354 e Tagastos ha marvet d'an 28 a viz Eost 430 e Hippo (Annaba en Aljeria hiziv). Eskob kentañ Hippo e voe ha lakaet da zoktor an Iliz katolik roman, da Dad an Iliz ha da sant katolik ivez, e 1298. Skrivet en deus *Gourbannoù* ha *Keoded Doue*. Diwar al lizhiri kaset d'ur gumuniezh tud deol gantañ e voe tennet ar pezh a voe graet reolenn sant Eosten eus an oberennoù-se hag a voe reolenn diabarzh meur a vanati e Kornogeuropa. https://fr.wikipedia.org/wiki/Augustin_d%27Hippone

de l'humanité, du devenir dramatique de la cité terrestre⁵⁷⁸(...) le chrétien est "embarqué " dans l'histoire."

Evit re a aparchant d'ar luskadoù-se eh eus un dra e kevridigezh an XIX^{vet} hag an XX^{vet} kantved eo dav en diskar : an urzh dizenel (dinatur) 'zo e-barzh an hani eo. Ur urzh eo bet krouet hreveze get an Ijinerezh hag ar Stadvroad.⁵⁷⁹ a wask an Den pe ar Sujed (Sant Eostin "*Confessions*" / "*La Cité de Dieu*"). Muioc'h, an Den 'zo ur sujed dieub anezhañ evite, ur sujed kiriek dezhañ e-unan met kiriek ivez da blanedenn pe dazont an denezh àr an douar. "Lestret" pe tapet eo e red an Istor emañ.

Taliñ a ra ar c'hristen [Bourdellez] doc'h un aremvac'h⁵⁸⁰. Getañ eh eus ur gweladur kristen ag ar bed d'un tu, d'un tu arall, emañ ret dezhañ gober er bed emañ-eñ e veññ ennañ ha kaout, en ur ober kement-se, ur pal politikel.⁵⁸¹

Evit kristenion' zo (luskad an "**non-conformistes des années 1930**" get Emmanuel Mounier en e benn) ne ra mui an Iliz nemet "skignañ talvoudoù teologel", n'eo ket mui "emvod ar feizidi endro d'ar C'hrist". A-gaoz d'an dra-se n'eo ket mui ar re-se a-du get pennoù-bras an Iliz⁵⁸² "au fond ce n'est qu'à Dieu (...) au "sujet Dieu" qui est au fond du sujet "homme" qu'il a des comptes à rendre chef de file de ce mouvement en France **Mounier** [entend] faire revivre Jésus débarrassé des scories mises en place par les institutions religieuses, les pouvoirs civils, le moralisme bourgeois" (...) "l'idéal du bonheur" (société de consommation) est un leurre (qui mène à un asservissement général, à des joies médiocres et stéréotypées au plus grand profit des vendeurs d'illusions matérialistes. Le **personnalisme** attaque avec la même vigueur le marxisme tel qu'il est réalisé en URSS." (ha a-wezhioù a-enep ar Vatikan mem).⁵⁸³

Tost-tre emañ Bourdellez da savboent Mounier pa dabut an Iliz, pa gondaon ar varksouriezh, an URSS, an danvezoulouriezh, ar gevredigezh kuzumiñ, moralouriezh ar vourc'hizion.

Krediñ a reher lâret eo bet Bourdellez diskipl Sant Eostin, Marc Sangnier pe Emmanuel Mounier p'en deus klasket, en ur chom feal d'e feiz kristen, gober er bed get ur pal politikel.

578 "Les conceptions politiques du XXème siècle, histoire de la pensée politique" François CHATELET, Evelyne PISIER-KOUCHNER, Presses Universitaires de France, Thémis, Science Politique 1981, p. 118.

579 *Ibid.*, p. 118 19 : "témoin actif de la justice contre toutes les formes d'injustice, de la paix contre la guerre, des pauvres contre les riches, des humbles contre les violents ce chrétien ne se satisfait pas de la charité il dénonce les inégalités et leurs causes donc il faut accabler l'Industrie et sa loi du profit, l'état-nation et la violence légale mais aussi l'individualisme matérialiste qui sert de fondement ces institutions".

580 "dilemme" e galleg.

581 *Ibid.*, p.113 : "comment faire le lien entre appartenir à une vision chrétienne du monde et avoir dans le monde contemporain des activités, une attitude à visée politique."

582 *Ibid.*, p. 120-122: Pal ar 'Personnalisme' : "lutter contre la dépersonnalisation des rapports humains dans un monde dominé par le matérialisme l'égoïsme capitaliste et l'individualisme le plus étroit. (...) Certes la révolution est d'abord d'ordre spirituel mais "au nom de l'humain , l'anti-capitalisme est l'évangile du pauvre"

583 *Ibid.*, p.119 : "Pour ce chrétien de gauche l'église est devenue une institution elle n'est plus Ecclesia (rassemblement de fidèles autour du Christ) (...) de là ce chrétien de gauche admet volontiers d'entrer en conflit avec sa hiérarchie voir avec le Vatican. Dilemme : comment (p. 113) faire le lien entre appartenir à une vision chrétienne du monde et avoir dans le monde contemporain des activités, une attitude à visée politique (p. 113).

Nac'h a ra Bourdellez ar varksouriezh, ar gevalaouriezh. A-du emañ get kelennadurezh sokial an Iliz. A-du get kristenien a venn gober, bout oberiant àr an dachenn bolitik ha sokial, dreist-holl evit mad ar re baour, ar broletourien, ar re gwasket.

Evit pezh a sell doc'h "kudenn Vreizh" n'eus, d'e venno, ur remed hepken : frankiz Breizh.

F A-du get frankiz Breizh.

1° Bro-Frañs 'zo kaoz d'is-diorren ekonomikel Breizh an XX^{vet} kantved. Perzhioù un drevadenn 'zo get hounnezh.

a) Breizh bet hualet àr an dachenn ekonomikel.

E 1971 e respont Bourdellez d'un atersadenn e kelaouenn ar c'henvrededad Kendalc'h "12 questions sur l'économie bretonne."⁵⁸⁴ Setu berr-ha-berr danvezioù pennañ a lenner e-barzh:

- Tout ar rummadoù sokial e Breizh o deus kemeret perzh e manifestadeg-mañ-manifestadeg [er bleadoù 1960]. Ur gudenn breton eh eus. Na bout eo hollek ar gudenn-se n'eo ket ar vBretoned emskiantek eh eus anezhi ha setu n'int ket kengred.

- Leviadurezh ekonomikel bet lakaet, hed-ha-hed an XIX hag an XX^{vet} kantved dreist-holl, get Bro-Frañs da vBreizh zo kaoz is-diorren a-vremañ homañ.

- N'eo ket Breizh enklozet (diamen), hualet ne lâr ket. ("La Bretagne n'est pas enclavée, elle est entravée.")

- Breizh a c'hellehe bout ur 'blankenn da lammat' ("une tête de pont") e kreiz ar Mor-Norz-Atlantel.

- Pinvik eo bet Breizh pa c'helle gober koñvers dre mor. Oberiant-tre eo bet porzhioù Breizh e-pad kantved diwezhañ ma oa Breizh en he frankiz.

- N'eo ket bet lakaet àr an noazh Breizh p'he deus kollet he frankiz. Ne oa harz maltetourezh ebet etre Breizh hag ar vroioù arall a-hed an aod. Bro-Saoz ha Bro Holland dreist-holl a rae Breizh koñvers gete nemet he deus divizet Bro-Frañs gober brezel d'ar vroioù-se. Ha setu neuze Breiz é c'hober brezel d' he fratikoù...

- En em lakaat o deus porzhioù Breizh (Naoned, An Oriant) d'ober koñvers ar sklavourien goude. Bourc'hizion Bro-Frañs a zo daet d'en em staliñ er porzhioù-se pand oa moraerion e Breizh. Setu ur vourc'hizelezh trevadennel é argantaat un tamm mat ag armerzh Breizh hag a vo emberr e penn anezhañ.

584 *Breiz*, kelaouenn Kenvrededad Kendalc'h, n° 154, 1971, p. 8-9. (Anv an aterset n'eus ket). NB : Graet en doa Bourdellez ur brezegenn àr ar memes sujed "Le Malaise breton" e Pedernege d'an 01 a viz Kerzu 1957 ("à l'occasion d'un rassemblement des sonneurs et danseurs de Kendalc'h" / Titour kavet er gazetenn Kendalc'h *Breiz* 1957, n° 13, p. 5 (n'eo ket bet kavet ar pennad-mañ) hag unan arall c'hoazh e Paris e ti Ker Vreizh "Mort de la Bretagne" (Mamenn : pennad ar gazetenner F. Trimer, deiziad ebet àrnañ - nemezt 19 a vie Here- ne ouier ket e peseurt kazetenn (diell roet din get an Aotrou MEURIC).

Goude e tispleg Bourdellez abegoù isdiorren Breizh: ar gronn a oa bet lakaet en-dro da vBreizh ('blocus'), fall aveet e oa Breizh ha neuze kollet he doa he galloud diviz. Kement-mañ a zegouezhas da gentañ en XIX^{vet} kantved hag un eil gwezh er XX^{vet}.

Er XIX^{vet} kantved: poblañs Breizh 'zo bras met setu an dienez.

Breizh stanket ('ar blocus') : 22 vlez pad etre 1793/1815 (e-pad brezelioù an Dispac'h ha neuze an Impalariezh). Stanket ar mor get ar Saozon (é vrezeliñ get Bro-Frañs...). Ne c'hell ket mui ar Vretoned mont da besketa a-bell, gober koñverz dre mor, eziporzhañ lien ha neuze echu get gounid lin e Breizh. Setu an dienez é ober he reuz er vro.

Is-aveiñ Breizh : e 1840 pa grog an Dispac'h Ijinerezh⁵⁸⁵ n'eus ket mui argant e Breizh⁵⁸⁶, hogen en amzer-se eo e vo graet kanolioù, hentoù houarn. Paris, mestr àr an divizoù, ne zivizo ket gober hentoù etre Kreiz-Breizh hag an aod, an hentoù a vo graet ne servijo nemet d'ober ar liamm etre Breizh ha Paris. Echu get labouradeg gwiaerezh ha govelioù' zo e Breizh. Muioc'h-mui e ta kêrioù Breizh da vout divrezhonekaet, liv an trevadenniñ àrné.

Breizh 'zo edan divizoù he mestr: Kollet he Stadoù, he Breujoù geti. Didroc'het he zachenn-douar get Paris e pemp departamant. Kannaded Breizh 'zo izili kostezennoù politikel renet e Paris. Programmoù ar skolioù 'zo re bParis.

An disoc'hoù : Setu armerzh Breizh àr-zu an is-diorren : n'eus ket mui a wiaderezh, artisaned n'eus ket mui naket. Ur vro n'he deus ket mui nemet labourerion-douar é labourat enni. Kresket he deus poblañs Breiz a 2 betek 3 milion a dud. Met lañs ebet get ar greanterezh / neuze re a dud er vro/ dienez / ismagadurezh / alkoolegezh / droug-skevent. Diwezhat e vo savet hentoù-houarn e Breizh⁵⁸⁷ hag a servijo dreist-holl da zegas ur yoc'had proletourion vreton, re dreist niver ur vro lakaet àr an noazh : "une masse de prolétaires surplus de population d'un pays ruiné."⁵⁸⁸

Er XX^{vet} kanvet : dibobliñ Breizh dielfennet get Bourdellez get ar memes parametroù:

Breizh stanket en-dro ('ar blocus' 2): Goude enkadenn ekonomikel 1932 e vo lakaet get Bro-C'hall taosoù maltouterel uhel-tre, ne c'hell ket mui marc'hadourezhioù ar bed dont tre e Breizh. Hualet eo Breizh e-barzh harzoù kevandirel Bro-Frañs hag ar C'henvarc'had. E-barzh ar wask, enk àrni en em gav Breizh.

Is-aveiñ Breizh: skort eo porzhioù Breizh, lavek kenereoù war-nij, hentoù-houarn ebet e Kreiz-Breizh. Diwezhañ rannvro Bro-Frañs e vo Breizh evit kaout hentou-tizh.

585 "Amorcée vers 1840, la première industrialisation française s'achève en gros vingt ans plus tard. (...) En 1860 la France est devenue la première puissance industrielle d'Europe occidentale" p. 378 " Dominique BARJOT (istorour, armerzhour) p. 377.

586 "Le dynamisme des grandes banques parisiennes - mais aussi lyonnaises- contraste avec l'**anémie du réseau bancaire régional** (Bertrand Gille). Vers 1830 'dans de nombreuses régions, le crédit est encore un vain mot." (Lévy-Leboyer) p.120 *L' économie française 1815-1851* D. BARJOT."La mise en culture des sols acides n'est possible qu'avec le chaulage, or celui-ci s'avère souvent impossible (**Bretagne** intérieure (...), par suite de l'**insuffisance des capitaux et des moyens de transport.**" p. 122 [1815-1851] Dominique Barjot (istorour hag armerzhour): "Seules quelques régions sont entrées dans la voie de l'agriculture moderne (la Bretagne n'en fait pas partie)", p. 124)

587 "La IIe République (..) [1848-1852]n'accorde qu'une seule concession, Paris-Rennes " p.133 Barjot.

588 BOURDELLEZ, *Breiz*, kelaouenn Kenvreded Kendalc'h, n° 154, 1971, p. 8-9.

Breizh n'eo ket mestr er gêr: e Paris emañ savet ar steuñvoù, didroc'het ar rannvroioù ha pa vez komzet a "rannvroeladur" e vez komzet e gwirionez a muioc'h a c'halloud roet da bPrefeted ar rannvroioù."

An disoc'hoù : Neuz ur "gouelec'h cheuc'h" ("un désert de luxe") a seblant bout Breizh mat evit tachennoù soudarded, bazennoù lestr ismor nukleel, park natur vroadel, eil-tiez, tiez nevez evit ar re-gozh, tachennoù modernaet met labourerion sammet a zleoù spontus é ober àr o zro. Setu e Breizh Dispac'h al labour-douar : dispakañ stank-ha-stank ar magiñ yer, moc'h ha pennoù-saout. Re niverus ar labourerion-douar a labour e raok e tiegezhioù. Setu proletaourion mat da zivroiñ. Ar re a chom e Breizh ne broduont ket evit ezhommoù ar Vretoned met evit tud bParis, Norzh ha Reter Bro-Frañs. Dispennet eo peskaetarezh Breizh (38 000 pesketaer e 1935/18 000 e 1967). Argant asinet d'an touristañ e budgedoù Bro-Frañs a zo kaset da vBro Oc. Mann ebet evit Breizh. Godelioù Breizh (Trignac a-raok ar brezel 39/45), Hennbont ha Gwengamp goude 'zo o vont da get. Perak? N'o deus ket mui droed da breññ glaou ha houarn marc'hadmat. Lakaet eo bet ar gronn en-dro da vBreizh ("blocus 1932").

Troadiañ eo bet labouradegoù e Breizh pand eo bet gourdrouzus ar Vretoned, neuze goude 1960, setu e Roazhon : Citroën ha Fairchild, en Oriant : Renault, e Brest : CSF ("Compagnie de télégraphe sans fil"), e Lannuon : CNET "Centre National d' Etudes des Télécommunications"). Pa voe habaskaet ar Vretoned en-dro ne voe ket mui anv a labouradegoù nevez e Breizh: Le Havre a voe dibabet get Bro Frañs d'ober getañ porzh petrol ha n'eo ket Brest. Ha Ker Fos da droatiñ an uzinoù dir da zonet.

Is-diorenned eo armerzh Breizh, met petra a dalvez kement-se evit Bourdellez ? "Kentael", "digoublet" ha "suj mod trevadennel" emañ armerzh Breizh setu perak emañ is-diorren.

"kentael" : n'eo ket treuzfurmet e Breizh ar pezh 'zo produet get labourerion-douar pe pesketaerion vBreizh. Kement all evit ar pezh a sell doc'h kailh (pri-gwenn ha staen). Tud en oad da labourat, tud dizesk, a ya kuit ag ar vro.

"Digoublet": industriezhioù Breizh liammet doc'h ar labour-douar pe doc'h ar pesketa a ya kuit ag ar vro pe a varv. Industriezhioù nevez arruet e Breizh n'int ket liammet tamm ebet get peurrest armerzh ar vro, "parachutages" a skriv Bourdellez. Skolioù a zistag yaouankizoù Breizh doc'h pobl vBreizh, n'eo ket desket dezhe penaos lakaat Breizh da dalvout.

"Suj mod trevadennel": poellgorioù-sturiiñ an industriezhioù, ar sindikadoù, ar c'hostezennoù politikel, ar bankoù 'zo staliet razh e Paris. Ministred gouarnamant Bro-Frañs a zo mistri evit tresiñ an hentoù, sevel reolennoù ar c'hoñvers e Breizh. Ret eo d'ar Vretoned goulenn an aluzenn da gaout skoazell, pe an aotre d'ober tra-mañ-tra. **"Èl razh an trevadennoù n'oe ket gouest Breizh da lakaat e goñvers diavez-bro da vonet àr-raok"**(e 1968 286 F / annezad evit Breizh, 1205 F/annezad evit Bro-Frañs a-bezh.).

Moain eh eus lakaat Breizh da ziorren neoazh: ma vehe roet da labourerion-douar Breizh preniñ ha gwerzhiñ en o frankiz dre vor, e vehe pinvik Breizh él emañ Jersey. Pesked, kailh 'zo e Breizh. E-tal hent bras ar c'hoñverz etrevroadel emañ Breizh, nemet e chom Brest é sellet ar re arall dremen dirazi...Ret eo troadiñ labouradeg an houarn ha porzh petrol e Breizh. Ur bochad traoù a c'hellehe bout diorrenet ivez àr dachenn an touristañ.

Kondisionoù ret da lañsiñ an traoù : kaout an droed da "c'houiet" hag an droed da "c'hallout": gouiet petra 'zo ret evit bout breton (frankiz sevenadurel) "**la culture fait l'homme, et l'homme fait l'économie**" a skriv Bourdellez e skeudenniñ e gomzoù get skouer Bro-Israel). "Gouiet" petra 'zo maoian gober e Breizh àr dachenn an armerzh. "Gallout" : d'ar Vretoned da ziviz evit o hentoù, o forzhioù, o hentoù-nij, hep goulenn an aotre. An droed da genwerzhiñ dre mor.

Hag eh eus un drevadenn ag Breizh? Evit respont d'ar c'houlenn-se e meneg Bourdellez René Pléven⁵⁸⁹ : "l'économie bretonne a été articulée à l'économie nationale [française] dans des conditions fort voisines de celles qui réglaient jadis les rapports des métropoles avec leurs colonies."

Setu e c'heller lârou e oa get Bourdellez unan ag a re 'zo bet renket, get tud 'zo, en o zouez Loarer⁵⁹⁰, er strollad "Kleiz ha Breiz"⁵⁹¹ "nemet ne oa ket "malgré lui"⁵⁹². Breizh a oa, da venno Bourdellez, une drevadenn da vBro-Frañs.⁵⁹³

589 "René Pleven (1901- 1993) a oa ur politikour breizhat ha gall. Bet eo gant Charles de Gaulle e Londrez e miz Mezheven 1940 hag e 1958 en doa votet ar galloudoù leun dezhañ. Kannad Aodoù-an-Arvor, e pastell-vro Dinan, eo bet etre 1945 ha 1969. Da gentañ en UDSR a voe ar prezidant anezhi eus 1946 da 1953, ha goude dindan livioù strolladoù eus ar c'hreiz. E penn Kuzul ar Vinistred e oa e miz Gouere 1950, gant harp strolladoù an Trede Tu. Kinnig a reas raktres Kumuniezh Europa an Difenn dirak ar gannaded. E 1951 e voe unan eus kensaverien ar CELIB a voe e brezidant betek 1972. Harpañ a reas Georges Pompidou e 1969 hag anvet e voe da Ministr ar Justis etre 1969 ha 1973, dindan Jacques Chaban-Delmas ha Pierre Messmer. Kentañ prezidant Desavadur Publik rannvroel Breizh e voe e 1974.https://fr.wikipedia.org/wiki/Ren%C3%A9_Pleven

590 Loarer é komz a-zivout ar "MOB" bet krouet e 1957: "mouvement ouvert et fédérateur et non un parti politique que l'on peut placer sur l'échiquier politique (...) et qui se met au défi d'analyser, pour mieux l'enrayer ce que tous nommaient alors "le problème breton". "Le slogan 'Bretagne = colonie' fait alors florès. Cette entreprise d'organisation de la Bretagne devient bientôt un thème majeur des écrits, littéraires ou non de la décennie 1960 à venir." "Une histoire du 'Kleiz ha Breizh'. Nommer pour dénoncer" Tristan Loarer, p 257-286, e *La littérature en langue bretonne des origines à nos jours*, 2024, Editions Montagnes Noires Editions 240 p., p.273.

591 "Notion de « Kleiz ha Breizh » (titre d'un article « manifeste » selon Loarer) apparu dans la revue n° 121 *Al Liamm* en 1967 référence implicite à « Feiz ha Breiz » revue catholique (1865-188 puis 1900-1944). Loarer *Ibid.* p. 267. "La vague Kleiz ha Breizh propose d'accompagner par la littérature engagée, Piriou dit "littérature de combat, la reconstruction d'une Bretagne viable (a), dans un contexte moderne (b), dans le cadre celtique (c), et solidaire (d) des autres peuples qui entreprennent une démarche décoloniale similaire." Toute production mêlant les quatre démarches participent à l'expression des motifs de Kleiz ha Breizh et s'inscrit dans la construction de ce mouvement. Aussi cet idéal se voit-il porté par des esthétiques, rhétoriques, styles et genres littéraires bien différents . Il est difficile de considérer Kleiz ha Breizh en tant que collectif uni parce que les auteurs sont d'origines, de statuts, et de natures très disparates." . Loarer *Ibid.* p. 260. « le mouvement Kleiz ha Breizh désignait un ensemble (...) large composé d'auteurs qui ne se connaissaient pas nécessairement de générations différentes et d'horizons (...) divers. C'est dans une certaine mesure un mouvement littéraire, bien qu'il influença bien d'autres domaines tel que le politique (le propos décolonial et l'envergure écologiste d'Anjela Duval, Piriou, Evenou), la religion (par l'accompagnement des positions égalitaristes relatives aux réformes catholiques de la décennie chez Klerg, **Pêr Bourdellez**, et Maodez Glanndour) ou encore dans la chanson (par la dimension engagée de Stivell Glennmor, Servat) » Loarer *Ibid.* p. 266-67. (Marse e vehe moian lâret e oa bet Bourdellez "Feiz ha Breiz" ha "Kleiz ha Breizh" àr un dro. Daoust hag en dehe asantet Bourdellez e vehe bet lakaet «kleiz» e plas «Feiz», nann sur a-walc'h, « kleiz » a-gostez « feiz » marse a-walc'h ». Den a feiz eo bet hag a chom dreist pep tra.)

592 Il [Kleiz ha Breizh] ne semble pas unitaire : il existe une forte dimension générationnelle dans la qualité des productions compte-tenu de l'âge de la majorité des auteurs. Certains tels que **Pêr Bourdellez**, Klerg, Anjela Duval, Maodez Glanndour procèdent bel et bien, parfois **malgré eux**, du Kleiz ha Breizh. » Loarer *Ibid.* p. 267.

593 E prezeg bet distaget get Bourdellez dirak Lez Surentez ar Stad e miz Meurzh 1977 e lâr Bourdellez kement-mañ : «Des géographes des universités de Nantes, Rennes, et des lycées et d'un C.E.S. viennent justement de publier une 'géographie de la Bretagne', écrite en collaboration. Maurice Le Lannou en a fait un compte-rendu dans *Le Monde du 13-14 mars dernier*[1977]. Maurice Le Lannou est de Plouha ; c'est donc un proche voisin de M. le Recteur de Gommenec'h; et il est professeur au Collège de France. Or il affirme que les auteurs de cette géographie ont raison sur l'essentiel; et il les cite :

- dépendance **quasi-coloniale** qui laisse la Bretagne sans moyens,
- **civilisation** pré-fabriquée qui est imposée e et qui rend insupportables les contraintes,

Tenniñ a reher ag ar pennad-mañ ne oa ket Bourdellez tamm ebet a-enep e vehe lakae-t ekonomiezh Breizh àr-raok get ma vo get embregezhioù liammet doc'h Breizh. Neuze ur sistem kevalaour digreizennet. Get ur galloud divizout politikel breton doc'hpenn.

b) Nag ar C'henvarc'had?

Petra a soñj Bourdellez diàr e benn? Ar C'henvarc'had europeat en deus pledet Bourdellez getañ. Setu ar pezh a soñje diàr e benn hvez Talbot : "Breizh he devoa **ur chañs dreist da dapout er C'henvarc'had o tigeriñ ma c'hellfe adkavout he frankiz war ar c'henwerzh hag a mererezh**". A-du arall : "Gwelout a rae **ar C'henvarc'had o vont muioc'h-mui war-du un dachenn danvezel** hepken, e-lec'h ma vefe ken o ren nemet ar marc'had, lezenn ar c'hrenvañ pe a gwidreusañ. **Disfi en doa eta diouzh Europa ar genwerzhourien**. En Europa-se, ar re wanañ, a re zizesk, ar re uvel a vefe flastret."⁵⁹⁴.

Da geñver Kendalc'h Etrekeltieg Landreger 1962 en doa Bourdellez graet ur prezeg a zisplege ennañ e savpoent àr duoù mat ha tuoù fall evit Breizh bout er C'henvarc'had (savet pevar blez kent e 1958 get c'hwec'h bro). Embannet e oa bet ar brezeg-se goude e *Barr Heol*⁵⁹⁵: "Evit Breizh eo ar C'henvarc'had un danjer bras... met ha pa vefe kant gwech danjerusoc'h eo gwelloc'h dimp mont e-barzh eget chom evel emamp"⁵⁹⁶ "Kalonenn ar C'henvarc'had zo gwalarn Europa" ha n'eus get Breizh (pe greisteiz Itali) nemet broioù tu an diavez."⁵⁹⁷ "Breizh a zo ur vro serret war dri gostez gant trujou-malterourezh ha porzhioù-mor chomet diaoz abaoe ar bloaz 1932 - holl binvidigezhioù ar bed (glaou, houarn, gloan, kotoñs h.a.) a dremen dirak porzh Brest, met n'eo ket digor an nor dezho."⁵⁹⁸ "Emamp o vont er C'henvarc'had"⁵⁹⁹ gant porzhioù diaoz ha linennoù hent-houarn fall-aozet ha ker.⁶⁰⁰ Bourdellez a glask diskouez amañ emañ empechet ekonomiezh ha kenwerzh Breizh da vonet àr-raok abalamour d'an trujou-maltourezh d'un tu ha get keraat an tren d'un tu arall."⁶⁰¹.

Koulskoude e skriv Bourdellez " Ret eo dimp mont er C'henvarc'had, n'eo ket bet savet dre garantez evidomp, met da vihanañ ne ziskouez ket ober fae warnomp. Bank Europa he deus roet ali hag harp evit gwellaat stad hor hentoù-houarn, evit lakaat an tredan dre hor maezioù. Mar deu Breizh-Veur ha Bro-Spagn hag ar Stadoù-Unanet diwezhatoc'h, e vo Breizh, Bro-Gembre, Bro-Iwerzhon n'eo ken lec'hioù distro, met Kreiz ar C'henvarc'had, divrec'h Europa digor da zegemer. Brest en taol-se, a vefe digoret d'ar madoù a dremen betek vremañ evit lakaat sorc'henn "⁶⁰² " **DA SEVEL ER-MAEZ EUS AN DIZESPER hon eus ezhomme eus ar C'henvarc'had**. Arabat mont

- **3 000 000 de bretons** qui sont presque du jour au lendemain **devenus des sous-développés**,

- **l'aliénation d'un fonds culturel original par la politique centralisatrice**,

- **le déracinement de la main-d'oeuvre bretonne.**» Prezeg bet roet din get Bourdellez e 1977 (an destenn a-bezh a vo kavet amañ edan / stagadenn VIII).

594 Yann Talbot "Per Bourdellez, va mestr", *Al Liamm* 1989, n° 256, Gwengolo-Here, p. 251-252.

595 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1962, n° 32, p. 13-18 "Breizh hag ar C'henvarc'had" (ur pennad e daou damm da heul) get Per Bourdellez beleg.

596 *Ibid.*, p.16.

597 *Ibid.*, p.17.

598 *Ibid.*, p.17.

599 E 1965 e vo kendeuzet galloudoù-oberiant ar "CECA", ar "CEE hag an "Euratom", ha krouet ar "C'homision."

600 *Ibid.*, p.17.

601 *Ibid.*, p.17.

602 *Ibid.*, p.18.

ennañ evel tudigoù dilerc'hiet ha faezhet. Ar C'henvarc'had zo un hent digor. (...) Ret eo dimp a-barzh mont ennañ kaout skolioù, skolioù-micher, skolioù labour-douar ha keleennadurez war hor yezh, hag hor sevenadurezh, hon istor - d'ober tud ganimp.⁶⁰³ "Ret eo dimp ivez, a-benn mont er C'henvarc'had kaout hentoù-houarn aozet-mat ha marc'had-mat. Porzhioù-mor kerkouz-all."⁶⁰⁴

Kloziñ a ra Bourdellez e brezeg é lâroust 'n'eo ket [ar C'henvarc'had] ken dañjerus hag (...) ar gouelec'h gall ⁶⁰⁵ ⁶⁰⁶ Ar gazetenner R. Grogneec a rey ur rentañ-kont prezeg Bourdellez nebeut goude.⁶⁰⁷

E 1967⁶⁰⁸ e tay Bourdellez en-dro àr sujet ar C'henvarc'had. Setu petra en deus skrivet Roparz Hemon goude bout er lennet ⁶⁰⁹ : "Bourdellez a zispleg ar gudenn sklaeroc'h ha gwelloc'h eget na ra meur a studiadenñ ouizieki e kelaouennoù bras. Berr-ha-berr: emañ ar C'henvarc'had, en e stumm bremañ, o krouiñ un dachenn a binvidigezh, he c'hreizenn e traonienn ar Roen; en daou du d'an dachenn-se e krouer tachennoù a baourantez; tachenn ar Reter, en Alamagn, a zo harpet kreñv gant gouarnamant ar vro-se, tachenn ar C'hornog, enni Breizh, a zo aberzhet. **Donidigezh Breizh-Veur er C'henvarc'had a c'hallfe cheñch penn d'ar vazh o reiñ pouez kenwerzhel da aodoù ar Mor Atlantek. Breizh ha Kembre a dennfe o mad eus an darvoud, war un diviz avat : ret e vefe dezho bezañ barrek da zifenn o gwirioù o lakaat o mouezh da vezañ klevet.**"

Evit kloziñ àr sujet Bourdellez hag ar C'henvarc'had e vo lâret: n'eus get **ar C'henvarc'had nemet ur moian, marse** (n'en em douell ket Bourdellez àr kement-se), **da wellaat stad ekonomikel ha sokial truezhus Breizh ar bleadoù 1960. Breizh n' he deus ket mann ebet da goll é kemer perzh ennañ ken mailhuret, ken hualet emañ hec'h ekonomiezh abaoe 1932** ha ken dilaosket eo bet he forzhioù hag he linennoù-tren get Bro-C'hall. Ár an tu fall n'eus get raktress ar C'henvarc'had nemet ur pal danvezel. Notenniñ a reomp **ne vehe ket fall da Bourdellez ma taehe da vout gwir ur bed ma vehe Breizh e kreiz ar c'henwerzh etrevroadel** hag é ober berzh aze, a-du neuze get ekonomiezh frankizour pe varc'had **nemet e vehe Breizh mestrez er ger.**

603 *Ibid.*, p.17.

604 *Ibid.*, p.18.

605 Daveenn da levr GRAVIER Jean-François *Paris et le désert français*, 1947.

606 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Gwengolo 1962, n° 32, p. 18 "Breizh hag ar C'henvarc'had" (ur pennad e daou damm da heul) get Per Bourdellez beleg.

607 *L'avenir de la Bretagne*, n°60, 1962 "Le marché commun et les pays celtiques" par R. Grogneec : "comme l'exposé de président de séance l'abbé Pierre **Bourdellès** professeur à Lannion, les problèmes culturels sont des problèmes sociaux et donc conditionnés largement par les conditions économiques de nos pays respectifs. La perspective de l'entrée de la Grande-Bretagne et de l'Irlande dans le Marché Commun fait prévoir que dans un avenir proche tous les pays celtiques seront soumis aux mêmes conditions économiques. Il est donc de première importance pour eux d'étudier conjointement leurs problèmes communs afin d'en rechercher les solutions les mieux adaptées à une évolution harmonieuse de nos sociétés dans le nouveau cadre européen. Dans son exposé magistral Pierre Bourdellès situa le problème dans le cadre historique de l'élaboration des traités et accords européens, insistant sur le fait que la Grande-Bretagne, d'abord opposée aux autorités supranationales, dut se rendre à l'évidence du succès du Marché Commun et se décider à l'intégration, plutôt qu'à soutenir une concurrence ruineuse."

608 *Barr Heol* n° 53, Gwengolo 1967, p. 312 : "Breizh ha Kembre et C'henvarc'had" Per Bourdellez. E kamp labour Breuriezh Sant Erwann e Pleuveur-Bodoù (6/10 a viz Gwengolo 1967) en doa graet Bourdellez ur prezeg àr sujet "Breizh ha Kembre er C'henvarc'had" adarre (moarvat evit lâret kemend-all).

609 HEMON Roparz, *Ar Bed Keltiek*, n° 312, 1967 p. 332.

2° Broadelour breton.

Setu termenadur ag "broadelouriezh" kinniget e 1989 get Ernest GELLNER (antropologour, prederour ha sosiologour saoz (1925-1985) : "Le nationalisme est essentiellement un principe politique qui affirme que l'unité politique et l'unité nationale doivent être congruentes"⁶¹⁰ Pa raer get an termenadur-se e c'heller lâret eh eus get Bourdellez ur broadelour. Sellomp neuze petra eo broad Vreizh ha perak he deus afer ag he frankiz, hrevez Bourdellez.

a) Breizh : ur vroad.

"N'heller ket sevel skridoù diwar-benn an istor heb ma vefe liw un ideologiez bennag warno. (...) Pa bleder gant Istor Breizh, dre vras e c'heller rannañ - evit ar pezh a sell ouzh ar vroad - istorourien etre daou rummad: - ar re a zegemer ez eo aet Breizh d'ober lod eus ar vroad c'hall.- ar re a ra eus Bro-Vreizh ur vroad diforc'h oc'h enebañ ouzh ar vroad c'hall. " a skrive Bernez Rouz e miz Even 1975.⁶¹¹ Gwelet e vo e aparchañt Bourdellez d'an eil rummad.

Petra eo Breizh hervez Bourdellez? "An Istor hag ar vro"⁶¹² zo ar pennad skrivet e 1969 ma vez kavet ennañ mennozhioù Bourdellez a-zivout Breizh e geriennoù berr (ur c'hwec'h pajenn bennak hepken). Ur pennad 'zo bet da gentañ ur prezeg bet graet getañ e-keñver Kendalc'h Keltiek Foujera⁶¹³ hag embannet e 1969 er gelaouenn *Al Liamm* neuze un eil wezh e 1989 bepred get *Al Liamm* goude marv Bourdellez. Ur pennad skrivet get ur c'helenner ar an Istor é reiñ termenadurioù gerioù 'zo, e dermenadurioù-eñ. Setu un nebeut anezhe.

"**Ur vro : 'un dachennad douar'** (...) ez euz **ur bobl** o vevañ [warni]. En ur pennad arall e 1978⁶¹⁴ e resisao Bourdellez an termenadur-se: "Broioù Afrika n'int ket broioù. Ur vro n'eo ket hepken un dachennad-douar merket war ur gartenn : ur wir vro a zo **un dachennad-douar** hag ez eus **ur bobl pell amzer 'zo, o vevañ warni**. Eno emañ ar bobl-se 'er gêr', hag e komprenont mat petra lavaront pa lavaront 'va bro."

"**Ur bobl : Tud hag a zo unanet e doare pe zoare. Marteze dre ma heuliont ur relijion, pe m' o deus krouet ur c'hultur, pe dre m' o deus labouret a-unan, gouzañvet a-unan, pe savet ur stad politikel, pe dre ma 'zint en em gannet enep hevelep enebour. Unanet int, setu perak int ur bobl**". Ha Bourdellez da lakaat sklaer ar pezh a fell dezhañ lâroût.

Kudenn an dachennad-douar 'zo **kudenn harzoù ar Vro**. Breizh 'zo ur ragenez met get peseurt harzoù ? Re **an ISTOR**", a respont Bourdellez, linenn Gwened /Pontorson er V-VIvet kantved/get ar C'hotantin hag an douar bras betek Kêr Añje aloubet ha renet get Nominoe, Erispoe, Salaun/Pe, e-pad hir amzer, an harzoù a anavomp [e 1969] / Pe un "Ouest" a bevar, eizh pe seitek departamant (hervez e fell d'ar gouarnamant gall) ? Ar gudenn ne vo diskoulmet, a lâr Bourdellez, nemet get an ISTOR, an istor tremenet hag an istor da-zont.

610 GELLNER Ernest, *Nations et nationalismes*, Paris, Payot, 1989, p.11.

611 "Broad hag Istor" p. 29 e *Skol an Emsav*, ur gelaouenn he doa gouestlet e niverenn 15 a-bezh da "Kudenn ar vroad", e miz Even 1973 (Pennadoù get Fañch Kerraen, Yvon Gac, J.Chardronnet, neuze Bernez Rous ha ...Mao Tse Toung).

612 *Al Liamm*, 1989, n°256, p.257-63."An Istor hag ar Vro" Per BOURDELLEZ (adembannadur ar pennad bet embannet e niverenn *Al Liamm*, n° 132, p. 44-51 e 1969.

613 D'ar yaou 22 a viz Eost 1969 da 9 eur. <http://bibliotheque.idbe.bzh/document.php?id=kendalc-h-keltiek-etrevroadel-foujera-1968-25729&l=en> ("this document is part of a set : "Programme du Congrès Interceltique" N°02.)

614 BOURDELLEZ, *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, Mezheven 1978, n° 97/98, p. 46-49."Foar an arigrap war Afrika."

"An Dispac'h gall, pa grouas an "departamantoù" ne gredas ket o nac'h [harzoù Breizh]. "Daoust ha sujet ha dinerzhet a-walc'h eo Breizh bremañ evit asantiñ e vefent diframmet eus an douaroù ma oent plantet enne, unnek kant vloaz 'zo, gant gwad o zud kozh d'o sielliñ, hag e vefent kaset ha degaset, pellaet ha tostaet evel ur paotr-saout elektrik? An istor a responto a lâr Bourdellez.

Met petra eo Istor ur Bobl? Setu : strivoù an dud, ar boan kemeret gante evit : krouiñ o bro, sternañ o bro gant renerien, krouiñ buhez enni, buhez korf, spered ha kalon ha diwall Bro ar vuhez diouzh an estren a glask o mougañ.

Breizh 'zo bet staget-distaget da vroioù arall: "dre natur" pe abalamour d'an Istor ?

Petra eo planedenn Pobl Vreizh? Bout staget da Vro-Chall, da Vro-Saoz peotramant bevañ en he frankiz? **An Istor** a zispleg deomp, a skriv, Bourdellez "ne oa ret ebet da Vreizh bezañ stag ouzh mestr ebet : "Daoust hag e oa ret da Vreizh, dre blanedenn-natur, bezañ staget ouzh Bro-C'hall, pe e vije staget ouzh he 'gwashañ enebour' Bro-Saoz? Daoust ha n'helle ket bevañ drezi hec'h unan? (...) Petra a respont an Istor? Da gentañ, ne oa ket bet ret da Vreizh bezañ stag ouzh mestr ebet. **Biskoazh n'eo bet ken dispar he stad ha pa oa distag** (...) Eus broioù bihan ar vroioù douar-bras Europa, n'eus nemet Breizh hag a vefe stag? Perak? Dre ma n'helle ket bevañ drezi hec'h unan? N'eo ket gwir. D'an amzer ma 'z eo bet staget, e oa en he finvidikañ, hag ar spered broadel en e virvidikañ. Perak 'ta neuze? Dre ma oa Breizhiz lapoused-yar ret dezhe mont da gludañ dindan ar c'hilhog gall gant aon rak bezañ lonket gant al Loupard saoz? N'eo ket gwir. Breizh, evel pep bro war an douar, a vire he frankiz **dre gempouez**, o 'n em glevout tro ha tro gant ar C'hallaoued enep ar Saozon ha gant ar Saozon enep ar C'hallaoued. Koll a reas he frankiz pa voe ken dinerzhet Bro Saoz gant ar brezel diabarzh, Brezel an Div Rozenn (er XV^{vet} kantved)⁶¹⁵, ken n'helle harp ebet ken dont eus an tu-se."⁶¹⁶.

Goude, a oc'hpenn Bourdellez, eh eus bet, e penn Breizh, un duk gwak Frañsez II (bet Duk etre 1458 ha 1488) a sinas feur 1488 get Roue Bro C'hall a lakae Breizh edan beli ar roue-se, ha kement 'zo get Anna Breizh. **An degouezhioù o deus graet he deus Breizh kollet he frankiz.** Ne voe ket eta dre ma oa ret dre natur" e oa bet staget da Vro-C'hall.

Hogen, ar pezh he deus graet en Istor, an Istor a c'hell en dizober. *Frankiz vroadel 'zo posubl neuze evit Breizh. Met kaeroc'h eh eus. **Mat** e vehe dezhi kaout he frankiz*

b) Breizh he deus afer a frankiz vroadel.

E film Le Tacon *An Abad Bourdelles*, an emsaver e klever Bourdellez e lâret "**N'eus ket tu d'ar c'hevredigezhioù padout ma n'o deus ket krog war ar galloud politikel ha ma ne vestroniont ket an arc'hant.**"

615 "Brezel an Div Rozenn a vez lavaret eus ar brezelioù a c'hoarvezas en Bro-Saoz etre Tiegezh Lancaster ha Tiegezh York hag a echuas en 1485, pa varvas ar roue Plantagenêt diwezhañ, Richarzh III en emgann hag e teuas Herri VII da vout roue Bro-Saoz". https://fr.wikipedia.org/wiki/Guerre_des_Deux-Roses

616 *Al Liamm*, 1989, n°256, p.258-59. "An Istor hag ar Vro" Per BOURDELLEZ (adembannadur ar pennad bet embannet e niverenn *Al Liamm*, n° 132, p. 44-51 e 1969.

Sellet e vo pizh getañ doc'h Lizher-Meur *Popularum Progressio* (1967). En em harpañ a rey doc'htañ evit arguzenniñ evit frankiz Breizh.^{617 618}

Ur gavadenn a reas Bourdellez a-du arall: ur levrig skrivet get Leopold Kohr an hani eo. Hag àr ziazezh henezh e lâro e soñj-eñ a-zivout "frankiz Breizh".

Bourdellez en doa lennet levr Leopold Kohr *Is Wales Viable?*⁶¹⁹ e 1972 p' en doa embannet e *Imbourc'h* er blez-se⁶²⁰ ur pennad 20 pajenn diàr e benn é klask en azasaat da stad Breizh. Tri blez àr-lerc'h e 1975 an hani eo e embanno un droidigezh/azasadenn glok ag al levr-se edan an titl *Une Bretagne libre est-elle viable?*^{621 622} "Le travail d'adaptation de ce petit livre à la Bretagne, après que la traduction française en eut été effectuée par P. Bourdelles avec une remarquable fidélité, a été d'une déconcertante simplicité. P. Bourdelles et moi-même nous nous sommes bornés, la plupart du temps à remplacer le mot "Wales" par le mot "Bretagne", le mot "Gallois" par le mot "Breton" a skriv Yann Fouéré er rakskrid.

A-raok mont pelloc'h get Kohr, e verkomp e oa bet skrivet rakskrid al levr-mañ get ar Breizhad Yann Fouéré hag an digoradur anezhañ get ar C'hembread Alwyn David Rees⁶²³ bet kelenner àr an douaroniezh hag antropologiezh e Skol-Veur Aberystwyth.

Tezenn Kohr, er levr-mañ, hag e levrioù-arall bet skrivet getañ, a oa houmañ : "e pep lec'h e ya fall an traoù, eh eus un dra bennak re dev ennañ".⁶²⁴ Eñ an hani eo en deus lañset al lugan: "Small is Beautiful" na bout e oa Ernst-Friedrich Schumacher, diskilp Kohr, en deus embannet ur levr edan an titl-se⁶²⁵.

617 *Barr Heol war Feiz ha Breizh*, miz Mezheven 1967, n° 52 p. 38-44 "Popularum progressio -Lavar-dislavar diwar-benn al lizher meur", Per Bourdellez.

Barr Heol war Feiz ha Breizh, miz Kerzu 1967, n° 54, p. 3-14."Popularum progressio -Araokadur ar Poblou" gant P. Bourdelles,(NB. : oberer Per Bourdellez àr daolenn ar gelaouenn ha... sinet Klerg e dibenn ar pennad p. 14 !)

618 Alies e vez graet kement-mañ get Bourdellez : en em harpañ a ra àr Lizhiri-Meur ar bPaped pe Doktored an Iliz da reiñ dezhe un diazezañ kristen diarvar (àr ar sujedoù-mañ d'an nebeutañ : ar yezh, frankiz ar poblou, gober get ar feulz evit en em difenn hep mont re bell memes tra, labourat get tud digristen...).

619 *Is Wales viable?* Leopold Kohr 1971.

620 *Imbourc'h*, 31 Kerzu 1972, n° 35-36, p. 297-316, "Daoust hag e c'hell Breizh bevañ en he frankiz ?" hervez Leopold Kohr, *Is Wales viable ?* get P. Bourdelles

